



Youenn OLIER

O SELLOUT

WAR VA C'HI'Z

eñvorennoù ha deizlevr

4-5

ROAZHON  
GEVRED  
1968

Y O U E N N O L I E R

E ñ v o r e n n o ù   h a   d e i z l e v r

Pevare levrenn :

Here 1941 - Mezheven 1942

R O A Z H O N

G E V R E D

1 9 6 8

\*\*\*\*\*

P e n n a d 1

Miz Here 1941 eta am boa tremenet e Sant-Jermen, o studiañ brezhoneg, kembraeg ha saozneg zoken (hogen ar studi-se am boa dilezet damc'houde ha n'em boa adkroget ganti nemet e 1945). Lenn a raen kalz brezhoneg; war-dri kreiz ar miz am boa pourchaset levrioù nevez : "Lizher an hini marv" embannet e 1925, a gredan, gant "Emgleo Sant-Iltud", doare KLT eus "Nikolazig" savet gant Job ar Bayon ; "Jenovefa a Vrabant", gant Glaoda 'r Prat, bet mestr Abeozen gwechall. A-hend-all ne raen ket kalz tra, eveljust, nemet breutaat gant va zud evel boaz diwar-benn kudenñ Vreizh. D'an 9 a viz Here em boa dezrevellet dre ar munud unan eus ar breutadegoù-se. Va zad en dro-mañ a oa savet a-du ganin ; tizhet e oa bet gant va arguerzh p'em boa displeget dezhañ n'en defe ket ranket en em werzhañ d'al lu gall m'en defe bevet en ur Vreizh dieub ha 'diorreet' (e gwir, ne oa ket anavezet ar c'heal-se neuze). Va mamm avat ne wele ket mat e c'hellje an traoù bezañ bet disheñvel diouzh pezh e oant ; eured an dukez Anna en doa renket pep tra da viken, war a soñje ; seurt savboent a oa gwregel rik noarvat rak ar merc'hed a vez prest awalc'h da grediñ e vez diskoulmet an holl gudennoù gant dimezioù. E gwirionez e oa va mamm, muioc'h eget va zad, dic'houzvez a-grenn eus ar c'hudennoù politikel ; daoust m'he doa bevet epad ur pennad mat a amzer war harzoù ar Beljik ne ouie ket, da skouer, e oa kelennet Flandreziz yaouank en o yezh er Stad-se (me n'ouien ket muioc'h egeti p'edon o vevañ e Cambrai). Breutaat a-benn breutaat a raen avat rak ne c'hoanagen ket kalz e c'hellfen biken kemm mennozioù va zud, re va mamm da vihanañ.

Ar brezel a yae bepred endro e Rusia. Klevout

a raen anv eus Kamilin (?), Mardisk (?) h.a. er skingomz. War-dro kreiz ar miz e voe meneget kêr "gKlin" en em gave 30 klm. diouzh Moskov. Displegañ a rae an Alamaned deomp o devoa kelc'hiadennoù Viazma stumm an niver eizh ; ha dalc'hmat ivez e pade emgannoù kelc'hiañ all endro da vBriansk. An Alamaned a glaske krediñ e oant o vont da dapout an trec'h abarzh pell. D'an trizekvet a viz Here em boa klevet er skingomz atav prezegenn c'hGoebbels er "Sportpalast" e Berlin. En dibenn en doa youc'het hemañ pemp gwech lerc'h-ouzh-lerc'h evel ur garm-hud : "Der Führer siegt..." Anv an doue e unan a oa ur gwarez. Goude-se en doa an engroez kanet a-unvouezh an "Deutschland über alles" evel ur ganenn -lid.

E Lunden e oa diskanoù nevez. Bourpañ a raen ivez o notañ digesteunderioù ar bruderezh gall-ha-saoz. Da skouer, adal miz Gouere e oa deuet Stalin da vezañ un "aotroù", goude bezañ bet hailhon abaoe nouspet bloaz er broioù keval-aour. En devezhioù-se en devoa an "aotroù" nevez pourvezet ur banvez hep e bar da izili dereat ar "c'hKengor saoz-amerikan a-benn harpañ ar Rusianed" ; an holl vourc'hizion vat-se a oa bet degemeret gant kalz a enor e salioù ar c'hKremlin.

Er miz-se em boa taolet evezh ouzh ur brezegenn distaget gant ar Pab PI XII. Dizoloet em boa enni tagadennoù kuzh a-enep d'ar genelwerinelourion alaman ; dianat awalc'h avat e chome an tagadennoù-se. Diwar gouvi ar Pab ivez, da geñver gouel ar C'hrist-Roue, e oa bet graet ivez pedennoù evit distro prim ar peoc'h. Hogen, a skriven, penaos e c'hell-je bezañ deuet un trec'h prim hep trec'h an Alamaned ?

E gwir n'o doa ket ar Vretoned da glemm eus mererezh an Iliz d'ar mare-se. Da eskob Gwened e oa bet nevez anvet an ao. Beleg, e-lec'h an ao. Trehiou. "Dihunamb" en doa lidet an anvidigezh-se evel un trec'h. An ao. Beleg avat hag eñ brezhoneger ne voe biskoazh ur brogarour dispar.

Meur a wech, e-kerzh ar miz-hont, ez is da Roazhon evit an difrae-mañ-difrae, degas paperennoù kefridiel d'ar Pontoù, pourchas dielloù d'ar "reizhourva" a-benn obten ur yalc'had, hag eveljust degas boued d'am c'hoarezed ha d'am breur a oa o vevañ e Roazhon. Ur wech ivez e oan deuet a-ratozh da gerc'hat liv ; liv avat a oa un danvez rouez ; da vihanañ e ranked reiñ ur voutailh c'houllo en eskemm abarzh ma vefe gwerzhet deoc'h ur voutailh leun. Ar wech kentañ ma oan deuet evit kas da benn ar gefridi-mañ em boa graet tro wenn o vezañ m'em boa ankounac'haet ar voutailh c'houllo brizius-se er gêr.

E levr di Breizh a oa o paouez digeriñ em boa gallet prenañ va liv a-benn ar fin. Ar stal-mañ en em gave war ar c'hae Kastelbrien ; nevez savet e oa bet gant Ronan de F. a skrive e galleg dindan an anv-pluenn 'Merrien' (d'ar c'houlz-se n'en devoa embannet, a gav din, nemet un danevell hir "Le mort jeune" bet moulet gant Gallimard). Ur brogarour mat a oa anezhañ, diouzh giz noblañsoù zo e Breizh (plijout a rae dezhañ kounañ penaos e oa diwanet an Emsav e deroù ar c'hantved e kelc'hiadurioù noblañsoù breizhat zo evel an Estourbeillon). Yen awalc'h e oa avat ouzh ar yezh. E gwir, daoust ma c'hoarveze gantañ degas da soñj deoc'h e oa anezhañ ur C'hernevad e chome stag ouzh Paris hag e vignoniezhoù gall ha rak-se moarvat ne oa ket gouest da dommañ da vat ouzh ar brezhoneg, yezh e vro. Un tamm e ouie lenn houmañ, koulskoude ; menegiñ a rae oberennoù Roparz Hemon ; kalz a vri a zouge zoken, diouzh e glevout, da bezhig-c'hoari ar skrivagner-mañ "Lina" a gont istor ur paotr yaouank mac'homet gant ar vaouez e gar hag en em lazh en diwezh. Hogen nac'het en doa a-gremm ivez degemer sellboent Roparz Hemon p'en doa hemañ taget ar galleg en ur pennad eus Arvor hag eñ oc'h ober eus ar galleg ur yezh vrein. Fellout a rae da Ronan de F. bezañ ur skrivagner gallek ; ar youl-se avat n'eo ket bet evit reiñ dezhañ

en engroez al lennegourion c'hall al lec'h a gantañ renk a zellez hepken striv hag uhelc'hoant ur skrivagner.

Un den yaouank c'hoazh, hegarat ha dedennus, e oa R. de F. ; gant e bried a oa ur vaouez tavedek ha seven e rae bepred un degemer karadek d'e weladennourion. Troet e oa da gaozeal ha prest da sevel marvailh gant e ostizion - hir e oa an amzer dezhañ en e stal moarvat - un tamm diwar-benn n'eus forzh petra, ret eo lavarout. Ar wech kentañ m'em boa kejet gantañ e "Levr di Breizh" en devoa displeget din dre ar munud penaos aozañ krampouezh giz Kernev ; n'em boa ket goulennet digantañ an titour-se kouls-koude (abaoe keit all eo bet ankouast ganin ar rekipe, m'eus aon). Uheloc'h testennoù diviz hor beze evelato ; Pascal, da skouer, a oa bet lakaet gancomp war an dabicr un drovezh ; ha R. de F. da ziskleriañ din e oa re zisheñvel tro-spered Pascal diouzh e hini evit ma c'hellje e gompren e nep doare. Diaes e oa din tuiñ d'e savboent : kavout a rae din ne oa ket reizh chom hep dremmañ ouzh kudenn ar gravez, ne verne peseurt diskoulm a roed dezhi en diwezh.

Pezh a glasken e "Levr di Breizh" e oa skridoù brezhonek eus deroù ar c'hantved a zo hogos digavadus hiziv, a gredan. Un toullad mat anezho en doa dastumet R. de F. en e stal hag ul labour mat en devoa graet er c'heñver-se. Evitañ da vezañ divarrek da beurzeskiñ ar yezh e klaske harpañ ar skrivagnerion vrezhonek (eñ e unan en doa bet un tammig oberiantiz en Emsav : skrivet en doa ur pennad bonnak en "H.B." e dibenn 1940 ha diwar neuze e sine pennadoù all ebarzh ar "Bretagne"). Sikour a roas Youenn Drezenn da c'houde da ziazezañ ha da lakaat moulañ doare gallek "Itron Varia Garmez". Ar mennad-se a oa mat diouzh ma tenne da bourchas un tamm korvo d'ar skrivagner ; disfiz am boa avat na vije techet R. de F. da grediñ n'halle bezañ gwir "gensakrad-ur" d'ur skrivagner eus Breizh nemet e Paris e vo.

Hogen en devezhioù-se ne roen ket re a bouez

d'al lennegezh. War-dro an 19 a viz Here e oa c'hoarvezet muntr an ofisour alaman en Naoned am eus damvenget e dibenn trede levrenn va eñvorennoù. Hanter-kant den a oa bet aberzhet evit dic'haouiñ an drouklazh disakr-se. Ha Stülpnagel, gouarnour alaman gennva dalc'het ar Stad c'hall en devoa diskleriet e vefe fuzuilhet pemont gouestlad all ma ne vefe ket adkavet ar muntre (kontañ a rae en doa Hitler e unan roet an urzh-se e unan). War ar marc'had e oa bet grataet 15.000.000 a lurioù da neb en defe skoazellet ar pennadurezhioù alaman da herzel an hini kablus.

An darvoud-mañ a reas trouz. Endro din e oa divculet an drouklazh gant an darn-vuiañ. Va zad a soñje ne dalveze ar boan en em sevel nemet pa c'helle an emsavadeg disoc'hañ d'an trec'h : da vare an dilestradeg, da skouer, e vefe mat. E Lunden zoken e tierbeded seurt intruduioù diatebek.

Gwall nec'het e oan-me gant an degouezh-mañ. Diouzh un tu e nac'hen kemer perzh e brezel ar C'hallaoued : ar surañ hent e vije da goll ar skiant eus va broadelezh (1). A-hend-all, evel m'em eus lavaret meur a wech, doujañ a raen ar mare ma vije trec'h ar Saozon-Gallaoued, o vezañ ma vije kempred ar mare-se, end-anat, d'ur barr gallgarouriezh diskiant en hor bro. Diouzh un tu all avat, penaos degener da gevredidi ur vroed tud a rae gant ur roolenn vrezel par da hini ar meuriadoù kentidikañ (2) ? Da zigareziñ an Alamaned e c'helled moarvat engerverl boazamantoù brezel ar C'hallaoued o unan o devoa arveret hevelep dialadegoù pa oant o terc'hel traonienn ar Roen war-lerc'h ar brezel bed kentañ (3)

(1) Kentelius eo er c'heñver-se an deizlevr embannet gant "Barr-Heol" e 1967-1968 hag a gont istor ur beleg brezhoneger ha broadelour sañset : war-bouez kemer perzh e buhez ar C'hallaoued prizoniet a-gevret gantañ e teue da vezañ gall endro.  
(2) Keñveriañ ouzh danevelloù zo eus an Iliados, da skouer.  
(3) Da vihanañ, hervez un danevellekrid savet gant an Alamaned goude kimiad ar bagadoù-soudarded derc'hel gall e traonienn ar Roen hag a oa talbennet "Unnek vloaz en ereoù".

ha re Europiz dre vras o devoa lakaet alies ar gengiriegzh da bennaenn ar peoc'haat er broioù dalc'het ganto en Afrika, lakaomp. Kement-se ne vire ket ouzhin a varn ober an Alamaned evel un torfed. Skrivañ a raen : "Ne welan ket e c'hellfe bezañ dic'haouet un torfed gant un torfed all ; rak un torfed eo, un torfed euzhus barn d'ar marv tud ha n'o deus perzh ebet en drouklazh graet. Ha lazhañ kant den evit unan ! Un digarez eo, a gredan, evit an Alamaned d'en em zizober diouzh an dud ha n'int ket a-du ganto. Komz a reer c'hoazh eus sevenadur..."

En endervezh ar sul e oan savet d'ar voure'h a-benn pourchas butun d'am zad. Toullet em boa kaoz gant paotr ar stal diwar-benn an ãrvoud. Hemañ a ziogeles dres e oa bet sevenet ar muntr gant an Alamaned o unan - e Bourdel e tlee bezañ muntret un ofisour alaman all - o klask an difagras eus o enebourion. Ar soñj-se ne hañvale ket din bezañ gwirheñvel.

Naturoc'h e kaven e ve bet sevenet an drouklazh gant un ezel bennak eus ar c'hilstorm gall, a-ratozh a-benn broudañ an Alamaned da gas da benn hevelep dialadegoù a ranke, hep mank, sammañ warno kasoni ar boblañs, skoilhañ eta ar c'henlabour ha mirout outañ a vozañ kaset da benn. Diouzh ar sellboent-se ne oa ket an drouklazh-se dazwered unden diatebek ha diboellet, un ober politikel leun a ster ha karget a efedusted. E gwirionez e kejen aze ouzh kudenn ar sponterezh en ur brezel diubiñ. An unvaniezh etre an dalc'her hag ar boblañs dalc'het a glasked diazezañ dre ar c'henlabour, en anv ar gengarantez, ar genfiziañs hag ur bern vertuzioù all, a ziboufe en diwez war drec'h ar galloud dalc'her hag en degouezh a neuze war hini ur vennoziadeg a a c'helled kaout kant digarez da argarzhiañ (1).

E gwir ne voe ket pell an Alamaned da verzout an traped a oa stignet outo. Rak, ma voe dialadegoù seurt se (1) Jubenniñ an ãrvoud ne mn ken. Kement-se n'eo ket lvarout tamm ebet ez eo ar sponterezh didec'hus en ur brezel diubiñ, da vihanañ a-berzh an emsaviad.

a-c'houdevezh ne voe graet embannerezh dezho. Ar galloud dalc'her en doa komprenet moarvat e laboure ar sponterezh a-enep dezhañ, diouzh ma c'helle spiañ degas ul lodenn eus ar boblañs da genlabourat gantañ.

\*\*\*\*\*

Pennad 2

D'al lun 20 a viz Here 1941 e tankee argadadegoù an Alamaned endro da Voskov ; padal, a-hervez, edo difennoù kentañ kêrbenn Rusia dindan tennoù ar c'hanolioù alaman. A-hend-all o devoa an Alamaned diraezet Marioupol war hent Rostov. Hogen, e Lunden, e tezevelled penaos e terede adarmeadoù rusian armet mat hag harnezet diouzh goañv Rusia da herzel ouzh al luoez alaman.

D'ar c'houlz-se ivez e oa tregaset ar gomzourion c'hall e Lunden gant kudenn unvaniezh Vro-C'hall. Hag int rannet etre div stad - rak, a-benn ar fin, Vichi n'en doa ket kalz a veli war ar ar gennva dalc'het - e oa techet poblañsoù an daou c'hennva da gemer stuzioù soñjal diforc'h, dreist-holl hini ar gennva dieub ha n'en em sante mui ken-donkad da annezourion ar gennva dalc'het.

Ivez e tamallet da Vichi kinnig dispenn ar Stad c'hall dre aozañ an digreizennerzh hag ober anv eus ar "proviñsoù" er mererezh. Moarvat ne oa netra pezh a oa bet aotreet d'ar "proviñsoù" hogen gwall ziouganus evit dazont Breizh e degouezh un trec'h saoz e kaven divizoù ar gomzourion c'hall.

En devezh-se e oan aet da Roazhon adarre. Kejet em boa eno gant ur c'henskoliad kozh eus Sant-Marzhin, A.B., broadelour evel don. Mall a oa warnañ d'an ampoent ha roet en doa emwel din dirak levr di Breizh a-benn peder eur. En em gavet e oa eno e koulz. Ha ni da zont tre el levr di. Perc'henn ar

stal a oa deuet da stardañ hon daouarn deomp : aozet en doa da geñver sizhunvezh keltiek Roazhon a groge en deiz-se un diskouezadeg levrioù brezhonek hol lakaas da weladenniñ.

Echu hon ensell ganeomp hor boa kroget da varvailhat. O vont da gregiñ gant e vloavezh kentañ strilh-ouriezh e oa A.B. Eñvorennoù diwar hon amzer skolañ hor boa kounet. Diouzh e glevout, en e amzer-ef, e oa an emrenerion e S.M. stankoc'h eget em amzer-me. Meneget en doa din anv P.D. a oa klañvet abaoe hogen en doa peurzesket ar yezh en ur ober trivec'h miz ; pa oa deuet "Gwalarn" er-maez endro en devoa embannet ur pennad ennañ diwar-benn Bro-Danmark. Bez e oa ivez du Guerny, ha n'em boa ket anavezet kennebeut. Mamm ar skoliad-se (1), a-hervez, he doa miret na ve skarzhet Foucray e deroù ar brezel evit bezañ skrivet "Breizh atav" war an erec'h (2) e porzh-c'hoari ar skolañ.

Ambrouget em boa va c'henseurt betek e gambr, en un ti tost da skluz ar Chapel-Bobi, war ribl ar Winun. A-greiz deomp mont en doa A.B. roet din diskleriadurioù a bep seurt diwar-benn personelezhioù an Emsav, dianav pe beuz-dianav din, Kervella, ar skrivagner, Aboezen : mab hemañ a anaveze ; oc'h ober e studioù en "Arzoù kaer" e oa, eme A.B. (3). Breutaet hor boa ivez a-zivout kudem ar gelaouenn "La Bretagne" renet gant Fouere. Daoust ma anzaven e C'helle seurt embannadenn bezañ talvoudus da skignañ un damgeal eus ar vroadelezh e-touez gwiskadoù zo eus ar boblañs ha daoust ma ne rae ar foran kemm ebet peurvuiañ etre ar "Bretagne" hag an H.B. e tamallen da renerion ar gazetenn bemdeziek-se bezañ divarrek da zeskiñ o yezh, kemer da genskrivagnerion gallegerion douet ha brizh-Vreizhiz a-benn ar fin, **erfin**

(1) Danio e oa anv-pluenn an it. du Guerny. Drouklazhet e voe gant kilstourmerion c'hall e dibenn ar brezel.  
(2) An tad Plomet en doa difennet Foucray hogen tamallet en doa dezhañ chom hep gouzout ar yezh vroadel a ouis-ef(a-hervez) rannvroelour (rak troet e oa da c'hallgarour e deroù ar brezel hag ober a rae "ur guchennadig huñvroerion" eus an emrenerion a harpe al listri-spluj alaman (!) hervez a lavare ur gallgarour all, Guillaume e anv, ur c'henskoliad din.)  
(3) N'em boe ket tro da geñver gantañ biskoazh. Ar mab-se, padal, a skeudennaouas "Kontadennoù loened" e dad. Desavet e oa bet e galleg.

diavaezañ ur savboent rannvroel en holl bennadoù moulet ganto. A-hend-all, n'eus forzh peseurt emglev gant Vichi a oa diazezet war un treuzintent bennak, a soñjen.

Ur gambr goant ha sklerijennet mat en devoa A.B. ; tud jentil e oa ivez e berc'henned hogen n'en doa c'hoant ebet da reiñ e vennozioù da anaout dezho. Tra m'en em fiche e komzas din eus Debeauvais a anaveze mat tre, emezañ. Goulennet em boa outañ chomlec'h nevez L.M. N'oa ket gouest da lavarout din, avat ; ar gwellañ e oa mont d'e gaout e ti-debriñ ar "Pire", nepell diouzh bali ar Frankiz, e-lec'h e oa kustum da bredañ gant R. Delaporte ha broadelourion arall. E ser L.M. a-hend all e lavaras din e kenlabourfe gant hemañ a-benn diazezañ da vat skourr ar studierion vreizhat er Skol-veur ; mat e veve din, eme A.B., dont da Roazhon un nebeut a-raok digoradur ar bloaz-skol a-benn o sikour da gas da benn ar monnad-se. An amkan tostañ e oa tuta 25 studier e pep kevrenn (hervez ar Rouzig, ur c'henskoliad din e Sant-Marzhin ivez, e nivered ur c'hant broadelour bennak e-touez studierion Roazhon er bloaz kent ) (1). A.B. a roe pouez ivez d'ar "bezen" a oa da vezañ savet gant Yann Goulet. Berzh a rafe e-touez ar re yaouank, emezañ, dreist-holl ma c'hellfent dibunañ e kêr gant o unwisk (2) soudardel. En difetis e tremme va c'henseurt ouzh ur brezel dispac'h evit Breizh : mervel evit Breizh a oa estroget ur goulakadur goullou evitañ.

Distroet e oan e kêr a-gevret gant va mignon hag un ehan hor boa graet 4 st. Toulouse, e sez kevredad Il-ha-Gwinun ar Strollad, a-benn gouzout chomlec'h L.M. El laez hor boa kavet teir maouez ; div anezho a oa an dimez-olled Perez e oa bet anv anezho war niverenn gentañ an H.B.

(1) Kalz distroec'h e oa neuze niver ar studierion e Roazhon eget hiziv.  
(2) Lakaet, eveljust, e ve bet roet hevelep aotre koulz gant ar pennadurezhioù gall koulz ha gant ar pennadurezhioù alaman.

Gant an dimezelled-mañ en em gave un den yaouank - kemer a raen anezhañ evit ur c'hrennard - a oa e anv de Coetlogon (1), a zouge heuzoù berr (ar c'hiz e oa moarvat), bourrus awalc'h hogen a gaven ivez re droct d'ober marvailhoù, evel e gendere R. de F. rak un noblañs a oa anezhañ ivez. Disfiz am boa avat ouzh an dud helavar ha kavout a rae din a-wechoù en devoa de Coetlogon doareoù ur Parizian.

Savet e oa kaoz diwar-benn ar brezel ha de Coetlogon en devoa diskleriet e vije aet da C'haolour ma vije bet ur Gall anezhañ ; hogen ne oa ket, dres. Da Baris e tlee mont en òvezhioù-se, da genderc'hel gant e studioù; e soñj deskiñ brezhoneg hag alamaneg e oa. Adarre ivez e voe anveus ar "bezen" ; ar pezh a zedenne va c'hengomzer ar muiañ er bezen-se marteze e oa al livrez a huñvree evit ar soudarded anezhañ : ar pezh pouezusañ eus al livrez-se e oa, d'e soñj, an heuzoù, e ler alaman, an hini gwellañ "in the world", na petra 'ta (2).

Da A. en devoa de C. rentet servij, a youl gaer a-hend-all, rak n'en doa hemañ goulennet netra digantañ. P'en devoa gouezet e oa bet A. prizoniet gant an Alamaned e-tal Filger e oa aet da gavout an ofisour alaman a ziwallo anezhañ gant ur ger eus Debeauvais, a-hervez ; divac'het e oa bet A. evel-se hag anaoudegezh en devoa dalc'het ouzh de C. hogen kasaus en doa kavet evelato ar brud fall a oa deuet dezhañ en e gorn-bro da heul an dieubidigezh direol-se.

Diskennet e oamp endro gant de C. Ma neuze hor boa skoet war-du an ti-kêr : en abadenn sonerezh keltiek, er c'hoariva, edo L.M. hervez de C. Komzet hor boa eus de C. Va mignon A.B. ne zouge kalz bri da noblañsoù an Emsav

(1) Ur brogarour mat e oa de C. hag un den kalonek e tiskouezas bezañ a-c'houdevezh met berrboell ivez hag hep tamm skiant politikel. Dre vrogouriezh vreizhat e konlabouras gant an Alamaned, en e unan, a gav din. Fuzuilhet e voe gant ar C'hallaoued war-lerc'h ar brezel. Tri bloaz warn-ugent en doa.  
 (2) Iskis eo penaos e c'hell un albac'henn seurt-mañ kaout levezon war donkadur un den. Gwir eo, hep livrez n'eus soudard ebet.

en amzer-se. Kavout a rae dezhañ ne oa ket tu da zizonañ anozho diouzh ar sevenadur parizian e oa intret o buhez gantañ ; dre an istor e touent da Vreizh peurvuiañ hag a-rae ne raent ket kalz forzh eus ar yezh (1).

Dirak ar c'hoariva hor boa kejet gant ur c'hamalad kozh eus B.A., bet e Sant-Marzhin eveldomp, graet gantañ studioù war ar gwir hag a-benn neuze kargiad eus ar polis gall er "Parquet". Ur paotr mentet krenn a oa anezhañ, krenn e zremm, krenn e zaoulagad, krenn gwerenoù e lunedoù, krenn e ziskouarn, distronk e zivoc'h gant ur barv daou zevezh. "Bez dinc'h," emezañ, leun a vadelezh, da A.B., "pa vi bet harzet evel emrener e vin aze evit da zifenn, paotr !" A oa jentil eus e berzh evelato !

Eveljust e oa savet broutadeg diwar-benn Breizh ; d'an emrenezh ne gave hor polis gall nemet ur perzh mat : derc'hel ar gargidi en o rannvro orin. A-hend-all, ne verze, evel dres, kemm ebet etre Breizh ha "rannvroioù all" Bro-C'hall. Moarvat e oa Vichi o klask adsevel pastelloù-melestriñ ec'honoc'h eget an departamantoù kent; hogen, evit keloù se, ne vefe ket adsavet Breizh, ur rannbarzh kornog Bro-C'hall, a lavare. A.B. a glaske gonit e genseurt d'e vennozioù hogen soñjal a rae din e kolle e amzer. Dre ma pade an diviz e ouezis e oa bet harzet div vaouez ergetaou e Sant-Malo evit bezañ garmet "A mort Darlan!" pa oa deuet hemañ da ober ur gwel da borzh-mor biz Breizh ; barnet e vefent eme ar polis, gant al lezioù-barn nevez savet a-enep d'ar gomunourion ha d'an "diveliourion" ; diouzh ret, a gendalc'has hor polis mat, e c'hellfe al lezioù-se bezañ arveret a-enep d'an emrenerion. Evit echuiñ e oa bet kont eus un afer kuzhat armoù e Filger e-lec'h e oa bet harzet hanter-kant den en devezhioù-se.

Skuizhañ a ris o selaou koñchennoù va folis rak n'oa finebet d'an abadenn sonerezh er c'hoariva ha ne

(1) Daoust d'e vennadoù mat ne zeuas va mignon biskoazh a-bonn da beurzeskiñ ar yezh e unan. Gwell eo gortoz bepred a-raok barn ar re all.



zeu den er-maez eus ar c'hoariva ; un tammig tro a ris war al leurgêr ; arvestet em boa ouzh ar melloù skritelloù a oa bet peget tro-dro d'ar c'hoariva a-benn komenn ar "sizhunvezh keltiek", dezho un neuz faro meurbet gant o fikolioù lizherennoù ruz a zedenne evezh an dremenidi hag an Alamaned o unan. Graet em boa zoken ul lamm betek st. Sant Melani, em danvez lojeiz, kent distreiñ da blasenn an ti-kêr da c'hwec'h eur.

Erfin, war-dro c'hwec'h eur hanter e teuas va mignon J.M. er-maez eus ar c'hoariva, mall warnañ distreiñ d'ar gêr : e dud hag intbrezhonegerion ne c'hellent klevout kel eus an emsav ha n'en doa ket c'hoant kontañ dezho e oa bet en un abadenn aozet gant ar "vreizataoed" e-doug an endervezh. Ur pennadig e chomas a-sav ganeomp evelato hogen evit va brasañ sebez e stagas da skandalat ar paour kaezh A. evit bezañ klasket - dre vignoniezh rik a-hend-all - ober ur gwel d'ur broadelour yaouank nevez serret en toull-bac'h, Y.K. e anv, a oa bet harzet e-kreiz an noz gant un ofisour alaman pa oa o pegañ balafennoù e kêr ha daskoret gant hemañ d'ar polis gall (1) hag ivez bezañ graet reuz da ziwallen an toull-bac'h oc'h ober "genaoueg" anezhañ hag erfin bezañ asuret e oa droch mirout outañ a welout K. a vefe, emezañ, aivac'hët abarzh pell n'eus forzh penaos dre ma oa difenn da glask trabas ouzh an emgerion hervez divizoù an arsav-brezel : diot e oa, eme J.M., dedennañ an evezh warnomp evel-se hep ezhomm ebet. A. a anzave uvel e fazi. Ha J. echu e sarmon gantañ a oa skaret d'ar gêr, buanoc'h c'hoazh eget kent.

War-lerc'h J.M. e oa erruet Stephan, konskrivagner er "Bretagne", kenskoliad kozh deomp ivez, rodallet ha regennet mat e vlev melen, stag mat skoulm e frondenn (2), gwisket cheurc'h ha kran, e sac'h-ler dindan e gazei, e lunedoù korn war e fri, dezhañ neuz sirius ha meurdezhus

(1) Tad ar brogarour-mañ en devoa ur garg uhel er barnerezh gall e Roazhon. E breder e oa na ve bet dieubet e vab diwar lovezon ar pennadurezhioù alaman.

(2) Heuliañ a ran va deizlevr. Ne garen ket kalz ar paour kaezh paotr dre ma oa rannvroelour. E ardoù a zispilje din ivez.

ur bredelour a zoare ; distagellet mat e oa e deod ivez ha gant kamambre ha brazoni en devoa kroget kerkent da gomz eus an abadenn. Guy Ropartz, emezañ krenn ha krak, a oa kripion, "gaga" gouez d'e c'halleg ; koulskoude, a anzave, krenn doa renet gant ampartiz al laz-seniñ a eroneze e bezhioù -sonerezh ; barrekoc'h egetañ avat, e oa Paol ar Flemm, d'e soñj. Neuze en doa tennet Stephan diouzh e chakod brastres-abadennoù eus an daou sonaozour breizhat aozet gant Kreston hag o diskouez a reas deomp, stad ennañ, ouzh hor pediñ da evezhiañ penaos e oant sinet gant an 'arzur meur'.

Tra m'edo Stephan o varvailhat ganeomp e teuas Youenn Drezen, ar "skrivagner brudet" er-maez eus ar c'hoariva. Stephan en diskouezas deomp. Ar wech kentañ e oa din armerzout Youenn Drezen ha souezhet e oant bet gant e neuz yaouank : Abeozen hag eñ kenoad gantañ war-bouez nebeut a hañvale din bezañ ur c'hozhiad en e geñver ; Youenn Drezen avat a gerzhe evel un den yaouank ; ul lañsenn a baotr a oa anezhañ, hir ha treut, mourroù berr giz Hitler dezhañ, tougn e fri ha gloanek e vlev du.

E-keit-se e selle Stephan bep munutenn ouzh e eurier en ur lavarout : "Zut! 'faut qu'je m' dépêche : j'dois être à la Bretagne à six heures et demie." Hag eñ da skampañ kuit a-benn ar fin, d'an daoulamm.

Hogen paotr ar "parquet" a oa chomet stag ouzhimp ha da hemañ ne oa ket aes kennebeut serriñ e veg. Diouzh pezh a gonte diwar neuze n'oa nemet kozh politikerion c'hall endro d'ar "Marichal" ha da zDarlan, e Vichi. Met paotred Lunden ne dalvezent ket gwelloc'h ; war-dro D.G., emezañ, ne oa nemet frañmasoned ha yuzevion, egiz Cazin a veze o komz gant "son bagoût habituel"(1). Eveljust, ar re en em ganne dindan banniel ar C'hallaoued dieub a oa paotred kalonek ha dispont hogen "embusqués" ne oa ken eus ar re a brozege bemdez e skinva Lunden.

(1) Ur c'hargiad eus Vichi a oa o komz. En devezh-se end-eeun avat en devoa Cazin komzet er skingomz gall-saoz, a-enep da dorfedoù ha lazhadegoù an Alamaned.

D'e dro, a-benn ar fin, e oa deuet L.M. er-maez eus ar c'hoariva. Toullet em boa kaoz e brezhoneg gantañ. Fellout a rae din gouzout peseurt testiñ-aotreegezh e oa e soñj prientiñ er bloaz war-lerc'h. Ne ouie ket re vat e unan rak kavout a rae dezhañ en doa c'hwitet gant e arnodenn diwezhañ hag e vefe korballet. Danc'houde avat e camp en em gavet gant un toullad studierion bodet endro d'ar Gaonac'h (1), an darn-vuiañ anezho o vrezhonegañ (o rannyezh kentoc'h eget ar yezh lennegel a implijent avat). Sellout a raen ouzh ar Gaonac'h evel ouzh unan eus renerion an Emsav ha souezhet e oan bet ur wech ouzhpenn dre ma ne dizhen ket lakaat da glotañ ar gwel eus an den gwirion gant ar skeudenn anezhañ am boa aozet dre va faltazi. Evitañ da vezañ Leonad e oa ar Gaonac'h neuze un duard bihan, reut ha pladet war-dreñv e e vlev ; komz a rae brezhoneg mat tre, gant ur vouezh raouliet ha mouk avat.

'Personelezhioù' all eus an Emsav a oa o tont er-maez eus ar c'hoariva ha dre ma teuent e veze roet an titour anezho gant L.M. d'an nevezidi, danvez emsaverion a oa ac'hanomp neuze ; L.M. a rae bep tro gant ar galleg bras e oa kustum da implijout en e brezegennoù e bodadegoù ar Strollad. D'ur mare eta e oa paret daou veleg war dreuzoù ar c'hoariva ; unan anezho a oa Maodez Glanndour (2) am boa kavet yaouank ha hoalus e zoare ha L.M. da embann neuze a dro-war-dro d'an holl selaouerion bamet : "Voici le plus grand représentant de la poésie spiritualiste bretonne contemporaine..." a oa evelato ur frazenn gaer ha dellezek moarvat eus un dornlevr istor al lennegezh vrezhonek.

Debeauvais am boa spurmantet ivez ; un neuz vat ha seven am boa kavet dezhañ ; ur stumm poblekoc'h ha muic'h dilorc'h a oa da Youenn Drezen, a soñje din.

O.M. a oa o fistilhat tro-aze ivez, nepell

- (1) Gaonac'h en doa kenlabouret gant Debeauvais a-raok ar brezel, oc'h ober bodadegoù gantañ e kornog ar vro. Goude ar brezel e voe barnet d'ar marv en e ezvezañs, a gav din. Abaoe o rev en harlu.
- (2) N'em eus ket merket anv egile na zoken taolennet anezhañ.

diouzhimp kennebeut. Gant e lunedoù e tenne kentoc'h, a soñje din, d'ur c'helenner eget d'ur Führer bennak.

A-benn ar fin e oan chomet va unan gant L.M. Va ambrouget en doa betek va lojeiz da zont, st. Sant-Melani. Diskouezet en doa adarre bezañ nec'het gant disoc'h an arnodennoù e oa o paouez tremen. D'en em zigoll e toue e oa o vont d'ober politikerezh "à tout casser" er bloaz-se. Estlammiñ a men ouzh e vrogarouriezh.

Kont a oa bet eus tra pe dra. "Hevlene," emezañ, "e ranko kement hini a zeuy da gevredad ar studierion bezañ emezelet er Strollad da gantañ." Ne gare ket an Alamaned muic'h eget ar pobloù all, a ouzhpenn, hogen ne wele ket penaos e c'hellfe ur Stad vreizhat bezañ diazezet e degouezh trec'h ar Saezon ; evel pep hini ac'hanomp e oa gwall drechalet va mignon gant dazont ar yezh poblek a vije barnet d'ar marv ma ne zujemp ket a-benn da sevel ur Stad vroadel abarzh pell.

Danevellet en doa din istor ar martolod Peron e Konk-Kernev hogen hep reiñ din munud nevez ebet ouzhpenn. Mann, ne gare ket an Alamaned kennebeut ha se am lakae da gounañ e tamalle A.B. da O.M. emberr bezañ alamanoc'h eget brezhon hag e oa hemañ ar rebech grevusañ a c'helle bezañ graet dezhañ. "Arabate eo deomp karout muic'h an Alamaned eget a garont ac'hanomp," a glozas L.M.

Prest e oa L.M. avat da gregiñ en armoù diouzhtu ha d'en em gannañ evit Breizh. "N'omp ket masakoded memestra," a lavare. Arabate e oa dreist-holl kacout darempred gant ar rannvroelourion, re ar "Bretagne", pergen. Ar re-mañ a glaske tennañ o mad eus hol labour evit sevel o zammig rannvro c'hall a vefe graet Breizh anezhi. Eñ ivez a zromme ouzh an degouezh ma vefemp bac'het evel emrenerion gant ar pennadur-c'hioù gall.

Lakaet em boa L.M. da weladenniñ hor ramdi nevez. Neuze kimidiñ. Diouzh an noz e oan distroet da Sant-Jermen.

\*\*\*\*\*

P e n n a d 3

Antronoz e oan distroet da Roazhon d'abar-daez. Fellout a rae din arvestiñ ouzh unan eus abadennoù ar 'sizhunvezh keltiek' da vihanañ. War un dro em boa degaset boued evit an tiad a oa o chom e Roazhon.

Pezhioù-c'hoari brezhonek a oa da vezañ displeget en nozvezh-se. Dirak ar c'hoariva em boa kejet gant ur studier yaouank eus Kastellin, brezhoneger, am boa merzet en derc'hent a-gevret gant ar studierion all war al leurgêr(1). Toullet hor boa kaoz ha kemeret hor boa hor bilhedoù war un dro hogen va c'havandad nevez ne oa ket chomet betek diwezh an abadenn. De Coetlogon am boa merzet ivez ha me souezhet awalc'h o vezañ ma soñjen ne ouie hemañ tamm brezhoneg ebet koulz lavaret ; leun a youl vat e oa evelato, a anzavis.

Plasoù en 'arzouar' hor boa kemeret eta hag en em gavet e oan azezet e-tal an Aodig hag e nij. An Aodig a oa ur c'helenner, brezhoneger mat hag am boe tro da adwelout er bloavezhioù-se ; un den kourtes meurbet e hañvale bezañ, neuz vat dezhañ, war-dro pergont vloaz d'ar mare-se, a gredan. Kemeret en doa perzh en oberiantiz SAV e Paris, war un dro gant ar Mee a-hend-all. D'ar c'houlz ma oan erruet d'e vete e klemme dre ma ne oa ket flour awalc'h kadorennoù an 'arzouar'!

Peuz leun e oa ar sal evit an abadenn ; an darn-vuiañ eus an arvesterion avat a oa emsaverion anezho. An it. Mee a oa staliet en ul logell, nes deomp, hag hi fichet e giz Treger ; Stephan, ivez, va "loen du", deuet dre zlead micherel moarvat (rak an den kaezh ne ouie ger brezhonek ebet kennebeut) a renas e amzer epad an abadenn o sellout ouzh beg e votoù, sirius meurbet, tra ma c'hoarzh a-strak an arvesterion all endro dezhañ o klevout farsadennoù ar

(1) An Aridon e oa ar studier-se ; prientiñ a rae an apotikerezh evel A.B. Oberiant tre e voe ivez er Strollad broadel. War-lerc'h ar brezel e voe barnet d'ar marv en e ezvezañs. Bevañ a ra abaoe en harlu.

d'hoarierion (m'em boa un tammig truez outañ evelato, ret eo lavarout). Un toullad bigoudenned - re wirion hep mar ebet - a oa strewet er sal ; dedennañ a raent selloù an ofisourion alaman, na petra 'ta ; ar re-mañ ne dennent lagad ebet diwarno : en dro-mañ e oa servijet folklor dezho avat, hag hini gwir war ar marc'had.

Sonerezh a oa bet c'hoariet da gentañ. Da heul e oa bet displeget ar pezhig-c'hoari "Ar melen hag ar gwenn" eus n'ouzon mui peseurt skivagnor brezhonek, dister awalc'h e gwirionez hogen a geñverien ouzh al "Légataire universel" eus ar gall Régnard (Doue a oar perak : ankouact em eus abaoe an oberenn c'hallek-se a-grenn ; moarvat evit rreiñ un tamm lufr d'ur skrid ha n'en doa talvoudegezh ebet a-hend-all). A-hend-all, ma oa fall ar pezh-c'hoari e oa falloc'h c'hoazh ar c'hoarierion : hogen se ne c'hellen ket anzav ouzhin va unan pa oan deuet gant kement a c'hred d'an abadenn vrezhonek-se (1).

Barzhonegoù sonaozet a oa bet eronezet neuze. Unan anezho a oa e galleg : "Gloire à la Bretagne". An ton anezhañ a oa bet savet gant Henderyck, a gredan. Hag ivez "Ereizh a vevo" eus Abeozen. Goude-se e oa deuet Mona Pesker ha Yann Dahouet war al leurenn da ganañ gwerzioù. Mona Pesker a oa gwisket e-giz Fouen ; Yann Dahouet e-giz n'ouzon mui peseurt korn-bro eus Kernev. Ar c'honor am boa kavet bourrus awalc'h ; ne oan ket damantus tre ouzh ar ganerez kaezh, avat : re a orbidoù a oa ganti, a soñjen ; dezhi e tamallen ivez chom hep intent grik eus ar yezh a gane. A-ziagent en doa lennet Abeozen un nebeut addisplegoù d'ar gwerzioù en ur yezh lennek ha kempenn a oa un tamm mat uheloc'h ha dereatoc'h eget an trefoedajoù am boa klevet betek neuze.

D'ar "Gornandoned diwezhañ" (aozet gant Yann-Vari Ferron ha Kaouissin, a gredan) em boa klasket ur bern pezhioù mat. Soñjal a ra din hiziv e oa ar c'hinkladur ar pep

(1) Diaezet e oan bet gant distagadur rannyezhel ar c'hoarierion, hini Leon peurvuiañ, evurusamant. An "Ouest-Eclair" antronoz ne oa ket bet tener evit an abadenn : c'hoariva patronaj ne oa ken, a skrive ar buruteller.

gwellañ ennañ ; ar peurrest ne oa nemet folkloraj astriven da gavout barzhonius.

Va unan penn edon en abadenn ; hini ebet eus va c'henseurtes ne oa deuet, a gav din. Staget em boa da zivizout gant an Aodig - un neuz saoz a gaven dezhañ gant e dammig mourrou melen - diwar-benn embannadur "Nevenoe-oe" hag ivez "Itron Varia Garmez" a oa gortozet gant an holl abaoe nouspet bloaz : dont a zlee a zindan ar wask abarzh pell, emezañ. En trepasioù, epad an ehan hag e diwezh an abadenn e oan degouezhet gant ar Mee ha chomet e oan da varvailhat gantañ diwar-benn va studioù. O.M. hag Abeozen a am boa merzet ivez.

Antronoz vintin e oan distroet da Sant-Jermen, laouen gant va zroiad : ar wech kentañ e oa din mont d'un abadenn vrezhonek e c'hoariva Roazhon ha daoust ma veizen pegen izel e oa rez speredel an abadenn - oberennoù patronaj ne oa ken ar pezhioù-c'hoari a oa bet displeget deomp - e oa stad ennon evelato da vezañ klevet va yezh o tregerniñ war leurenn c'hoariva Roazhon koulz hag er sal hec'h unan : ur gavaden hag ur frealz e oa bet ar prouiad-se evidon.

Devezh ar 24 am boa tremenet e Sant-Jermen. Goude kreisteiz e oan aet da gistina gant va zad ("Kesten" a zistage va zad, a verken) hag ivez da welout ha prest e oa ar pemoc'h (1) hor boa goulennet digant ur c'houer e anv Gaillard (rouez e teue ar c'hig da vezañ ha dav e oa deomp en em ziluziañ evit pourchas ar pezh hor boa ezhomm). Gwerzhet e oa bet hor pemoc'h - ha rec'het va zad : lakaet en doa aozañ a-ratozh ur c'helorn evit plantañ kig-sal ennañ hag a vefe didalvoud diwar neuze(2).

D'ar 25 e oan deuet ur wech ouzhpenn da Roazhon a-benn en em enskrivañ er Skol-veur. Erruet e oan re zivezhat

- (1) "Pennoc'h" a zistage va zad, a noten. En devezh-se e komzemp brezhoneg.
- (2) A-benn ar fin e prenjomp ur pemoc'h all a voe graet silzig ha gwadigennoù gantañ er gêr, ar pezh a oa ur mell labour. Va zad a oa distroet da amzer o bugaleerezh : gant ar bleud a c'hellemp pourchas e krogjomp da fardañ youd gwinizh.

avat : serret e oa ar burevioù. Aet e oan da levracua e kêr ; va fennañ damant e oa neuze aozañ din un dastumad levrioù brezhonek hogen en dro-mañ n'em boa kavet netra diouzh va grad e "Levrdi Breizh". O tont er-maez eus ar stal e oan degouezhet gant J.M. hag an dimezell J. Ha me da zisplegañ petra e oan deuet d'ober eno hag an dimezell da ziskleriañ krenn : "Ma n'eo ket ur vezh gwerzhañ levrioù brezhonek ha bezañ dic'houest da rannañ ur ger er yezh-se!" Sebezet e oan bet gant seurt barnadenn rak berr awalc'h e oa brezhoneg an dimezell ha ned ae ket kalz en tu-hont da drefoedaj he farrez. J.M. avat a glaskerentañ servij din a lavaras din e oa ar gwellañ c'hoazh mont da gavout Kerverziou ma felle din prenañ levrioù brezhonek ; rummadoù eus "Gwalarn" a c'hellfen pourchas en e di. Ha reiñ a reas din chomlec'h ar barzh.

Kerverziou, d'ar mare-se, a labourer ebarzh greanti "Oberthür" - "Dor an nec'h" evel ma tro an anv alam- anek-se en unan eus e varzhonegoù. Ur ranndi bihan a bevar fezh bennak en devoa en ur vanell sko ouzh straed Paris, nes d'e stal-labour, e rez-douar ur savadur bras.

Ar skrivagner n'edo ket er gêr en devezh-se. e wreg an hini eo a oa deuet da zigeriñ din an nor (1). Ne ouie ket brezhoneg pe, da vihanañ, ne rae nepred gantañ; he fried n'en doa klasket-biskoazh deskiñ lenn dezhi, a gredan. Ur vaouez sioul hag habask e oa, melkoniet he doare peurvuiañ. Va ambrouget he doa betek burev he gwaz e-lec'h em boa dizoloet an teñzor a glasken : rummadoù eus "Gwalarn" ha skridoù embannet gant ar gelaouenn. Hogen, siwazh, berzet e oa tostaat ouzh an teñzor-se. Goude hir vare'hata evelato e tapis an aotre da amprestañ div niverenn bennak eus "Gwalarn" hag ur skrid kernevek "Seth hag Adam" gant an droidigezh vrezhonek(2).

- (1) Eil priod Kerverziou e oa. E wreg kentañ a oa marv o 1929 ma ne fazian ket. Un heklever eus ar prouiad kalet a ziwaskas ar barzh neuze a gaver er varzhoneg "An diri-servij".
- (2) N'on ket deuet a-benn biskoazh da lonn kerneveg evel ma lontan kembraeg hag iwerzhoneg.

Al levrioù-se am boa rankot daskoriñ daou zevezh war-lerc'h. En dro-mañ edo Kerverziou er gêr. E vab avat a oa deuet da zigeriñ an nor : un avreloù nav bloaz, lunedoù dezhañ, ha na ouie ket brezhoneg; e ziv c'hoar oadet a 10 ha 12 vloaz am boa merzet ivez ; ne ouient ket ar yezh konnebeut.

Ar wech kentañ e oa din divizout gant Kerverziou, a gav din. Un dremm gastiz en devoa, daoulagad louet ha sirius, diouzh a gouman ; ur vouezh vouk. Un nouz faezh en deveze alies, dreist-holl pa veze gwasket gant barradoù barr-anal ; hegarat e veze bepred avat; un hoar yacuank en devoa miret a-hend-all.

Diskleriet en doa din n'en devoa ket aotre a-berzh Roparz Hemon da werzhañ niverenn ebet eus Gwalarn: dav e oa o gouarn evit levraouegoù brezhonek a ranke bezañ diazezet dindan atebegzh "Ensavadur Breizh" : dek den o doa roet o anv betek neuze evit sevel al levraouegoù-se. Pa vije pourvezet dezho ar pezh a oa ezhomm e c'hellfen prenañ ar pezh a chomfe (1). Betek an niverenn pemzek e oa stank awalc'h ar skouerennoù ; an niverennoù war-lerc'h a oa peuz-diviet.

Kaoz a oa savet neuze a-zivout Gwaien ha kudenn zr brezhoneg er skol ; ne grede ket Kerverziou e vefe dogemerot ar brezhoneg er skol dizale, en hini gristen zoken "rak an eskibion, c'hwil 'oar," emezañ, "o deus kalz a zoujañ evit Kezar."

Gouezet em boa gantañ e tlee ar "Mabinogion" bezañ embannet er rummad "Sterenn", skrid ha troidigezh Abeozen keñver-ha-keñver, skeudennaouet gant Langleiz (2). Oberennoù brezhonek kozh diviet a oa da vezañ advoulet er rummad-se ivez.

(1) Evelato e pourchasis e ti Kerverziou un toullad mat a niverennoù eus Gwalarn hogen chomet eo diglok va dastumad : diank eo bepred un drederenn eus an niverennoù. A-hend-all n'ouzon ket ha kaset e voe da benn raktres levraouegoù Ensavadur Breizh.

(2) A-benn ar fin ez eo bet embannet ar skrid-se gant "Preder" ouzhpenn ugent vloaz war-lerc'h.

O tistreiñ d'ar gêr goude kuitaat Kerverziou em boa gweladennet adarre un diskouezadeg taolenoù ; tresadennoù kentañ "Itron Varia Garmez" a oa bet lakaet e gwel eno ; ouzh livadur un den yaouank gant Langleiz em boa taolet perzh dreist-holl.

Kejet em boa a nevez gant J.M. ha chomet e oamp da zivizout war ar straed, e ser hon tud peurgetket. Lavaret em boa dezhañ e oa troet va mamm en deizioù-se gant ar brezhoneg : klasket he doa deskiñ lenn ar yezh un tammig ebarzh levr "Jenovefa a Vrabant" am boa nevez prenet. E vamm-eñ a oa aheurtet a-enep d'hor yezh hogen ken intret e oa he spered ganti evelato ma c'hoarveze ganti pep an amzer distagañ bommoù ha krennlavarioù brezhonek. Kavout a rae da J.M. e oa un druez bezañ bet forc'het diouzh mammenn ar rannyezhoù a c'helle reiñ un tamm bevder d'hor yezh-ni. Hogen da se ne oamp ket kiriek, ar gouarnerezh gall ne lavare ket.

Goulennet em boa e ali diwar-benn an abadenn vrezhonek a oa roet daou zevezh kent er c'hoariva. Diwar-benn ar pezhioù-c'hoari hag ar c'hoarierion o unan n'en doa J.M. ali ebet ; marteze n'oa ket koulz ampartiz ar re-mañ hag hini tud a vicher hogen o brogarouriezh a oa dreist da bep diskred : an holl anezho gwitibunan a oa enrollet er Strollad.

Endervezh al lun-se am boa renet oc'h ober difraeoù er "reizhourva" evit en em eskrivañer Skol-veur ; eno em boa lezet ivez ar glenkellad am boa savet a-benn tapout ur yalc'had.

War-dro peñser eur e oan distroet da Sant-Jermen. Teñval e oa an amzer ha morglav a rae.

Betek antronoz an Hollsent e oan chomet e Sant-Jermen. Netra ne oa c'hoarvezet nemet em boa gouezet e-kerzh un diviz gant va zud e skrive va zad e lizheroù d'e vamm e brezhoneg p'edo en arme c'hall ; houmañ n'ouie ket galleg (1). Peseurt brezhoneg e oa, n'on ket evit lavarout.

(1) Klevet em eus komz eus ur vaouez, e-kichen an Alre, e Bro-Erec'h, he doa kemeret da garg treiñ e brezhoneg al lizhiri a veze kaset d'o zud gant ar soudarded glavadeget el lu gall e 1914.

Fogasiñ a rae va zad a-hend-all da c'houzout gwell ar yezh eget va mamm (peogwir e oa bet er c'hatekiz brezhonek, na petra!) ha kinniget en doa ober ur skrivadenn evit diskouez e varregezh ; met n'oa ket aet gwall bell ganti. A-raok bezañ skrivet teir linennad en devoa dilezet e vennad !

\*\*\*\*\*

Pennad 4

Graet em boa va annez e Roazhon eta e deroù miz Du 1941, gant va breur ha va c'hoarezed, 47 straed Sant-Melani. Feurmet hor boa ur ranndi a bevar fezh ebarzh un ti lec'hiet e penn un alez, adreñv ur gael ; kenstur e oa da straed Filger. Dre ur porrastell e penn all an alez e tiboufed war ar straed Sant-Melani, er penn uhelañ anezhi, tostik da leurgêr iliz an Itron-Varia hag an 'Tabor'(1).

Rannet e oa hol lojeiz diouzh hini ar berc'henez gant un trepas hag un diri ez aemp ganti da sevel d'al laez (mogerioù an trepas-se a oa kinklet gant klezeier ha sabrinier a bep seurt hag a bep ment a lufre en am'houlou). Hogen dre ar gegin, en traon, e c'hellemp dont tre war-eeun en hor ranndi. Hemañ a c'hoarveze da eus ar gegin-se - teñval awalc'h - hag ur sal debriñ en diaz hag eus div gambr en nec'h. Leun e oa an holl bezhioù-se gant arrebeuri stank, klet ha kompenn rak hol lojeiz a oa da feurmiñ gant glustraj, hogen daoust da se en em blijemp mat ennañ.

N'hor boa ket kalz darempredoù gant ar berc'henez, an dimezell J. a veve koulskoude en hor c'hichen. An dimezell J. a oa, a gredan, eus un tiegezh tud a lezenn eus Roazhon. Aet e oa war an oad dija (da vihanañ e kave din en amzer-se e oa aet) ; marteze he doa tizhet pemont vloaz pe war-dro ha daoust m'en em fiche e roed an oad-se dezhi aes awalc'h. Hec'h unan penn e veve diwar he leve moarvat, hep

(1) Ar straed Sant-Melani a zo, a gav din, unan eus koshañ straedoù gorre-kêr e Roazhon; strizh tre eo a-hend-all.

emell all ebet nemet ober katekiz da vugale ar barrez : ur vuhez unliv hag unton, sioul ha disafar, gouestlet holl d'an oberoù mat ha na oa diduet nemet gant gweladennoù ar c'henderv Armañs, dizemez ivez, ur skilpard hir, treut ha souchet, gwisket e louet bepred, mourroù brizh dezhañ, un tog blot du war e benn, sirius meurbet e zoare evel ma jaoj ouzh ouzh un den a lezenn, rak bez en devoa ar c'henderv ur garg bennak er "Palez". An dimezell J. a gare kalz he c'henderv hag hemañ a zamante dezhi : bep sul e teue da gerc'hat e geniterv hagez fur he c'hase da bourmen en "Tabor" ; ur c'henderv mat e oa.

Eveljust ne dremene den ebet koulz lavaret en alez a gase d'hon ti. Ur wech an amzer evelato e tichañse deomp spurmantif an ao. kont de V. (bet brudet e c'hourdadou en istor Bro-C'hall hanterenn gentañ an XIXvet kantved). Bihan hag izil e oa, treut eston. Gwisket espar e veze peurvuañ, gant otoù-marc'hekaat hag ur c'habell du ken espar all a lakae anezhañ da dennañ da boltred Loeiz XI en hanez Frañs. Pa gejemp gantañ e veze pintet peurvuañ war ur marc'h-houarn ken sebezus hag eñ : hep difanker ebet hag uhel e sturier. Sonn ha dellidleun e c'haolie e venveg egiz pa vije bet o varc'hekaat ur jav uhelbriz.

N'hor boa nemet daou-c'hant metrad da dreuziñ a-benn tizhout iliz an Itron-Varia hag an Tabor. Diouzh hor flojenn a-hend-all e klevemp fraezh lezoù kleier iliz an Itron Varia a vente an euriou. Aliesik eta, evel Frañsez Vallee ergentaou, ez aen ivez d'ober un tammig tro e liorz-kêr, kerkent ha ma veze erru an nevez-hañv. Paçal, en amzer-se, epad an dalc'hidigezh alaman, ne oa ket ken kaer al liorz-se ha maz eo bremañ : palaret e oa bet letonnedoù zo ha plantet patatez enno.

Ken tost all d'hon ti e oa kevrenn lennegezh ar Skol-veur d'ar mare-se. Ar pennadurezhioù alaman o devoa

doget savadur ar gevrenn-se, leurgêr Hoch ha graet anezhañ ar "c'hKommandantur" (bez e oa anezhañ ar c'hloerdi bras gwechall) hag e kevrenn ar gwir (gwechall palez an arc'heskob ha deuet da vezañ manva ar reizhour abaoe) eo e veze graet ar c'hentelioù lennegezh, war blasenn iliz an Itron-Varia end-eeun. Dre un nor-borched e teued tre er savadur-mañ a oa gronnet gant ur porzh en diaraog hag en diadrefñ gant ul liorz-veur, enni gwezennoù bras hag uhel. Un neuz kaer a oa d'ar savadur-mañ hogen enk awalc'h e oa evit niver ar studierion a ranke daremprediñ anezhañ, seul enkoc'h ma kendalc'hed da reiñ ennañ kentelioù war ar gwir. Diouzh tu al liorz avat e oa bet miret ur sal vras d'ar c'hentelioù war al lennegezh ; betek houmañ e pigned dre un diri diavaez ; ec'hon e oa ar sal hec'h unan hag hi sklerijennet mat gant prenester uhel ; goloet e oa ar mogerioù gant pallennoù bet flamm ergentaou hogen a oa gwall zislivet d'ar c'houlz ma stagis da bleustriñ ar Skol-veur.

E deroù miz Du eta em boa boulc'het va studioù lennegezh-klasel. Un tammig em boa tarmet e gwirionez kent ober va mennoz da vat. War-lorc'h ar vachelouriezh em boa soñjet epad ur pennadig prientiñ ar c'helenneriezh prederouriezh : an danvez-se a blije din meurbet d'ar marc-se. Douget e oan bet ivez da zanzen un aotreegezh war an alamaneg : barrek e oan war ar yezh-se. A-benn ar fin avat em boa dilennet ar yezhoù klasel dre ma kave din e c'hellfen awalc'h n'eus forzh genaos studiañ an alamaneg m'em befe c'hoant, tra m'em befe dilezet ar yezhoù klasel m'em befe kemeret an alamaneg da zanvez studi ; kontañ a men ivez e oa muioc'h a blasoù kelennerion war ar yezhoù klasel. Bezet pe vezet, al lennegezh klasel eo a zibabis ha marteze e vefe bet dishoñvel va zonkad m'em befe skoet kentoc'h war-du ar brederouriezh pe an alamaneg.

An darn-vuiañ eus va c'helennerion a oa Gallaoed. Al lennegezh c'hallek, da skouer, a oa kolennet din

gant Gilbert Mayer a zeuas da vezañ reizhour Skol-veur Aljer epad brezel Aljeria end-eeun a-c'houdevezh. Graet en doa un dezenn diwar-benn arver an anv-gwan trivliañ en oberenn vBalzac. Un den bihan awalc'h, tagosek a oa anezhañ, damserr e zaoualagad bepred, kravazhet war e daol-skrivañ e-doug ar c'hentelioù, du gloanek e vlev, diskramailh peurvuliañ nemet a grogas a-daol da zougen rochedoù gwenn feret mat diwar an deiz m'en ÷voe tapet n'ouzon mui peseurt karg er Skol-veur. War e zanvez e oa barrek ha plijus da selaou e oa e gentelioù ; mennozioù n'en doa ket nemeur avat ; ur wech bennak en ÷voa damveneget e zic'halloud da grediñ en un doue enkorfet ; rak kristen ne oa ket. Brogarour gall hag eñ gall ne oa ket muioc'h, a soñj din. Oc'h ober dave d'an amzervezh trubuilhet edomp o vevañ neuze e alie deomp chom peoc'h ha lezel ar barrad da dremen ; furnezh ebet, war e veno, ne oa par da hini La Fontaine en doa roet deomp, e-touez kant all, ar c'huzul prizius-mañ :

Pour vivre heureux, vivons cachés...

Paotr an dont-a-benn a oa anezhañ ha daoust ma klaske seveniñ e uhelc'hoant war-bouez e labour evit darn e kaven diaes reiñ pouez ha bri da gen skort mennad.

Monsieur Maréchal a oa ur gall eus hanternoz Bro-C'hall, genidik eus Arras, ma ne fazian ket. Lorc'h a denne eus e orin a rannvro 'Bikardi' a-hend-all ha bourrañ a rae o lavarout e tleje e rannyezh bezañ bet gwir yezh lennegel Vro-C'hall. Graet en doa ar brezel bed kentañ ha meur a wech en klevis o kontañ e oa gwell d'ober en amzer -hont eget studiañ - , en em gannañ evit ar vro ne lavaran ket hag ar mennoz-se, e gwirionez, a gomprenen awalc'h ; gloazet e oa bet brezel a-hend-all ha diwar ar gloaz-se e oa chomet mac'hagnet : pleget ha seizet unan eus e zaouarn. Kavout a ra din e plede gant "Unvaniezh an emgannerion gozh" ; daoust da se - pe marteze en abeg da se - ne ziskoueze kaout

kasoni ebet ouzh an Alamanned.

Kelenner kozh ha ma oa dija ne dorre ket e benn o prientiñ kentelioù, a gav din, met evezhiadennoù fur ha speredek diwar-benn danvez ar skridoù a blaenaemp a ouie ober hag en arbenn a se e oan prest da zigareziñ e ziegi hag e zigasted (1).

E-kreiz ar bloaz e oa erruet daou gelenner all, Gallaoued bepred evel ar re all, nevez dibrizoniet eus kampoù an Alamagn. Unan anezho a oa Charles Dedeyan, eus un tiegezh armeniat, evel m'en diskouez e anv. Neuz vat ha doareoù seven meurbet a oa dezhañ ha komz a rae gant kalz a aked ur galleg eus ar reizhañ. Tresoù kaer en devoa; kramennet un disterañ e oa e enebrez avat, a roe da soñjal en e ouenn. Ne chomas ket pell e Roazhon a-hend-all. Keit ha ma chomas avat em boe darempredoù mat gantañ(2).

Gwall-eñvor eus ar c'hampoù-bac'h ma oa tremenet drezo en doa dalc'het va c'helenner war ar gresianeg, Robert. Kalz gred en devoa e gwir evit e zanvez studi ha dellid bras meurbet en e garg a gelenner. Bourrus e kaven an den-se, a orin poblek, a gredan, ha douget da vennoziou an tu kleiz, hep strizhder spered avat rak c'hoarvezout a rae gantañ menegiñ ar geneiliez en devoa skoulmet gant ur beleg, kelenner eveltañ war ar gresianeg e skol-veur gatolik Lille. En em c'houlenn a raena-wechoù a-hend-all ha teurel a rae evezh ouzh kudennoù kravezel. Moarvat ne rae meneg ebet anezho biskoazh nemet ur wech, soñj am eus, e ser ur pennad eus an Iliad a zezrevell trec'h ar gwaregour dool en ur genstrivadeg en devoa diskouezet kaout diegi da zegemer meizad ur c'hras profet gant karantez un doueelezh bennak.

(1) Un doare dioutañ e unan, giz kozh, gant e vourroù stank hag e lunedoù stard-fri en devoa ar c'helenner-mañ.

(2) Gwanaet e oa bet gant e vac'hidigezh ha klask a rae boued fonnusoc'h eget an hini a c'helled kaout gant tikedoù ar strish-adurioù. O vezañ ma chomen war ar maez en devoa goulennet diganin pourchas amann dezhañ, pezh am boa graet opad un nebeut mizioù.

Amsteriekoc'h e oa an darempredoù am boa gant ar gelennerion all a oa orin breizhat. Ar gelennerion a orin gall a oa diseblant ouzh an Emsav, pa ouient e oa anezhañ. Ar re a oa a orin breizhat avat a vuheze bezoud an Emsav evel tamalladur o gallelezh ha rak-se e oa diaes dezho bezañ reizh en e geñver.

Ret eo lakaat a-ziforc'h eveljust degouezh an ao. Per ar Rouz (Per ar Gall ebarzh romant Abeozen "Hervelina Geraouell) a heuilhis e gentelioù war ar c'hembraeg krenn hag a vremañ, hag ivez un tamm war ar brezhoneg, er bloavezhioù-se, hep nemeur a frouezh e gwirionez. Evelato e tremenis gantañ an "Diplôme d'études supérieures celtiques" a-berzh ar Skol-veur, e miz Mezheven 1943, war un dro gant Pol Kentel.

Per ar Rouz ne oa troet tamm ebet gant Breizh. Ne grede ket e Breizh hag e talvoud all ebet a-hend-all. Un arvarour rik a oa anezhañ, evel meur a Vreizhad eus ar bobl deuet d'ar Skol-veur c'hall ha kollet ganto o breizhadelezh hep dont da vezañ gwir C'hallaoued evit keloù se, breinet o spered da vat gant amgredoni ar c'hantved tremenet, Ernest Renan koulz hag Anatol ar Bras a rae van a-wechoù da zamantiñ da Vreizh hogen na spient dazont ebet eviti.

Kement-se ne vire ket ouzh Per ar Rouz a vezañ un den seder ha seven (bihan, mourroù brizh dezhañ, lunedoù stard-fri: eus rummad ar brezel kentañ e oa), nemet faezh e neuz hag a rae e gentelioù hep entan ebet, egiz pa vije bet o kas da benn un truach a-benn gonit e vara, hag eñ beleg difeiz ur relijion barnet d'ar marv. An iskisañ eo e teue d'e gentelioù brogarourion daer o doa ranket dilezel ar politikerezh evit ar mare hag a zeue da selaou gant doujañs an otroù kelenner, Debeauvais hag an Helloco en o zouez.

An ao. Foulon hol lakae da bleustriñ war ar galleg kozh. Genidik e oa eus Brest hogen n'ouzon ket ha brezhonegerion a oa eus e dud. Ur c'helenner yaouank a oa anezhañ



en amzer-se ha ne gaven ket displijus e gentelioù: aes kaer o distage, gant ur vouezh flour hag un tamm lid ; en e ziviz zoken ne oa ket diank an digorou. Korfet tuzum ha dopez awalc'h e oa a-hend-all; rouez ha reut e oa e vlev, livrin, ledan ha blouc'h e zivoc'h. E gwirionez n'em boa ket kalz darempredoù gantañ.

Sokialour e oa hogen touellet a-grenn gant hengoun dispac'h gall 1789. Kehelañ a rae Bro-C'hall evel un doueez, Mamm wirioù Mab-den war-bouez nebeut ha terrorion -idoloù pe zisakrerion a seurt gant an emrenerion ne oant ket kalz diouzh e c'hrad, anat eo.

E diwezh ar bloaz 1941 e oa bet harzet gant an Alamaned ha bac'het e Roazhon. Truez am boa bet ouzh va c'helenner, seul vui ma ouien e oa kerentiet d'am c'hamalad Loeiz Roparz en doa kavet bod en hon ti, e kambr-doenn al laez (keniterv L.T. e oa pried F., protestantez a-hend-all, diouzh hengoun prezegerion gembreat zo a zeuas da avielañ e Kernev-Treger e dibenn ar c'hantved tremenet, a gredan) ha tro pe pro e c'hoarvezas gant an daou bried ober ur gwel du-mañ d'o c'henderv. Hogen bac'hidigezh an ao. F. ne oa ket padet ouzhpenn teir sizhun : war-bouez marc'hata gant ar pennadurezhioù alaman e oa deuet a-benn renerion Skol-veur Roazhon da zigarc'hariañ o c'henvreur.

Doare ur beleg un tammig en devoa an ao. Loyen, va c'helenner war al latin, un den hirvoan ha tarvoal ha dezhañ ivez doareoù lidek meurbet. Ur Breizhad genidik eus Enez Groe a oa anezhañ hogen gall penn-kil-ha-troad a-hend-all : epad e gentelioù e c'hoarveze gantañ ober Gallaoued eus Elzasiz a oa bet lakaet da geodedourion alaman d'ar mare-se. Disakr ivez e kave komzoù Yann Fouere en doa skrivet war-dro ar c'houlz-se, a gav din, e selle ar Vrezhoned, diwar neuze, kentoc'h ouzh ar Gwalarn eget ouzh ar reter. Evit an ao. Loyen - henn lavarout a rae didro - ne c'helle dont ar sklerijenn nemet eus Paris, na petra 'ta. Gwir iliz va c'helenner e oa ar skol-veur c'hall hag evitañ ivez

e oa ar Stad c'hall un arc'h santel na c'helle den stekiñ outañ.

Tro am boa da gejouz gant an ao. Loyen a-c'houdevezh ha prientiñ a ris evitañ ur studienn diwar-benn Sidonius Apollinaris hag Ausonius e 1946. Un den mat e oa a-hend-all ha d'ar mare-se end-eeun e nac'has reiñ disoc'h d'an trubuilh e oad o klask din er Skol-veur en abeg d'am brogarouriezh.

Ne ris mignon ebet din e-touez va c'henstudierion daoust ma oant Breizhiz a orin peurlvialañ. Ret eo lavarout ne oa ket kalz a baotred o pleustriñ war al lenneg-ehzioù klasel er bloaz-se. A-hend-all, ivez, e veven e kêr evel ar Roazhonad ma oan deuet da vezañ ; va freoù a gemeren er gêr ha ned aen nepred da diez-debriñ ar studierion. En arbenn a se ne oan douget tamm ebet da gemer o zrospere arbennik a zeu e gwirionez eus o bout distag diouzh ar gevredigezh voutin. Hogen ivez n'em boa koulz lavaret yalc'had ebet : pezh am boa tizhet kaout a servije din da breñañ levrioù ; un amprest digampi am boa gallet ober ivez - 5.000 lur - ha n'em boa ket bet da resteurel a-benn ar fin hogen ar moneiz-se a oa gwall zister e dalvoudegezh e-keñver an ezhommoù am befe bet m'em befe ranket en em vevañ va unan e Roazhon.

A-boan eta e tawwelen va c'henstudierion epad ar c'hentelioù. Koun a zalc'han eus anvioù hini pe hini anezho evel Peres a oa eus bro-Erec'h ha Rivoal eus kostez Brest. Niverusoc'h un tamm e oa ar studierezed. Darn anezho ne oant ket Breizhadezed. E-touez ar re a oa eus ar vro em eus dalc'het soñj eus an dimezell Chateignon a oa eus Gorre-Breizh ; div studierez all a oa eus ar Goueled : un duardez , genidik eus Gwaien, an dim. Skudeller, hag ur rouzardez a Dregourez e-tal Kemper, an dim. Bramouille. Ar re-mañ a oa degouezhet em raok d'ar Skol-veur ha n'em boo ket tro d'o daremprediñ nemeur. Ne zeuis biskoazh a-benn da c'houzout

ha bez e ouie an div blac'h yaouank-mañ ar yezh. Moarvat e oant brezhonegerezed hogen diaes tre e oa en amzer-se lakaat ur plac'h da anzav en un doare fraezh e oa gouest da gomz brezhoneg rak kement-se a vefe bet eviti koulz hag anzav e oa anezhi ur bloueziadez, pezh en defe plantet enni ur c'horfad mezh.

Ur studierez a dizhen lakaat da vrezhonegañ a-wechoù evelato : an dimezell Kelfenneg a briente un aotreegezh war ar brederouriezh an hini e oa. Houmañ a zaremprede neuze L.R. hag a oa genidik eus ar Menez, en hanternoz Kernev, a gredan. He gwelout a raen bep an amzer, war un dro gant va c'hamalad ha c'hoarvezout a reas ganin prestañ dezhi ul levr bennak a denne d'he danvez studi rak er grez-hont e oan berr-boell awalc'h evit krediñ he devoa ar brederouriezh un dalvoudegezh vras ; hogen, a-hend-all, evit komz didro, ne gaven ket an dimezell gwall genedus hag en em c'houlenn a raen a-wechoù gant truez diwar beseurt gras arbennik eus an Aotrou Doue e oa d'hañset d'am c'henseurt bezañ kouezhet e karantez anezhi. Bezet pe vezet, etrezomp hon daou e touemp a-benn da lakaat an dimezell gaezh da zrailhañ un tamm brezhoneg, a oa iskis meur a dro. Bepred, da skouer, e rae houmañ gant ar ger a orin gallek "bominab" evit sevel d'ar d'uhelañ distag an anvioù-gwan. E gwirionez, brezhoneg an dimezell a oa fall "bominab" ha poanuis meurbet da glevout da ziskouarn ur glanyezhour.

Ma vije bet he mignon L.R. ul lennegeur brezhonek en defe gallet deskiñ dezhi lenn ar yezh da vihanañ, met, dres, evitañ d'ober studioù a lennegezh, ne oa ket L.R. douget an disterañ d'al lennegezh da deuet e oa da Skol-vour al lizhiri un tammig evel ma vefe aet unan all d'ar galeoù. Aliesik e klemme diwar-benn an tonkadur reuzeudik en doa barnet anezhañ da zont d'ober studioù e kêr ha louediñ e-doug an deiz war levrioù gregach ha latin pa vije bet ken bourrus bevañ war ar maez ha tennañ an anal e-kreiz natur gaer hor bro. Nag a vicherioù droch, a huanado va c'hamalad, a rank ober unan a-benn gonit

vara war an tamm douar-mañ : hemañ a oa an diskan a zistroe bepred en divizoù am beze gant va mignon. Daoust da se avat e laboure start ; evel un ejen e sache an arar hep disterniañ, ma reas berzh en diwezh en e holl arnodenoù.

E gwirionez n'en em blije ket nemeur er c'hamalatrez a oa bet feurmet dezhañ gant hor perc'hennez hag a oa leun-chouk, war a lavare, a gozh arreburi sammet a boultremm vinimus a blante dezhañ pennadoù sifern eus ar gwashañ.

Broadelour e oa L.R. en amzer-se, pe, da vihanañ, brogarour. Deuet e oa da gemer mennozioù breizhek, a gav din, diwar levezon Yann-Vari Perrot a anaveze mat ; kerentiet e oa ivez d'ar skrivagner Taldir ; deuet e oa hemañ d'ober ur gwel d'e 'niz' ur wech bennak, da geñver unan eus kendalc'hoù ar Framm keltiek e Roazhon ; ur bourc'hiz dereat e neuz, gwisket kran, lunedoù stad-fri war e fri ivez, un tog blot war e benn, am boa marzet er porzh hogen n'em boa ket bet tro da sevel marvailh gantañ.

Ne vern penaos, brezhoneg ha brezhoneg hepken a oa etrezon ha L.R. hag e gwirionez e ouie va mignon mat tre e rannyezh ; gouest e oa ivez da fardañ un tamm lizher e brezhoneg lennek hogen biskoazh ne strivas da vat da beuz-zeskif ar yezh. E fed, n'en doa mennoz ebet diwar-benn dazont ar brezhoneg ; war e veno, moarvat, e oa tonket d'hor yezh chom da viken ur yezh kouerion ; merket em eus a-hend-all e hiraezhe bepred d'ar vuhez war ar maez. Dre se ne c'helle ket veizañ mat va savboent a oa hini un den eus kêr, pa roen da gompren dezhañ n'en doa ar brezhoneg chañs ebet da zresistvevañ nemet dont a rafe a-benn da esteurel ur sevenadur kêrel nevez e Breizh, tonket dezhañ en em astenn war ar maezioù zoken. Neuze e c'hoarveze gantañ tamall din ober fae warnañ ha sellout outañ a-c'horre va uhelder ! Sebezet e vezen gant hevelep tamall. Pezh a zo gwir eo e kemeren kalz muic'h a-zevri va emouestladur politikel eget a rae va c'hamalad ha na zeue ket zoken da vodadegoù ar Strollad

daoust ma c'hoarveze gantañ degas din kouviadennoù da vont d'ar bodadegoù-se. Breizh, evit va c'hamalad, a oa koroll da gantañ ; ne grede ket nemeur e c'helle bezañ ur Vreizh er-maez eus e gornig-bro.

Gant ur brezhoneger all a briente ivez an aotreegezh war al lennegezhioù klasel em boe darempred er bloavezhioù-se ; an Danteg a oa e anv ha genidik e oa eus Sant-Servez ; anavezout a rae Ar Yeodet, ar skrivagner a voe drouklazhet gant kilstourmerion c'hall e 1944. Ur maeziad e oa an Danteg-se (hor c'helenner Ch. Dedejan a c'houlenmas digantañ ivez pourchas boued dezhañ, pezh a reas a youl vat). Gouzout a rae mat e deodyezh. E-keit ma hentas ac'hanon e teskas lenn ha skrivañ ar yezh un tamm bennak, a gav din, ha war-lerc'h ar brezel e oa gouest da sevel lizhiri en ur yezh tost disi.

Ur paotr bihan ha koujorn, lagadet glas, dezhañ blev melen rodellek, divjod livrin ha diweuz tev, a oa anezhañ. En amzer-se e oa Breizhad mat awalc'h met dic'houest a-grenn da gaout mennoz politikel ebet, hag eñ ur paotr mat tre a-hend-all. E gwirionez e plede dreist-holl gant an obererezh katolik ha pleustriñ a rae emvodoù ar studierion gristen. Da sul ez ae d'an ofereñ gant ur mell levr ofereñ a boueze un hanter lur, da vihanañ. Rak-se ivez ne voen ket souezhet bras pa glevis e 1945 e oa deuet tre e kloerdi bras Sant-Brieg. Beleget e voe e 1947, a gav din, ha kelenner e skolaj Rostren hogen ne zeuas biskoazh d' an Emsav da vat.

Ur studier all war al lennegezh a oa o troieta e fabourzhioù an emsav, d'ar mare-se. An Troadeg a oa e anv ha dont a rae eus Kemperle, ma ne fozian ket. Techet awalc'h e oa d'ar vroadelouriezh ha L.M. en doa tizhet e lakaat da zont da vodadegoù ar Strollad Broadel. E devoud e reas zoken ur wech ur brezegenn dirak kevrenn ar studierion, 4 st. Toulouse. Un destenn dinoazh meurbet en devoa dibabet : doueed hag

harozed ar Gelted" hag e dammig prezegenn graet gant ur vouezh sioul hag habask ne oa ket displijus da selaou e gwirionez. E galleg e oa bet graet siwazh. Hogen broadelouriezh hor c'hamalad ned ae ket kalz en tu-hont d'ar prezegenoù diwar-benn ar Gelted kozh. L.M. hag a glaske e lakaat da emezelañ er Strollad a reas tro-wenn a-hed ar wech. Neuze, dipitet, e lavare M. dezhañ : "N'ac'h eus ket mezh evelato bezañ ken "veule"!" (Rak daoust ma ouie an T. mearvat drailhañ trefodaj e gorn-bro ne oa ket aes komz outañ e brezhoneg). Egile avat a responte sioul bepred : "Mais oui, je suis veule..." gant kement a zouster ma kolle unan kalon d'e genteliañ pelloc'h. Hemañ kennebeut, ne wriziennas ket en Emsav.

\*\*\*\*\*

P e n n a d 5

En amzer-se eta e oa marteze muioc'h a vrezhonegerion a-vihanik e-touez ar studierion o tont eus ar Goueled d'ober o studioù er skol-veur eget bremañ. Pa ne oa ket avat eus ar re-mañ gwir vroadelourion e oant sammet gant ur c'hemplezh a izelder spontus a vire outo a zistagañ ur ger en o yezh, nemet evit farsal e ve. Soñj am eus pegen sebezet e oa bet hor c'hamalad an Danteg ar wech kentañ ma oa deuet da gentel gembraeg Per ar Rouz : an holl re a oa bet o selaou Per ar Rouz hag int tud eus kêr endanat ne gomzent nemet brezhoneg (nemet ar c'helenner e unan eveljust!) Kêriz ! Se a oa diaes da gompren !

Ur vuhez nevez a zigoras evidon diwar an deiz ma teuis tre er Skol-veur. En un taol e voe torret an darempredoù am boa bet gant va c'helc'hiadur kent, hini ar skolaj pergen. En un nebeut mizioù ez eas a ziwar wel din va holl gamaladed daoust ma raent o studioù e Roazhon

evelдон. En hevelep doare e voen dispartiet diouzh va c'helennerion gozh. Merket em eus ez is evelato da weladenniñ an tad Hamon tro pe dro e-pad ar brezel. E diwezh ar bloaz em boa bet tro ivez da zemetañ an tad Plomet en e lojeiz nevez st. Sant-Loeiz. Hogen n'hor boa komzet nemet diwar-benn an amzer, tost-da-vat. E gwir, an tad Plomet n'anaveze ket ac'hanon mat. O vezañ m'em boa dilezet an hent nemetañ m'em befe gallet en em reiñ d'un uhelvennad - hervezañ. e touje na vefen troet en diwezh d'ur c'helenner disec'het - lavarout a rae din n'oa eneberezh ebet. ètre galvedigezh ar beleg hag hini ar c'helenner nemet e tlee an eil bezañ awenet gant ar gentañ ; va diawelout a rae em oad gour e stumm ur skrivagner dienkorfet gouestlet d'ar studi rik, e stumm ur 'razh-levraoueg' bennak sebellet ez vev dindan levrioù poultrennek : tristat tonkadur a c'hortoze ac'hanon! Hogen evidon da virout, dre va micher, boued e-leizh d'ar razhed-levraoueg marnaoniet n'on ket troet va unan - evit c'hoazh - d'ur razh-levraoueg, a-drugarez Doue (gouzout ar ran ez eo hemañ ar gwashañ dañjer a zo o c'hedal an emsaverion gaezh aet war o leve ha darev da brientiñ tezennoù evit an "Alma mater" !)

A-hend-all, war-lerc'h ar weladenn-se n'em boe ken tro da gejoue gant an tad Plomet. Damc'houde e klañvas hag e varvas. Hogen se a ouezis kalz diwezhatoc'h.

N'oa ket dav d'am c'helenner en em chalañ koulskoude : n'on ket bet biskoazh war var da zont d'ur bredelour gall war zigarez ma pleustren ar Skol-veur c'hall. Evit meur a abeg en em santen estren er framm-se. Berr e kaven furnezh va c'helennerion, hini G. Mayer a vonege deomp mojennoù La Fontaine koulz hag hini an ao. Loyer a zisklerie e lakae arz-bevañ Horatius dreist da gentelioù an Aviel. Pep follentez n'eo ket mat da erbediñ moarvat ; hag e-kreiz ar brezel diskiant a rene neuze henn meizen gwell eget nikun. Hogen e degouezhennoù ar brezel-se end-eun e kaven

skars 'arz-bevañ' ur barzh-a-lez hag un epikourour, ne verne pegen kaer bennak e oa e werzennoù a-hend-all. Nebeut a vri a zougen eta d'am mistri ha n'o doa uhelskouer na kelennadurezh ebet da ginnig din, goude m'em bije bet d'o disteurel a-c'houdevezh.

E gwirionez, va gwir skol-veur a bleustris pa grogis da heuliañ kentelioù ar "Skol-Uhel Emil-Ernod. Bez e kemeras ar Skol-se kendalc'h "Sav" ar bloaz-skol a-raok. Abeozen e unan, da skouer, a adkrogas gant e gentelioù diwar-benn "Barzhaz-Breizh" hag e miz Kerzu em boe tro da brestañ dezhañ an doare 1839 eus "Barzhaz-Breizh" an boa nevez prenet er bloaz-se e ti Plihon e Roazhon (e gwir n'em boa gallet pourchas nemet an eil levrenn).

Ar wech-mañ e veze roet ar c'hentelioù e salioù ar c'helc'h keltiek adarre, straed ar Prad-war-laez. Kalz stankoc'h e voent avat eget e deroù ar bloaz ; stankoc'h e oa ivez ar gelennerion koulz hag ar skolidi.

D'ar mare-se eo dreist-holl e ris anaoudegezh gant darn eus skrivagnerion varevezh Gwalarn. D'an 8 a viz Du en devoa graet an Helloco ur brezegenn diwar-benn Iwerzhon hag an IRA. An Helloco, lezanvet Bob a-wechoù (n'em eus gouezet biskoazh perak ) a oa ur brogarour genidik eus Pondivi ; eus un tiegezh gallekaet e oa avat : anv a reas din ur wech eus un eontr dezhañ a oa chaloni e skol-veur gatolik Angers, e Bro-C'hall, a gav din, hag a oa, gouez dezhañ ur gallgarour spontus. Un den eus kêr e oa n'eus forzh pe-naos, desket ar brezhoneg gentañ. A-raok ar brezel en devoa troet e galleg - gant ur raskrid e brezhoneg - levr eñvorennoù Dan Breen, ar brogarour iwerzhonat a voe unan eus ar re grogas da gentañ en armoù war-lerc'h ar brezel bed kentañ evit dieubiñ Iwerzhon. Talbenn saoznek an oberenn e oa "My fight for irish freedom" ha troet e oa bet e galleg "Mon combat pour l'Irlande". Pal an embannadur-se e oa broudañ ar vrogarourion yaouank d'an ober dre an nerzh, diouzh ma

vefe tu. An H. e unan en devoa klasket mui pe vui aozañ un taol dispac'h e deroù ar brezel ha bac'het e oa bet neuze epad un nebeut mizioù(1). D'ar c'houlz m'en anavezis avat ne oa mui nemeur a-du moarvat gant seurt doareoù-ober ; se a c'heller dastum da vihanañ diwar lenn "Galv", ar gelaouenn a embannas etre 1942-1943 (meur a wech en devoa goulennet diganin skrivañ pennadoù evit "Galv" met d'ar mare-se nem boa netra da lavarout). Daoust pe zaoust, barnet e voe d'ar marv war-lerc'h ar brezel, Doue a oar perak moarvat, hag abaoe e vev en harlu.

E 1941-1942 edo o **chom** e Roazhon hag o pried-tiñ un aotreegezh war ar saozneg pe an alamaneg ; pleustriñ a rae ivez evel Debeauvais, Kentel, me va unan ha re all kentelioù Per ar Rouz er Skol-veur (ha ni holl o sunañ gant an dudi a c'hellit empennañ 'kartennaouegi' ar c'helenner brudet) ; saozneg a ouie mat ivez ; en Iwerzhon e oa bet o vevañ moarvat. Ar brezegenn en devoa graet deomp en devezh-se ne oa ket gwellwelus tre. Displeget en doa penaos Ero-C'hall a oa deuet mat da Iwerzhoniz dre m'he devoa roet harp dezho da geñver emsavadeg 1798 ; evelato, en doa kendalc'het ar prezeger, e oad krog da anavezout anv Breizh abaoe m'en doa L.N. Le Roux (2) embannet e levr diwar-benn Padraic Mac Piarais. Teñval awalc'h e oa an daolenn en doa livet an H. eus stad kevredigezhel Iwerzhon : bepred e tivroe Iwerzhoniz, da Vro-Saoz en dro-mañ ; emouestlañ a raent zoken en arme saoz evit gonit o bara. Muioc'h a iwerzhoneg eget a vrezhoneg a veze embannet, a lavare an H., hogen n'o doa Iwerzhoniz d'ar mare-se kelaouenn ebet en iwerzhoneg penn-da-benn. Rak-se ivez e komprene ar prezeger obererezh an IRA.

An Helloco, evel meur a hini all, en defe karet

(1) Meur a hini a voe bac'het war un dro gantañ e ser an afer-mañ, Alan Louarn va breur-kaer en o zouez (war un dro gant anarkourion h.a.) Divac'het e voent c'hwec'h miz war-lerc'h.  
(2) L.N. Le Roux a voe unan eus diazezerion ar "Strollad broadel kentañ" e 1911. Kentoc'h eget en em gannañ dindan livrez al lu gall e tivroas e 1914. Marv eo en harlu e Iundon e 1944, lazhet gant ur V2 alaman.

bezañ soudard breizhat e Breizh. D'ar c'houlz-se avat e oa diaes. Ur meizadur romantel un tamm eus ar brezel en doa an H. a-hend-all. Da vare bombezadeg miz Meurzh 1943 e Roazhon em boa kejet gantañ war ar c'haoù e-touez an engroez a dud a ambrouge archedoù al lazhi betek bered ar reter. Divizet hor boa diwar-benn an darvoud eveljust ha diskouezet en doa va c'henseurt bezañ euzhet ouzh hevelep lazhadeg didalvez. Ne oa ket mui brezel, emezañ. Meizañ a rae ar brezel moarvat evel un emgann leal etre marc'hegourion o stourm evit ar gwir.

Egiz meur a zispac'her all n'en doa ket an H. un neuz taer tamm ebet. Ur sell glas kuñv a oa dezhañ, sklerijennet bep an amzer gant un tamm mousc'hoarzh berr, diduet. Un den seder hag hegarat a oa anezhañ a-hend-all ; sioul meurbet ha seven kenañ e komze bepred - pa rae, rak tavedek e oa peurvuiañ, evel ma tere ouzh un irionner a zoare. Daoust ma oa peuzyaouank c'hoazh en amzer-hont e oa moal ha luf e glopenn, ur mell klopenn ledan a zedenne diouzhtu an evezh.

En devezh-se ivez em boa gwelet Roparz Hemon evit-ar wech kentañ. War-lerc'h an H. en devoa komzet d'e dro evit displogañ penaos e vefe aozet ar studioù uhel e brezhoneg e Roazhon. Graet e vefe, emezañ, rummadoù kentelioù war ar yezhoù keltiek hag ar yezhoniezh keltiek dre vras. D'ar pemzekvet a viz Du, ur sizhun war-lerc'h en devoa kavet Roparz Hemon un anv evit ar skol en devoa savet : "Skol-Uhel Emil-Ernod".

E fin ar bloavezh-se end-eeun en devoa graet Roparz Hemon e unan un nebeut kentelioù kerneveg am boa heuliet gant aked awalc'h. Padal n'on ket bet dedennet biskoazh gant ar c'herneveg : en ur yezh e klaskan bepred ar ster politikel a c'hell kaout ; ned eo ar yezh nemet ur benveg e servij ur gevredigezh. Ar c'herneveg avat, neuze, hag eñ talvoudus evit

studi ar brezhoneg, hep mar ebet, ne glote gant bro nag emsav ebet ; ne oa eta, d'am soñj, nemet un hendra da reiñ da grignat d'ar razhed-levraoueg. A-benn ar fin n'on ket deuet a-benn da zeskiñ kerneveg tra m'em eus desket mat pe welloc'h iwerzhoneg ha kembraeg.

N'ouzon ket perak e talc'he Roparz Hemon kement d'ar c'herneveg. Moarvat e oa fromet gant striv - dic'hoanag d'ar c'hentañ sell - ar re a glasse adsevel ar c'herneveg a varv da vev e Kernev-veur. Evidon-me e kave din a-wechoù o defe graet koulz ar stourmerion-se o **toskiñ da gentañ kembraeg** pe vrezhoneg.

Daoust ma selaouis lies kentel ha lies prezegenn distaget gant Roparz Hemon e-doug an tri bloaz war-lerc'h n'em boa ket tro da zaremprediñ anezhañ da vat (a dostoc'h e henten Abeozen, da skouer). Gwir eo e oan gwall yaouank d'ar mare ma kejis gant ar skrivagner evit ar wech kentañ; nevez **deuet** e oan d'an Emsav ivez. Darn eus va mignoned a neuze a blede gant ar skingomz, evel Roperzh Steven, pe a labourer er Framm keltiek, evel A.E. pe va c'hoar, a nesaas outañ muioc'h eget a ris va unan. Evidon-me e talc'han soñj eus un den seder hag habask, dre ma talc'he warnañ rak ne blije ket dezhañ ar 'vorroderion' (ar ouenn anezho a zo stank en Emsav, siwazh). Er Framm, war a glevis, e oa ur mestr aketus da reoliñ trevell an amaezhourion : diganto e c'houlenne bepred ul labour rik ha kompenn. Un den eo avat hag a chome en e unan, hep keneillezh, n'eo ket dre demz-spered moarvat ; kentoc'h o vezañ ma n'oa d'ar c'houlz-se emsaver ebet par dezhañ e Breizh : hini ebet eus e genskrivagnerion e Skol Walarn, na Jakez Riou na Youenn Drezen, da skouer, n'o devoa e rez deskadurezh na koulz spered hag eñ.

Graet em boa anaoudegezh gant an it. Andouard - Meavenn - en devezhiou-se ivez, da geñver ar gentel iwerzhoneg kentañ a roas d'ar 15 a viz Du 1941. Stank

e oa an danvez skolidi d'ar sadorn-hont : un ugent bennak a selaouerion am boa niveret, en o zouez Kerverziou, Aodig, ar Mee, an Helloco, Arzel Even, an it. Debeauvais, hep kentañ va c'henseurted J.M. ha L.M. Tennañ a rae ar gelen-nerez un tammig, a gave din, da vaouez kreñv an aviel ha diouzhtu em boa bet doujañs vras eviti. Daoulagad bras, Krak ha speredek a oa en he fenn, dezho tamm ebet ar sell huñvreüs-se a verzer a-wechoù e daoulagad ar merc'hed o c'halon dener, kentoc'h avat hini lemm **ha pish** ur vaouez eus an douar hag ur plac'h a benn a oar ervat pezh a fell dezhi. A-hend-all e veze lirazhin bepred ; prest awalc'h e oa da zejanal (da skouer romant santimantel ar paour kaezh Abeozen), dizrouk avat peurvuiañ. Troet e oa da gaozeal (pezh a c'heller pardoniñ d'ur vaouez) ken ez ae hor c'henteliou a-c'houdevezh (d'ur mare ma ne zreistveve mui nemet daou pe dri skoliad diwar an ugent kentañ a oa deuet) da varvailhoù hir diziwezh hogen na oant ket dizudi rak ar fent ne rae ket diouer d'hor c'helennerez.

Ret eo din ouzhpennañ ne oa ket Meavenn ur vredelourez rik ; perzhioù all he devoa a-hend-all : gouest e oa, da skouer, da fardañ gwestell. Da geñver gouel Sant-Padrig, e 1943, he devoa azet d'he skolidi ur wastell a-benn lidañ gouel broadel Iwerzhoniz (pezh a oa ur c'hur en amzer -hont rak rouez e oa an danvez d'ober gwestell). Gwell e tlee bezañ gwestell va c'helennerez eget he c'henteliou, rak, evit anzav didro ar wirionez, ne zeskis ket nemeur a iwerzhoneg e-pad an tri bloaz bennak ma heuilhis kenteliou Meavenn. Gwir eo e vanke din moarvat ur feiz iwerzhonat kreñv awalc'h d'am entanañ (1).

Estreget kenteliou a reas Meavenn d'ar marc-se. D'ar c'hwec'h a viz Kerzu he devoa distaget ur brezegenn diwar-benn ar c'hampoù-hañv kentañ, a-raok ar brezel, hag hi o tisplegañ gant melkoni, e ser kamp Sant-Gwazeg, eñvor-ennou an "emsaverion deuet da vezañ kozh". Seurt tro-lavar

(1) Ne studiis an iwerzhoneg da vat nemet adal 1945. Awalc'h em eus desket evit lenn levrioù er yezh-se met n'on ket gouest da skrivañ na da gomz ar yezh-se.

am lakae da souezhiñ rak evelato ne gaven ket e oa ken kozh se c'hoazh ar skrivagnerez.

Pried Meavenn, an ao. L. Andouard, egiz ma ouzer, a blede gant ar gelaouenn vrezhonek sizhuniek "Arvor". Ne veze ket gwelet nemeur avat e bodadegoù an Emsav e Roazhon. An tiegezh Andouard a oa neuze o chom, m'em eus koun mat, straed Boderi ha c'hoarvezet eo ganin ur wech bennak mont betek ar ranndi bihan a zalc'he er straed-se. N'em eus ket soñj e welis ar vugale. Plijet en defe din o c'hlevout o vrezhonegañ. A-wechoù e rae Meavenn anv eus he bugale : meskañ a raent ar c'hemmadurioù o komz, a lavare. Evidon e oa un tiegezh brezhonek e kêr un doare burzhud ha rak-se e oan ken c'hoantek da glevout keloù diwar-benn an nebeudig re a anavezén.

Gant un nebeut studierion broadelourion em boa kejet er "Skol-Uhel Emil-Ernod". Gant Arzel Even eris da gentañ. Ar brogarour-mañ a oa ur Roazhonad (daoust m'en doa kerentioù e bro Erec'h, a gav din). Prientiñ a rae an aotreegezh war ar skiantoù natur. Mat tre avat en doa desket ar yezh a-benn neuze. Gouest e oa bet, da skouer, da ober ur brezegenn diwar-benn "Faust" e miz Genver war-lerc'h, (skrid ar brezegenn-se a oa bet embannet gant "Galv" un nebeut mizioù goude).

Un duard e oa Arzel Even, bihan awalc'h, dezhañ blev du stank ha fuilhet ha daoulagad birvidik, heñvel awalc'h e stumm moarvat ouzh hini hen Gembreiz, evel ma voe taolennet gant Takitus gwechall.

Daou vloaz koshoc'h egedon e oa c'heneil ha broadelourion e oamp hon daou met d'ar c'houlz-se, a-hend-all, ne oamp ket ali bepred an eil gant egile. Diforc'h hor savboentoù a ziwane neuze evit darn diouzh hor stummadurioù disheñvel a lennegour pe a skiantour. Kavout a rae d'am c'heneil e oa re strizh va stummadur a lennegour hag em befe gallet rannañ klokoc'h e sellboentoù m'em befe studiet

ar skiantoù. Ne oan ket e chal gant kement-se avat hogen daoust ma tegemerer awalc'h em befe tennet korvo diouzh studioù skiantel e ranken anzav ivez e oa diaes kas da benn div ervenn war un dro : va studioù a yezhoù hag a lennegezhioù a bep seurt a gemere va holl amzer.

Ar gred en devoa va c'heneil evit ar skiant en em ziskoueze a-wechoù en un doare dic'hortoz awalc'h. A-gevret gant Kerverzioù e plede neuze gant ar steredouriezh ma rae anezhi ur skiant rik evel ar steredoniezh hec'h unan (diwar arnod, a zisklerie din, e staded kengloterezh tonkadur an dud gant o flanedenneg. Kavout a ra din en doa studiet A.E. va flanedenneg ; n'em eus ket mui soñj mat eus petra e oa kont enni pe, marteze, n'en devoa ket diskuliet anezhi din, o vezañ ma oa gwall ziouganus, piv 'oar,); ma ne fazian ket e oan ganet dindan planedenn Sadorn a zo o levezonañ buhez an dipac'herion (ar re vat, epi am eus, rak A.E. a rae un diforc'h etre an dipac'herion vat hag ar re fall). Studiet en doa ivez planedennegi va c'hoarez-ed (hini va c'hoar henañ am boa gwelet, treset pizh ha resis kenañ, hogen dreist d'am intent, siwazh). Ur paotr kourtez avat e oa A.E. ha p'en devez da studiañ planedennegi ar merc'hed ne zisoñje ket reiñ dezho da spiañ ur "prince charmant" bennak da zimeziñ ganto (a zo a bouez bras evit ar merc'hed, evel ma oar an holl).

Lavaret em eus e kenlaboure A.E. gant Kerverzioù war dachenn ar steredouriezh. Uheloc'h pal avat a vuke ar barzh : fellout a rae dezhañ rakwelout tonkadur ar broioù o unan. Kounañ a ran en doa asuret din ur wech, p'edomp o tont endro a unan eus kentelioù ar "Skol-Uhel Emil Ernod" - ha ni erru e skoaz da gouronkva-kêr, etal ar palez Sant-Jord, e vefe friket Rusia abarzh fin ar bloaz, hervez he flanedenneg. Souezhet e oan bet gant diougan Kerverzioù o vezañ m'en em c'houlennene pelec'h an diaoul en devoa diskoachet Kerverzioù skrid-ganedigezh Rusia (nemet e vije bet hini Unvaniezh ar Soviedoù da glask).

Abaoe tremenvan e wreg kentañ e 1929, a gav din, e oa dedennet Kerverziou gant ar c'hudennoù a gravez hag ar preder a lakae gant ar steredouriezh a oa ur stumm eus e gravezelezh. E gwirionez e klaske kendeuziñ hengounioù relijiel liesorin, hini Kaldeiz - ar steredouriezh, moarvat - gant hini ar Gelted kozh pe ar gristenion. Ur wech, da skouer, e-tro ar bloavezhioù-se en devoa graet er c'helo'h keltiek ur brezegenn diwar-benn steredouriezh ha rezizet en devoa e c'helle unan hegemm e donkadur dre ar bedenn. Ar gravezelezh diseurt-se a oa stag e don e spered ouzh un hiraezh souezhus awalc'h d'ar velegiezh a zouge anezhañ a-wechoù da vennigañ ar c'hrouadurioù a veze kinniget dezhañ (1).

Diaes e oa da Gerverziou avat kavout e hent: bez e oa anezhañ, a soñj din, ur c'hristen en arvar pe c'hoazh ur c'hlaser gwirionez (pezh n'oa ket tamm ebet: re zedennet e oan gant ar politikerezh pleustrek evit koll amzer da voutc'hañ un enklask ha n'em boa galloud ebet da gas da benn; e devoud em boa lakaet va feiz etre krommennoù). Gant eston eta e kleven Kerverziou o tiskuliañ din un drovezh en defe karet gouzout gresianeg evit studiañ skrid an aviel. Seurt mennad a gaven souezhus (2). C'hoarvezout a rae gant Kerverziou avat lenn levrioù a skridyurutelerezh; un deiz em boa gwelet war e vurev ur skridig gant an tad Lagrange, a gav din; Kerverziou avat en devoa diskleriet din gant imor - hep ma c'houlennfen netra digantañ - n'en devoa al labour-se talvoudegezh ebet. Ne gomprenen ket mat avat penaos e c'helle Kerverziou kaout un ali a-zivout kudennoù a selle, a soñje din, ouzh arbenigourion ha na raen-mevan ebet outo.

An hevelep kravezelezh a lakae Kerverziou ivez hag hini pe hini eus e vignoned e Roazhon neuze da glask divunout an dazont ha kevrin ar marv dre hanterouriezh an taolioù-tro. Bepred avat e klaske hemañ en em

(1) Karet en defe Kerverziou krouiñ un amzervezh vrezhon o loc'hañ diouzh diazevidigezh ar Vrezhoned en Arvorig er Vvet kantved.  
(2) Diwezhatoc'h e lennis an aviel e gresianeg, evit en em ziduiñ avat

harpañ war ur savboent skiantel (ar pezh a oa natur eus e berzh o vezañ ma oa anezhañ ivez ur skiantour, ijinour war ar gimiezh). E gwir, oc'h heuliañ ar savboent-se e tis-oc'hed da zicueriñ a-grenn tregorfoniezh ha trabedoniezh a bep seurt: diwar arnod bepred e c'helled, adal ar bed-mañ, dianaout gwirvoud ha natur ar bed-hont. Hevelep tro-spered a gaver stank awalc'h er broioù saoz-maerikan ha bremañ zoken e-touez soviediz a zo dedennet gant kudennoù ar pellverzerzh, da skouer; e gwirionez e tenn awalc'h da hini an hudourion a wechall (1).

A.E. a oa lodek neuze e mannozioù ar barzh ha bourrañ a rae o venegiñ e ser ar steredouriezh lavarenn Shakespeare: "Mui a visterioù a zo er bed eget en ho prederouriezh holl..." hag oc'h enebiañ poell krin al Latined ouzh kalon hag awen pobloù an hanternoz: hennozh e oa ster ar brezegenn a reas en devezhioù-se end-eeun diwar-benn Faust. Hevelep kammulerezh eus an Natur avat ne oa ket divoutin en amzer-se, en Alamagn da vihanañ: un dilerc'h eus an amzervezh romantel e oa ar speredegzh-se.

Evidon-me, ret eo lavarout, ne oan ket hoallet tamm ebet gant studioù va mignoned nevez. Ne blije ket din kalz klevout komz eus misterioù seurt-se, danvezel rik, ha n'o doa netra da welout gant ar c'hevren kristen. Dreist-holl avat e soñjen ne oa ket reizh tamm ebet, war dachenn ar gravez a zo kevrinel, da lavarout eo a lez pep intrudu da Zoue, ur savboent skiantel a zo unan a c'halloud hag a earenerzh denel. Moarvat e kave an ezhomm-se da anavezout an dazont e ziazez en un anken devoudet evit darn gant ar brezel a oa o ren neuze: rakwelout a zo un tu neuze da zizarbenn an arvaroù a zo klozet en dazont. Damant ar wir gravez avat a zo disheñvel krenn diouzh hini seurt hudouriezh: evit un den a feiz n'en deus an tonkadur pouez ebet; ar pezh

(1) E 1945 e oan degouezhet e ti ur mignon eus an emsav e-kreiz un abadenn taolioù-tro am boa kavet fentus awalc'h. Kerverziou avat a oa eno ken sirius hag ur pab ha war-lerc'h an abadenn en devoa troc'het al liammoù e stage ouzh ar bed all gant ur gontell begin.



a gont n'eo ket darvoudoù hor buhez diouto o unan (daoust  
maz eo ar re-mañ steuenn an arnod a samm pep den), kentoc'h,  
a gav din, ar respont hag ar ster a ro Doue ha ni dezho;  
Doue a guzulik deomp ster hor buhez - hag hemañ a zo stag  
ivez ouzh hor personelezh. Marv ar C'hrist n'en deus talvoud-  
egezh nemet en arbenn a bersonelezh ar C'hrist end-eeun.  
Hor personelezh eo a ra eta hor gwir tonkadur ha n'eo ket  
hon tonkadur a ra hor personelezh. D'ar c'houlz-se perak  
bezañ e chal gant kement blevenn a c'hell kouezhañ diouzh  
hor penn ? An dalc'h eo dres stummañ hor personelezh evit  
sammañ hor buhez a zo tonket e pep keñver a-benn reiñ ur  
ster dezhi. Ret eo anzav e teu an dra-se da vezañ diaesoc'h  
-diaesañ en ur gevredigezh a laz pep diabarzhelozh dre  
ziasezañ darempredoù mui-ouzh-mui mekanikel ha kalvezel  
etre an dud.

E gwir e tenne brizh-kravez Kerverziou da ober  
eus Doue darn eus an natur evel Doue ar pobloù kentidik, da  
renkañ e bed an traoù, izeloc'h eget an dud o unan. D'ar  
c'houlz-se e oa gwell ganin c'hoazh Kelennadurezh ar vark-  
sourion a venn mestroniañ an natur dre ur skiant gwirion  
hag evedus. Dre vras n'on ket bet tentet biskoazh da gempenn  
ar gravez na da zegemer nep stumm a vodernouriezh pe a gen-  
deuzerezh-hengounioù a zisoc'h da sigotañ kuit Doue evel  
ur bersoniezh. Mennad ar c'hendeuziñ hengounioù, ouzhpenn,  
ne hañvale ket din bezañ kempoell o vezañ ma tenn an hengoun  
e dalvoudegezh end-eeun diouzh istor ar gevredigezh he deus  
e dreuzdouget. Evit an holl abegoù-se eta ne oan ket techet  
e nep doare da brizout mennozioù va mignoned.

Lavarout a rin ivez ne glasken ket nemeur  
b' eutaat diwar-benn ar c'hudennoù-se. Teurel a raen evezh outo  
avat dre m'eo c'haven iskis. Aliesoc'h, eveljust, e tivizemp  
diwar-benn politikerezh, petra bennak ma ne gemeras Kerverziou  
nag A.E. perzh oberiant ebet er politikerezh er bloavezhioù-se.

Kerverziou a genlaboure gant Roparz Hemon ; A.E. a oa  
amaezhour er Framm keltiek hag e 1943-1944 e kejen gantañ  
dreist-holl e burevioù ar Framm, e-kichen burevioù ar  
gazetenn "La Bretagne", 19 straed ar Moneiz. Eno e voe graet  
kentelioù ar "Skol-Uhel" adal ar bloaz war-lerc'h. D'ar  
mare-se edo oc'h aozañ ivez ur geriadur evit ar skiantoù  
natur ha ren a rae war ur boblad fichennoù a greske a zeiz  
da zeiz ; nec'het e oa avat evit goveliañ ar gerioù en deveze  
ezhomm a-wechoù : da skouer ne oa tu ebet da lakaa gerioù  
all da zeverañ diouzh "kabell-touseg", a zisklerie din.

Unan a laboure gantañ er Framm hag e ris  
anaoudegezh gantañ e-kerzh ar sizhunioù-se er "Skol-Uhel"  
e oa Tranvouez, un tammig a Leonad a oa bet lezanvet ganeomp  
Toutouig en abeg d'e vent vihan ; brezhonoger a vihanik e oa ;  
n'ouzon ket avat e pelec'h en doa desket lenn ha skrivañ.  
Ur paotr sioul tre e oa, o vutuniñ ur c'horn-butun. Toull-  
bac'het e voe e 1944. Evel nouspet re all ne voe ket mui kl  
klevet kel anezhañ war-lerc'h ar brezel.

Bremañ e roin un nebeut munudoù diwar-benn  
ar re a bleustras ar "Skol-Uhel" e 1941-1942. Bez e oa eta  
Debeauvais hag e wreg ; Debeauvais a welen ivez e kentelioù  
Per ar Rouz, er skol-veur hogen, evel m'em eus merket, ne  
ris biskoazh nemet eskemm un nebeut geriennoù gantañ. E  
wreg a ambrouge anezhañ a-wechoù ; un douarnenezadez a oa  
anezhi. Daoust da se ne gav ket din e oa anezhi ur vrezhon-  
egerez a-vihanik. N'em boa ket taolet kalz pled outi ken-  
nebeut. Debeauvais, d'ar mare-se, en doa en em dennet a-grenn  
diouzh ar politikerezh. Gouestlañ a rae e amzer da studioù a  
istor a vire evit ar Framm pe a embanie ebarzh "Galv".

Breur-kaer Debeauvais, Youinou, avat, am eus  
anavezet mat awalc'h. Deuet e oa da chom e Roazhon er bloaz-  
se. Bevañ a rae, a gredan, diwar ul leve muturniad brezel.

Epad emgannoù 1940 e oa bet troc'het naet unan eus e zaouarn gant ur bolod. Kontañ a rae din n'en devoa santet netra war an taol, nemet ul loskadur. A-ziaraok e oa bet skolaer epad daou vloaz en inizi Sant-Per-ha-Mikelon ha d'ar seitekvet a viz Genver war-lerc'h en devoa graet ur gaozeadenn plijus tre diwar-benn e chomadenn en inizi-hont. N'ouzon ket ha n'oa ket bet e soñj mont da gloareg. Un tamm en doa studiet prederouriezh Sant Tomaz ha bepred e kave dudi enni.

D'ar mare m'en anavezis e plede dreist-holl gant ar brezhoneg. Daoust ma oa genidik eus Douarnenez ne oa ket brezhoneger a vihanik ; en un doare espar awac'h en doa desket ar yezh avat : hep teurel evezh ebet ouzh ar yezhadur, dre lenn hag adlenn an hevelep levr (n'em eus ket mui soñj pehini) ha furchal er geriadur bewech ma tegouezhe gant ur ger dianav dezhañ. Bezet pe vezet, buan tre en devoa gouezet komz ha skrivañ ar brezhoneg ; fazioù kemadur a rae bepred met ar pouezmouezh reizh a oa gantañ.

Ur paotr krenn ha koujorn a oa anezhañ, rouez e vlev, rouzet e zremm, seder ha sichant, o vouse'hoarzhin dalc'hmat ; biskoazh ne welis anezhañ e kounnar pe enkrezet. Eo, ur preder bras en devoa : pourchas butun en un amzer ma oa dibaot an danvez-se - rak tizhet e oa da vat gant ar gwall-voaz-mañ. War-bouez amboulat sigaretennoù etre e vizi-ed e oa aet gell hogozik e viz-youe hag e viz-meud. Nepred n'en devoa e walch a gomtamm ha tintal a rae din evit ma rofen dezhañ darn eus va zikedoù butun ha ne gaven ket implij dezho peogwir ne vutunen ket va unan. E c'houlenn a rois dezhañ a-wechoù goude ma voe marv va zad (rak da hemañ e lezen va zikedoù, ken na gouezhas klañv da vihanañ). Neuze e tisklerie ar c'haezh Youinou en devoa avi ouzhin hag en defe karet bezañ em lec'h, dieub a-grenn diouzh ar sklavelezh-se.

Hag eñ broadelour rik ne rae ket Youinou kalz a bolitikerezh. Awalc'h e oa dezhañ heuliañ kentelioù ar

"Skol-Uhel". Peurvuiañ e tivizemp diwar-benn hor studioù (n'em eus ket soñj hor befe graet a-zivout kravez rak Youinou ne oa ket anezhañ ur "c'hristen drol" evel ma rae Kerverziou anezhañ e unan ha n'en doa mennoz arbennik ebet war an divoud-se .

Gwall drubuilhet e oa bet va mignon avat d'ar mare ma oa bet savet ar "Bezen Perrot". Kavout a ra din en doa termet ur pennad mat a amzer a-raok en em grennañ da emezelañ er Strollad broadel nevez a oa bet savet e 1942-1943 gant Debeauvais, an Henaff ha Guieysse. Kristen e oa Youinou ha marteze en doa bet diegi da heuliañ un emsav ha na ket brudet da vezañ renet gant kristenion c'hredus. Kounañ ran c'houzh hiziv e komze ganin war an divoud-se un drovezh m'edomp o treuziñ a-gevret liorzhañ an Tabor - e deroù nevez-amzer 1944 e oa, a gav din - ; ha displegañ a rae din va c'heneil penaos e oa dinoc'het kaer e spered abaoe m'en doa graet e zibab da vat ha ma oa aet a-du gant ar Strollad nevez ; ret mat e oa, emezañ, kemer ar mad war un dro gant an droug hag a-hend-all, a ouzhpenne, ne c'helle bezañ politikerezh peurvat ebet. Mennozioù hollek e oa ar re-mañ ha na spirent ket ouzh an degouezh resis en devoa da dalañ outañ. Pezh en doa skoet va spered eo n'en doa ket roet din abegoù ergerat da ziskleriañ e emzalc'h, o lavarout, da skouer, e ranke an Alamaned bezañ trec'h, pe, da vihanañ, e tleent bezañ trec'h evit aotren d'ar vrogarourion sevel ur Stad vroadel. Nann, hañvalout a rae Youinou bezañ heuliet un tonkadur diharzus ha prezeget en doa, war-bouez nebeut, evel m'en defe gallet ober un danvez lean a bleg en diwezhañ da heuliañ e c'halvedigezh. E fed, hag eñ breur kaer Debeauvais, broadelour eveltañ, e oa diaes dezhañ mont gant uh hent all.

A-c'houdevezh e klevis keloù eus e blanedenn griz : harzet e Bro-Elzas, bac'het e kamp Schirmeck ha merzheriet eno betek ar marv. Evel-se ez echuas ar brogarour

-mañ e vuhez hag eñ gwall yaouank : n'en devoa ket tregont vloaz. Gant doan em eus gouezet pebezh marv en doa bet. Un den madelezhus ha didro e oa. En em c'houlennet on atav ha drouksantout a rae e dremenven en deiz m'en devoa diskuliet din peseurt dibab arvarus en doa graet.

Estreget dispac'herion pe bolitikerion war o leve a bleustre ar "Skol-Uhel". Bez e oa ivez studierion vat, broadelourion-diouzh-ar-sul, danvez tataoù-kozh-hanna-ouzont-ket-petra-ober-er-vuhez hag a zesk brezhoneg - fall peurvuiañ - evit deverrañ o amzer. En o zouez e oa an ao. A., ur Roazonad dimezet d'ur wenedourez, ar skoliad peurbadus a glaskas deskiñ ar yezh e-doug e vuhez ha na zeuas biskoazh a-benn. Un amaezhour eus mererezh ar Postoù a oa anezhañ.

Eno em eus anavezet ivez Gweltaz ar C'hounaer a oa broadelour en amzer-se. Prientiñ a rae un aotreegezh war an istor (hogos tremenet e oa gantañ a-benn neuze). Desket en doa mat brezhoneg hag e miz Genver en devoa distaget ur brezegenn diwar-benn relijion ar Gelted hag hini ar C'hermaned (an hanternozelezh-se a oa diouzh ar c'hiz : en devezh -se end-eeun en devoa an Helloco e unan komzet diwar-benn an 'Edda', dastumad hen veurzanevelloù Lec'hleniz, d'an 10 a viz Genver). Un nebeut sizhuniou war-lerc'h, d'ar 6 a viz C'hwevrer en doa graet G. ar C'hounaer un displegadenn diwar-benn kudenn ar ouenn. Ne gounan tamm ebet petra en doa lavaret ar prezeger : an destenn, adarre, avat, a oa diouzh ar c'hiz. War-lerc'h ivez e oa savet breutadeg. A.E. hag eñ paotr ar skiantoù natur en devoa roet un nebeut diskleriadurioù a-zivout ar rummadoù gwad ; Kenan Kongar, en em gave **enc** en devezh-se, en devoa displeget penaos ne oa gouenn vrezhon ebet evit an ampoent ; marteze e tiwanje unan en amzer-dazont o vezañ ma oa tuet an dud muioc'h mui da zimeziñ er-maez eus o farrez. Seurt kudennou ne hañvalent ket din bezañ a bouez bras : ar boueta a oa awalc'h, a verken em deizlevr,

evit kemm perzhioù-korf an dud, ment peurgetket : brasoc'h eo an dud hiziv dre maz int maget gwelloc'h ha ma ne rankont ket labourat ken abred.

Va c'hamalad, padal, en devoa marc'hedoù ha n'em boa-me tamm ebet. Da skouer e taole evezh bras da lakaat ar pouezmouezh ha se a bismigen awalc'h rak daoust d'e youl-vat ne zeue tamm ebet a-benn da zistagañ evel ur brezhoneger diwar ar maez o vezañ ma oa anezhañ un nevezvrezhoneger eus kêr ; an taol-mouezh er gerioù ne oa ket awalc'h ; un ton-skiltrañ a oa da virout ivez hag hennezh ne c'hell bezañ tapet nemet diwar hir vevañ gant brezhonegerion a vihanik, pezh a zo dreist da c'halloud an darn-vuiañ eus an nevezvrezhonegerion. Tamall a raen dezhañ ivez treiñ e-galleg gerioù skiantel e tichañse dezhañ arverañ e brezhoneg en e brezegennou. E gwir ar preder a gemere Gweltaz ar C'hounaer gant an distagadur hag ar yezh poblek a wiske a-wechoù ur stumm fentus awalc'h. D'ur beure em boa kejet ha toullet kaoz gantañ war leurgêr an ti-kêr e Roazon ha setu me sobezet mik ouzh e selaou. Abaoe an neizheur en devoa divizet va c'heneil e ranke ur brezhoneger a zoare 'ruihañ' al lizherenn -r-, evel ma reer e kornioù zo eus "Breizh-Izel". Ha feiz, dont a rae a-benn d'henn ober eus ar c'hentañ ma ranken anzav gant desped ne vefen ket bet gouest gwech ebet d'o distagañ koulz hag eñ !

Pol Kentel a zeue ivez d'ar "Skol-Uhel" d'ar mare-se. Tremenet en doa dija an aotreegezh war ar saozneg, a gredan. Un den yaouank sirius e oa, a zouge un tog blot hag en doa doare ur c'helenner penn-da-benn. Berzh a reas war un dro ganin en "Diplôme d'études supérieures celtiques" ar Skol-veur, e 1943. Mennet e oa mui pe vui sa sevel oberennou brezhonek en amzer-se. Pa vankas an awen, evel nouspet re all, e troas war-du ar yezhoniezh ha sevel a reas a-benn ar fin un dezennwar an niver-daou e brezhoneg.

Tud all a veze gwelet bep an amzer er "Skol-Uhel"

: un dimezell Roy ha n'em eus ket mui soñj tamm ebet piv e oa. C'hoarvezout a rae gant Remont Delaporte ober un dro bep an amzer hogen ne heulie ket ar c'hentelioù, selaou ar prezegennoù ne lavaran ket. E-touez ar re a voe distaget e deroù ar bloaz e rankan menegiñ ivez hini Debeauvais d'an ll a viz c'hwevrer diwar-benn adc'hermanekaad Alamagn ar reter ha yezhoù slavek bihan ar rannbarzh-se (e gwir n' en doa ket kemeret Debeauvais ar savboent reizh evel ma c'heller merzout o lenn skrid e gaozeadenn a voe embannet war "Galv" da c'houde). Me va unan a reas un displegadenn diwar-benn ar skrivagner alaman Theodor Storm, war-dro fin miz Meurzh, un nebeut devezhioù a-rack dinbezañ harzet ha toull-bac'het gant polis Vichi. Ur mell labour am boa kaset da benn evit sevel va frezegenn. Studiet em boa ul levr en alamaneg gant Stuckert a-zivout ar skrivagner, lennet rak-skridoù e gontadennoù nevez prenet ganin (Renate, Aquis submer submersus), troet nouspet poz eus e skridoù. A-benn ar fin em boa duet un tregont pajennad bennak. Va studiadenn avat hag hi savet war ar prim n'he doa framm ebet hag evit komz fraezh e oa youdek awalc'h. Daoust da se henn lennis gant kalz a goustiañs d'am skolidi aketus, hep sevel va fri diwar va follennoù, dinec'h kaer rak gouzout a raen e oa gouest va skolidi da c'houzañv n'eus forzh petra evit ar yezh, nemet Roparz Hemon a oa bet borrodet en diwezh hag en doa kroget da varvailhat gant e amezeg e-loc'h selaou ar c'helenner. Ma ! N'em eus ket dalc'het droukrñs outañ evit se. Evit va frezegenn, biskoazh ne stokis outi a-c'houdevezh hag hiziv c'hoazh, ma n'eo ket kollet, e tle kousket e strad un direktenn bennak.

Ar pezh a oa dedennus er "Skol-Uhel", ouzhpenn ar c'hentelioù hag ar prezegennoù, a oa an divizoù a c'hel-lemp kaout gant ar vignoned a zeue di. D'ar 6 a viz c'hwevrer, da skouer, e oan distroet d'ar gêr a-gevret gant an it. Andouard, Youinou, A.E. hag an it. Debeauvais. Kont a oa bet

eus stad ar yezh hag an holl a oa a-unvan evit anzav e oa gwall fall ; ma ne zeufed ket a-benn da sevel ur stad abarzh pell ez afe ar brezhoneg da goll hep mar.

Meavenn he doa komzet ivez eus emsav Skosiz. Ar brud a rede - n'ouzon ket perak - e oa bet fuzuilhet renerion an emsav du-se gant ar Saozon. Ar skrivagnerez avat a gave ar c'heloù-se diwirheñvel a-grenn : tud seven e oa ar Saozon, war he meno. A-hend-all n'he doa ket Meavenn kalz a istim evit Skosiz : politikel rik e oa o emsav, lec'h ebet ennañ d'ar yezh ; da vihanañ, a lavare, Kembreiz a oa gouest da zifenn o yezh.

Divizoù gouiziekok'h c'hoazh am boa gant Aodig a zaremprede ivez ar "Skol-Uhel" d'ar mare-se : diwar-benn hen vrezhoneg, hen geltieg, indezeuropeg. Gouest e oa Aodig da sevel studiadennoù diwar-benn ar ger galianek (?) "Ambantos" pe ar ger latin "solidum", tad-koz ar ger brezhonek "saout", war ar prim bepred, ha gant kalz a zoujañs e selaouen dalc'hmat kement a zisklerie din.

\*\*\*\*\*

P e n n a d 6

Diouzh pezh emañ o peouez diskleriañ e c'heller merzout pegenamsterieko ar 'stourm' evit ar 'yezh' hag ar 'sevenadur' en ur vro sklav. Daoust ma ne zeue d'ar "Skol-Uhel" nemet broadelourion, koulz lavaret, e oa ar re-mañ distag mui pe vui diouzh buhez ar vro a zo politikel da gentañ. Kavout a rae din en em gaven eno en un doare "tour-olifant", diforc'h diouzh ar bed a-bezh ha diouzh an Emsav e unan.

En abeg d'ar merzad diskonfortus-se e oan tizhet gant arguerzh va mignon L.M. na ouie ket mat brezhoneg hogen a blede da vat gant ar politikerezh hag en un un doare e hañvale

pezh a rae bezañ efedus. Hemañ a lavare din avat : daoust hag o teskiñ kerneveg pe iwerzhoneg eo e teuimp a-benn da zieubiñ Breizh ha da sevel ur Stad ? Pe, o venegiñ komzoù Neven an Henaff, a gredan : n'eo ket gant kelennerion Skol-veur e vo saveteet ar vro. Poellek e oa seurt daelerezh ha rak-se en em ouestlis a-grenn d'ar politikerezh er bloavezh kentañ ma pleustris ar skol-veur.

Ar pezh a oa kasaus avat eo e oa galleggerion eus an holl re a rae war-dro politikerezh e Breizh d'ar mare-se. Da skouer, war un dro gant bodadennoù ar Skol-Uhel e heulien re ar Strollad a veze dalc'het st. Toulouse peurluviañ hogen ivez er c'helc'h keltiek, war-lerc'h dalc'hoù ar Skol-Uhel end-eeun. Eno e rae Youenn Delaporte prezegennoù diwar-benn istor Breizh. D'an 18 a viz Du, da skouer, en devoa graet un displegadenn diwar-benn ar Roueri, e galleg, rak ne gav ket din e teuas Y.D. biskoazh a-benn da zeskiñ ar yezh, lakaet en defe klasket a-zevri. Hemañ ivez a roe ur pouez dreist d'an istor, pezh n'eo ket souezhus rak aotreeg e oa war an istor a-hend-all.

Youenn Delaporte a oa un duard; daculagad bihan ha krak evel re ul logodenn a oa en e benn, hag int kuzh a-dreñv ur re lunedoù. Un den sperdek tre a oa anezhañ, dilorc'h ha lent awalc'h, a gav din : ne vourre ket oc'h en em ziskouez, sichant ha drev a-hend-all hag a gleven allies o c'hoarzhin, dedennus hep bezañ brav (kaeroc'h tres egetañ en devoa e vreur Remont a oa e penn ar Strollad).

Ne gav ket din en devoa Y.D. ur roll kefridiel er Strollad hag a-hend-all, nikun - me atav ne raen ket - n'anaveze ervat e oberiantiz ennañ. Dre 'n arbenn avat ma ouie mat an alamaneg e oa deuet da vezañ, tamm pe damm, un doare mavdiern eus an diavaez karget eus an darempredoù gant ar pennadurezhioù alaman hag ar re c'hall-vichiat, diouzh ma veze tro. Kudenn vras ar S.B.B. dres e oa c'hoari etre an daou rumm. Abaoe kejadenn vMontoire e kenlaboure ar

Stad c'hall gant an Alamaned ha da briz he c'henlabour e c'houlenne hounnezh digant ar re-mañ doujañ he beli war an diriegezh a aparchante dezhi. Politikerezh renerion an Emsav e 1941-1942 eta - evel tud Vichi o unan e sellent ouzh trec'h an Alamaned evel ouzh an degouezh gwirheñvelañ - e oa klask bezañ deuet mat d'an Alamaned evit tapout diganto un tamm frankiz da vihanañ evit Breizh en deiz ma tlee bezañ sinet ar peoc'h. E gwir ne oa ket diogel emgav S.B.B. o vezañ ma ne oa gouzañvet gant an Alamaned nemet evel un droukkinnig hag ur spontailh a-enep da c'houarnamant Vichi. Roll Y.D. e oa endeeun derc'hel darempredoù mat gant ar veliezh alaman evit mirout na ve divodet ar Strollad diwar levezon gouarnamant Vichi.

Se a oa afer a levrierezh. Evidon-me e lavare ober politikerezh d'ar mare-se mont da vodadegoù ar Strollad evit ar studierion. Evit anzav ar wirionez e chome ar bodadegoù-se war ul live izel awalc'h. Tolpet e veze ar studierion eta hag unan eus sturierion ar Strollad a zeue neuze da gomz dirazo. Pol Gaignet a rae atav an hevelep prezegen diwar-benn bro, rannvro, emrenezhez, disrannouriezh h.a. Ar pep pennañ eus kelennadurezh ar Strollad a c'hoarveze eus ober ur c'hemm etre ar vroadelouriezh hag an diskoulmoù a c'helled reiñ dezhi. Kement-se a oa elfennel e gwirionez. Neuze e roe Y.D. deomp ar c'heleier diwezhañ diwar-benn an divizoù etre Pétain ha Goering en ur asuriñ deomp ne oa ket bet aberzhet Breizh en divizoù-se.

Daoust ma oa bet kemmet renerezh ar Strollad e kendalc'he darn eus ar stourmerion gentañ da labourat ennañ. Guileysse, dreist-holl a oa oberiant; gweladenniñ a rae maered ar parrezioù evit o gonit d'an Emsav. E Plouarzel -Roazhon en devoa klasket diazezañ ur c'hevrenn eus ar Strollad a-gevret gant Dorig ar Voyer hag Orio, va c'hamalad eus Sant-Marzhin hogen ne oa ket deuet an taol da vat rak Dorig ar Voyer a zlee dont d'ober e annez e Roazhon damc'houde.

Unan eus amkanioù ar Strollad d'ar mare-se avat e oa sevel ur 'bezen'. E-kreiz ur brezel, pa rene e pep lec'h lezenn an nerzh, ne oa ket souezhus ur mennad a seurt gant hemañ. Etrezomp paotred yaouank ar Strollad e save breutadeg a-wechoù diwar-benn arver an nerzh. D'an ll a viz Du, da skouer, o devoa izili kevrenn ar studierion renet un dael war an divoud-se. Hini pe hini eus ar re a gemere perzh en diviz ne felle dezhañ degemer reolenn ebet a vuhezegzh pa veze meneg a ober brezel. Ne duen ket d'ar re-se. Ar bennaenn m'en em sturient diouti ne c'helle nemet disoc'hañ d'an dirollerezh ha d'an diskiantegzh. "Deomp eo ren hon oberoù ha n'eo ket d'hon oberoù ren ac'hanomp," a skriven.

Keal ar 'bezen' ne oa ket unan nevez d'ar mare-se. Abaoe 1937 dreist-holl e soñje mui pe vui darn eus stourmerion an Emsav broadel en un ober dispac'hel. A-raok ar brezel end-eeun e oa bet krouet ar "waznezh arbennik" a oa mennet da c'hourdoniñ an dud yaouank war zoareoù zo eus ar vicher soudard, a gredan. N'ouzon netra resis a-zivout ar 'waznezh'-se. Klevet em eus avat un emsaver eus Gwaien evel don o tamvenegiñ anezhi hag o spontañ a-ziwar-lerc'h gant ar soñj e c'hellje an urzhiadur-se bezañ bet arveret pezh n'en defe degaset, d'e soñj, nemet an drouziwezh d'an Emsav hag ar marv dezhañ e unan, kredapl bras. Graet em eus anv ivez eus afer ar vag "Gwalarn" a zlee degas armoù da Vreizh hag a oa bet paket gant ar c'herreizh gall, dres a-raok ar brezel. En degouezh-se e oa bet harzet tri stourmer yaouank a-gevret gant an Helloko, Perez hag A.l. en o zouez. Goude bezañ bet bac'het epad dek miz bennak e oant bet laosket da vont hep ma klaskjed o barn.

Gwirheñvel eo eta e oa ar 'bezen' un hêrezh diwar Strollad broadel Debeauvais a-raok ar brezel ha n'o doa graet renerion nevez ar Strollad nemet reiñ o asant d'un obererezh en devoa un tamm dishualded endev e frammoù hollek ar

Strollad.

Bezot pe vezot, pa grogis da gemer perzh a-zevri en emsav politikel etre miz Mae ha miz Du 1941 e oa kaoz bepred a sevel ur 'bezen' ha darn eus va c'hamaladed evel A.B. a zisklerie e oa hemañ ar mennad sirius nemetañ a c'helle ar Strollad kas da benn. Yann Goulet, a-hend-all, - an dra-se am eus merket ivez - a veze bepred o kanmeuliñ skouer Iwerzhoniz. Bourrañ a raed ivez o c'hoari soudarded. D'an 12 a viz Kerzu e oa degouezhet Yann Goulet ha Pol Gaignet d'ar c'helc'h keltiek, war-lerc'h kentel Abeozen hag hini Youenn D. hag int gwisket e soudarded eus ar 'bezen'.

Piv eta a voe tutaet evit ar 'bezen'-se. Darn anezho a voe kavet e-touez ar studierion. Evit ar re-mañ e veze dalc'het bodadegoù da noz, st. Toulouse. Di e teue da gentañ darn eus va c'henstudierion an D., R., T., ar G., ar B. Y.D. a zisplege neuze pebezh pouez o defe ar 'Strolladoù-Stourm' (an anv-se a oa bet roet epad ar mizioù -se d'ar 'bezen') er Strollad : ne oa ket anezho hepken diwan ul lu hogen ivez e oa tonket dezho pourchas dezhañ un dibab a vredelourion hag a atebieion : empenn ar Strollad e vefent, diouto e teufe ar re e c'hellfeñ tiziout enno holl gefridioù ar Stad. Neuze, goude ar bodadegoù-se, ez aemp da evañ er "Glacier" - un davarn dindan garidoù ar c'hoariva - ur banne a veze paeet deomp a-wechoù gant Youenn D. Ha kanañ a raemp e brezhoneg kanaouennoù a oa diouzh ar c'hiz en amzer-se (ar Strollad en devoa embannet ul levrig kanaouennoù) (1) : "Gwir Vretoned", "A-hed an noz", "Vermiho" hag e galleg "Plane haut". Darn a gane en o unan : ur studier war ar vezekniezh a oa e anv Poullaoueg ; Dorig Le Voyer a rae ivez a-wechoù. Dres a-raok ar c'heulfe e tistroemp d'ar gêr.

E devoud e teuas d'ar 'bezen' estreget studierion, eveljust : tud yaouank eus Roazhon ha n'ouien ket re vat pesurt micher o doa. Ankounac'haet em eus krenn o

anvioù. Eus unan em eus koun evelato, Rivière, ur Roazhonad, a emouestlas el lu gall war-lerc'h ar brezel hag a c'honzas galoiseù kabiten en Indez-Sina (bloaz hanter zo e voe lazhet en ur gwallzarvoud karr-tan o tont endro eus gouelioù Brest). Pezh a zo sur avat eo e oamp niverus awalc'h : etre ugent ha tregont pourvuiañ, an darn-vuiañ anzho gallegerion ha brezhonegerion dizesk ; ne oa bet rakwelet kentel yezh ebet evito avat. A-hend-all, ret eo lavarout ne oa ket strizh tre an urzh : dont a rae neb a gare. Ur wech e vanke un dek bennak en emvod : aet e oa ar re-se da werzhañ ar gazetonn e Menez-alban (c'hwec'h-kant-pemont skouerenn a oa bet darnauet en devezh-se ; ne oa ket fall met se a ziskoueze ivez ne oa ket strizh tre urzhierzh an aozadur-se.)

Hor gourdonour a oa un den yaouank, war-dro tregont vloaz, gwisket gant ur chupenn kanadat, neuz-vat dezhañ a-hend-all, korfet moan, disliv ha kastiz e zremm evel hini ur manac'h diviet gant ar yun hag ar binijenn. Bepred e komze sioul, gant un tammig mouse'hoarzh e pleg e vuzell, egiz p'en defe kemeret didu bras gant e vicher nevez a iricenner ; distag tre e seblante bezañ diouzh pezh a rae hag eñ o sellout ouzh e emell evel ouzh un deverr-amzer, a gredan.

En em c'houlenn a raen zoken a-wechoù ha bez e oa anezhañ ur brogarour. Da gentañ ne oude tamm brezhoneg ebet ; e zeskadurezh ivez a chome gall : menegif a rae un arrouden eus Victor Hugo "L'homme qui rit" evit aters unan ac'hanomp a vouse'hoarzh e pad e gentel. Pa rae meneg eus Breizh e oa evit goulenn diganeomp degouezhout e koulz ; arabat e oa deomp derc'hel d'ar ger-stur breizhat rik : "Amzer zo". E stummadur breizhat nod ae ket kalz en tu-hont da se, a gav din. Hogen anaoudegezhioù kalvezel en devoa moarvat hag e brizout a raed en abeg dezho.

Harpet e oa en e labour gant ur paotr yaouank pemp pe c'hwec'h vloaz koshoc'h egedomp, a gav din, Perez e anv. Hemañ a oa ur broadelour kendrec'het, taer tre a-hend-all :

harzet ha toullbac'het e oa bet gant ar pennadurezhioù gall a-raok ar brezel hag eñ yaouank flamm. Hemañ, da vibanañ, en doa feiz end-anat er pezh a rae.

E sez-kreiz ar Strollad, kae Lamartine, e vezemp kenteliet, da sul vintin ha d'endervezh : hogos c'hwec'h pe eizh eurvezh en holl. Danvez hor c'henteioù a oa digenseurt awalc'h. Tennañ a rae war un dro da hengoun iwerzhonat ar stourm dieubiñ, evel maz eo taolennet, lakaomp, ebarzh eñvorennoù Dan Breen nevez troet neuze gant an Hello-ko, ha war un dro d'an derc'hel-urzh en ur stad diazezet. Kement-se a-hend-all a oa kelennet deomp war ar paper hag en un doare akademek kenañ e veze diskleriet deomp doareoù an emgann-straedoù, penaos urzhiañ ur gevrennad soudarded a-benn tagañ un archerdi pe ur polisti h.a. Un tamm mors a oa bet klasket deskiñ deomp ivez. Ar pezh souezhusañ avat eo e oad kelennet kerkoulz all war an hentenoù gwellañ da da skignañ tolpadoù displegaderion.

Yaouank tre e oan pa stagis da bleustriñ ar 'bezen', triwec'h vloaz. Deuet e oan gant ar youl da servijout Breizh en un doare efedus ; va dlead brogarour a c'houlenne diganin he servijout dre an armoù zoken hag an holl re a heulie ar c'hentelioù-se a soñje eveldon. Padal, ret eo din lavarout ne oa ket bet diskuliet deomp petra oa gortozet diganeomp ez resis. Ne veze roet deomp a-hend-all kelennadur ebet diwar-benn natur ha roll ar stad na diwar-benn politikerezh dre vras. Ne voe meneget gwech ebet deomp na fagouriezh na kenelwerinelouriezh. Bez e c'hellis avat dezvarn e oa empennet obererezh ar 'bezen' e degouezh un trec'h alaman hepken hag ar gwiriadur-se a lakae diaes va spered rak emplegañ a rae hevelep degouezh un dislavar anat en amkanioù ar 'bezen'.

Diouzh un tu e klasked dedennañ youl-vat ar galloud-dalc'her. Rak-se moarvat e kinniged reiñ d'ar 'bezen', da skouer, an anv a "strolladoù-stourm" ; rak-se ivez e empenned

ar 'bezen' evel un doare nerzh-kerreizh mennet da zerc'hel an urzh en ur stad da vezañ savet. Ar rakwel-se eo, a-hend-all, a drubuilhe va spered. Moarvat o deus ranket ar stadoù komunour bet diazezet e reter Europa war-lerc'h ar brezel diwezhañ, a-drugarez da zalc'hidigezh ar broioù-se gant al lu rusian, talañ ouzh displegadegoù dispac'hus en Alamagn ar Reter e 1953 pe en Hungaria e 1956. Degemer a ranker avat n'eo ket seurt displegadegoù an arouez eus yec'hed ar vro ha n'eo ket gant bazhadoù e pareer ur c'hlañvour peurvuiañ. Barn a c'heller en ebeb ez eo an displegadegoù emañ o paouez menegiñ un arouez eus mac'homerezh ha digenvezded ar renerion hag a zo distag diouzh ar bobl a-benn neuze. Gant ar soñj-se e kaven diot un tamm an pleustradennoù derec'hel-urzh a gasemp da benn.

An amkan-se a oa meizet e goulakadur ur gouarnerezh kreñv (ha na oa ket tost da vezañ savet n'eus forzh penaos) ne glote ket nemeur gant amkan kentañ ha pennañ ar 'bezen' a oa kas da benn ur brezel-dispac'h diouzh giz Iwerzhoniz (skouer Iwerzhoniz hepken a oa anavezet en amzer-se). Rak dremmañ a raed, evel m'em eus lavaret, ouzh argadiñ kerreizhdiou hag archerdiou. Hogen ne c'helle ket an amkan-se bezañ tizhet anez tagañ war-eeun ar galloud-dalc'her ha na oa mui ar Stad c'hall hogen an hini alaman : ar bolised hag an archerion a oa da gentañ e gwirionez e gwazonezh ar pennadur-ehzioù alaman hag evito e talc'hent an urzh. Penaos krediñ avat o defe lezet ar re-mañ nep piv bennak da zegas dizurzh war an diriegezh a zalc'hent ? Anat eo ne zeree ken al lodenn-se eus ar program kelenn a oa bet aozet moarvat a-raok ar brezel ouzh un emgav politikel nevez e-lec'h e c'hortoized pep tra digant youl-vat an dalc'herion nevez.

Evit un arbenn all e oa dibocell prientiñ a-a-hervez - ur brezel-dispac'h. Seurt brezel ne c'helle padout hag ober berzh nemet gant harp ar bobl. D'ar c'houlz-se avat e oa 95% eus an dud a-enep d'an Alamanned. Moarvat e oa boaz

ar vroadelourion da soñjal ne oa ket an dud a-du gant an Alamanned peogwir ne oant ket broadelourion o unan. Ha Kadig, ebarzh "GALV" a venege skouer Groatiz o doa degeneret an Alamanned evel dieuberion, a-hervez. Moarvat e oa degaset ar vroadelourion hag int eus ar gostezenn virourez evit an darnvuiañ da c'houzañv aes awalc'h an dalc'hidigezh alaman dre ma embanne an Alamanned e stourment a-enep d'ar "volcheviked" (hemañ a oa ivez emzalc'h tud Vichi) ; soñjal a c'hellent ivez e oa ar veli alaman dizañjer evit ar vroadelezh vrezhon ha gdiriañ a raent a-hend-all e oant dieupoc'h da labourat evit Breizh en emgav politikel a neuze. Hogen lakaet e vije bet Breizh en he frankiz pe vroadelourion eus an holl Vretoned ez eo gwirhoñvel tre e ve savet ar pep brasañ eus ar boblañs a-enep d'an dalc'her nevez en defe klasket reoliñ ar stad pe ar galloud nevez evel ma reole end-eeun kement stad a oa bet aloubet gantañ d'an ampoent.

Bezot pe vezot, ne c'helled ket kas da benn ur brezel-dispac'h a-enep d'ar galloud-dalc'her ha d'ar boblañs war un dro (1). Ar re a savas ar "Bezen Perrot" a-c'houdevezh a gomprenas ken mat pebezh dislavar a oa en amkanioù an danvez 'bezen' edod o klask lakaat en e blomm ma tivizjont ober eus o nerzh-lu un nerzh-kerreizh nemetken en ur lezel a-gostez an amkan a vrezel-dispac'h en defe goulennet diganto en em gemmeskañ gant ar boblañs evit he frammañ.

War a seblant eta e oa bet savet an danvez 'bezen' e 1941-1942 un tamm war ar prim, diwar intrudioù hiniennel, kent bezañ klasket diazezañ ur gadonezh resis dezhañ ; ur c'hilwered anienel e voe an arnod-se en ur stumm, hep dez-rannadur pizh eus emgav politikel ar mare - pe, kentoc'h, kendalc'hadur divurutellet un obererezh empennet en ur grez diforc'h diouzh an hini a oa o ren neuze.

(1) Hetoù ar boblañs a ranker doujañ atav diouzh ma ne dennont ket da ziskar ar stad pe ar vroadelezh ; tu a vefe bet a-hend-all da reiñ ur stêr broadel d'ar stourm a-enep d'an dalc'her nevez, evel ma reas Vietnamiz.



Evel m'em eus lavaret, n'anavezen ket amkanioù tost ar bezen nag e renerion wirion. Ar re em boa afer outo ne oant nemet kelennourion ha gourdonerion. Evelato, d'an 8 a viz c'hwevrer 1942 em boa merzet ar re a oa atebek eus an urzhiadur. Neven an Henaff a oa deuet da ober ur gwel da gevrenn Roazhon eus ar 'bezen' en devezh-se. War-dro teir eur e oa erruet un den yaouank c'hoazh, dizolo e dal, du e vlev, tresoù mistr dezhañ ; mentet bihan e oa, diouzh am eus soñj (ar wech nemeti e voe din kejout gant an Henaff). Pa oa deuet tre ar rener eta e oa bet youc'het "sonn" ha ni "sonn" a oa bet diskouezet hini hag hini dezhañ. Goude-se en devoa graet N. an Henaff deomp un tamm prezegenn diwar-benn perzhioù speredel al leviataerezh war droad (1), disprizet e gaou, gouez dezhañ, gant ar C'hallaoued ; a-drugarez d. 'al leviataerezh e c'hellemp meizañ e oa c'hanomp ur gevredigezh kenreizhet ha kenurzhiat ha n'eo ket ur vandennad kamaladed o kemer ebat a-gevret. Padal n'en doa ket kenmaulet "pennacn ar rener" na netra seurt se.

Dirak hon enseller e oa bet eronezet adarre ur bleustradeg a a oa bet kaset da benn ur wech bennak endev : difenn an Dael, ar "Breudoù", a-enep da zisplegadegerion c'helenus. Neven an Henaff en devoa selaouet ouzh ar gentel hep rannañ ger. Pa oa bet fin dezhi en doa adkroget gant e brezegenn, e brezhoneg ar wech-mañ ; gourc'hemennoù a rae deomp evit hol labour - hor skouadrennoù a oa ar re wellañ eus Breizh, war a lavare - hag erbediñ a rae deomp kenderc'hel start ganti : eno edomp evit dastum deskadurezh ha n'oa ket evit ober "bluff".

Aet e oa kuit d'ar mare-se. War e lerc'h e oa chomet P. Gaignet, Youenn Delaporte ha Yann Goulet. Pol Gaignet a c'hoarie roll ar c'hefridiour politikel en doa

(1) Pleustret e veze e brezhoneg war al leviataerezh war droad; da lavarout eo e veze roet an urzhioù e brezhoneg : Sonn, ehan, kadervenn war ur vrec'hiad, war un ilinad, m'em eus dalc'het soñj mat, war-raok...it, war evezh...harz!

kroget gant ur gentel a gaven rondonus awalc'h diwar-benn broadelouriezh, disrannerezh, emrenezh a oa diazez kelenadurezh politikel ar Strollad d'ar mare-se hag a gaven skars awalc'h. War-dro 5 eur avat e oa degouezhet ar gweladennner a c'hortozed abaoe deroù an endervezh, - un alaman - ha n'anavezen nag e bivelezh hag e berzhelezh, un den bras anezhañ, dezhañ an doare da vezañ enoet ha digas a-grenn, mall warnañ da vont kuit diouzh un abadenn ha n'he devoa evitañ ster na talvoudegezh ebet, war a hañvale ; P.G. a oa aet d'e ziambroug hag end-sonn en devoa kevarc'het anezhañ. Ar mell paotr a oa aet d'azezañ war ur gador e-kichen Y.D. ha goulennet en doa ouzh hemañ petra a oa enskrivet war an daclenn du a oa e penn ar sal : raktres hor c'hentel ne oa ken, eme Y.D.

Kanet hor boa ar ganaouenn "Plane haut" (1) e galleg evit hor gweladennner nevez. Neuze en devoa Y.D. distaget un nebeut komzoù : "Warnomp," emezañ, "e oa bet diazezet an holl spi da adsevel ar vro."

En diwezh e oa aet kuit ar gweladennner kevrinus hep ma vije diskuliet deomp e anv zoken, mut bepred evel ur pesk. Youc'het hor boa "Bebet Breizh" hervez al lid ha pep hini a oa aet diouzh e du.

Div pe deir gwech c'hoazh e oan distroet da vodadegoù ar 'bezen'. Kenderc'hel a raed, a-hend-all, da ober prezegennoù deomp : Yann Goulet en devoa distaget unan diwar-benn ar Roueri d'an 23 a viz C'hwevrer. "Bez e tleomp bezañ prest da n'eus forzh petra evit Breizh," en devoa diskloriet. Ivez, e pleded bepred gant kevrenn ar studierion ; P.G. a c'houlenne diganin sevel ur pennad e brezhoneg evit ar "Studier brezhon" hogen an holl obererezh-se a zlee bezañ harzet gant darvoudoù a c'hoarvezas e miz Ebrel hag a zisplegin pelloc'h.

+++++  
 (1) Kavout a ra din e oa bet savet ar c'homzoù anezhi gant Y.D. En un doare iskis awalc'h e voe kanet e 1945 e kevrennoù al lu gall adsavet (stourmerion vreizhat a oa bet soudardet eno).

Er mizioù-se, koulz eo din lavarout, n'em boa nag amzer na c'hoant da soñjal er brezel. Ebarzh va deizlevr ne gavan neuze meneg ebet eus an ñrvoudoù. D'ar 15 a viz Kerzu 1941 evelato em boa notet e oa tarzhet ar brezel etre Japan hag ar Stadoù-Unanet, hep addispleg ebet a-hend-all, da heul gwall-argad dic'hortoz Pearl-Harbour. Hogen ne roen ket kalz pouez da gement-se : re bell e oa ar c'hadva-se. Padal, war-lerc'h ar gwall-argad-se e tlee ar Stadoù-Unanet kemer perzh a-zevri er brezel ha devoudañ drouziwezh Alamagn en diwezh.

Eveljust e oan prederiet dreist-holl gant ar 'bezen'. A-zevri meurbet e kimeren va oberiantiz ; gant un tamm enkreiz ivez rak emskiantañ a raen ervat pegen argollus e c'helle bezañ evidon an hent am boa kroget da heuliañ. Moarvat e oa akademek meurbet kement a zes Kemp - kont a veze eus Clausewitz e-pad hor c'hentelioù - hogen anat e oa din e c'helle an hent-se a bleustren disoc'hañ d'un emouestlerezeh siriusoc'h c'hoazh. Anzav a rankan ne greden ket da vat e c'helle an obererezh-se ober berzh. Skrivañ a raen da skouer ebarzh va deizlevr : "Uhel awalc'h eo ar pal a vukomp evit ma rafemp fae war gouzout hag e teuio hon taol da vat pe get..." Dre zlead hepken e asanten da zrommañ ouzh an arvar hogen nac'hañ a raen ivez en em gannañ evit an enor hepken : se a hañvale din bezañ diboell nemetken. Merkañ a raen : "Tizhout ar pal n'eo ket dister dra evidon..." Pal, hentennoù ha doareoù gwirion ar stourm avat, personelezhioù hag amkanioù ar renerion ne oant ket sklaer din avat ha rak-se moarvat e oan diaezet. D'an 23 a viz c'hwevrer e skriven war-lerc'h ar brezegenn distaget gant Yann Goulet diwar-benn ar Roueri : "Reiñ ar vuhez n'eo ket un draig ; ha koulskoude on youlet davont betek ar penn... A-benn tri bloaz e vo diskoulmet va zonkadur..."

Evit ehanoù fin ar bloaz ha gouel Nedeleg e oan distroet da Sant-Jermen e-lec'h e oan chomet betek deroù 1942. Eno em boa klevet komz adarre eus ar brezel : gant kalz a "Schadenfreude" e taolenne ar gomzerion c'hall e Lunden ar poanioù spontus a ziwaske an emgannerion alaman war dalbenn ar Reter gant ar yenijenn hag ar skorn ken e teue va mamm da gemer truez outo a-benn ar fin.

Ne gavis ket gwall vourrus an neheut devezhioù a dremenis e Sant-Jermen e diwezh ar bloaz-se. Hep gouzout netra resis diwar-benn va obererezh politikel o devoa va zud un tamm douetañs eus doare va emouestladenn er Strollad broadel ha klask a raent gonit warnon kroaziañ war va broad-elouriezh ha plediñ hepken gant va studioù ; va mamm dreist-holl a oa bet mantret o lenn al levrig "A toi militant breton" e-lec'h e oa meneget skouer Padraig MacPiarais, a gredan, ha diogelet e tlee pep stourmer breizhat bezañ prest da aberzhiñ e vuhez zoken evit ar Strollad hag ar Vro ; neuze e lavare va mamm e oa an "emrenerion" heñvel ouzh ar gomunourion peogwir e c'houlennent digant ar re a oa a-du ganto en em ouestlañ penn-da-benn d'ar Strollad. Va zad e unan en doa kemeret un tamm kas ouzh va mennozhioù adarre (n'edon ket aze abaoe meur a viz evit difenn va savboent) hag en abeg da se e oa diaes awalc'h va stad er gêr.

Er c'heñver-se avat e oa va zud hedro awalc'h ha bep an amzer e teuen a-benn evelato d'o lakaat da gomz brezhoneg gant plijadur : merzout a raen neuze pegen mat e ouient ar yezh daoust da gement a gontent a-hend-all.

Diouzh un tu all e tizhen degas mui pe vui va breur ha va c'hoarezed d'an Emsav. E deroù ar bloaz, d'ar 5 a viz Genver e oa bet danzeet un tamm gouel bennak e sez-kreiz ar Strollad, kae Lamartine ha di e oa deuet ganin va breur ha va c'hoarezed end-eeun. Un doare c'hoari-sac'h a oa bet aozet e ser ar gouel-se ha soñj am eus hor boa

gonezet ur meni kib. Lidañ a raed promesaoù eured Joly hag e zavez pried, bizskriverez en H.B., a gav din (an eured-se a zlee gwall-echuiñ tri bloaz war-lerc'h). Kaniri ha dañserezh a oa bet : klevet hor boa "An tousegi" eus Jakez Riou ha "Pedenn en deñvalded" eus Kalloc'h (1), hep kontañ kanaouennoù farsus e gwenedeg gant Job Jafrez a rene an H.B. diwar ar mare-se. Un toullad eus 'personelezhioù' ar Strollad hag an Emsav lennegel a oa en em gavet eno : Remont Delaporte, Gaonac'h (a oa erru diwezhat : deuet e oa gant an tren ha dale a veze alies gant an trenioù d'ar c'houlz-se) ; Abeozen a oa ganeomp ivez hag ur wech ouzhpenn en devoa diskleriet ar c'hanennoù eus "Barzhaz" a oa da vezañ kanet ; ivez Meavenn, Kerverziou ha Kaeroù, rener ar c'helic'h keltiek, Planiol, bepred rener rannbarzh an Izol-ha-Gwinun. Kejet em boa gant un Dinanad, desket gantañ ar brezhoneg hag en devoa dibonet fentigelloù e trefoedaj romanek e gorn-bro hag a lakae an holl da c'hoarzhin.

N'hor boa ket kalz a ziduamantoù en amzer-se e gwirionez. Kalet e oa ar vuhez e pep keñver. Rouez e oa ar boued ; unan ne c'helle ket pourchas kalz en tu-hont da gant grammad kig bep sizhun gant e dikedoù hag ar pep brasañ eus hor bitailh a rankemp pourchas war ar maez digant ar gouerion. Bleud avat ne rae ket diouer deomp rak mignoned e oamp gant hon amezeg ar miliner. Gouzañv a raemp diouzh ar riv : ne oa tu ebet da brenañ glauc. Keuneud a c'hellemp kavout war ar maez hogen an dalc'h e oa e zezougen betek Roazhon. Ur wech avat e oa bet aotreet pourchas "kok" er greanti-gaz. D'an 12 a viz Genver e oamp aet va breur ha me gant ur garrigell da gerc'hat un nebeut dekkiloadoù a "gok" war harzoù kêr ha ni skuizh marv goude echu hor c'hefridi. Ken dister e oa ar "c'hok"-se avat ma n'oa tu ebet d'ober tan gantañ. Padal e oa yen ha kriz ar goañv, skornet ar ganol ha n'oa ket aes studiañ en hor ranndi tommet fall.

(1) Me ' gred e oa Jef ar Penven, Doue d'e bardono, o paouez sevel sonerezh ar pezh-barzhoniezh-mañ.

Duit livañ en un doare resisoc'h aergelc'h an amzer-se e venegin bremañ pennadoù hir awalc'h eus va deizlevr.

Digwener 6 a viz Meurzh 1942

Bombezet eo bet greantioù Billancourt e-kichen Paris. Pemp kant den a zo bet lazhet, mil-daou-c'hant gloazet hag ar c'hazetennoù gall n'int ket tener tre ouzh ar Saizon er mare-mañ. Padal an darn-vuiañ eus an dud a glask digareziñ ar re-mañ : traktoù a vefe bet taolet evit degemenn d'an holl e vefe bombezet ar greantioù ha pediñ ar vicherourion da gemer vakañsoù war ar maez ; zoken moarvat, evit an Alamaned, e oa bet resizet eur resis ar vombezadeg.

Kontañ a reer ivez e oa bet staliet mindrailhe-rezed e toull-dor ar greantioù gant an Alamaned evit mirout ouzh ar vicherourion a guitaat ar greanti.

Setu teir sizhun emañ ar paour kaezh Foulon en - toull-bac'h. N'ouzon ket pegoulz e teuy er-maez.

Disadorn 7 a viz Meurzh 1942

Erruet eo M. d'ar gêr hiziv. Aet e oan eveljust d'ar gentel gerveveg ha war un dro em eus klevet ur brezegenn gant A.E. a-zivout lennegezh Norvegia. E ser kudennoù al lennegezh-se en deus noneget "An dour endro d'an inizi" eus Youenn Drezen a lakaas beleion vat Vreizh-Izel da skrifañ gant an euzh pa voe embannet dek vloaz zo. Marteze. Hogen ne gav ket din ez eo ar skrid-se ur bennoberenn evit keloù se : re aes eo feukañ ar bourc'hiz. An arz a-hend-all ne c'hell ket bezañ un digarez da n'eus forzh peseurt divezh.

Dimeurzh 10 a viz Meurzh 1942

Bodadeg evit ar studierion : leun chouk e oa ar sal. Ur brezegenn a voe graet gant an Troadeg diwar-benn "Douez hag harozed ar Gelted". Dudiñ awalc'h e voe e zisplegadenn. War e lerc'h e reas Kaeroù, rener ar c'helic'h keltiek, ur brezegenn all diwar-benn galloud ar c'horolloù evit adsevel ar garantezvro e Breizh. Ne blij et din muioc'h e vrizh-tenerded eget re-daerded Yann Goulet a glask spontañ an dud bewech ma krog da gomz. L.B., erfin, a lernas prezegenn diwezhañ Delaporte; ha kanañ a bouez penn evit echuiñ : "Gwir Vretoned", "Plane haut" ha "Bro goz va zadoù". Kalz trouz hon eus graet.

Digwener 13 a viz Meurzh 1942

Aet on hiziv da lodennañ ar "Studier brezhon" dirak Sant-Visant. A-gevret gant B. en em gaven. Hemañ am boa lavet en e gambr hag eñ o paouez diblouzañ. Renet on doa an nozvezh oc'h ober livadurioù war ar mogerioù e kêr, gwisket gant gantañ botoù-danvez evit chom hep ober trouz.

Ne oa plijet nemet gant ar 'bezen', emezañ a-hend-all ; gantañ hepken e c'hellfemp teurel ar C'hallaoued er-maez.

Goude bezañ gortozet ur pennad mat a amzer e tarnaoujomp hor pakad kazetennoù d'ar skolidi a oa o tont er-maez. Ne voemp ket kunujennet ganto hogen o tistreiñ dre an tram a-c'houdevezh e verzjomp un toullad skouerennoù roget war ar straed. 'M'eus aon ne c'hell ket hor bruderezh dougen frouezh er mare-mañ : re zalc'het eo speredoù an dud gant darvoudoù all.

Disadorn 14 a viz Meurzh 1942

Kentel iwerzhoneg war-lerc'h div boelladenn yezhoniezh gallek ha latin e-doug an devezh. Kaset em eus va zroidigezh diwar gontadennoù Hauff da zDaniel (1).

Ne oa ket deuet kalz tud da selaou ar gentel iwerzhoneg. Graet e vez ar c'hentelioù epad an deiz : setu perak marteze. Bernier a zo klañv ivez, Kentel a gav dezhañ en deus awalc'h o teskiñ kembraeg ; ar re all, L.R., J..., L.R. n'o deus ket amzer, war a lavaront. Bez e oa koulskoude Tranvouez, Youinou, Arzel Even ha R.P. War ar marc'had hor boe ur brezegenn gant an Helloko diwar-benn Tunizia a voe dudius daoust ma ne veizan ket mat perak en deus displeget un hir a raklavar diwar-benn darempredoù ar sevenadurioù hanternoz gant re ar mor kreizdouarek. War an daolenn du on devoa graet ur gartenn eus ar vro eus ar re gareañ ; dezrevellet en deus deomp ivez doareoù an annezidi ha stad o sevenadur, hini o emsav : toullbac'het e oa an "destourion" ; ar re n'oant ket c'hoazh a zo dindan dec'h. Kreñvoc'h eo an emsav en Aljeria hogen muioc'h gallekaet eo tud ar vro-se. Hag evit echuiñ e lavare an Helloko evel kustum : tremen a ray ar C'hallaoued er vro-se evel e-lec'h-all.

Ar pep dedennusañ eus an abadenn e voe diskouezadenn al luc'hskeudennoù kemeret gant ar prezeger er vro-hont p'edo oc'h ober e servij soudard eno.

Grataet em eus dezhañ sevel ur pennad evit "Galv" epad an ehanoù, p'em bo un tammig muioc'h a amzer vak.

Disul 15 a viz Meurzh 1942

Labourer em eus evel boaz. En ofarenn greisteiz en Ilizveur on bet. Eno em eus kejet gant Youinou hag an it. Debeauvais ha distroet on ganto d'ar gêr. Etal riboul ar C'harmezadeged e kejis gant M.V. a hañvalas bezañ sabatuet, dre ma komzen brezhoneg emic'hañs !

Dilun 16 a viz Meurzh 1942

Bodadeg evit ar 'bezen' hiziv, st. Toulouse. Ar re voaz da zont en em gavé eno : un ugent bennak. C'hwec'h pe seizh a rae diouer evelato. Ploustrer ez eus bet war ar mors ha danvezioù anavezet mat dija. Kimiadiñ war-dro kreisteiz (1) An droidigezh-se diwar skrid ur skrivagner alamanek an boa savet war un dro gant hini "Immensee". Diembann eo atav.

goude bezañ kanet ar "Bro gozh".

Hitler en deus graet adarre ur brezegenn devot, meneg enni eus Doue. Er Skol-veur ez eus bet darnouet deomp paperennoù bruderezh : diwallit diouzh an alkohol hag ar gisti ; savit tiegezhioù niverus!

Dimerc'her 18 a viz Meurzh 1942

Aet on da gas dek kiload pluskennoù avaloù-douar ha dilorc'hioù kegin evit ar c'honikled e Sant-Jermen. Noziñ ha glaviñ a rae ; ken puilh e oa zoken ar glav ma ruze an dinamo war ar rod e-lec'h treiñ ken e rankis chom a-sav ur pennad mat a amzer e Kaveneg a-raok loc'hañ endro. Dre ar vriell leun a bri, e-kreiz an deñvalijenn, e tizhis ar skluz da unnek eur hanter hag an holl aet d'o gwele a-benn neuze.

Da noz e oan chomet c'hoazh da lenn "Aquis submersus" ha levr Franz Stuckert : "Theodor Storm, der Dichter in seinem Werk." Kement-se e sell d'ar brezegenn a rankan ober dizale er "Skol-Uhel..." ha n'em eus ket skrivet c'hoazh ul linenn anezhi.

Da veure ne ris nemet en em wiskañ ha debriñ krapouezh, goude bezañ savet da nav eur hanter. M. a zo bet souezhet adarre gant prezegenn Hitler. Anv a reas anezhi o tivizout ganin : eviti n'eus nemet un Doue, an hini kristen. Pep hini avat a c'hell kaout e dammig Doue.

Distroet on da Roazhon dindan ar glav ; rediet e voen adarre da chom a-sav ha da glask goudor dindan stal ur c'halvez e Bezon. Da zeverrañ va amzer e studiis eno ar c'hevreadur gresianek. A-benn ar fin e tiraezis Roazhon da ziv eur hanter.

Disadorn 21 a viz Meurzh 1942

Aet on da lenni ar Skol-veur da bleustrif war ar galleg kozh. A-benn ar fin em eus kollet va amzer.

A-ziarok e oan bet dalc'het n'ouzon pegeit a amzer c'hoazh gant L.R. a oa war glask ur gambr. A-benn ar fin em eus lennet skridoù brezhonek dreist-holl : Youenn Drezen - Nozvezh arkuz e beg an enezeg. Braslenn n'em eus graet ken avat.

Dimerc'her 24 a viz Meurzh 1942

Bodadeg evit ar studierion hiziv. Aet on ha deuet on a-benn da gas Yann ganin. Pa errujomp e oa L.N. oc'h echuiñ e brezegenn diwar-benn ar yezh vrezhonek : an hevelep hini ha warlene nemet kempennet un tamma evelato. Leun chouk e oa ar sal hag an holl a oa entanet gant ar garantezvro.

Goude an abadenn omp aet d'ar "Skornerezh". R. Delaporte a felle dezhañ paeañ ur banne d'an holl. Ouzhpenn

e vefe kanet kanaouennoù brezhonek evel boaz ; un doare bruderezh dispar e oa, gouez dezhañ. En dro-mañ avat e savas eneberezh ha c'hwibanadeg a-berzh ostizion all pe stagjomp da ganañ. Kenderc'hel a rejomp, avat, a-bouez-penn ha ni o vlejall evit komz fraezh, ha tost e oa an trec'h da zont ganeomp paerruas ur mevel a-berzh rener ar stal da c'houlenn diganeomp tevel, pezh a rejomp dre sevended evit perc'henn an davar. A-c'houdevezh unan eus hon eneberion, mezv dall pe dost, a zeuas d'en em lakaat ouzh taol ganeomp ha gant trivli e komzas deomp eus 'Verdun' : o tiskouez deomp ur vombar hag a oa deuet ganeomp e tisklerias : e Verdun n'hor boa nemet baionetez da sunañ. N'em eus ket meizet mat peseurt darempred a zo etre ur vaionetezenn hag ur vombar.

Dont a ris endro d'ar gêr da unnek eur hanter.

Diriaou 26 a viz Meurzh 1942

Graet em eus un droiad e Sant-Jermen hiziv. Dre hent Menez-Mikael on aet.

Du-se em eus labouret war va frezegenn. Lennet em eus levr Stuckert hag ivez "Renate" eus Storm. Ne gavan ket kalz blaz em labour avat rak n'em eus netra talvoudus na wirion da lavarout, henn santañ a ran mat. Duet em eus peder pe bemp follenn evelato.

Antronoz e savis diwezhat awalc'h diouzh va gwele. Pleustriñ a ris war ar c'hevreadur gresianek hag ar galleg kozh. War Rabelais ivez : un displegadenn am boa da sevel a-zivout e garantez evit ar vuhez. Evel-se e tremenis ar beurevezh hag ivez, evit echuiñ, oc'h ober ur c'hofad krampouezh, abarzh loc'hañ.

Da deir eur edon war an hent, o kas ganin boued ha lien evit an holl du-se. Da beder eur nemet dek en em gavis er gêr. Mont a ris da gentel Foulon a gavis o komz gant L.R. Hemañ a lavaras din e oa dimezet F. gant ur geniterv dezhañ. Tro en devoa kemeret diwar ar gerentiez-se evit kinnig d'e genderv kaer un toullad niverennoù eus ar gelaouenn "Arvor", a zo dinoazh kenañ. N'ouzon ket ha koñvertiset eo bet ar paotr evit keloù se.

Digwener 27 a viz Meurzh 1942

Ranket em eus tremen ur weladenn vezeg e Pont-Chailhouz. Skinensell ha ken-dazwered. Yac'h on hogen n'he deus ket plijet din flær an apotikerezh a zo du-se.

Kejet em eus gant kozhidi gabac'h, oc'h en em stlejañ dre an alezioù, harpet war flac'hoù, rivinoù, dilufr ha marv o sell, dreist-holl ar merc'hed. Ne c'hellomp netra evito ; n'omp ket evit o c'barout zoken. Trueziñ marteze : den n'en deus mui ezhomm anezho ; deuet int da vezañ didalvez, mat da deurel d'ar blooù. Truez n'eo ket karantez ; hastañ a reomp da ankounac'haat ar re hon eus truez outo rak gouzout a reomp dres ne c'hellomp reiñ netra dezho.

En endervezh ez eo deuet L.R. evit ar gambr el laez. N'en deus bet respont ebet c'hoazh digant ar ber-c'henez. E ambroug a ris endro e kêr ha gweladenniñ a rejomp an enskrivadurioù a oa bet livet war vegerioù ar Skolveur e lizherennoù bras dreistgoñvor : "Chantiers de jeunesse = esclavage", a gleiz d'an nor hag a zehoù "Merde pour Carcopino". War voger-dro ar prefetti e oa bet livet ivez un enskrivadur diwar-benn ar "chantiers de jeunesse" hogen adal neuze e oa bet gwisponet gant liv ruz (1).

Da un eur diouzh ar beure, un hanter eur goude ma oan aet d'am gwele, e klevis ur rumm tarzhadennoù a badas pellik amzer, ha neuze ur c'harr-nij o fraoñval.

Disadorn 28 a viz Meurzh 1942

Keloù ebet a-zivout ar vombezadeg eus an derc'hent. E-doug an deiz e labouris hep ebanañ war va studiadenn diwar-benn Storm hogen hep plijadur ebet : n'em eus graet nemet krennañ un nebeut pennadoù eus levr Stuckert. Va steuenn n'eo ket frammet mat kennebeut. Gwall gouskus e vo va frezegenn, 'm eus aon.

L.R. a weladennas ac'hanon kent din kuitaat an ti da ziv eur. Gantañ ivez e ouezis e oa bet harzet P.K. evit bezañ graet an taol. E gwir e oa bet tapet gant polised c'hall da n'ouzon pet eur diouzh ar mintin hag en o c'hwitellat seder e-kreiz ar straed, disamm e goustiañ goude bezañ graet ervat e labour. Furchadeg a oa bet graet en e gambr da veure ha kavet e oa bet enni podoù-liv ha barroù-livañ diarvarus meurbet diwar-benn an doare obererezh nozel a rene abaoe ur pennad amzer...

Micherourion a oa o labourat da lenel an enskrivadurioù, a daolioù morzhol. Monsieur Mayer, va c'helenner galleg, paotr e vlev du gloanek, a dremenas e-biou din (unan c'hoazh a gav dezhañ ez eo gwall ledan a spered : peogwir emacmp e Roazhon, emezañ en devezh all, e studiomp oberenn Tristan Corbières ; ur skrivagner "breizhat", soñjit!) N'em eus ket kredet goulenñ outañ petra a soñje diwar-benn an enskrivadurioù.

D'abardaez ez is d'ar gentel iwerzhoneg evel boaz ; bez e oa enni Youinou, A.E., Tranvouez, Roparz Hemon. War-lerc'h ar gentel e chomjomp da varvailhat diwar-benn an oberiadennoù nevez ma c'hellfe S.A.V. hag "Ensavadur Breizh" pleustriñ warno e Roazhon: burutellañ skridoù a-gevret, plediñ gant ar c'helc'hioù a-benn stummañ ar re yaouank h.a.

A-benn ar fin e ris va frezegenn daoust d'ar sioù a oa enni. A-greiz distagañ anezhi - fall awalc'h, a gav din - e verzis L.M. ha J.M. o tont tre...

(1) Carcopino a oa mavdiern an deskadurezh e Vichi en amzer-se. Evit ar "chantiers de jeunesse" e oa ar re-mañ un tu evit gouarnamant Vichi da zerc'hel un doare servij-soudard. War an enskrivadurioù e oa bet taget ar Prefed Ripert e ser an amann dastumet war ar maez, a gav din.

Pennad 8

Antronoz - Sul ar Eleunioù a oa anezhi - e oan chomet er gêr e-doug an deiz nemet skuizh o studiañ a-benn ar fin e oan aet er-maez d'abardaez da avelañ va fenn ; war-dro seizh eur e oa. Kantreet em boa e kêr hep gouzout re petra ober rak an ehanou a oa o tostaat ha va c'hamaladed a ranke bezañ distroet d'ar gêr o vezañ ma oa vaouezet ar c'hentelioù er Skol-veur. Diskennet e oan betek fifvskeudenndi ar "Royal". C'hoant a oa savet din neuze kaout diskleriadurioù diwar-benn afer an enskrivadurioù ha graet em boa va soñj mont da c'houlenn kelou digant va mignon L.M. en e gambr. Egiz m'em eus merket, merzet em boa L.M. ha J.M. e-keit m'edon o tistagañ va frezegenn (graet em boa va mad eus gweladenn va mignon L.M. evit daskoriñ dezhañ ur boelladenn a c'hallec arnevez bet reizhet gant Mayer : d'ar beure, na patra 'ta, n'en doa gallet dont da gentel ebet er Skol-veur). Abarzh loc'hañ en doa distaget L.M. un nebeut komzoù ha n'em boa ket gallet intent ervat. Setu, kerzhet em boa betek lojeiz va c'henseurt, str. ar Ganol (ur gambr en devoa en un ti bihan perc'hennet gant levsidi a rae war e dro egiz pa vije bet mab an ti) hogen tro-wenn am boa graet rak n'edo ket L.M. er gêr hage lojerez ne oa ket evit lavarout din da beloc'h e oa aet. P'edon o tont war va c'hiz avat, e traon ar straed end-eeun, tostik d'ar ganol, e oan bet harzet gant daou bolis dilivrez, o devoa goulennet va faperoù diganin (unan anezho a oa Monnier e anv, ur c'hrapak a zenig kuilh, mourrou berr dezhañ ; n'em eus ket mui soñj eus anv egile). L.M. a felle dezho pakañ na petra 'ta hogen mat e kavjont kas ac'hanon : marteze e ouien e pelec'h edo skoachet al labous. Lakaet e voen eta da bignat er c'harr-bac'h a oa arsavet nepell alese ha dezouget e voen betek komiserdi kreiz leurgêr ar maerdi. War an hent ha daoust ma oan eveshaet em boa klasket distrujañ ar paperennoù a c'helle diskuliañ va mennozioù politikel, dreist-holl va c'hartenn ezel

eus ar Strollad ; deuet e oan mat a-benn da ziregiñ un tamm kartenn hep dedennañ evezh ar polis a oa ouzh va diwall hogen a dastorn evel-se e oan degouezhet gant... va zesteni-gweladenn-vezeg am boa tremenet un nebeut devezhioù kent : a-c'houdevezh e klaskas va folised, bec'h bras warno, a c'hellit krediñ, adkompenn an diell bouezus-mañ (evit bezañ kemeret kement a boan da zistrujañ anezhi e tlee an diell-se bezañ a bouez bras meurbet!) N'ouzon ket ha dont a rejont a-benn biskoazh.

Du-se er c'homiserdi e oab bet graet ar skarzhañ d'am chakodoù hag, eveljust, bet peskstaet a bep seurt traoù burzhudus : balafennoù, ur c'harned diner-ar-vro h.a. ha na lezent arvar ebet diwar-benn doare va mennozioù. Disos e oa din goude-se nac'hañ e oan ur broadelour. Hogen n'eo ket me an hini edod o klask pa oan bet tapet va unan, va c'hamalad L.M. ne lavaran ket, hogen evlato e oa laouen ar bolised gant o zapadenn o vezañ ma kredent edon o vont da ziskleriañ dozho e pelec'h edo kuzhet hemañ. War ar poent-se e oant faziet bras : gant ar wellañ youl n'em befe ket gallet lavarout dezho netra war an divoud-se o vezañ ma ne ouien mann ebet va unan.

Goude bezañ gortozet ur pennad e traon ar savadur e oan bet degaset d'al laez ebarzh burev ar c'homiser-kreiz, un dolzennad a gant kilo bennak, da vihanañ, livrin ha c'hwezhet e zivoc'h, kuzh e zaoulagad adreñv lunedoù tev, Piat e anv (1). Kerkent ha ma voe bet diskuliet dezhañ piv e oan e estlammas hemañ n'oa ket dav din nac'hañ e oan ezel eus ar 'bezen' o vezañ ma oa merket va anv war ar paperennoù bet dastumet e Kambr P.K. Antronoz, emezañ a-hend-all,

(1) Piat a oa bet skolaer a-raok dont tre er polis gall. War-lerc'h ar brezel e voe harzet gant ar pennadurezhioù gall nevez a zegouezhas e 1944 gant D.G. evit bezañ sikouret an Alamaned da bakañ kilstourmerion a-du gant D.G. En em gavout a reas bac'het gant brogarourion vreizhat, Jord ar Me, Bergen. N'en doa mui tamm kribenn ebet d'ar mare-se : e dro e oa bezañ boued ar groug. Barnet e voe d'ar galeoù da viken, a gav din. Tapout a reas un taol-gwad en toull-bac'h ha me 'gred e varvas eno.

e vefe graet furchadeg em zi ha kavet eno, sur awalc'h, peadra d'am faezhañ (1). Daoust da se e kavas din e oa fur-oc'h nac'hañ. Soñjal a rae din e oa ar bolised o fogasiñ hogen strafuilhet e oan evelato o wiriañ e anavezent an anv a oa bet roet betek neuze d'ar 'bezen'. Ar polis n'en doa ket klasket pouezañ warnon d'ar mare-se : amzer en doa, kement ha ma karfe, a ouzhpennas.

Kraouiet e oan bet er 'bidouf' evel daou vloaz kent ha chomet e oan eno betek antronoz vintin. Hogen n'em boa serret lagad ebet e-doug an noz ; klevet em boa horolaj an ti-kêr o tishiliañ he lezoù boud bep eur ha hep hanter- eur adal nav eur betek eizh eur beure. Da gousket n'em boa nemet plenk hep tamm mantell ebet ken e oan morzet gant an anoued. Diaezet e oan gant flaer an troaz a save eus al leur : em raok e oa bet serret er gell ur mezvier bennak ha ne oa ket bet skarzhet ar bidouf war e lerc'h. Dreist-holl avat e oan enkrezet gant ar soñj eus pezh a oa o vont da c'hoarvezout ganin (2).

Da eizh eur eta, goude un nozvezh anhun, ha war yun bepred rak n'em boa debret tamm abaoe an derc'hent da greisteiz, e oan bet ambrouget gant daou bolis e livrez, dezho pep a varc'h-houarn hogen war droad, eus ar c'homiserdi -kreiz betek sez ar c'herreizh-diogel a oa staliet neuze ebarzh savadur ar "cercle Paul-Bert" etre straed Paris ha straed Paul-Bert end-eeun. Burevioù ar c'homiser Piat a oa lec'hiet er c'hentañ pe en eil solieradur, n'em eus ket mui soñj resis.

Etre nav eur beure ha pemp eur d'abardaez e voen goulennataet pemp pe c'hwec'h gwech bennak gant ar c'homiser Piat, herpet a bep tu gant daou bolis all, Monnier

(1) N'ouzon ket pegoulz e oa bet graet ar furchadeg e kambr P.K. hogen d'ar mare-se e oa dielloù ar 'bezen' - evit kevrenn Roazhon atav - etre daouarn ar polis gall. Marteze ne oa ket va c'hamalad er gêr pa voe graet ar furchadeg en e gubr rak e ti e dud e voe harzet un nebeut devezhioù war-lerc'h.

(2) Va zud ne ouient netra a-zivout va oberiantiz politikel ha krediñ a rejont betek ar beure e oa c'hoarvezet ur gwallzarvoud ganin.

o vezañ unan anezho, hag ur sekretour a skoas an danevell-skrid : ar re-mañ avat a chomas dilavar koulz lavaret. Ehanañ a rejod a aters ac'hanon e tro kreisteiz ha degaset e voe neuze un tamm boued din hogen ne zebris netra koulz lavaret rak n'em boa tamm ilboued ebet.

Pezh a felle d'ar c'homiser-kreiz gouzout e oa bepred e pelec'h edo kuzhet L.M. ha va c'henseurtes all. Hogen, adarre, ne c'hellas tennañ netra diouzhin. Evit ar peurrest n'em boa netra da ziskuliañ kennebeut o vezañ ma oa gant ar bolised endev an dielloù bet kavet e kambr P.K., gant anvioù holl izili kevrenn Roazhon eus ar 'bezen', o c'hefridi hag o graz, hep kontañ raktresoù labour kevrenn ar studierion e Roazhon. Eveljust, daoust da gement-se e nac'his kement ha ma c'hellis, oc'h asuriñ e oa ar Stroladoù Stourm bagadoù a skauted dinoazh hogen hep kendrec'hiñ tamm ebet va aterserion eveljust.

Kadoniezh ar c'homiser a oa eeun awalc'h : bez e oa anezhi meskañ ar gwir hag an diwir a-benn va lakaat da anzav dre zegouezh tra pe dra war boent pe boent e ser din en em zifenn ; da skouer, e tiogele Piat e oa bet kavet va anv war roll al liverion-noz ; sur e oan avat ne c'helle ket bezañ gwir rak gwech ebet ne oan aet da livañ ar mogerioù da noz ; asuriñ a rae ivez e oan bet diskuliet gant ar re eus va c'hamalad a oa bet harzet em raog ; diskouezet e voe din zoken - a bell - skrid flatrañ ur c'henseurt din : kement-se a-benn diskouez din n'em boa ket da vezañ leal ouzh va c'henstourmerion a oa bet o werzhañ ac'hanon da gentañ. Ouzhpennet e voe n'em boa ket da gontañ kennebeut war ar renerion : ar re-mañ a soñje en o mad-int hepken ha n'oant ket chalet gant ar pezh a c'helle degouezhout da baotred al letern evelton h.a. Seurt kadoniezh avat a oa gros awalc'h ha n'am zizhe ket nemeur.

Frometoc'h e oan gant ar gourdrozioù a bep seurt a voe graet din : echu e oa va buhez ha torret va buhez ; edon o vont da bakañ pemzek pe ugent vloaz galeoù gant al lezioù

barn arbennik nevez diazezet gant Vichi a-enep d'ar gomunourion ; va zad hag a oa kargiad gall a oa o vont da vezañ torret eus e garg ; un torfetour e oan eta pa wasten buhez va zud koulz ha va hini. Damgrediñ ne raen ken pezh a gonte din ar c'homiser hogen n'em boa tu ebet kennebeut d'e zislav-arout ha gwiriañ a ranken a-hend-all edon a-grenn e dalc'h va enebourion : n'em boa tu ebet da herzel outo hag ober a c'hellent ac'hanon ar pezh a garent.

Divourrus meurbet e oa ar stad m'edon enni e gwirionez. Ar re am aterse a dremene ac'hanon d'un torfetour a ranke, da gentañ, anzav e dorfed ; ne raent ouzhin tamm ebet evel ouzh un eneber trec'het a chom par d'ar re o deus roet lamm dezhañ, d'un treitour a ranker kastizañ hag a zle degemer e gastiz ne lavaran ket. Va dellid den am boa da zifenn eta dirak va aterserion : seul startoc'h e oa din ma ne oan nemet ur paotr yaouank, a-boan naontek vloaz dezhañ, en e unan dirak tud e barr an oad o doa diwar neuze pep galloud warnañ. E devoud e arvere ar bolised a-enep din doareoù-ober ar "gwalc'herezh-empennou" : chom hep breutaat hogen tamall ha tamall bepred hep degemer e ve an disterañ reizhded en emzalc'h kemeret gant an hini karezet.

Daoust da se e klasken breutaat bewech ma c'hellen diwar-benn an abegoù am boa bet da vont da vroadelour breizhat. Ne oa ket aes difenn va savboent,kaer eo kompren, hag ar muiañ bec'h a savas pa zeuas va zad - servijer mat da Vro-C'hall - war an ãbier. Daoust da gement en devoa graet he-mañ evit Bro-C'hall e nac'hen a-grenn ober ur gall ac'hanon. Kroget em boa neuze da zisplegañ d'ar c'homiser kaezh peseurt doareoù gwirion a oa d'ar vroadelezh. Va diskleriadurioù avat, kredapl bras eo, a oa dreist da intent an den paour rak ne rejont nemet plantañ ennañ ur barrad ernez arvestus meurbet, a lakaas c'hwezh et ha ruz tan e zivoc'h (ar gounnar-se a oa c'hoariet mat atav rak o sellout outañ e kave din e oa va c'homiser o terc'hel ur roll bennak). "Ar vroadelezh" eme va den, "ne oa

nemet stadezelegezh." Gall e oan peogwir e oan ganet war diriegezh ar Stad c'hall diouzh tud a aparchante endev d'ar stad c'hall : se a oa sklaer, da vihanañ. Gant desped ha melre e tizolois ar wech-se e oan ur sujad perc'hennet ha n'eo ket ur c'heodedour en e frankiz ; mac'honet e oan gant ul lezenn a nac'hen.

E gwir ne oa ket kalz konfortusoc'h va emgav pa vezen lezet va unan penn. Neuze avat ne c'hellen ket mirout a lonkañ soñjoù diwar-benn an enkadenn ma oan gennet enni. Ar pezh a skoe va spered eo e oa va zonkadur un afer a labour boutin evit tud all : war va zro e oa studierion war ar gwir, dezho anvioù brezhonek, a oa diseblant krenn, eveljust,ouzh kement a c'helle c'hoarvezout gant ur brogarour breizhat. Stourm a raemp evit hor pobl hogen distag e oamp diouti a-grenn d'an ampoent-se.

Ar stourm divalav-se en devoa padet e-doug an deiz. Padal, daoust d'am gortoz, e voen laosket da vont d'ahardaez. N'ouzon ket perak ne voen ket derenet diouzhtu dirak ar barner-enklask ; marteze dre ma oa ar sizhun santel o kregiñ ha n'edo ket e Roazhon an hini a oa karget eus an afer ; marteze peogwir ne oa bet divizet netra gant ar barnerezh gall end-eeun ; erfin, marteze, diwar intrudu ar polis gall, gant an dezo d'am spiañ ha da dizhout dre va heuliañ ar re e oa klask warno end-eeun.

Deuet e oan da dremen an noz e st. St-Melani (va zad a oa tremenet e burevioù ar c'herreizh-diogel e deroù an endervezh - n'em boa ket kejet gantañ avat - a oa distroet da Sant-Jermen a-benn neuze). Antronoz e oan aet da sez kevredad Il-ha-Gwinun ar Strollad, st. Toulouse hag eno em boa graet dre gomz dirak Yann Goulet un dezrevelladur eus va harzidigezh(berrskrivet e oa bet war an taol gant e wreg). Neuze, o vezañ ma c'helle ar bolised c'hall va herzel adarre e Roazhon da ne vern pe boent em boa graet va soñj



mont da repuiñ war ar maez e Sant-Jermen. Va marc'h-houarn  
ned ae ket a-raok ; da gempenn e oa ; war va zroad eta em  
boa graet ar veaj rak ne oa mui tren ebet d'abardaez da vont  
da Sant-Jermen ; da unnek eur diouzh an noz e oan erruet e  
ti-skluz Sant-Jermen.

Eno e oan chomet e-doug ur sizhun, nemet un  
droiad am boa graet e Roazhon d'ar yaou 2 a viz Ebrel(mont-  
dout n'em boa graet ken a-hend-all ; n'ouzon mui war beseurt  
arbenn). Tremenet em boa va amzer o rendaelañ gant va zud  
e ser va harzidigezh. An Emsav, evit va zud dres, a gemere  
stumm ur walenn : edon o vont da wastañ va buhez - da goll  
va micher, va frankiz, va buhez marteze, ha kement-se evit  
netra rak Breizh n'he doa chañs ebet da vezañ dieub un deiz.  
Adarre e klevis e oa ar brezhoneg ur yezh varv ha ne oa ket  
dav klask henn dassorc'hiñ : perak en em chalañ gantañ ?  
Gwashoc'h a oa : edon o vont d'en em aberzhiñ evit un nebeut  
aotrouion a felle dezho distreiñ d'an amzer wechall pa oa  
rouaned ha noblañsoù o ren ; poent e oa din chom peoc'h ;  
n'oa ket sur e c'hellfe an Alamaned va dieubiñ ur wech all  
(ar mennoz e oan bet dieubet a-drugarez d'an Alamaned a oa  
bet lakaet en o fenn gant n'ouzon ket piv, marteze gant un  
aotrou Du Plessis a lavare d'am c'hoar henañ e oa an Alamaned  
o klask hadañ an dizunvaniezh e-touez broiz dre an Emsav h.a.)  
Kounnariñ a raen veljust o tabutal gant va zud ; va Breizh me  
ne oa tamm ebet evidon un distro d'an tremened, dreist-holl  
d'an hiniñ gall ; an dazont eo a gonte da gentañ evidon.  
Hogen d'ar c'houlz-se ne c'helle breutaerezh ebet tizhout  
va zud da vat.

Faezh o chom er gêr en hevelep plegennoù em boa  
lakaet em penn respont d'ur bedadenn a oa bet kaset din a-berzh  
ur Framm yaouankiz a-berzh-stad vichiat evit mont d'ur marevezh  
-studi "monitourion" e Mordel : hemañ a oa un tu kinniget din  
evit en em zizleañ eus an amprest war enor am boa graet un  
nebeut mizioù kent (5.000 lur am boa da resteurel.) Setu me eta

en hent eta, war varc'h-houarn. Mordel a zo ur vourc'hadenn  
vras e mervent Roazhon, war hent Plouarzel. Degouezhet e  
oan du-se war-dro unnek eur diouzh ar beure, en ur maner  
bennak war ar maez, d'ar meurzh seizh a viz Ebrel. En em  
gavet e oan eno gant paotred yaouank dianav kaer din. Manet  
e oan da verennañ ganto ; goude-se em boa selaouet ur gentel  
bennak hogen ken borrodus e oa kement a oa bet displeget  
din, ken divourrus an aergelc'h gall, ken pout a spered  
va c'henseurted ma oan bet digalonekaet naet gant ar soñj  
e rankjen tremen ur sizhunvezh bennak er c'hozh kastell-se  
ha m'em boa kemeret warnon distreiñ d'ar gêr : un tu bennak all  
a gavjen moarvat da zaskoriñ an arc'hant a vanken d'ar Stad  
c'hall. D'abardaez eta e oan distroet da Roazhon ha noz-  
vezhiet em boa en hor rann di. Sant-Melani. Mennet e oan  
da zistreiñ da Sant-Jermen antronoz. En endervezh ar merc'her  
avat, da deir eur, e oa deuet daou bolis d'am herzel er  
gêr ; bez e oa ganto ur c'hemenn-herzel a-berzh ar barner  
Garnot ; yaouank awalc'h e oa ar re-mañ ; anv unan anezho  
a oa Porcher, ma ne fazian ket. Va degaset o doa e karr-tan d'ar(1)  
Prefedti ; eno o devoa savet un danevellskrid e ser va harz-  
idigezh. Ur wech sevenet al lidoù-se o doa va ambrouget war droad  
betek ti ar Breudoù e-lec'h e tleen bezañ diskouezet d'ar  
barner-enklask Garnot end-eeun ; hemañ avat a oa bepred o  
kemer e ehanoù. Derenet e voen eta dirak ur barner all a  
leunias hag a sinas en e lec'h ur c'hemenn-enkarc'hariañ ;  
gant ar banerenn-se e voen kraouiet e ti-bac'h ar soudarded,  
str. Sant-Heler, e tro pemp'eur pe c'hwec'h eur : war va zroad  
em boa ranket adarre mont betek du-se.

Ti-bac'h ar soudarded eta a oa lec'hiet e penn  
ar str. Sant-Heler, tost da vali Genver, war ar gorread a  
zo dalc'het hiziv, tost-da-vat, gant savadur ar skingomzerezh-  
skinwelerezh (distrujet e voe an ti-bac'h-se e-kerzh bombez-  
adegoù 1944). O vezañ ma oa leun-chouk an tiez-bac'h epad ar  
brezel e veze dalc'het eno prizonidi a bep seurt, a wir boutin  
avat peurvuiañ.

(1) A-ziaraok o doa gwiriet war ar straed va fivolezh.

Degemeret e oan bet gant un diwaller toull-bac'h, fuzod, a gav din, - lezanvet e oa Nonoilh - en doa garmet ouzh va gwelout : "Setu ar pevare emrener : unan c'hoazh ha n'eo ket prest da zont er-maez..." a oa kalonek- aus, egiz ma soñjit awalc'h moarvat. Goude bezañ bet marilhet, glaviadennet, luc'hskeudennet a-sonn hag a-blaen, evel ur gwir dorfetour, kemeret va enlouc'hadurioù-bizied, na petra 'ta, e oan bet plantet ebarzh ur gell a-gevret gant tri c'henseurt eus ar Strollad a oa bet harzet em raog. Bez e oa eno P.K., studier war ar gwir, paotr ar pentur, a oa bet tapet e ti e dud, bourc'hizion dereat eus Montroulez pe Gastell-Pol, pezh en doa laket reuz awalc'h er gêr, egiz ma c'heller krediñ ; bac'het e oa abaoe ar merc'her kent ; A.B., eus Filger, studier war an apotikerezh, kraouiet abaoe ar yaou ; ar Ruilhet a oa bet dastumet abaoe an 30 a viz Meurzh.

An daou gentañ a anavezen awalc'h, dreist-holl A.B. a oa bet skoliad evelon e Sant-Marzhin ; P.K. a oa e penn kevrenn ar studierion hag a oa bet oberiant tre er Strollad ; ur paotr bras ha kreñv a oa anezhañ, jentil tre a-hend-all hogen betek neuze n'em boa ket bet tro d'e hentiñ kalz. Goude ma voe bet divac'het avat ez eas a ziw ar wel rak kavout a ra din e voe dalc'het er gêr gant e dud a felle dezho espern outañ trubuilhoù nevez ; A.B. a gendalc'has da stourm evit ar Strollad betek 1944. Goude-se e paouezas a bleidiñ gant an Emsav, an hini broadel atav rak oberiant e voe el ledemsav evel meur a vroadelour kozh all keuziet ha kerseet.

Tonkadur ar Ruilhet a voe reuziek. Hemañ a oa ur paotr bihan, lent e zoareoù, mouk e vouezh, o tougen lunedoù, a gomze rannyezh e gorn-bro a Erec'h hogen galleg peurvuiañ ; tavedek e oa ha ne doullis ket kaoz allies gentañ. Eus Bubri e oa genidik, a gav din. N'ouzon ket petra e oa oc'h ober e Roazhon d'an ampoent ; klevet em eus e kemere kentelioù e Sant-Marzhin. Brudet e oa en e gorn-bro evit bezañ un emrener ha

ha kilstourmerion c'hall a glaskas e lazhañ e 1943-1944 ; ne c'helljont ket tapout krog ennañ ha, dre zegouezh, e vuntrjont e c'hoar en e lec'h. D'en em veñjiñ ez eas ar Ruilhet krenn a-du gant an Alamaned. Paket e voe e 1944, karc'hariet, barnet d'ar marv, fuzuilhet goude bezañ bet merzheriet en un doare euzhus, brevet e eskern, ma ne c'helle mui chom en e sav.

Gant an tri broadelour-se en em gavis serret eta e toull-bac'h straed Sant-Heler. Hogen estreget broadelourion a c'helled niveriñ er gell m'edomp bodet enni (ur gell enk tre a-hend-all, pevar metrad bennak war bevar e-lec'h e oa dastumet un dek bennak a dud) ; kousket a raemp war fledoù klenket tri ha tri an eil war-c'horre egile ken e oa an uhelañ hini a stok ouzh al lein koulz lavaret (en unan eus ar re-se e oan en em staliet) ; debret e oamp gant ar c'hwenn a vordilhe e-kreiz al loustoni ; ur privezioù dispartiet diouzh ar peurrest eus ar gell gant un tamm moger a oa bet aozet e-tal an nor ; ar skarz a yae endro bep kardeur, e-doug an noz zoken ; flaer ar 'grezilh' a garge hor fronelloù. A-hend-all e chomemp bepred en amc'houlloù rak stanket e oa ar prenestr nemetañ a oa er gell gant un doare abavant ha na aotree ket sellout er-maez koulz lavar- et ; padal e teuen a-benn a-wechoù da ziverzout kelloù priz- onidi all en tu all d'ur porzh strizh ; skeudoù kluchet ha dilavar a bare a-wechoù a-dreuz barrennoù, evel arzhed e kaouedoù ur sirk, dreistdiraez rak ne c'hellemp kaout darem- pred ebet ganto (1). Buorzhet e oamp evel saout.

Droch e oa ar reoliadur e meur a geñver. Bep noz da seizh eur, da skouer, e ranke an holl diwiskañ o dilhad a veze lakaet war ur bank ha dezouget en trepas : kement-se, sañset, evit mirout ouzhimp a dec'hout e-pad an noz. Goude-se e veze graet un tamm ensell er gell gant un diwaller.

(1) Strishoc'h c'hoazh e oa ar c'helloù eno : un doare tre- pasioù ne oant ken. Eno ne oa nemet kelornioù gant an dud, hep tamm privezioù ebet. An dud n'int ket mui tud en tiez- bac'h moarvat.

N'eoamp ket aotreet a-hend-all da virout na brikoloù na c'houriz na tamm fiseleñ ebet : gelllet hor befe en em grougañ ; na kontell na laonenn nag aotenn a nep seurt : gelllet (1) hor befe digeriñ hor gwazhied pe dagañ kenbrizonidi pe ziwalterion ; ur barver a zeue da aotennañ an dud div wech ar sizhun. Ne oa banne dour-red ebet er gell eveljust ha ne c'hellemp en em zivastrouilhañ un tammig nemet e-harz un duellenn er porzh strizh e-lec'h e vezemp lakaet da vale un hanter-eur bep beure.

E devoud ne oamp ket mui tud, amprevaned ne lavaran ket ha ne oa ket ur bam bevañ e seurt plegennoù. Fadal, o vezañ m'en em gaven gant kenstourmerion ne c'houzañven ket re. Divizout a raemp a-hed eurvezhioù diwar-benn Breizh hag ar Strollad ; gant P.K. ne implijen nemet ar brezhoneg. Ar pep brasañ eus hon amzer avat a renemp o kanañ. E-pad va amzer doull-bac'h e teskis un toullad mat a ganaouennoù brezhonek ha n'anavezen ket betek neuze. Ar re all a oa souezhet ouzh hor c'hlevout hogen biskoazh ne glaskjont enebiañ ouzhimp. Lakaet em boa degas ivez va levrioù a sonadouriezh latin ha gresianeg hogen, evel m'eo kaer gortoz, ne dizhen ket nemeur stagañ va spered ouzh va studioù, ken en abeg d'an endro ken en abeg d'am enkrez, rak stanket e oa an dazont dirazon ha n'ouien tamm ebet ha deuet e vefen eus an toull abarzh mizvezhioù pe vloavezhioù. N'hor boa keloù ebet evel dres eus ar strivoù a rae renerion ar Strollad a-benn hon divac'hañ.

An damallidi a oa kraouiet en hor c'hell a-gevret ganeomp a oa, egziz m'em eus damveneget, prizonidi a wir boutin, nemet unan, René Even e anv, implijad hent-houarn, ur c'homunour eus trowardroioù Roazhon, a oa bet harzet evit bezañ dalc'het armoù en e di, a gav din. Un nebeut sizhuniou war-lerc'h e tremenas dirak al lezioù-barn arbennik a gendaonas anezhañ da bemp

(1) Evit an hevelep abeg ne oa tamm gwerenn ebet er 'prenestr'. Gwell a se e oa echu ar goañv a-benn neuze.

bloavezh toull-bac'h. An hevelep alvokad ha me en devoa : de Goascaradec (dacust d'e anv ne oa hemañ egwir nemet ur Gall anezhañ). Un den bihan, tavedek ha yen a oa eus ar René Even-se ; lenn a rae kalz ; ne seblante ket bezañ enkrezet tre gant e stad. Marteze e oa brezhoneger hogen se ne c'hellis gwiriañ biskoazh. N'ouzon ket petra e teuas da da vezañ a-c'houdevezh.

Ar re all eta a oa prizonidi a wir boutin. Bez e oa, da gentañ, daou barizian deuet moarvat d'ober marc'had du e Breizh. Unan anezho a oa ur mell pezhad a zen dopez, kant-ugent kiload a bouez ennañ moarvat ; egile avat a oa ur gouzen sioc'han hag izil, blev du pladet dezhañ, trist e benn da sabatuiñ. Kejadennoù fall o devoa graet en hor bro avat ha bet zoken un tamm krogad gant archerion ; lamm o doa bet dileuridi an urzh war an taol (gant e gant-ugent kilo e oa trec'h hor parizian da ne vern peseurt archer) ; berrbad avat e oa bet ivez e drec'h rak dizale e oa erruet polised all o doa kroget e kabiezh hon daou haroz ha plantet anezho en toull e-lec'h e c'hellent ober prederiadennoù c'hwerv diwar-benn an nebeut a justis a zo er bed-mañ(1).

Paotred ijinus all a oa ganeomp en toull,pergen daou baotr yaouank eus Baen, e kreisteiz Roazhon, o devoa trafiket gant tikedoù-bara. Nervek tre e oant, dreist-holl unan anezho, ur melegan rodellek e vlev ; hemañ, un devezh, en doa kroget da lopañ evel un den diskiant war ur paour kaezh klasker-bara ha na rae droug ebet dezhañ nemet kousket noz-deiz ha lakaat an ti-bac'h a-bezh da grenañ gant e roc'hadennoù. Ret e oa bet mestroniañ an den yaouank rak edo o vont da lazhañ ar c'housker trouzus.

Ar c'hasker-bara-se a oa e gwirionez ur paour kaezh hag a oa deuet a-ratozh d'an toull-bac'h netra nemet evit bezañ lojet ha maget e-pad ur pennad. Laerst en doa nouspet korzennad toaz-dent en ur stal bennak e kêr ; paket war an taol e oa bet barnet en un dalc'h kentizh ha plantet diouzhtu en toull

(1) Ne oant ket ankouaet gant o c'henwallerion a bourchase dezho bevañs fonnus ha liesseurt.

e-lec'h e oa bet gwisket dezhañ kerkent ar penedwisk e burell gell (1).

Unan all bet barnet endev a zouge ivez ar penedwisk, livrez ar brizonidi, ur skroker a oa bet kendaonet da dri bloavezh toull-bac'h evit n'ouzon peseurt afer. War-dro hanter-kant vloaz en devoa an den d'ar mare-se ha gant e c'halleg pouezmouezh kostez Paris. Ur paotr gourdonet d'an tiez-bac'h a oa anezhañ (an toull-bac'h ne oa evitañ nemet riskl ar vicher) ha leun a skiant-prenet e oa. Gouzañv a rae e staddiglemm awalc'h nemet a-wechoù evelato e kroge ennañ barradoù melkoni ; neuze e stage da bazeal, tizh warnañ, penn-da-benn d'ar gell hep ehanañ, epad survezhioù, hag eñ heñvel awalc'h ouzh ul loen sirk o treiñ-distreiñ en ur gaoued. Pa veize e paremp warnañ selloù tregaset e tisklerie neuze d'hon dienkrezañ : "N'en em chalit ket : ned eer ket sod d'an oad am eus..."

A-wechoù e chome a-sav war un troad, egiz ur gerc'heiz, harp ouzh ar voger en ur c'horn bennak eus ar gell, ur vrec'h a-dreuz e vruched, e veilh-dorn all dindan e elgez, sanket e gabell prizoniad war e dal, damserr e zaoulagad ha kregiñ a rae da zibunañ a vouezh uhel, egiz pa vije bet evitañ e unan, huñvreadennoù hudur : un aridennad taolennoù gadal a veze livet gantañ, ken resis ha ken fonnus ma lakae unan da heugañ. Rak an diorged an hini eo a rae ar muiañ diaez d'anden. En un doare natur awalc'h e teue dezhañ en em geñveriañ ouzh ar veleion : o diorged a oa evitañ ur mister ha na zeue ket a-benn da boellañ ervat. A-benn ar fin, a gav din avat, en devoa kavet un diskoulm d'ar gudenn dre c'houlakaat ez ae ar veleion d'an tiez-kloz, gwisket e sivil, sur-mat, - eveltañ e unan. Hag eñ da zeskrivañ deomp gant kalz tro donedigezh an ao. 'n eskob e unan d'an ti-kloz - "tud ez int eveldeomp," a huanade, leun a drugarez hag a gendruvez, hep c'hoant dismegañsiñ ebet - en ul "Limousine", mar plij; ha

(1) Al laeron-tikedoù bara a dapas ur bloavezh toull-bac'h.

d'an ao. 'n eskob, eveljust, e veze kinniget neuze serc'hed "de luxe" ha n'eo ket gisti razh evel d'ar geizh a seurt gantañ. Sklaer e oa en em lakae hon den e lec'h an ao. 'n eskob. Kement a frealz a denne ar prizoniad paour diouzh e welidigezh m'en defe bet unan keuz da zidouellañ anezhañ.

A-hend-all, en toull-bac'h atav, ne oa ket hor skroker un den displijus da zaremprediñ, pell edo zoken, nemet, eveljust, e vefe bet arabat deoc'h kaout afer outañ er vuhez plaen rak n'en defe bet tamm morc'hed ebet o tispluañ ac'hanoc'h moarvat. A vouezh uhel bepred - ur c'hiz iskis e oa an unangomzoù-se - e tislege en a-raok an taolioù-kaer e oa o vont da gas da benn ur wech ma vefe deuet er-maez eus an toull-bac'h. Rak, na petra 'ta, ne c'helle ket dilezel e vicher en doa bet kement a boan da zeskiñ. En dro-mañ avat e tiwallfe muic'h - hag eveljust ne vefe ket paket. Moarvat en doa tapet tri bloavezh toull-bac'h endev met anzav a rae ne oa ket paeet re ger evit pezh en doa graet hag anaoudegezhvat en doa ouzh e alvokad da vezañ miret outañ a vezañ barnet pounneroc'h c'hoazh.

Arabat e vefe krediñ e oa an den-mañ diroll a-grenn a-hend-all. En eneb, daoust d'e valgorioù gadal e vire ur skiant bennak eus ar c'hlanded ; ezhommoù natur zo ne c'helle ket trec'hiñ met ne soñje ket ober eus e wanded ur vertuz evel maz eo tentet d'ober alies ar vredelourion a zo war var a-benn ar fin da vezañ muic'h breñnet eget an dud dizesk eus ar bobl.

Gwashoc'h eget hemañ a oa kavet en toull-bac'h a-hend-all. Dre an darzhell e tamwelen a-wechoù keginourion an toull-bac'h, Paotred yaouank, pennou ront touzet dezho, burbuennek ha pikouzek, a rae o difraeoù er porzh : barnet e cant bet evit bezañ gwallet merc'hed. Kement-se evit reiñ un tañva eus ar "joli monde" a oa o neradiñ e donderioù toull-bac'h Sant-Heler.

Treut kenañ e oa ar bevañs eno eveljust. Ar brizonidi ha n'o devoa pakad ebet eus an diavaez a zizerie gant

an disvoued. Evidomp-ni ar vroadelourion n'hor boa ket da glemm ; ar Strollad a rae war hon tro evel ur gwir dad ; savet en doa ur gevrat gant un ti-debriñ eus kêr a bourchase hor predoù deomp. Evel ma weler adarre, amsteriek tre e oa hor stad : a-hervez dispac'herion ha war un dro e tennañ hor mad diouzh an urzh a oa o ren neuze. Diaezet e oan gant an amsteriegezh-se hogen penaos em befe gallet klemm diwarni ?

Ar brizonidi a zamveize an amsteriegezh-se ivez ha rak-se e tiwallent a hentiñ ac'hanomp - evel ar c'homunour, lakaomp - pe neuze e klaskent lubaniñ ac'hanomp e stumm pe stumm : danvez mistri a oa ac'hanomp goude holl. Hor skroker, da skouer, a oa o klask reiñ kalon deomp bepred; dister dra e oa hon afer, evel an holl aferioù politikel, a lavare a-hed ar wech. Da c'hopr evit e gomzoù kalonekaus e tape tamm pe damm eus hor predoù. Goude bezañ bet divac'het zoken e teuas P.K., awenet gant an anaoudegezh-vat, a soñj din, da zegas un dorzh-vara penn-da-benn d'hor skroker mat (anzav a ran ne zamanten-me ket kement da hemañ a hañvale din bezañ gouest tre d'en em ziluziañ e unan).

P.K. hag a oa gwiraour, a-hend-all, a oa nec'het o verzout pegen lizet e oa an dud gant ar bac'herezh e unan, izelaet ha dismegañset ha ma oant, ken e kollent an tammig dellid denel a c'helle chom dezho. Kalz en devoa desket en toull-bac'h ha n'en defe desket biskoazh en e zornlevrioù, a ouzhpenne. Diskleriañ a rae din neuze e oa mennet da esa gwellaat reizhiad an tiez-bac'h e Breizh en amzer-da-zont. Ar raktres-se kaer-se ne voe eronezet biskoazh o vezañ ma ne gemeras ar Strollad nepred ar galloud e Breizh.

O c'hortoz adaozañ tiez-bac'h Breizh da zont e oamp ostizion an tiez-bac'h <sup>da</sup> gall, ha Doue hepken a ouie evit pegeit. Kenderc'hel a raed <sup>da</sup> zisplegañ hon afer. Pouchaset e oa bet din un alvokad - n'ouzon ket hag a-berzh ar Strollad e teue pe a-berzh va zud - , de Goascaradec e anv, am eus meneget endev, un den hir ha treut, mourroù galian dezhañ, m'em eus soñj mat. Hemañ avat a gemere va afer a-zevri-bev:

evit va difenn e kinnige lakaat ar samm war va yaouankiz he doa miret ouzhin a verzout gwir anien an embregadur e oan bet dedennet ennañ. Evit keloù se ne glaske dismegañsiñ ac'hanon hag ouzhpennañ a rae : "...nemet e karfec'h sammañ penn-da-benn kiriegezh hoc'h oberoù ha c'hoari hoc'h haroz."

N'em boe ket amzer da zibab un doare d'en em zifenn dirak ar barnerezh gall-vichiat rak a-drugarez Doue e voen divac'het un nebeut devezhioù war-lerc'h. Kounañ a ran avat e kaven ar gudenn-mañ gwall ziaes da ziskoulmañ. O c'hoari an haroz, evel ma lavare an alvokad, edon war var da sachañ warnon pounneroc'h barnedigezh hep gonid ebet evit ar Strollad hag ar vro, marteze, o vezañ ma ne oad o kas kad dieubiñ ebet d'ar mare-se e Breizh. Diouzh un tu all, ne oa ket sur tamm ebet em befe dedennet gras vat ar varnerion o klask ober va filpouz, evel ma kinnige din Goascaradec ; gwirheñvel e oa zoken em befe kollet va dellid en aner a-grenn. Evel-se eta e soñje din e oa ar furañ c'hoazh chom hep esa touellañ den diwar-benn ar mennad gwirion am boa bet o pleustriñ ar 'bezen'. Ne c'hellen eta nemet nac'hañ an devoù o unan pe neuze, ma n'oa tu ebet d'o nac'hañ, chom hep klask reiñ dezho ur ster ha n'o devoa ket.

E gwir, ar c'haderezh nemetañ a oa nac'hañ pep tra, da lavarout eo, an devoù o unan. Sed pezh a ris pa voen derenet a-benn ar fin dirak ar barnar-enklask Garnot d'ar gwener l' a viz Ebrel. A-hend-all, va c'henseurted ha me a oa en em glevet war ar poent-se en toull-bac'h hag ar barnar Garnot en doa tapet ur c'hofad ernez un nebeut devezhioù kent o c'houlennata A.B. : hemañ en devoa nac'het kement tamall a oa bet graet dezhañ ; Garnot, kounnaret ruz, en devoa levrioù e levraoueg war al leur, a-hervez. D'ar gwener -se eta e oa deuet daou archer d'am c'herc'hat en toull-bac'h ha war va zroad bepred - rouez e oa an eoul-maen - em boa kerzhet ha me chadennet etre an daou archer betek ar Breudoù. Tremenet e oamp dre straedoù bihan, adreñv iliz Sant-Jermen, a-benn chom hep dedennañ an evezh (evalato em boa kejet gant

ur genstudierez bennak a oa bet saouzanet awalc'h ouzh va gwelout e seurt kompagnunezh.)

Me ' gav din ne oa breutaour ebet ouzh va harpañ p'en em gavis dirak ar barner ; va daou archer a oa chomet ganin avat ha kalz dudi a gemerjont en abadenn. Breizhiz eus ar Goueled a oa anezho, a gredan, Breizhiz atav, ha biskoazh n'o doa klevet komz eus kudennoù an em-renevezh. Sebezet mik e voant eta o c'houzout e soñje darn sevel ul lu brezhon, a-hervez, ha zoken bagadoù archerion vrezhon ! Moarvat em boa-me nac'het e ve bet hennezh tamm ebet pal ar 'bezen' met anv a oa bet evelato eus an dielloù a oa bet kavet e ti va c'hamalad. O tistreiñ d'an toullbac'he eta e c'houlenne va daou archer ouzhin ha dalc'het o defe o micher en ur Stad vrezhon, ar pezh a oa ur goulenn natur awalc'h. O dispontet em boa eveljust war ar poent-se. Ar Stad vrezhon, sur mat, he defe ezhomm c'hoazh eus o ser-vijoù. N'ouzon ket avat ha deuet e oan a-benn d'o c'hendre-c'hiñ.

Bezef pe vezef, antronoz, d'ar sadorn 18, e dibenn ar beurevezh e oamp bet divac'het hep rakkemenn ebet. Deuet e oamp kerkent betek leurgêr ar "C'halvar" : Youenn Delaporte en devoa ur rann di a-us d'ar fiñvskeudenndi ar "Royal". Hemañ, a-hend-all, en devoa graet war hon tro; Remont e vreur n'edo ket gantañ; pellgomzet en doa da zaou vignon evit degemenn hon dieubidigezh. Neuze e oamp aet a-gevret da verennañ en un ti-debriñ a oa lec'hiet e korn straed ar Chabistr ha straed Sklizun (pellzo n'eus mui predi ebet eno ; epad ur pennad amzer war-lerc'h e voe dalc'het en e lec'h un ti-gwestell). Ur pred mat hor boa graet en ti-se. Neuze e oamp distroet da rann di Youenn Del. hag eno hor boa savet an danevellskridoù diwar-benn hon harzidigezh hag hon toullbac'hidigezh. Ur wech ma oa bet echu an drevell-mañ em boa pellgomzet du-mañ e Sant-Jermen evit reiñ da c'houzout d'am zud e oan bet dieubet.

Habaskaet e oa va zud e Sant-Jermen. Tro o doa bet - ha va c'hoar hemañ ivez - da gejouz gant pacted ar Strollad ; va zad en doa komzet gant Yann Goulet, a gredan, - c'hoazh e reas epad an hañv, e-kerzh e gleñved - hag hemañ, kredapl, en doa plijet dezhañ (marteze gant e zoare soudardel, na petra!) Dre vras o doa kavet va zud e oa renerion ar Strollad tud hegarat ha dereat. Meizet o doa ivez e rae ar re-mañ o seizh gwellañ evit hon dienkañ. Erfin, kavout a ra din o doa kemeret evito un tamm doujañs dre ma santent ne oant ket dic'halloud a-grenn : un nerzh bennak o devoa ha kont a zalc'hed anezho er plegennoù a neuze e Breizh. Evel-se ne voe graet rebech ebet din pa zistrois d'ar gêr.

Padal ne oa ket echu an afer. En hor frankiz da c'hortoz edomp hepken. Va mignoned all a oa bepred dindan dec'h neuze - L.M., J.M., ar R. h.a. - a rankas tremen dirak ar barner Garnot. A-benn ar fin ne voe graet evelato prosez ebet. Perak dres ? Diaes eo din respont en un doare resis. Ret eo merkañ evelato, da gentañ, e oa chomet ar 'bezen' e-doug ar pemp miz tremenet war live an akademegezh rik, din da c'houzout da vihanañ : ne oa ket a armoù (an aotre a rankje bezañ bet roet gant an Alamaned ; o chom kuzh a-hend-all en defe en em lakaet ar 'bezen' er-maez eus al lezenn alaman) ; ne oa raktres emsevel ebet ; ne oad krog da seveniñ netra ; un egin a voe lazhet kerkent er stumm-se e oa ar 'bezen'.

Ne gredan ket eta e vemp bet dieour d'an Alamaned eus hon divac'hidigezh, daoust ma c'helle ar re-mañ, eveljust, dre zarempredoù personel levezonañ pennadur-ezhioù lec'hel Vichi. Hogen, evel m'em eus merket, re dreut e oa danvez ar prosez ha muioc'h a vad eget a zroug en defe graet d'an Emsav o vezañ ma oa ar meno foran a-enep da Vichi.

Goulakaat a ran ivez e rankas renerion ar Strollad a neuze marc'hata gant pennadurezhioù Vichi evit renkañ

an afer-se. Evel m'em eus merket, un tammig galloud en devoa ar Strollad broadel neuze ha se ne oa ket dic'hallus eta. Diouzh un tu all e oa meur a geñver etre pennadurezhioù Vichi ha renerion ar Strollad : an eil re koulz hag ar re all a oa mirourion hag 'hengoungarourior' ; an eil re evel ar re all a zegemere an dalc'hidigezh alaman hep klask herzel outi, evit abegoù disheñvel, gwir eo, hogen ne vern: kendonkad e oa ar Strollad broadel eta gant pennadurezhioù Vichi.

Heuliadoù politikel en devoe an afer-mañ evelato. Ur wech ma oa bet dizoloet ar 'bezen' ne oa ket mui tu d'henn adsevel gant ar mennad d'ober anezhañ, evit darn, un nerzh-lu emsevel ha dieubiñ. Ar c'hwitadenn-se a gendevoudas an disrann a zlee mont war zonoat etre kostezenn an Henaff hag hini Delaporte. War-dro fin ar bloaz - da vare Stalingrad - e paouezas Youenn Del. a grediñ e trec'h an Alamaned hag a-se e savidigezh tost ur Stad vrezhon. Ne oa ket mui anv a glask aozañ ul lu eviti. Rak-se ne voe ar 'bagadoù-stourm' a voe savet e-lec'h ar 'Strolladoù Stourm' nemet un urzhiadur skouted bennak daoust ma virjont doareoù soudardel evit darn, al livrez pergen. An Henaff avat a gendalc'has da grediñ e trec'h an Alamaned hogen rankout a reas ivez en em glenkañ penn-da-benn en urzh alaman hag ober eus ar "Bezen Perrot" un nerzh-kerreizh digor ha 'lezennel'.

Un drouziwezh eo bet eta an arnod sevel ar 'bezen' kentañ. Se a c'heller diskleriañ evit darn dre ar plegennoù ma voe klasket henn sevel end-ceun. Rennerion an Emsav d'ar mare-se a felle dezho respont war ar prim da zarvoudoù istorel dibar a ziruilhe dibaouez ha diharz endro dezho. Ne oa ket tu da c'hortoz na da brederiañ kalz ; soñjal a raed hepken e oa ret ober un dra bennak. Gwall-zisoc'h ar mall-se e voe, da kouer, tuta danveziou emsaverion war ar prim hep kaout amzer d'o stummañ nag e-keñver yezh nag e-keñver

sevenadurezh pe speredelezh nag e-keñver politikouriezh: kalvezourion hepken a glasked ober anezho, da vezañ arveret goude hervez froudenn ur galloud bennak. En ur stourm a oa politikel da gentañ e oa hevelep reizh diboell a-grenn.

En tu-hont sa se e ranker ouzhpennañ ne oa ket kemeret kalz a ziabenoù evit kuzhat un embregadur a oa dispac'hel a-hervez. Ne oa ket fur lakaat war var da vezañ paket evit dalc'hoù bruderezh dister awalc'h stourmerion a zlee en em ouestlañ d'un obererezh goloet. Ha war ar marc'had skoachañ ebarzh annez unan eus ar stourmerion -se - anavezet gant an holl peogwir e oa a-hend-all e penn kevrenn ar studierion-dielloù a zisplege doare obererezh an emsav kuzh-se !

Seurt berrboellegezh ne c'hell bezañ diskleriet nemet dre zegouezennoù ar mare. Dre 'n arbenn m'o doa kemeret a-greiz-holl un tammig galloud goude bezañ bet heskinet ha flastret epad bloavezhioù e kolle darn eus ar stourmerion moarvat pep evezhiegezh. War zigarez e oa hualet ar C'hallaoued, dinerzhet ha gwanaet o beli e tamgreded emichañs ivez e oa didalvez en em chalañ hag e c'helljed en em dennañ diouzh pep enkadenn diwar c'hoari etre an daou c'halloud a oa o kevezañ e Breizh d'an ampoent. Bez ez eo bet ar politikerezh evit darn eus ar re a zo bet atebek eus an emsav d'ar mare-se un doare obererezh c'hoariel na zouge ket nemeur a arvar ha na gemered ket eta a-zevri awalc'h. Falset e oa ar c'hartoù avat ha rak-se ne c'halled nomet bezañ koll ganto(1).

=====  
 (1) E ser va zoullbac'hidigezh eo ret notañ em boa desket un tamm "galleg bev" gant va skroker. Ur galleg livus ha saourus dreist a arvere hemañ ha moarvat he defe dellezet e yezh damant un tata-kozh yezhoniour bennak endefe dastumet end deol gant e dammig sonenroller troioù-lavar skeudennus kentañ. Ar galleg bev-se, siwazh, am eus ankounac'haet a-grenn hiziv, nemet un droienn a zeu da goun din bremañ : "Chui maroñ" a lavar hepmuiken ; koll on, paket on (enni e kaver moarvat un damveneg eus liv ar penedwisk).

E gwirionez, evidon da vezañ dieubet n'em boa ket paouezet a vezañ tregaset gant va afer betek miz Mezheven tost-da-vat. A-hervez edomp en hor frankiz da c'hortoz ha ne vern pe da vare e c'helled hol lakaat e stad a harzidigezh. D'ar 24 a viz Ebrel, da skouer, em boa kejet gant ur c'hamalad a oa aet bihan e galon moarvat rak lavaret en doa din e oa gallus meurbet e kouskjemp da noz en "tour begek" (e ti-bac'h bouloard Jakez-Karter e Roazhon). War an tao l e oan aet diouzhtu da sez-kreiz ar Strollad da c'houlenn diskleriadennoù. Eno em boa kavet L.M., Youenn Delaporte ha re all. An holl avat a oa din ec'h ha seder. Youenn Delaporte en doa goulennet hepken ouzhin peseurt penn o doa graet va c'helennerion p'o devoa va gwelet o tont endro. Ne oa bet anv ganeomp a-benn ar fin nemet eus kudennoù boaz ar Strollad : darn a ginnige mont da werzhañ ar gazetenn war ar maez war varc'h-houarn. Dre zegouezh en devoa diogelet din L.M. erfin e vefe echu da vat an abadenn a-benn ur sizhun bennak.

Un nebeut devezhioù war-lerc'h avat, d'an 28, em boa divizet gant A.B., va c'hendoullbac'had kent, en e gambr, war ar c'haeoù hag hemañ en doa asuret din ne vefe prosez ebet : ma fellfe d'ar C'hallaoued hol lakaat da dremen dirak o lezioù-barn arbennik e c'houlennfe an Alamaned an teuliadoù diganto a-ziarak (gwir a reolerezh a gemerent war ar prosezoù politikel, peurluviañ avat evit pakañ komunourion, a gav din), ha n'o daskorfent ket dezho goude.

A-hervez e oa hegaset an Alamaned gant ar gobidell-se ha tamall a raent da bennadurezhioù lec'hel Vichi koll amzer gant aferioù dister e-lec'h plediñ gant traoù siriusec'h, herzel ar paotr en doa armodet drouklazhañ Doriot, lakaomp(1).  
 (1) N'em eus munud ebet war an darvoud-mañ ha n'em eus tamm soñj anezhañ a-hend-all.

Hervez A.B. e tlee Ripert, ar Prefed vichiat bezañ dilec'hiet : unan all a vefe deuet da gemer e garg abarzh pell. N'en doa ket diskuliet din A.B. avat ha stag e oa ar c'hemm prefed-se ouzh afer ar vroadelourion vreizhat.

Evelato e oa ret disfiziout, eme A.B. Bez e c'helled, a-benn ur pennad, hon dec'hervel adarre, evel testoù en dro-mañ, hep alvokad ebet, a-benn hol lakaat da gomz aesoc'h ha kavout en hon diskleriadurioù dievezh danvez tamall a-enep deomp.

A nebeudoù avat e oa koazhet va zregas. War-dro diwezhañ miz Mae ha deroù miz Mezheven e oa deuet anat e oa bet renket an teuliadoù ha ne vefe barnedigezh ebet. Er c'heit-se ivez em boa bet tro da glevout munodoù diwar-benn avanturioù va c'hamaladed a oa chomet dindan dec'h - "on the run" evel ma lavaremp evit komz egiz Iwerzhoniz saoznekaet - epad teir sizhun bennak. Bepred eta e vezent o redek a zirak o hemolc'herion. Ne oa na kirri-tan nag eoul-maen nouze ha ret mat e oa bet dezho mont gant an tren nemet ne ziskennent ket e porzhioù-houarn ar c'hêrioù bras a oa eveshaet pizh, e tiez-hent-houarn ar c'hêriadennoù war ar maez, ne lavaran ket. Skoet o doa eta war-du an Naoned. E Redon avat e oa erruet polised da furchal er c'hombodoù ; prim ha prim o doa ranket diskampañ ; deuet e oant a-benn d'en em silañ kuit ha kavout repu e privezioù ar porzh-houarn e-lec'h e oant manet skoachet ken na oa loc'het an tren endro. Neuze e oa c'hoarvezet ganto ober hanter-kant kilometrad war droad, hep debriñ tamm rak n'o doa ket tikedoù-boused. Arc'hant avat o devoa d'en em vevañ, a-berzh ar Strollad : da bep hini e veze deroet pemont lur bemdez da brenañ bitailh ; a-benn ar fin en devoa ar Strollad dispignet 1.200 lur bemdez evit pep ezel eus ar "Bagadoù Stourm" dindan dec'h e-kerzh an afer-se.

Epadañ amzer-se ivez a-hend-all o doa kendal-c'het gant ar gourdonerezh soudardel, en un doare pleustrek avat



en dro-mañ ha n'oa ket mui en ur stumm akademek : desket o doa skeuliata tiez, bannañ greunadennoù; armoù a oa bet darnacuet dezho d'en em zifenn ha darbet e oa bet dezho ur wech zoken lazhañ unan eus o c'hamaladed o devoa kemeret evit ur polis deuet d'o herzel.

A-benn ar fin e oant degouezhet d'an Naoned e-lec'h o doa en em guzhet betek dibenn an afer. Neuze e oant distroet da Roazhon ha ranket o doa neuze respont dirak ar barner-enklask.

Evel-se ez echuas da vat afer ar 'bezen' a voe divodet er stumm-se hag a zeuas da vezañ un doare urzhadur yaouankiz dindan atebegzh Strollad broadel Delaporte.

Diwar vremañ e venegin adarre va deizlevr :

Disadorn 18 a viz Ebrel 1942

Act on d'ar c'helc'h A-ziagent em boa gwelet Tranvouez e levr di Breizh ha komzet gant Youenn Drezen diwar-benn troidigezhioù diwar yezhoù keltiek. Gwelet em boa ivez Jezekel ha Kervezioù.

Er c'helc'h e kejis gant A.E., Roparz Hemon, an Helloco, Kentel, Andouard. Un danevell eus va reuzioù diwezhañ a rankis ober dezho.

Epad an div eurvezh ma chomjomp a-gevret e lennas A.E. ul lizher en doa nevez degemeret digant Maodez Glanndour e ser "Dremm ar sperdegezh vrezhon". Breutadeg a savas war an divoud-se hag sigur an destenn-mañ e voe meneget "Skiant Vreizh" eus Gawain.

Darn a gomzas ivez eus ar "sevendod keltiek", e-touez ar Vrezhoneg hag ar pobloù keltiek all. Un diviz dudius e voe hogen a c'hellje bezañ purchaset danvez ul levr penn-da-benn.

Disul 19 a viz Ebrel 1942

Da ziskuizhañ ha da zebriñ krampouezh on distroet d'ar gêr e Sant-Jermen. War varc'h-houarn on deuet, da eizh eur d'abardaez. C. ha M.H. o doa c'hoant bale o deus va ambrouget betek hent Sant-Gregor.

Du-se e voe laouen an holl ouzh va gwelout. Ar speredoù a zo sioulaet ha ne voe graet din an disterañ rebech e ser va mennoziñ tra m'edon o tezevell va chomadenn en toull-bac'h. Va zad ne lavare netra, evel boaz ; ne gred ken herzel ouzhin ha torret eo e c'hoant da vrentaat ganin diwar-benn kudenn Vreizh : ret e oa bet dezhañ anzav n'edo ket ar

gaou ganin pa felle din adsevel Breizh ; aon en deus avat evel ar re all ha levezonet eo bepred gant ar bruderezh gall ; Ripert avat n'eo ket karet gantañ ha pardonñ a reer din bezañ bet harzet gantañ.

Dilun 20 a viz Ebrel 1942

Distreiñ da Roazhon da beder eur. Du-se n'em sonadouriezh latin.

Da eizh eur hanter d'abardaez on aet d'ar c'helc'h. War an hent em eus kavet an Helloko hag unan eus e geneiled n'em boa ket gwelet c'hoazh ; bet e oa en toull-bac'h gantañ epad c'hwec'h miz. Un dro e voe din da gontañ ivez va zoullbac'hidigezh. Va danevell a rankis adober dam-c'houde er c'helc'h. Ha Meavenn da ziskleriañ e oa bet graet din un enor bras pa oan aet d'al lec'h maz a an holl Vrezhoneg vat ur wech da vihanañ en o buhez. A oa aes da lavarout.

Teir c'hentel a oa bet graet neuze : unan gant Abeozen war ar brezhoneg krenn ; plaenaet e voe e "Skridoù brezhonek krenn" ; goude-se ur gentel gerneveg gant Roparz Hemon ; ur skrid nevez a voe boulc'het : "Pasion agan Arluth" ; hag erfin kentel iwerzhoneg, an hini hirañ eus an holl. Ur skoliad nevez eus Plistin hag o labourat er Framm keltiek a oa ganeomp. A-hend-all e oa ar memes tud ha pourvuiañ : A.E., Tranvouez, Bernier, an Helloko, ar Mee...

Diriaou 23 a viz Ebrel 1942

Er sez-kreiz en endervezh da gaout keloù. Kavet em eus L.M. eno gant e gamaladed - hag e dad : hemañ a oa deuet da Roazhon da c'houzout petra oa c'hoarvezet gant e vab. Graet en doa anaoudegezh gant poadred ar Strollad, ha, gwell a se, kavet en doa anezho dedennus. Gant e vamm er gêr avat e oa bet fall an traoù : chomet e oa toc'hor war he gwele p'he doa gouezet e oa klask war he mah hag e oa hemañ dindan dec'h, o redek hentoù Breizh-hep ma c'hellje hini lavarout dezhi e pelec'h edo kuzhet. Gwelllaet e oa dezhi abaoe, a-drugarez Doue.

M. a c'houlennas ouzhin ha deuet e oan a-benn da c'houzout anvioù ar studerioù war ar gwir am boa merzet en "Diogelroez" pa oan bet harzet evit ar wech kentañ. Darn anezho a labourfe evit ar c'herreizh gall, emezañ. O merzout n'em boa graet ken avat.

Yann Goulet a dremenas dre aze. War e du mat e hañvale bezañ, da sabatoñ.

O tont er-maez eus ar sez-kreiz ez is da gavout L.R. Ur banne am boa da baeañ dezhañ abaoe an deiz ma oan bet harzet evit an eil gwech ha toullbac'het.

D'abardaez ez ejomp holl d'ar fäivskeudenni. Leun kouch e oa ar sal, ma voe bec'h warnomp okavout plas. Kalz a vicherourion a oa deuet, un eston. Birvilhet e voe an dud

gant ar film ; stlakañ a rejont o daouarn, dreist-holl en diwezh. "Michel Strogoff" e oa ar film-se, fromus, esmaeñs, teneraus, spontus, kement a c'hell plijout d'an arvesterion. Ar re-mañ a zistroas d'ar gêr sioul o c'houstiañs rak n'o doa ket kollet o arc'hant.

Dimeurzh 28 a viz Ebril 1942

Bodadeg ar studierion d'abardaez. Leun-barr e oa ar sal. Da gentañ e voe displeget an afer d'ar selaouerion hogen, eveljust, ne voe ket diskuliet pep munud. Goude-se e voe displeget penaos e vo kempennet "Burev Kevredad ar studierion". An Aridon a zo er penn anezhañ bremañ ; ne chom nemet J.M. eus ar burev kozh.

De Fréminville, ar skrivagner gallek, a reas deomp ur brezegenn. Helavar eo. E enforennoù studier e Paris en deus danevellet deomp. Goude-se alioù fur tata-koz : ne vefe ket savet Breizh gant kargidi didalvez ; da skouer e vefe ret kavout diouzhtu war-lerc'h an dieubidigezh amaezhourion vrezhon da gemer lec'h ar brefeded hag an isprefeded c'hall, un hanter-kant bennak anezho ; ar re-se a rankfe anavezout tamm pe damm evelato ar gwir dinazel. Ken bras e vefe an ezhommoù pa vefe anv a sevel ur Skol-veur vrezhonek. Gouiziegezh kelennerion ar Skol-veur-se a ranko bezañ par da hini gelennerion ar skolioù-meur gall. Skiantek tre eo seurt mennozioù ha pellzo o displegan d'ar re all a zo prest awalc'h da grediñ en em azo Breizh diouti hec'h unan.

Diriaou 30 a viz Ebril 1942

Chomet on er gêr e-doug an deiz. C. a zo aet d'ar gêr en endervezh ; Yann d'ar fiñvskoudenni. L.R. en deus graet ur weladenn deomp : va marc'h-houarn a felle dezhañ kaout evit mont betek ar porzh-houarn. Gantañ e ouezis e oa L.M. hag an Hegarat en o frankiz da-c'hortoz abaoe dec'h. O goulennataet en doa ar barner-enklask hag eñ imoret fall da sabatuiñ a-hervez, gant ar soñj moarvat e oa o labourat evit netra, a zo digalonekaus awalc'h, a ranker anzav.

Da c'hwec'h eur hanter evelato on aet betek ti Kerverziou da resteurel dezhañ ar follen-baner he doa servijet da c'hronnañ ar pakad 160 luriad levrioù brezhonek am eus nevez prenet digantañ. C'hoar am boa ivez amprestañ ul levrig embannet gant ar "Gevredigezh alaman ar studioù keltiek". Hogen tro-wenn a ris rak Kerverziou n'edo ket er gêr.

Digwener 8 a viz Mae 1942

Ur c'hastiz a zo bet lakaet war Roazhoniz war zigarez ez eus bet taolet un tammig bombezenn ebarzh ar burev-emoestlañ evit ar vicherourion o vont da labourat en Alamagn. Berzet eo dont er-maez adal nav eur betek 6 eur

mintin.

Un niver spontus a girri-arsailh hag a girri-tan brezel alaman a weler war ar straedoù e Roazhon, ha soudarded e-leizh enno, a bep seurt liv : louet, du, glas-gwer, arvelen.

Abaoe dek devezh bennak, bemnoz da hanternoz pe war-dro e klevet strakadennoù an D.E.K.N. hag ar c'hirri-nij saoz moarvat o fraoñval. Ne gav ket din avat e vefe bet taolet bombezennoù e neb lec'h tro-war-dro.

Taget eo bet Madagaskar gant ar Saozon. Evel boaz, ar C'haolourion a drid gant al levvez tra ma leñv Gallaoued all gant an dizesper : ar re-mañ a ra eus ar Saozon ur "vandenn voc'h".

Echu e vefe an emgannoù e Diego-Suarez ; disoc'h : 1.000 den lazhet.

Disadorn 9 a viz Mae 1942

Setu komzoù hek ar barner-enklask en devezh all : "N'oc'h nemet ur guchennadig hailhoned a glask ober trouz hag ho Delaporte n'eo nemet ur paour kaezh den..."

D'ar poent-se e oa deuet tre un archer. "Ha da gentañ, ebarzh va zeuliadoù em eus peadra da blantañ un toullad mat a dud c'hoazh en toull..."

Disul 24 a viz Mae 1942

Aet on da bardon Sant Erwan e parrez ar C'halon-où Sakr, en tu all da bont an Naoned ; ar pardon-se a zo aozet gant skoazell ar c'helc'h. D'ar beure, da nav eur, e oan en em gavet straed ar Prad-war-laez. L.R. a oa erruet damc'houde a-gevret gant an Danteg a zouge ur c'hozh mell levrv oferenn (ne gav ket din e oa e brezhoneg).

Nevez eo iliz ar C'halon-où Sakr, savet war-dro ar brezel kentañ, moarvat. War an treuzoù e kejis gant D'beauvais hag e wreg, gwisket ganti koef ha dilhad Douar-nenez. Va c'hamaladed a oa degouezhet araozon : L.M., M., Mr., h.a. hag ivez Youenn Drezen ha Kerverziou a chome tost d' an nor evel publikaned paour. Leun-kouch e oa an iliz a-hend-all, gant ar barrozianiz hag an ensaverion deuet, evelton va unan, dreist-holl evit klevout ur sarmon ha kantikoù brezhonek. E devoud e voe mat ar sarmon gouestlet da Sant Erwan, skouer ar yaouankiz, distaget en ur yezh flour ha lenne war un dro, re lenne evit hiniennoù moarvat, rak an Danteg, paotr Kallag, a anzavas ouzhin war-lerc'h an oferenn n'en doa ket intentet kalz tra ennañ.

Pa voe echu an oferenn e chomis da gomz gant L.M., J.M., M. h.a. A.E. ivez. L.M. a werzhas ar gazetenn. Kevarc'het e voemp gant Delaporte a oa deuet d'an oferenn evel ar re all.

En endervezh e voe gousperoù gant kantikoù brezhonek adarre. Gant A.E. hag an Danteg e oan en em gavet.

War-lerc'h ar gousperoù e oa bet un abadenn ganiri ha koroll roet gant ar c'helc'h. En diwezh e c'houlennas Kaerou digant an arvesterion sevel evit selaou ar "Bro gozh..." An holl a reas nemet ur guchennadig e penn ar sal a enebas.

Dilun lañ a viz Mezheven 1942

Arnodenn. Testeni a lennegezh c'hallek evit an aotreegezh. Un danevell am boa da sevel diwar-benn "Les Tragiques" eus Agrippa d'Aubigné ha n'em boa ket lennet pemont gwerzenn anezho. Spi am boa e vefe bet kinniget deomp un destenn diwar-benn oberennoù Vigny a anavezen din-dan eñvor koulz lavaret. Deuet on a-benn evelato da zuañ peder pajennad : n'ouzon ket penaos em eus graet.

Korbellec e vin. N'eus mar ebet diwar-benn se. En abardaez em eus bet gweladenn Riwall a zo deuet da c'houlenn ouzhiñ peseurt arnodenn all a oa antronoz: yezhoniezh pe hen yezhoù. Hervezañ e vo kinniget ur skrid c'hresianek da blaenaat en hen yezhoniezh. Neuze on sur da gaout ur begad youd adarre.

E ti L. on bet ivez. Hemañ a oa gourvezet war e wale, o c'hortoz moarvat sikour an neñv da reiñ dezhañ kalon da labourat. Adarre e kave dezhañ en doa c'hwitet gant e arnodenn; neuze e rafe ivez politikerezh hep damantiñ. O vont da eurediñ edo ivez; kozh awalc'h eo, emezañ : 23 bloaz. Ret e vefe d'an holl bezañ dimezet da 25 bloaz ha kaout daou vugel abarzh tregont vloaz "evit va veñjiñ ma vezan fuzuilhet gant ar C'hallaoued, a ouzhpennas. Ne oa ket o farsal : kavet e oa bet en e gambr raktresou-aloubiñ ar Prefedtiou.

Soñj am eus e oan degouezhet gant Youenn Drezen e "Levr di Breizh" ha savet em boa marvailh gantañ diwar-benn ar "Gador-dabutañ" ebarzh SAV a zisplij d'an holl (eñ e unan a zo bet taget evel nouspet re all war ar bannoù-se). Perak ne ra ket paotred SAV evel Maodez Glanndour ebarzh niverenn diwezhañ STUDI HAG OBER : burutellet e oa bet e oberenn gant M G moarvat hogen n'en doa ket klasket hemañ evit keloù se e zivrudañ; speredek awalc'h e oa bet ar c'hontrol evit kompren e romant en un doare diuntuek.

Dimerc'her 3 a viz Mezheven 1942

Bombezadegoù war an Alamagn. E gwir e klemme pe, kentoc'h, e rae goap ar c'helaouennoù gall - pe ez resisoc'h ar c'helaouennoù alaman e galleg - dre ma oa bombezet Paris gant ar Saozon; risklusoc'h e oa, sur, a lavarent, mont da weladenniñ an Alamagn e-lec'h e c'hellent koll o flu. Daoust hag ar Saozon o deus klevet an tamall pe ar c'hepadenn? En dro-mañ ez eo bet bombezet Kolun : 20.000 den lazhet. Labour brav, n'eus ket da dortal. Essen a zo bet bombezet en hevelep doare : peadra da reiñ d'an Alamaned un tañva eus dousterioù ar brezel d'o zro.

D'ar beure-mañ e kemere lec'h poelladenn ziwezhañ an arnodenn. Gresianeg a zo bet a-benn ar fin evel m'en doa diouganet Riwall hogen kavet em boa gwel selaou L.M. a lavare din e vefe roet latin da blaenaat deomp : abaoe 10 devezh n'em boa ket lakaet va fri ebarzh "Fleury". Gweget e oan a-hend-all rak n'em boa ket kousket mat en Ërc'hent gant ar broutac'h. Droukverzh a rin adarre, m eus aon.

Bodadeg er c'helc'h. Du-se e oa deuet an Danteg a gred ivez e vo korbellec en arnodenn (brogarour e teu da vezañ ar paotr a-hend-all). Komz a ra brezhoneg bepred hogen poan am eus d'e intent a-wechoù evel m'en deus bec'h o kompren va yezh. Rivière a oa e-touez ar selaouerion a zegouezhas ken stank ma oa an hanter anezho on o sav hag int dianav kaer din. N'ouzon ket peseurt efed a reas war ar re-mañ prezegenn entanus ha braouac'hus Yann Goulet hag a zo a-hend-all ur prezegenn helavard; fichet eo e frazennoù, kellusket mat; ne gav ket din avat e komzfen evel ma ra; pep hini en deus e stumm koulz hag o demz-spered.

Deuet on endro d'ar gêr a-gevret gant Toutouig hag A.E. War-du testennoù dibar e troas hor c'haoz; an dra-se a c'hoarvez alies awalc'h pa vezan gant A.E. En dro-mañ e voe kont eus lavzinouriezh (euzhusat ger! a anzave A.E.). Va mignon a bleustre ivez war ar skiant-se (levrioù diwar-benn skiantoù amguzh en devoa pourchaset hag asuriñ a rae din e oa e dad kozh un hudhanterour dispar, a lakae an taolioù da dreiñ ha me 'oar-me). Da c'hortoz ha da reiñ deomp un tañva eus e ouiziegezh e kinnigas deomp lenn ebarzh bozioù hon daouarn. Din e voe diouganet em befe un tonkadur dister hogen e vefen trec'h dezhañ dre va nerzh-youl. Goulenn a ris ouzh A.E. pe arbenn. a c'helled reiñ d'ur seurt arouzielezh; hemañ a respontas din e oa roet ar arouziezh-se gant Doue deomp da wellaat hor stad; hogen, emezon, ma c'hellomp kenm hon tonkadur e vo gaou an dicogan; ha ma ne c'hellomp ket da betra e servijo an anaoudegezh-se a chomo aner? Evelato, arabat lakaat Doue sotoc'h eget nad eo; petra vern dezhañ hor prederioùigoù douarel?

Diriaou 4 a viz Mezheven 1942

Diwar goulenn merc'h Mayer ez on aet da zegas amann da zDedeyan. En ur c'henkiz koant, straed Porzhmoger, emañ o chom va c'helenner. Degemeret hegarat e voen : peadra a oa ivez. Evelato e rankas an den kaezh degemenn din n'en doa ket gallet lakaat ouzhpenn seizh d'am danevell c'hallek. N'oa ket en gortoz da gaout ken uhel notenn.

Da noz, prezegenn gant Roparz Hemon diwar-benn ar brezhoneg. Leun barr e oa ar sal adarre (teir bigoudenn c'hoazh). Roparz Hemon a ziskouezas ne oa nemet ur yezh vroadel e Breizh : ar brezhoneg an hini e oa. Diwar vremañ, a gendalc'has ar prezeger, e c'heller seveniñ e brezhoneg labourioù a bep seurt; ar vourc'hizion c'hallger a ranko

plagañ ha sujañ d'ar vrientinion vrezhoneger nevez(1).

Digwener 5 a viz Mezheven 1942

Amzer vroutac'h atav. Pleustret em eus war ar brezhoneg hag ar c'hembraeg, betek reisteiz tost-da-vat. Neuze, evel m'on kustum d'ober, ez on aet d'ober un tammig tro-vale.

Degouezhet on gant J.M. hag ar R. ; hemañ a yeas diouzhin abarzh pell a-hend-all (n'en doa ket bet kalz chañs en e arnodenn kennebeut). Chom a ris gant J.M. E-kichen tavarn an "Triskoll" e tenesaas ouzhip ur studier war an istor, genidik eus Lanuon, E.O. e anv. Fellout a rae dezhañ gouzout e pelec'h en defe gallet gwelout Bourdelles ur beleg kelenner e skolaj Sant-Jozeb Lanuon a oa deuet da gendalc'h ar Framm keltiek en devezhioù-mañ(2). Ne voemp ket evit respont dezhañ rak hini ac'hanomp n'anavezze ar beleg-se nemet dre e skridoù e ve. Kenderc'hel a rejomp da varvailhat e-kreiz ar straed dizamant ouzh kement a dremene endro deomp. Meneg a voe eus ar Framm, eus an dud a oa ennañ, eus mennad Roparz Hemon war e zivoud, eus prezegenn Roparz Hemon end-eeun da neizheur : deuet e oa ivez d'he selaou ha dreist en doa he c'havet ; intentet en doa pep tra koulz lavaret, emezañ.

Daoust din anavezout E.O. abaoe ur pennad amzer ne ouien ket e oa anezhañ ur Breizhad ken mat : esmaet on bet en dro-mañ. Krediñ a rae ne rae nemet lenn "Arvor".

Dezrevell a reas deomp penaos e oa deuet da vezañ broadelour goude bezañ graet goap ouzh an emsav epad ur frapad amzer ha bezañ bet darbet dezhañ - evol din va unan - treuziñ ar mor ha mont da Vro-Saoz d'en em gannañ evit ar C'hallaoued. Er penn-kentañ e prene an E.O. dre ranellder hepken hogen diwar neuze e rae e gamaladed un emrener anezhañ daoust ma nac'he-ef en amzer-se degemer e oa ur broadelour breizhat.

Goude m'en devoe E.O. kuitaet ac'hanomp e ambrougis J.M. betek e di en ur zivizout gantañ a-zivout prezegenn Roparz Hemon bepred hag ar mennoziou en doa displaget hemañ enni : penaos e oa ret kaout ul lennegezh evit ar werin, penaos e c'helle ar c'hanaouennoù, ar pezhioù-c'hoari, ar c'hontadennoù en ur yezh eeun mirout ar yezh hag harpañ anezhi da greskiñ. Fellout a rae da J.M. mont war varc'h-houarn da werzhañ levrioù brezhonek war ar maez(3).

En endervezh e c'hoantis selaou prezegenn ar Mee diwar-benn ar vrudouriezh : da deir eur e oa hogen kengrizia e oa an amzer atav maz is da evañ ur banne bier a-ziagent en un ostaleri bennak, a-gevret gant ar R. en doa kejet ganin.

- (1) Ar brezegenn-se a voe graet e ser kendalc'h ar Framm keltiek a proge en devezhioù-se.
- (2) Bodadegoù ar c'hendalc'h a veze renet e salioù ti ar Breudoù.
- (3) Meur a stourmer a reas seurt bruderezh war ar maez en amzer-se, Alan Louarn da skouer, a yae da werzhañ "Feiz-ha-Breizh!"

en un ostaleri bennak. Tri c'hliant a oa deuet en hor raog hag o doa goulennet bier eveldeomp hon unan. Ouzh an holl e voe nac'het reiñ o goulenn ; an tri danvez kliant kerseet a stagas da gunujañ ar vaouez a respontas hardizh dezho ne raent ket aon dezhi (a c'hellen krediñ awalc'h). An tri hailhon a yeas kuit goude-se. Ni avat a oa chomet sioul : da c'hoprañ hor sevended e voe degaset deomp pep a vanne bier a rankjomp lonkañ dre guzh hag en un tennad pa ne oa den ebet er stal.

Ne oa ket deredet un engroez a dud da selaou an ao. Mee ; padal e prezege mat hemañ, flour ha distilhet mat e oa e vrezhoneg, dudius a-hend-all danvez e gaozeadenn. Ne oa avat - ouzhpenn ar re a zo boaz da zont d'ar Skol-Uhel nemet ur pemp bennak a dud o

War e lerc'h e tistagas Roparz Hemon un nebeut geriennoù, a-benn pouezañ war dalvoudgezh ar vicher a vrudour : penaos, da skouer, lakaat ar Vrezhoneg da anavezout al lennegezh a zo bet savet e yezh o bro ?

Distreiñ gant J.M. A-greiz bale e kontas hemañ din sorbienoù a bep seurt. D'ur mare e voe anv eus Bernier. Ar paotr-mañ a zo ur broadelour gredus, eme J.M. - boulec'het en eus zoken studi ar c'hembraeg - nemet en deus marc'hedoù askre e-keñver ober gant an nerzh evit dieubiñ Breizh. N'ouzon ket he bez ez eus ac'hanon ur c'hristen mat hogen evidon-me ne rafen forzh ebet eus lezenn an estren bet diazezet gantañ evit hor gwaskañ ma ne vefe tu all ebet da reiñ an trec'h d'ar reizhded ; al lezenn c'hall a zo graet evit kas Breizh da get ; ha koulskoude, Breizh he deus ar gwir da vevañ. Ar re a zo kablus eo ar re a gas tud d'ar marv evit difenn an direizhded.

Eveljust, arabat ober tro-wenn e seurt degouezh. Marteze - se a c'hell c'hoarvezout - e rankin bevañ e Breizh evel un estren dindan ar gouarnerezh gall hogen ma vez roet tro din d'en em gannañ evit saveteiñ va bro e rin a youl vat.

Evelkent e kavan gwel e ve tizhet ar pal dre gaer : n'em eus c'hoant ebet da vervel. Hogen gouzout a ran ivez emañ Breizh o vervel - ha kolennadurezh ar yezh evel m'emañ ha ma vo dindan gwaskerezh ur stad estren ne c'helle biken, a gav din, daskoriñ da Vreizhiz an emskiant eus o broad-elezh na c'hell yezh ebet bevañ hepti, krakvevañ ha marvel a nebeudoù ne lavaran ket. Re ziwezhat eo deuet an emsav poellek hag urzhiet evit ar yezh koulz hag evit ar politikerezh a-hend-all.

Disadorn 6 a viz Mezheven 1942

Studiet em eus brezhoneg ha kembraeg evel boaz e-doug ar beure. En endervezh on aet da abadenn ar c'helc'h er c'hoariva : roet e oa an abadenn-se evit klozañ rummad bodadegoù ar Framm keltiek. Du-se e kavis va holl gamaladed : E.O. gant e zanvez-pried (ar wech kentañ e oa din he gwelout) ; ur roazhonadez a zo ezel eus ar Strollad koulz hag he mamm ;

Mr., J.M., St., an Danteg, E.O., A.E. E-kichen hemañ e azezis a-hend-all ; evel-se e c'hellis komz brezhoneg epad an abadenn a voe bourrus awalc'h : kanaouennoù ha korolloù. Mari Durand a ganas "Luskell va bag..."

Mordrel a oa en ul logell a-zehoù deomp hag eñ lirzhin war a hañvale ; Kerverziou a oa er sal, birvilhet holl. O tont er-maez a-hend-all e rae an arzourion cholori awalc'h, Kerverziou en o zouez : sañset e oant o kanañ ; yudal a raent e gwirionez.

War ar blasenn e kavjomp un den-gebidik eus Kemper a voe laouen o klevout brezhoneg ganeomp hag a doullas kaoz ganeomp.

Evit echuiñ ez is d'an ostaleri en "Triskell" gant an holl, ambrouget dreist-holl gant an Helloko hag A.E. Sachañ rejomp an Danteg ganeomp, E.O., paotr Lanuon ivez. Paotred ar c'helc'h a oa eno, tommet mat do fenn ha trouz ganto : un daolliad werennoù a voe diskaret ganto. Ni, tud parfet, a gendalc'has da zivizout diwar-benn prederouriezh, sevenadur, Nietscha ha Schopenauer...

Disul 7 a viz Mezheven 1942

Aet on da emvod ar Framm a-gevret gant va c'hoar N. goude bezañ aet da oferenn eizh eur. Da nav eur bennak edomp war leurgêr ar maerdi ; da nav eur hanter - paotred an eur rikez eo ar Vrezhoneg egiz ma ouezer - ne oa ket degouezhet an hanter eus an dud nemet Yann Goulet, Grouifes, Kaerou gant e wreg a zouge he dilhad Breizhadez evel en derc'hent ; kalz a gomze brezhoneg ; darn anezho a-hend-all n'anavezen ket ; en diwezh e tegouezhas L.R. hag e c'hoar a-gevret gant Guieysse.

Erfin e teujomp tre e sal ar c'hendalc'h, hini "Rennes-Comoedia", uhel he sel hag ec'hon awalc'h, en he c'hreiz un daol vras ma azezas outi Roparz Hemon, ha de L'Estourbeillon en e gichen ; a bep tu e oa div daol vihan e-lec'h e kemeras lec'h Jegu war an tu kleiz, Tranvouez hag ur sekretour all war an tu dehoù.

Roparz Hemon a lakaas dindan breutaat kenreizhadur ar Framm bet damaczet en Naoned warlene. Lennet e voe ar recliadur en e bezh ha war-lerc'h e voe burutellet pep mell anezhañ unan hag unan. Divourrus awalc'h e voe al labour-se ; de L'Estourbeillon - n'eo ket ken kabac'h se - ha Toudouze, paotr e vlev brizh rodellek ha rouez awalc'h a-hend-all, a c'hlabous-as muic'h eget ar re all.

War-lerc'h an trevell-se e voe dilennet ar burev. A-ziaroek e tistagas Roparz Hemon un nebeut komzoù : epad ur bloavezh e oa bet e penn ar Framm ; bremañ vat ma oa diazezet start ar c'henreizhadur e oa dereat dezhañ reiñ ur poellgor-blein nevez ivez. En dro-mañ ne voe ket mouezhiet dre sevel an dorn, evel evit melloù ar c'henreizhadur, dre sikrid ha dre guzh ne lavaran ket. Neuze e voe graet ar gont

eus ar mouezhioù : an holl, koulz lavaret, a oa aet a-du gant Roparz Hemon.

Goude e zilennadur e reas Roparz Hemon un tammig prezegenn. "Meulet ha tamallet on bet hervez an dud en abeg d'al lec'h a roen d'ar brezhoneg er Framm..." (1)

Moarvat n'eo ket karet kalz Roparz Hemon gant tud zo er Framm, tud egiz de F., da skouer, a zo ur gallegger tout. Hemañ a zo un denjentil anavezet gantañ istor e vro hogen dreist-oll, a gav din, ar prantad anezhañ a ya eus ar stagidigezh betek an dispac'h, ma weler an dudjentil oc'h en em sevel gant karantezvro moarvat hogen hep emskiant vroadel wirion. Setu e vennoziou a-hend-all (o displeget en ÷us e-kerzh ar gaozeadenn en deus graet d'ar studierion nevez zo) : gwechall ez ae an dudjentil da Baris peogwir ne c'hellent diskouez o zalvoudegezh nemet o vont da C'hallaoued ; bremañ m'eo krevet Bro-C'hall ha ma adsav Breizh e tistroont da vro o c'havell a aotreo dezho d'he zro diskouez o zalvoudegezh. Da lavarout eo, pa vez diskaret ar vro, an aotroun a drais anezhi ; ha pa vez trec'h - hepto eveljust - e korvoont anezhi. N'eo ket reizh evelato.

Kement-se ne vir ket ouzh de F. a vezañ un den hoalus ha speredek a-hend-all hogen disheñvel diouzhimp.

Hiziv n'em eus ket studiet : skuizh e oan ha sammet gant ar wrez.

Dilun 8 a viz Mezheven 1942

Aet on da welout L.M. E gavet em eus digalon-ekaet krenn : korbellek e oa bet ur wech ouzhpenn. Tost e oa da gaout an notenn geitat hogen nac'het ez eus bet e zasprenañ war zigarez n'en doa ket graet an holl boelladennoù e-kerzh ar bloaz. Diaes e vefe bet dezhañ : epad teir sizhun e oa bet o tec'hout dirak ar bolised c'hall.

Teñval e oa mennoziou va c'hamalad en abeg d'ar c'hwitadenn-se. En em c'houlenn a rae ha ne rafe ken nemet politikerezh er bloaz a zeu : a-benn ar fin e leafe e vuhez er stourm. Ne blije ket dezhañ ar politikerezh hogen ne weler nemet an tu-se da zieuñ ar vro. Alese e oa risklet hor c'haoz war-du kudennoù a gravez ha va mignon a ziklerias din e oa stag e uhelvennad hag e youl d'en em reiñ dezhañ ouzh e feiz kristen. Epad ur frapad hon eus divizet war an divoud-se.

+++++

D i b e n n a r p e v a r e l e v r e n n  
\*\*\*\*\*

Y O U E N N   O L I E R

E ñ v o r e n n o ù   h a   d e i z l e v r

P e m p v e t   l e v r e n n   :

M e z h e v e n   1 9 4 2   -   K e r z u   1 9 4 2

R O A Z H O N

G E V R E D

1 9 6 8

.....

P e n n a d 10

Distroet e oan da Sant-Jermen e-kreiz miz Mezheven. D'ar 14 e felle din mont kuit hogen gwall-aozet e oa bet va marc'h-houarn ha ranket em boa gortoz antronoz ma vije kempennet gant va breur. E-keit-se: em boa graet va soñj ober ur gwel da L.M. evit kemenn dezhañ ne vefen ket evit degas dezhañ va zikedoù butun a zleen kerc'hat evitañ e Sant-Jermen en devezh-se. Serr em boa kavet dor gambr va c'hamalad a-hend-all. War an hent avat em boa kejet gant P.K., va c'hendoullbac'had kozh, en doa kaset ac'hanon betek ti-debriñ an Unvaniezh (e-skoaz da zorojoù ar C'harmezadezed: ur stal-vutun a zo hiziv e-lec'h an ti-debriñ) e-lec'h edo Youenn ha Remont Delaporte o predañ a-gevret gant an Aridon hag ur broadelour bennak all. Marvailhet hor boa diwar-benn tro pe dra (savlec'hiadur ar strollad fagour gall "franciste" renet gant Marcel Bucciard e ser kudenn Vreizh) ha neuze hor boa kroget da ganañ e brezhoneg. Alamaned a oa ivez er sal-debriñ d'an ampoent ha soñj am eus o doa staget ivez da ganañ en o yezh ur ganaouenn a oa dezhi un ton gall, war a greden da vihanañ : "Elle était jeune et belle, comme de bien entendu..."

Antronoz em boa graet anaouedegezh gant ur c'henstudier din war al lennegezhioù klasel, ur gall eus ar "Franche-Comté", katolik gredus ha roueelour, hengoun-garour e pep keñver, en em blijas kement e bro ar Chouanted ma reas e annez da vat enni. Kudenn Vreizh ne oa ket dianav krenn da hemañ ; lennet en doa a-hend-all oberennoù ar Bras hag ar Goig, ur rannvroelour giz koazh un tammig met leun a youl-vat (1).

Gant ur c'henskoliad kozh din eus Sant Marzhin e oan degouezhet ivez en devezh-se, Morel, am eus meneget  
 -----  
 (1) Jacques Petit a zeuas da vezañ kelenner e Lise Dinan. Embann a reas e galleg dastumadoù barzhonegoù a gemer o dudennou e danvez Breizh hag a zo bet moulet evit darn gant Kelc'h Brekilienn.

ondev a-hend-all. Hemañ hag a oa ur paotr hedro awalc'h nemet a blije dezhañ kalz an unvanwiskoù a oa neuze un azeuler da vMarcel Bucciard, "Führer" ar Fransisted. Evel m' em eus merket, e oa ar strollad fagour gall-se o paouez embann ul levrig diwar-benn kudenn Vreizh. E ser komz em boa goulennet digant va c'hamalad pourchas din ar skrid-se. Hag ar paotr laouen ha gredus grataat henn degas din hep dale, o soñjal moarvat e oan adennet gant e vennoziou. E gwirionez ne raen foeltr ebet eus fagouriezh, dreist-holl an hini c'hall ha na c'helle nemet bezañ enebourez da Vreizh ; met karet em bofe gouzout penaos e veize Gallaoued zo kudenn Vreizh. N'em boe ket tro biskoazh a-hend-all rak ne gav ket din e adwelis ar paotr-mañ a-c'houdevezh.

Goude bezañ kejet gant Morel e oan aet d'ur gontel vrezhoneg krenn gant Abeozen. Diwar vremañ avat e venegin adarre va deizlevr :

Dilun 15 a viz Mezheven 1942

Bez en em gavas eno ar Mee, e geneil, A.E., Bernier ha Youenou. O tont endro e tezevellas Abeozen penaos e oa bet kinniget dezhañ gant ur gouizieg bennak un nebeut bloavezhioù kent sevel ul levr e galleg diwar-benn ar brezhoneg krenn. "Evit piv avat ?" a c'houlenne Abeozen, "nemet un nebeut gouizieion verrboell o deus ezhomm da gefiveriañ ar ger-mañ-ger eus ar Sanskriteg, armenieg, rusianeg ha me 'oar-me peseurt yezhoù c'hoazh ouzh ar brezhoneg..."

Ar Mee a gontas un istor souezhus : penaos e oa bet savet e Lunden un unvaniezh eus "rannvroioù" hanternoz Bro-C'hall : Normandi, Flandrez ha... Breizh da izili anezhi. War a gleve-eñ e vefe graet diwar neuze prezegennoù brezhonek e skingaslec'h Lunden. Ouzhpenn-se e oa bet savet ur gazetenn pe ur gelaouenn e brezhoneg (pe, moarvat, gant brezhoneg ebarzh) "War Sao" pe "Sao" hec'h anv. Soñj am eus bremañ bezañ klevet e skingomz Lunden ur Breizhad o komz e brezhoneg ouzh e genvroiz hag oc'h adlavarout bepred : "War-sav, Breizhiz, a-enep d'an estren..." Pehini avat ? an hini a zo dizañjer evit hor broadelezh pe an hini ha na glask abaoe kantvedoù nemet distrujañ anezhi ? Setu kement am eus dalc'het soñj anezhañ eus e brezegenn. N'eo ket kalz. Erfin, ar Vretoned en em govrede e pep lec'h, e Bro-Saoz zoken, dindan banniel Bro-C'hall !

Er c'hampoù prizonidi ivez e Bro-Alamagn e oa gouelioù breizhek e ser pardon Sant-Erwan.

Marteze ez eo bet levezonet ar Vretoned divroet da Vro-Saoz gant skouer Gembraez o stourm evit o yezh, dreist-holl er mare-mañ evit degas ar c'hembraeg el lezioù-barn. Iskis e vefe gwelout Bretoned o tont da vroadelourion e Bro-Saoz. Un huñvre ? Darvoud Vichi (1) a lak anat ez eus savet un doare emskiant bobl e-touez ar Vretoned, un doare isemskiant, mar karer, kentoc'h.

Dilun 22 a viz Mezheven 1942

E-doug pevar devezh on manet e Sant-Jermen. Fellout a rae din distreiñ da Roazhon d'ar sadorn hogen ken diwezhat on chomet da labourat war an droidigezh am boa boulc'het diriaou diwar ur skrid japanat - savet gant ur skrivagnerez japanat - m'em eus c'hwitet gant va zren a-benn ar fin ; foeltret eo va marc'h-houarn bapred ha n'eus ket bet tu d'e gempenn.

En devezhioù-mañ eta n'em eus graet nemet lenn un teskad barzhonegoù gallek arnevez ha klokaat pennadoù brezhonek am boa kroget da skrivañ un nebeut mizioù zo. Pleus-tret em eus ivez war ar c'hembraeg.

N'ouzon ket petra a dalv an droidigezh am eus fichet ; nebeut a dra, moarvat. Ne glasken nemet un dro da wellaat va yezh dre embreger anezhi en un doare bennak, evit kaout tro da esteurel e brezhoneg mennozioù a bep seurt(2).

Darvoudoù brezel : kouezhet eo Tobrouk a zo bet kemeret gant an Alamaned. Imor em zad a lavar n'eo ket gouest ar Saozon d'en em gannañ. Droug em mamm avat gant komzoù va zad plismigat ar Saozon a zo bezañ a-enep dezho. A-du pe a-enep ez eur hogen ne gemmer ket bapred evel-se.

Diwezhatoc'h e c'houlenna va mamm ouzhin ivez berak n'oa ket tommoc'h evit ar Saozon. Goude holl e c'hellfe ar Saozon reiñ o goulenn d'ar Vrezhoneg koulz hag an Alamaned. Ne garfen ket gwell eget fellout krediñ an dra-se hogen douetañs am eus evelato.

Dimerc'her 24 a viz Mezheven 1942

Distroet on da Roazhon. Bet on e kêr evit prenañ geriadurig gallek-brezhonek Roparz Hemon evit va c'hoar H. a zo krog da zeskiñ brezhoneg d'he zro. O tont endro e tegouezhis gant Hubert va c'henskoliad eus Sant-Marzhin a stagas ouzhin, kaer am boe ober, ken na c'hellis ket kaout an difagras anezhañ. Selaou a rankis n'ouzon pegeit anzer ar genaoueg bras-se o tibunañ bapred ar memes sord'hennoù : ar Marichal a zo un den-meur hag ar Saozon fallañ pobl a zo er bed. Hep kontañ klemmoù hir diwar-benn e zic'hañs en arnodenn rak korballet e oa bet.

(1) N'ouzon mui peseurt darvoud a zo damveneget amañ.  
(2) N'em eus ket klasket biskoazh embann al labour-se, lakaet na ve ket kollet hiziv.

A-benn ar fin en deus sachet ac'hanon betek e gambr - penn ar Marichal a zalc'he un hanter eus ur voger - goude ma voemp aet da evañ ur banne en un ostaleri. Teuc'h awalc'h e voe hor c'haoz : rouez eo mennozioù va c'henseurt. Diwar-benn ar "Francisme" e lavare ez parfet : "Ce n'est pas mal", hep rannañ ur ger ouzhpenn.

Lakaat a ris kudenn Vreizh war an dabier ha lavarout d'am c'henseurt e oan e soñj skrivañ pennadoù brezhonek evit ar "Bretagne". Dispourbellañ a reas e zaou-lagad gant ar sebez. Pa ouzhpennis avat e veze paet pep pennad 25 lur e kavas va mennad poellek tre. Jediañ a reas : "Peadra da evañ tri apero," emezañ. Hounnezh oa e c'hiz da gontañ.

Damc'houde e voen chañsus awalc'h evit gellout kimiadiñ dioutañ. Poent e oa : abardaezif a rae. Diwezhat awalc'h e oa pa ziraezis Sant-Jermen.

Disadorn 27 a viz Mezheven 1942

Graet em eus va frezegenn er c'helc'h (1). Un "engroez" a dud a oa deuet d'am selaou : R. Delaporte, Roparz Hemon, Tranvouez, Kerverziou, Kaerou, div zimezell dianav, Bernier, Debeauvais hag e wreg ha reoù all c'hoazh. Daoust da se ne voe ket dreist va frezegenn tamm ebet hogen spi am eus n'em eus ket termet re ouzh henn distilhañ.

Un tamm diviz gant Kerverziou ha Debeauvais : o tont endro : Ar c'henlabour etre Bro-C'hall hag Alamagn a zo kouezhet er poull, eme zDebeauvais.

Dilun 29 a viz Mezheven 1942

Erru eo va zad e deroù an endervezh ; deuet eo tre e kladvi Sant-Visant. Graet e vo war e dro a-benn dimerc'her (2).

Aet on d'ar Skol-Uhel Emil-Ernod. Debeauvais on eus kontet e eñvorennoù diwar ar bloavezh 1940 e Bro-Alamagn, p'edo o selaou prezegenn dic'hoanaget Reynaud a c'houlenna sikour an Amerikaned.

Komz a rejomp ivez eus brezel Afrika. A-bouez e oa evit an Alamaned aloubiñ bro-Ejipt. Ne vo ket an aloubidigezh-se ken aes ha ma c'heller krediñ, a gav din(3).

(1) N'em eus ket mui soñj eus testenn va frezegenn, marteze lennegezh Vro-Japan.

(2) Kladvi e oa va zad abaoe miz Kerzu a-raok. Aet e oa da savout meur va vezeg endev. Tizhet e oa gant krign-bev ar gorsailhenn ha skinaouet e tlee bezañ er glinikenn-se.

(3) Da heul e kavas un notenn deiziadet eus ar c'hentañ a viz Genver 1948 : Me ' gred eo d'ar wech-mañ e lavaras Ker-verziou da zDebeauvais. "Bloavezhioù kriz ez eo bet ar bloavezhioù-se evidoc'h hogen ho tigoll hoc'h eus bet en-diz ma rankas ar C'hallaoued goulenn ar peoc'h."

Er mizioù-se e lavare din Kerverziou ivez, un dro, o vont e-biou da di Kervorc'h, tost d'an Tabor, e oa Bro-C'hall neuze heñvel poch ouzh an impalaeriezh roman izel.



Dimerc'her lañ a viz Gouere 1942

E Sant-Jermen. Ranket em eus mont da gas lizhiri-arc'hant d'an ao. Liguet e skluz Moustarel-war-Izol. Pellzo ne oan ket aet da vale dre aze. Hogarat e voe an it. Liguet, evel boaz ; ne welis liv ebet eus he gwaz a oa aet d'ober ur gefridi un tu bennak. Hi avat a gomzas diwar-benn ar brezel, gant ar c'hlemmvanou hag ar siwadennou kustum.

Kenderc'hel a ris gant va hent war-du Pont Plouzer, betek Denzieg, lenn ar Boulez, Feun, Elvinieg ha Sant-Albin-an-Elvinieg. Plaen e oa an hent peurvuiañ met tomm berr an heol ha tenn e oa krapat gant krec'hioù zo. An diabloù a zasskede hagint beuzet e splannder an heol. Glasvezhus holl eo kornioù zo eus rannbarzh Roazhon, marellet gant koadoù a ro ur freskter peoc'hus d'ar gwel-edaou.

Da c'hwec'h eur edon distro e Sant-Jermen.

Diriaou 2 a viz Gouere 1942

An Alamaned a ya war-raok e Bro-Ejipt, ken prim maz eo ar Saozon krog da spontañ. Churchill en deus graet ur brezegenn gwallziouganus. Ouzhpenn-se, Sebastopol a zo bet kemeret ha staget o deus an Alamaned gant un omgann bras e Rusia.

S. a zo degouezhet d'ar gêr da ziv eur. Evit netra rak Yann a oa aet endev da Roazhon da gas pourveziou d'an tiad.

Kentizh m'he devoe taolet he zroad en ti e tisklerias : "Gwelet ac'h eus ? Aloubet eo Sebastopol hag emañ an Alamaned war-nes kaout an tu-kroñv e Bro-Ejipt..." Hag hi d'ouzhpennañ : "Ra drec'hint diouzhtu, ma echuo ar brezel ar c'hentañ ar gwellañ..." Broc'het e voe va mamm gant komzoù va c'hoar. "C'hoant hoc'h eus kreviñ gant an naon dindan seuliou an Alamaned neuze..." emezi. Rak soñjal a ra va mamm e tevio buhez an dud da vezañ heñvel ouzh hini an "amzer wechall" maz a an trec'h gant an Alamaned. A! Pet gwech he deus komzet eus an "amzer wechall"-se ma n'o deveze an dud nemet youd kerc'h ha bara kraz da zebriñ, tamm dilhad ebet da lakaat war o c'hein. Evurusamant ez eo degouezhet ar Republik da reiñ un tamm reizhded d'ar geizh...

Disadorn 4 a viz Gouere 1942

E Roazhon da c'hwec'h eur. Da noz oan aet da selaou prezegenn Tranvouez er c'helc'h. Komzet en deus diwar-benn e avanturioù hag e zrouklammoù da vare chal al lu alaman war zouar ar Stad c'hall. E Bro-C'hall edo d'an ampoent ha diwar dec'hout e oa erruet a-benn ar fin dirak Orleañs (arves-tet en doa ouzh ar pontoù o tarzhañ hogen ne oa bet test da emgann Orleañs ebet). Er gennva dieub e oa en em gavet a-benn ar fin ; eno e oa bet bevêt ha lojet evit netra evel repud. P'en doa gouennet avat treizhañ al linon-harz ha distreiñ

da Vreizh. Ar gargidi du-se avat n'houlent ket e lezel da dremen ken n'en ðfe gouennet e baperoù digant gouarnamant Breizh. A-benn ar fin avat, evel ma ne c'hoarveze netra o doa aotreet anezhañ da vont.

E-touez ar selaouerion e oa A.E., Debeauvais, e wreg hag o mab ha merc'hedoù.

Er gêr e oa va c'hoarezed S. ha J.H. o tivizout gant hor perc'hennez an dim. J. a vez darav bepred da fistilhat. Keal a oa eus paotred yaouank a "diagozhioù mat" roazonat a oa bet harzet ha toullbac'het evit bezañ lac-raet, tuet ha gwerzhet er marc'had du kilodoù a vutun a oa miret gant ar "Sikour Broadel" d'ar brizonidi. Studierion a oa e penn ar ritibailh-se (rener ar vandenn, war a lavare an dimezell, en doa rastallet 60.000 lur evel-se). An darnvuiañ eus ar genwallerion a oa noblañsoù ha bourc'hizion vat. Setu ma oa aet ar gerent mantret da gavout paotr ar "Groaz Ruz" ha kinniget o doa dezhañ dic'haouiñ allaeroñsi. gant ma tennje e glemm a zirak al lez-varn. Rener ar "Groaz-ruz" avat a oa bet didruez : al lezenn a yafe gant hec'h hent, emezañ.

Ar goñchenn-mañ he deus va lakaet da gounañ un istor iskis awalc'h. N'eus ket pellzo en doa skrivet din ar mell beulke a Hubert-se evit gouenn diganin eilskrivañ ul lizher a zleez diskouez d'e dud a-benn kaout un digarez da zont da Roazhon ha da Baris goude-se; el lizher-se e oa anv eus un afer butun ma oan sañset o kemer perzh ennañ. Droch em boa kavet al lizher ha disoñjet em boa a-c'houdevezh gouenn va c'hozh kenskoliad. Emic'hañs e oa ar genaoueg-se o frikotiñ gant ar "businessmen" enorus-mañ. Pezh a gadarna va c'hredenn eo un degouezhenn all a zeu da soñj din bremañ. Ur wechad em boa kejet gant an inosant-mañ hag al leue all Coignard hag ambrouget em boa va daou genskoliad kozh betek ar porzh-houarn. War an hent e kontjont din edont o vont da gavout ur paotr a bourveze butun dezho ; ez vrokus e kinnigjont din kemer va lod eus ar bevez-mañ. Sivazh, n'on ket bet techet biskoazh da louzaouenn Nicot ha nac'hañ a ris o mennad. Kimiadet hor boa neuze hag aet e oa diwar va eñvor a-grenn an degouezhenn-mañ.

Soñj am eus ivez e rae Angôt ur c'henwerzh damheñvel gant ar butun saoz (saoz hervez a lavare atav rak ne gav ket din e oa gwir.)

War a lavar Yann ez eus bet paket ur paotr eus e glas en taol-roued-mañ, un noblañs a-hend-all. Kentel : n'eo ket yac'hus lakaat e breder gant ar butun ha c'hoantegezh an arc'hant ne gas ket da bell, nemet d'an toull-bac'h e ve. Amen! (1)

(1) Adkavout a ran ar sorbienn-mañ em deizlevr. Ur jubennadur all a c'hellfed reiñ dezhi avat. Gallus eo en ðfe kenlabouret ar paotr a venegan hag eñ Vichiat touet gant ar polis gall a neuze. Al lizher droch a c'houlenne diganin skrivañ a c'hellje bezañ servijet da damall ac'hanon goude. Hubert a voe toullbac'het gant ar C'haolourion a-c'houdevezh, a-gvret gant n'ouzon peseurt amiral Vichiat.

Digwener 10 a viz Gouere 1942

E Roazhon. Diheverz eo betek henn kement gwellaenn a c'hellje bezañ deuet e yec'hed va zad abaoe m'eo boulc'het ar mezegadur. Mouget eo e vouezh bepred. Faezh eo a-hend-all ; blaz ar c'hwerf a zo gant e voued, emezañ. Krog eo ivez da c'houzañv abaoe ma prederier anezhañ.

En endervezh on aet d'al lenndi evit tremen an amzer. Merzet em eus Gweltaz ar C'hounaer a oa o lipat e vourroù diwar ur mell pladad levrioù poultrennek ha kramennet ; n'ouzon ket peseurt studiadenn ouizieq e oa o prientiñ.

Eveltañ e ris a-hend-all ha me da gemer "Istor Galia" gant Julian war an astelloù. Hogen emberr e oan darev da gousket gant va C'helled kozh (ha bout on bet itik d'ar Gelted kozh gwechall, pa oan ur c'hrennard!). Renkañ a ris buan endro al levrioù-se ha kemer geriadur ar Gonideg en o lec'h ; stagañ a ris da lenn ar raskrid. Pebezh glabouser ez eo hemañ c'hoazh ! Ne santan ket e ve anezhañ ur broadelour. Ul labour a ouiziegezh a felle dezhañ ober evit darn, hep raskell ebet war ur Vreizh dishual mestrez he zonkadur. Perak ober broadelourionous ar seurt gantañ? Evel REnan e unan a-hend-all. Ne c'hell bezañ broadelour nemet neb a lavar ez eo broadelour

Disadorn 11 a viz Gouere 1942

Prezegenn e ti kreiz-kêr d'abardaez, gant an Helloko, diwar-benn an "Nibelungen". Moarvat e plij dezhañ an hen lennegezh c'hermanek rak komzet en doa endev a-zivout an "Edda". N'ouzon ket petra a glask er skridoù kozh-se, marteze un awen dieub diouzh pep levezon a-berzh ar sevenadurioù kreizdouarek, pobllel rik ; douget omp d'ar werinonniezh e Breizh a-hend-all.

An Helloko a zistilhe mat e vrezhoneg, ur brezhoneg ceun, rak tud dizek a oa er sal ganeomp. An darn-vuiañ eus ar selaouerion a oa ar re voaz da zont : Roparz Hemon, Pol Kentel, Tranvouez, ar Mee, Kerverziou.

Gant Kerverziou em boa kejet e-kerzh an endervezh, e ti Merrien. Gouezet em boa gant ar skrivagner e oa o prientiñ un dornlevr a strilhouriezh (1). A-gevret ivez hor boa follennataet ar rummad savet gant Déchelette "Manuel de l'antiquité celtique" a oa da werzhañ war an astelloù. N'eus ket tu da lenn ar seurt levr, a soñj din : tennañ a ra kentoc'h d'ur geriadur.

Gant Merrien ha Youenn Drezen em boa graet ur pennad marvailh e galleg. Drezenn a zisklerie : "Nos bretonnants ont vraiment le souffle court..." Mat e oa embann levrioù a lorc'h, a gendalc'has Drezenn, met pezh a oa a-bouez e oa

(1) An oberenn-se ha na voe embannet biskoazh a vefe dic'hizet hiziv an deiz rak Kerverziou a glasko enni keltiekant holl c'herioù ar gimiezh.

sevel hag embann oberennoù niverus. Aliañ a rafe awalc'h d'ar skrivagnerion yaouank a oa brezhonegerion a-vihanik aozañ kontadennoù diwar eñverennoù o bugaleaj. E-keñver yezh, pa ne ve ken, e vefe talvoudus rak tu a vefe evel-se da implijout ur bern gerioù ha troioù-lavar a yafe da goll a-hend-all.

Goude prezegenn an Helloko e oan distroet da Sant-Jermen. Unnek eur diouzh an noz e oa pa oan degouezhet d'ar gêr.

Dilun 13 a viz Gouere 1942

C'hoantaat a raen mont da Roazhon hiziv, da gentañ evit prenañ "Marc'hadour Venezia" er rummad divyezhek embannet gant Aubier.

Bez e tleen ivez kejout gant an Helloko en doa prometet din prestañ an Edda (e devoud e kav bepred digarezioù da chom hep ober met n'on ket chalet gant se rak ur seurt oberenn n'eo ket gwall entann moarvat).

A-hervez ivez e oa mennet Debeauvais da zezrevell deomp e eñverennoù yaouankiz p'edo o sevel "Breiz atao" diouzhtu war-lerc'h ar brezel kentañ, penaos e oa deuet da vezañ ur brezhon emskiantek.

Diouzh a zanevelle ur sadorn bennak a-raok en doa stourmet an tad Kerrien meurbet enorus (bremañ ez eo kelenner war ar Eizdousoniezh e kloerdi-meur Kastellzin) evit "Breiz atao" ivez. Pa oa deuet ar marichal gall Joffre da Roazhon war-lerc'h ar brezel kentañ e oa ast Kerrien evel ar re all da begañ balafennoù brogar e kêr. Spi am boa en defe kontet Debeauvais kalz a sorbiennoù seurt-se mat, siw'zh, ne zeuas ket en abardaez-se, na Roparz Hemon en doa grataet dont koulskoude.

Chom a ris gant an Helloko. Ne oa den ebet e ti kreiz-kêr nemedomp hon unan, - hag ivez an ao. Kaeroù hag ur gourener eus Roazhon, galleg ar a-hend-all. An Helloko a gomzas eus al levr saoznek en devoa lakaet e galleg "My fight for irish freedom" gant Dan Breen. Graet en doa anaoudegezh gant ar skrivagner epad e veaj en Iwerzhon (1). Abaoe ar brezel diubiñ e oa deuet ar brogarour taer da vezañ ur bourc'hiz tev, sioul hag habask, kannad en "Dail" a-hend-all met un den madelezhus hag ceun e oa, evitañ da vezañ froost awalc'h. Un tammig rust ha dizoare e oa e stumm-skrivañ. "Ma!" eme an Helloko, "ur soudard a oa anezhañ da gentañ penn. En e levr e klask dezrevell an darvoudoù egiz m'en deus o buhezet kentoc'h eget livañ tro-spered an dispac'herion o unan."

An Helloko a alie din lenn ul levr eñverennoù all

(1) Pemp bloaz war-lerc'h e ris anaoudegezh gant Dan Breen e unan hag e vab a oa a oad ganin (hag a yeas da vanac'h a-c'houdevezh, a gredan) e Dulenn e 1947, epad ar c'hendalc'h keltiek. E deroù ar bloaz en devoa an Helloko dezrevell deomp an droiad en devoa graet en Iwerzhon. N'eo ket bet embannet e brezegenn, a gav din.



"Perak ne zesk ket ar yezh-se?" eme Abeozen. "Hemañ a zo kulotet momestra : gouest e vefe da lakaat dizamant e anv dindan ur skrid savet gant Abeozen ha reizhet gant Roparz Homon. Un ammerder, setu pezhhez eo..." N'oa ket gouiziek awalc'h zoken evit fardañ e unan ar prezegennoù a rae d'ar gouerion er skingomz ; awalc'h e oa dezhañ treiñ skridoù Baillargé (1). "Hennezh a zo un den mat evitañ da vezañ gall a orin," eme Abeozen leun a vadelezh en un taol. "Ahaoc keit all emañ o vevañ e Breizhez eo deuet da vezañ Breizhad, koulz lavaret..." Egile avat n'oa ket evit treiñ ervat ar gerioù pe an troiennoù a gave ebarzh pennadoù Baillargé. Lezel a rae e galleg "asselement" ha "coopérative laiti ère..." Ur vezh, pa lavaran deoc'h !

An holl o doa selaouet Abeozen hep onebiñ outañ - pa vez birbilhet evel-se evez diaes silañ ur ger! - (nomet **Kerverziou** a verkas ez lent en devoa ar "C'houer kozh" naus vat evelato. Setu Abeozen en doa kendalc'het da voueta ar gaoz e unan. O klask marteze digareziñ ar yezh trefoet a implije e krogas d'ober un displegadenn diwar-benn ar ger "foutu" a oa arveret ebarzh skridoù Tangi Malmanch (2). Hag eñ neuze da venegiñ dindan eñvor c'hwec'h gwerzenn bennak eus "Ar Baganiz".

Da zek eur ugent e kimiadis. Tremen a ris dre straed Sant-Melani da gener va zraoù. Loc'hañ a ris da zek eur hanter ; klevout a ris unnek eur o seniñ e tour iliz Sant-Jermen. Da unnek eur dekedon er gêr.

Dimeurzh 21 a viz Gouere 1942

E Roazhon. Chomet on e-goug an deiz da studiañ nomet un droiad am eus graet en endervoz e levr di Breizh. Ne brenis netra hogen kejañ a ris gant ar Mee a oa o klask ul levr diwar-benn Montroulez.

Fellout a rae din pounchas an "Traité de la concupiscence" a oa bet erbedet din gant Dedejan evit keñveriañ ouzh "Maximes et réflexions sur la comédie" a zo war roll an 'aotreegezh' er bloaz-mañ. Hogen e levr di Goblec ne gavis ket ar skrid-se kennebeut.

Gweladenn dic'hortoz L.M. er gêr d'abardaez. Dienkrezet e hañvale bezañ : ma ne ra ket berzh en arnodenn e kemero stal e dad e Konk, emezañ. N'eo ket dav dezhañ en em chalañ.

Sellout a rejomp a-gevret ouzh roll ar c'hentelioù er Skol-veur evit an aotreegezh epad miz Eost. Neuze em boe soñj em boa prometet dezhañ ur pakad butun ; en armel edo sañset ; hogen ne voe ket tu d'henn kavout ; aet e oa da get, da lavarout eo da voged, skrapet gant unan bennak. Ur gerseen griz e voe evit ar paour kaezh L.M.

(1) Hemañ a oa rener "Skolvroadel ar gonezerezh" e Roazhon.  
 (2) Me ' gav din e kaver ar ger-se ivez ebarzh skridoù Jakez Riou. Evit brezhonegerion a-vihanik an amzer-se e oa ar galleg evelato "trefoedaj ar gavel" evelato.

A-benn e frealziñ e tiskennis dezhañ ur banne gwin ha chom a rejomp da ranellañ. L.M. a ziskouezas deomp luc'hskeudennoù eus Konk. Ken na glevas eizh eur o seniñ. Neuze e skijas kuit, mall warnañ tapout e goan abarzh ma vefe serret an ti-debriñ.

Diriaou 23 a viz Gouere 1942

Ur gentel c'hresianeg gant Louis. Plaenaet hon eus teir pajennad eus "Stadrenerezh" Platon. Pres a oa er sal, ur spont : tri den en holl, me L.M. hag ur plac'h yaouank dianav.

Digwener 24 a viz Gouere 1942

E ti M. Ul levr am boa da c'houlenn digantañ. Tomm berv e oa an heol avat hag o tegouezhout e kavis va mignon noazh glez e gorf-bras war dreuzoù e gambr ; labaskennañ a rae war e gador, e dreid diarc'henn lakaet gantañ war ribl ar puñs-glav, en ur glakenniñ gant e berc'henez a rae war-dro he legumaj. Klask a rae sipañ e spered da lenn an "Traité de la concupiscence" met ne gave ket gwall fentus e lennadur. Abaoe ar mintin en doa damlennet tri-ugent pajennad ; ne oa ket bet fonnus tre e notennoù : peder linennig treut en holl. En ur zieleviñ gan e tisklorias din :

- A! peogwir emaut aze emañ o vont da lenn dit ur pennad am eus kavet dreist. A-hend-all em eus e lennet d' an it. Thomas ha bamet ez eo bet gantañ... Hag eñ da zistagañ din addisplegoù Bossuet da arroud Sant-Paol : Gwazed, bevit egiz pa n'ho pije gwreg ebet. "Neuze," emezañ, "n'eo ket dav dimeziñ..." E gwir lenn seurt pennad da zero'hent an eured a oa kentoc'h digalonekaus.

- Perak ivez," a gendalc'has va mignon, "ez eo prest Bossuet da damall ar re all atav? Ebarzh ar "Maximes..." e rebech o lorc'h ouzh ar skrivagnerion war zigarez ma lak-aont o anv war o levrioù met daoust hag eñ e unan ne ra ket kemendall... Ha da gantañ," a glozas va c'hamalad en un doare dic'hortoz awalc'h, "gwell e rafe ar veleion o timeziñ..." Ar berc'henez a oa o tourañ he fiz bihan en hor c'hichen a ehanas gant he labour. "A soñj deoc'h," emezi, feuket.

Hon diviz a gemeras tro hag a zeuas da vezañ siriusoc'h ; stagañ a rejomp da vreaataat a-zevri diwar-benn ar Bibl ha prederouriezh. Ar brederouriezh a blije kalz d'am mignon. "Ma ne garjen ket kement ar merc'hed," emezañ en ur vazailhat, "sur e vefen aet da veleg netra nomet evit studiañ ar brederouriezh..."

A-benn ar fin e voe anv eus al lizher am boa kaset dezhañ e brezhoneg. N'en doa ket bet amzer d'henn lenn, a lavare va mignon. "Re ziaos eo da vrezhoneg : dav e vefe din kaout ur jubennour."

Evel-se e padas hon diviz ken na reas M. e vennoz d'am ambroug e kêr. Erru e oa poent tostaat ouzh koan.

Disadorn 25 a viz Gouere 1942

Kejout gant A.E. e ti Merrien ; eno em boa prenet buhez Kalloc'h gant Palaux tra ma teue A.E. da vezañ perc'henn un dornlevr a achanterezh ! (ne gav ket din e kred start en traoù-se hogen dedennet eo ganto).

Neuze ez ejomp da vale a-dreuz kêr ken na er-rujomp en Tabor. Kalz a oberourion eus an Emsav a oa chomet dizemez, a verke din A.E. ha menegiñ a reas din Vallee, Meven Mordiern, Roparz Hemon (e ser-se e lavaras din en devoa gwelst Vallee e ti Roparz Hemon ; Vallee a zo o koash-aat : pounner-glev eo ha ne gomz ken fraezh. Graet en deus e annez e ti-yac'haat St-Laorañs hag a-hervez e tle Meven Mordiern dont da chom gantañ eno) (1). O tistreiñ da gudenn an dizemez e lavare din e oa natur da unan a venne seveniñ ur gefridi derc'hel dezhañ ; hevelep den a rank bezañ parfet, emezañ, hogen an holl n'int ket evit tizhout ken uhel barr.

Distreiñ da Sant-Jermen diouzh an noz, evel boaz.

Disul 26 a viz Gouere 1942

Gouel Santez Anna. D'an ofereñn bred e reas an ao. person ur brezegenn dreist (evit ar gall maz eo) : distagañ a reas anv Breizh "Breizh, kaerañ rannvro hor Frañs dispar". Moarvat en devoa kutuilhet ar berlezenn-mañ ebarzh un niverenn eus "Ololo"(2).

En endervezhez omp aet da birc'hirinañ e Santez Anna sant-Medarzh. Ur yoc'h a dud a oa tolpet war ar run a-us d'ar stêr Izol. Ur beleg a brezegenne, eus e wellañ, ar paour kaezh, o youc'hal e sarmon a-bouez-penn ken e tage, evit bezañ klevet gant an holl. Darn eus ar selaouerion a euvre pizh ha doujus ar c'homzoù a zistage aotroù person Sant-Medarzh evit silvidigezh o ene ; darn all, pelloc'hik, a oa astennet a c'hwen o c'hein war ar geot, digor bras o genoù ganto egiz pa vijent bet en gortoz da glukañ kolien, pe c'hoazh o c'hlabousat gwashañ ma c'hellent. M'ouzon ket petra o deus soñjet an Alamaned a oa deuet eno eus ar birc'hirined iskis-se.

A-benn ar fin e voe beuzet komzoù an ao. person gant dour benniget ar glav ; an disglavieroù a zigoras hag heñvel e voe an engroez ouzh ur vaot divent. Ur wech em boa klevet anv eus Breizh : "Santez Anna a zo anavezet kement er Frañs ha dreist-holl e Breizh..."

An Alamaned a zo deuet tre e kêr Rostov. S. a soñj e vo trec'het kazi sur ar Rusianed ma ne glask ket ar Saizon ober un dilestradeg war an douar-bras. Va zad avañ a gav dezhañ e taleontre ha n'int ket gouest d'ober

(1) Sant-Laorañs a zo ur vourc'h vihan war hent Menez-Mikael. Hiziv ez eo hogos staget ouzh kêr Roazhon. Tro am boe da welladenniñ Frañsez Vallee en ti-yac'haat-se.M.M. ne zeuas di biskoazh.  
(2) "Ololo" a oa ur gelaouenn savet evit ar vugale gant ar vrcudeur Knouissin.

netra, evel boaz ; ha bep taol ez a droug em mamm ouzh e glevout.

D'ar gwener 31 a viz Gouere 1942

Ur weladenn dihetus am eus bet hiziv petra bennak ma c'hortozenanezhi abaoe ur pennad amzer : hini Orio an hini e oa. Degouezhout a reas du-mañ d'ar mintin-mañ war-lerc'h ar gentel c'halleg. Kas a ris anezhañ ebarzh va c'hamb. Goude bezañ eskemmet keleier e tisklerias din a-drumm en devoa roet e zilez a ezel eus ar Strollad. Hag eñ da ziskouez din ul lizher : e devoud e oa bet skarzhet. Kregiñ a reas neuze da zisplegañ din perak.

Tamallet e oa bet dezhañ bezañ ur c'honoc'her a lakae e fri e traoù ha na sellent ket outañ, emezañ. Pezh a venne hepken avañ e oa diwall an onestiz e diabarzh ar Strollad. Sammet en doa warnañ eta c'hoari roll ar c'herreizh e kevrenn Gwened hag evit kastizañ un ezel eus ar gêr-se tuet gantañ arc'hant ar Strollad, hervez a lavare, - L. e anv - en devoa gortozet anezhañ war ar maez en ur c'hamdro bennak a-gevret gant ur c'henwaller all hag o daou o devoa kefestet a zoare an den difeson-se. Hemañ avañ, na petra 'ta, en devoa kavet trenk ar soubenn ha d'en em zigoll en devoa c'hwistet Orio eus ar c'hentañ kentañ tro en devoa kavet.

Neuze en devoa kroget ar paotr da labennañ diwar-benn pennañ renerion ar Strollad Delaporte, D. G., Yann Goulet (godiset en doa e goñversidigezh). Hemañ, a-hend-all, en devoa klasket renkañ e afer - mantret e oa eveljust o koll ken pouezus ezel - ha degas anezhañ endro d'ar Strollad. Hogen tro-wenn en devoa graet : chomet e oa Orio dibleg ha damc'houde en devoa roet e zilez eus ar Strollad. Fastet e oa gant ar politikerezh hogen broadelour e chome ; kenderc'hel a rae da studiañ ar brezhoneg (rannyezh Wened a-hend-all) hogen ne oa ket deuet da vezañ ur mailh war ar yezh, a gav din.

Etretant e oa bet galvet gant ur c'homiser eus "Titouroù hollek" ar prefeti e Gwened. Anzavet en doa e oa bet ezel eus ar Strollad nemet en devoa nevez roet e zilez. Ar c'homiser neuze, deuet fiziañs dezhañ, en doa staget da ziskuliañ dezhañ kement a ouie diwar-benn ar Strollad, an izili anezhañ ha pezh a c'hoarveze enañ, ma oa bet sebezet mik va c'hamalad ; bepred e valbouze neuze : "N'eo ket posupl! Spierion o deus e diabarzh ar Strollad evit gouzout kement a ouzont!"

Diskleriet en doa din perak e oa deuet dezhañ heugiañ ouzh ar politikerezh. Mont a raent da werzhañ ar gazetenn en ur vourc'h bennak ; ar wech kentañ e oant degemeret mat ha berzh a raent ; ur wech all avañ e oa awalc'h d'ur genaoueg sevel e vouezh a-enep dezho evit ma vefe diskaret o levezon.

Re lezirek e oa paotred ar Strollad a-hend-all, emezañ. Da grediñ e oa e oant paet gant Vichi evel ma skrive

'Brezona' e Gwened (ar re-mañ a zo nazied vrezhon a zo en em zisrannet diouzh ar Strollad en Naoned ha savet kevrennoù er gêr-se end-eeun hag en Oriant).

Ma vije bet heuliet skouer Iwerzhon, a zisplesgas Orio neuze, ne vije ketaet e c'hred da hesk. Ha perak ne oa ket bet graet : prest e oa d'ober n'eus forzh petra ; ne c'houlenne ket gwelloc'h eget en em gannañ evel Dan Breen ; gant daou gamalad all en devoa hemañ enaouet an dispac'h en Iwerzhon e 1920. "Daoust ha n'omp ket dispac'herion ? " emezañ (amañ e verzan levezon levr Dan Breen war speredoù patred yaouank hep nemeur a spered broadel a-hond-all). Heugif a ranked ouzh ur politikerezh ha ne welad disoc'h ebet o tont dezhañ, a glozas.

D'e soñj, eveljust, e oa echu ar Strollad (peogwir en devoa kuitaet anezhañ emichañs) ; re laosk ha re vrain e oa. Pa vefe tud onest da gavout ennañ adarre e rafe politikerezh adarre ivez. Da c'hortoz...

Va c'hamalad a yeas kuit a-benn un eur hanter. Kerseet e chomis da gentañ o wiriañ breskded youl un den en em dremene da vroadelour hogen a gemere digarezioù toull evit dilezel ar stourm e gwirionez. E gwir avat, ne gredan ket nemeur e talvar boan klask adc'honit seurt tud a zo war glask "avanturioù" pa n'hon eus ezhomm nag eus avanturioù nag eus ur brezel didalvoud, a zo muic'h, noazus ha drastus evit an ampoent. Henn diskleriet em boa dezhañ a-hend-all. N'eo ket poent c'hoari hon dispac'herion vihan ; da gentañ, an Alamanned a c'houlenne urzh ; talvoudus eo dezho ar mererezh gall hag e genlabour. Ne reont foeltre ebet eus ur stad vrezhon renet gant tud hep skiant-prenet ha na oant ket brudet gwelloc'h eget tud Vichi. Hag evidomp e vefe savidigezh un hevelep stad en degouezhennoù-mañ un afer fall rak hañval e vefe gant ar bobl-  
añs e vefe bet diazezet ar Stad vrezhon-se gant sikour an Alamanned end-eeun, - hep kontañ e c'helle bezañ difrouezh hon arnod krouiñ ur stad dre an nerzh. Kentañ perzhioù ar brogarour - dispac'her diouzh ret - ez eo an hirgortozerezh, an evezhiegezh, ar poell hag ar furnez - hag ivez skiant-vat. Ret eo ober pep tra e koulz.

Orio, a-hend-all, a damalle d'ar re all bezañ brein hogen anzav a rae ne oa ket ur sant e unan. "Se ne ra ket forzh," a ouzhpenn, "gant ma raint un dra bennak da vihanañ..." Difretañ avat n'eo ket oberiañ. Gwashoc'h a zo ivez : perak ren eamzer o klask titour kement den a zo enrollet er Strollad (un tech diharzus ennañ, a lavare) : daoust hag ur flattrer a vefe anezhañ neuze ?

Dilun 3 a viz Eost 1942

Deuet on endro da Roazhon.

Va c'hoar C. a zo aet da welout an dimezell Cécile hiziv (un amezegez kozh da bPol Gaignet ha prest bepred eveljust da glakenniñ diwar-benn an "emrener"-se eveljust).

En dro-mañ avat he deus klevet keleier diwar-benn Yuzevion. Div verc'hig a vefe bet tennet digant un dantour Yuzev e Roazhon (va c'hoar M.E. a zo bet prederiet gantañ ur wech, a gredan). En Anjers e vefe c'hoarvezet kemendall : div verc'hig a zo bet tennet digant ur vamm yuzevez pe, kentoc'h, a zlee bezañ lamet diganti rak ar vamm en em lazhas. Dre d'uez, o welout korf ar vaouez, o doa lezet an ofisourion (pe bolised alaman) ar vugale gant an tad.

Keloù he doa klevet ivez diwar-benn bombezadeg Sant-Malo. Braouac'hus ez eo bet a-hervez. Kalz tiez endro d'ar porzh a zo bet distrujet ; bugale o tistreiñ diouzh an traezh o doa kavet o zi diempret ha korfoù o zud drailhet el liorz.

M.C., bourc'hizez c'hall eus Gwaien, a zo tremenet du-mañ (koshaat a ra ha treutaat dre ma kosha). Ne gar ket kalz an Alamanned pe, kentoc'h, evel ma lavar ar "Voched". Un nebeut eus al loened loudour-se en em gave ganti entren : flae a oa ganto, ur spont, ha ken kleuk int eta ! Klevit ivez pebezh dispri o deus evelato evit tud ar vro : e Gwaien o devoa prenet re a amann ; petra a soñj doc'h e rejont gant an amann dreist-muzul-se ? Henn kas d'o zud en Alamagn dre ar post ? N'emaoc'h ket ganti. Lardañ hag eouliañ o binvioù, sed pezh a rejont, ha stlepel ar peurrest e. Beg-an-Trug (1) e-lec'h ma tiskarger stronk ha blodoù.

Munudoù all am eus gouezet a-benn ar fin diwar-benn degouezh ar Gall a oa dimezet gant ur Yuzevez. Pa oa deuet an Alamanned da gerc'hat he merc'hed he doa lavaret ar vamm ez ae da gerc'hat dilhad evito ; pa ne zeue ket endro e oa aet he gwaz da welout petra a c'hoarveze ganti ; kavet en doa anezhi astennet war leur ar gambr ; hag eñ da lavarout neuze neuze d'an ofisourion : sellit ! ta ouzh pezh hoc'h eus graet ! Hag ar re-mañ fromet holl o doa lezet ar vugale d'an tad.

Hervez a lavar M.C. e vez graet gisti eus ar merc'hed a vez skrapet evel-se ha nazied vihan eus ar baotred.

En dro-mañ eo e c'hellfe Meven Nordiern komz eus torfedoù dizemel ar sevenadur politikel, evel ma skriv e unan. Ha piv a gredo e zislavarout ?

Dimerc'her 5 a viz Eost 1942

D'ar beure-mañ ez on aet da weladenniñ an ao.

Andouard a-gevret gant Morvezen a felle dezhañ daskoriñ gwerzh ur c'houmanant en devoa gonezet da "Arvor" (2).

Chomet omp pell awalc'h gant Andouard. Diskouez a reas hemañ deomp e levraoueg a zo pinvidik ha liesseurt, dreist-holl avat oberennoù gouezelek brudet "An enezennad",

- (1) Beg-an-Trug a zo ur gornblegenn eus ar "Ganol" e Gwaien.
- (2) ARVOR a oa ur gazetenn sizhuniek e brezhoneg penn-da-benn. Renet e oa gant Andouard. Roparz Hemon a oa an diazeour anezhi.

"Ugent vloaz o kreskiñ" (1), kontadennoù MacPiarais ha skridoù aozerion iwerzhonek all moulet dre aked gouarnamant Iwerzhon ; unan anezho a denne danvez eus darvoudoù em-savadeg 1916 en doa kavet brav dispar hag en doa kroget da dreiñ. Ur rummad eus "Gwalarn" am boa merzet ivez war an astelloù, unan all eus "Stur" (moulet kaer kenaf ez eo) hag ar fin ar gelaouenn c'hallek "La vie intellectuelle".

E ser an droidigezh en doa boulc'het e lavare L. Andouard e oa pinvidik mor geriadur an iwerzhoneg ha diaes tre da dreiñ e brezhoneg. Evidon-me e kav din ez eo yezh pinvidik an hini a c'hell esteurel kealcioù liesseurt hag aroueziañ arsterioù niverus gant kalz pe nebeut a c'herioù hogen ne gredan ket ez eo a bouez gellout tennañ mad eus heñvelsterioù stank ; gant ur yezh skort evel ar galleg e c'heller dont a-benn da dalvezout un darn vras eus arsterioù ur skrid gresianek.

Diwar se e savas kaoz diwar-benn niver an iwerzhonegerion. War-dro tri-c'hant mil a oa anezho, eme Andouard ; ne oa ket kalz ; ne gave ket dezhañ ez afe niver ar ouezelegerion war vihanaat diwar neuze hogen diaes bras e oa kas ar yezh vroadel war-raok (hervez Per ar Rouz, er Skol-veur, hag eñ o venegiñ tezenn ar c'hembread Rhys, e kendac'hfe ar yezh da gilañ en abeg d'an divroerezh). Kalz tud avat a oar lenn ar yezh evelato, a glozas Andouard.

Emañ Iwerzhoniz en un enkadenn en arbenn ag ar brezel, a adkrogas Andouard. Bepred emañ o bro war var da vezañ aloubet ha bazhyevet gant ar broioù saoz ; ar re-mañ a c'hellfe kaout ezhomm a sevel arborzhioù war zouar Iwerzhon, lakaomp. Penaos avat e c'hellfe ur vroadig vihan a dri milion a dud en em zifenn a-enep da c'halloudoù bras divent ? Merkañ a ris n'o doa ket bet chañs Iwerzhoniz, dreist-holl e-keñver o yezh hogen ul lennegezh skedus o devoa savet a-hed ar c'hantvedoù.

Hag a-zivout an Emsav e Breizh : touellet e oa bet an Alamaned diwar-benn nerzh ha berzh an Emsav ha fur o doa kavet chom hep reiñ tamm frankiz da Vreizh, daoust dezho bezañ anvet ur gouarnour evit Breizh er penn-kentañ. Hogen spletusoc'h e oa evito gonit kenlabour ar Stad c'hall e Vichi. A-hend-all pet Alaman a ouie e oa ur vroad eus Breizh ?

Gwell e oa ivez e ve chomet Breizh hep Stad vrezhon. Ranket he defe ar Stad-se kas soudarded er reter ; gant se ne vefe ket bet brudet brav. Andouard, a-hend-all, ne oa ket gwellweler tamm ebet evit pezh a selle ouzh dazont Breizh. Ne oa ket echu ar brezel ; an Alamaned a c'helle

(1) Oberennoù poblek iwerzhonek savet gant iwerzhonegerion 'a-vihanik'. L. Andouard - evel Roparz Hemon betek fin ar brezel a grede e c'helled saveteiñ ar yezh dre ar yezh, dre skignañ levrioù e-tones ar bobl. Al levrioù iwerzhonek-se a zo ivez em levrac'haeg. O zalvoudegezh lennegezh a zo dister.

trec'hiñ eveljust hogen enebourion niverus ha galloudek o devoa - hag o faezhañ ne vefe ket c'hoari ; moarvat o deus an Alamaned jeneraled akuit ha gouiziek, a anavez o micher met kemant-se ne viro ket outo a vezañ diviet a-benn ar fin en ur brezel hir ha gwadek ; argadadennoù dibaouez o armeadoù er mare-mañ a chom difrouezh ha ne zegasont di-skoulm ebet.

Lakomp avat e ve trec'h an Alamaned, a gendalc'has Andouard ; ne oa ket sur tamm ebet e vefe lakast Breizh en he frankiz evit keloù se ; an dra-se a c'helle bezañ ; ne oa ket diarvar avat ; ha n'eus forzh penaos e vanfe dalc'hmat soudarded alaman e porzhioù evel Brest pe an Oriant, ar pezh a vefe chastreis evidomp.

Gant trec'h ar Saizon ne vefe ket gwell ar stad ganeomp, pell edo : distrujet e vefe an Emsav rag-eeun ha diardoù kaer. Ar yezh a vefe heskinet gwashoc'h eget biskoazh, hep mezh ebet ; ne vefe atreet netra deomp, dre gomz zoken...

Goude bezañ klevet ar gwallziouganoù-se ez is kuit gant L.M. "Penaos e vo dieubet Breizh ?" a c'houlennenn ouzh L. Andouard. Hemañ avat n'en doa ket respontet din. E gwir e kav din a-wechoù e vevan dre un huñvre, o c'houzout avat ne zihunin biken diouti rak ne zillezin ket ur stourm hag a ouzon ez eo reizh. Pegen ankenius ez eo bezañ an hini gwanañ, an hini gwasket, - n'eo ket hepken gant an nerzh war-eeun hogen gant gevier hon enebourion a zo trec'h d'hor gwirionez.

E-keñver trec'h an Alamaned pe ar Saizon e lavare din L.M. e ranker dibab an hini disterañ (evidomp) etre daou zroug...

Goude-se ez is d'ar Sez-kreiz. N. en doa c'hoant gwolout Yann Goulet ; eno e kavis an H. a c'houlennas diganin dont da gendalc'h ar Strollad e Gwened.

Diriaou 6 a viz Eost 1942

M.C. a zo ast kuit : awalc'h a sorc'hennoù hag a goñchennoù he deus dislonket evel-se. Dangas he deus ouzh ar Vretoned e gwirionez : bongorzed, garzed, mardoked kleuk a zo anezho, dic'houest a-hend-all da gaut an disterañ anaoudegezh-vat ouzh ar C'hallaoued o deus klasket diouezañ ha kelenn anezho ; ken diseven hag an Alamaned ez omp ha rak-se e vennomp bezañ ur ouenn vistri d'hon tro. Fellout a ra deomp rediñ ar Vretoned vat, ar re a gar Bro-C'hall, da zegemer o yezh e-lec'h ar galleg (pebezh torfed!) Gwechall, emezi, he doa klasket deskiñ brezhoneg evit evashaat gwelloc'h micherourezed al labouradeg ma oa ar verourez anezhi ; dizaliet e oa bet avat gant ur pout a berson en doa diskleriet dezhi :

"N'apprenez pas cette langue : c'est une langue trop grossière!" Lavaret he deus ouzhpenn d'am c'hoar N. e Sant-Jermen ne oa ket ar brezhoneg ur yezh peogwir n'oad staget da sevel yezhadurioù ha geriadurioù dezhañ nemet er c'hantved-mañ.

Ret eo bet din deskiñ dezhi e oa bet savet kentañ geriadur ar brezhoneg er XVvet kantved hag e oa bet reizhet ar yezh ouzhpenn ur c'hantved a-raok gant ar Gonideg. Ne verne, a-hend-all : ar brezhoneg nevez a zo ur yezh ijinet a vo lakaet da ren dre-holl e Breizh p'o devo an Alamanned astennet o beli war Europa a-bezh : pa ne c'hellor ket lakaat an alamaneg e vo graet gant ar brezhoneg en e lec'h !

Kaset e oa bet "Breiz ateo" dezhi a-raok ar brezel, met eveljust, he doa nac'het koumanantiñ. Va mamm avat a voe bamet : ne ouie ket e oa un emsavr urzhiet kent ar brezel.

Disadorn 15 a viz Eost 1942

Sizhunvezh dizarvoud : aet on d'ar c'hentelioù ha bep an amzer d'al lenndi da bleustriñ war bikol levr Lanson "Istor al lennegezh c'hallek". Amprestet em eus meur a levr : "Yezhadur istorel ar galleg", "Arz ar yezh-plaen" h.a. El lenndi em eus merzet A.E. diriaou. Digwener e oan aet da welout L.M. en e di : klañv e oa bet ar paour kaezh paotr e-doug ar sizhun, terzhienn gantañ, ha n'en doa ket gallet ober e vad eus ar pakad sigaretinier am boa degaset dezhañ a-benn ar fin. N'oa ket chañs momestra !

D'ar beure'nem boa ket gallet kavout skrid ar gentel a oa bet graet gant Dedeyan diwar-benn stumm-skrivañ Bossuet er "Maximes..." D'abardaez, p'en devoe Y. pourchaset din ur vouzellenn evit va marc'h-houarn e c'hellis kempenn va ardivink ha loc'hañ da Sant-Jermen.

Lidambrougadeg en endervezh. Ar person a lakaas kanañ "Reine de l'Arvor" o tont er-maez eus an iliz ha "Reine de France" dirak an ti dalc'het gant an Alamanned. Ar re-mañ, avat, dedennet gant un arvest ken livus ha ken dibaot, a zeredas war ar straed hag a dennas nuspel luc'hskeudenn, hep droukrañ ebet. Bro ar folklor eo Breizh ivez.

Dimerc'her 18 a viz Eost 1942

Gweladenn va eontr Herri a-gevret gant e vab en deizioù-mañ : deuet eo eñ ivez da glask bitailh war ar maez. Emañ o chom e-kichen Paris hag e vab, va c'henderv, a zo galleket krenn endev daoust ma oa e dad hag e vamm brezhonegerion a-vihanik.

Dezrevellet en deus deomp e avanturioù pa oa o tec'hout evel an holl dirak an Alamanned hag eñ mindrailhet gant ar c'hirri-nij (ar re italian avat a oa ar re drubardañ, emezañ, dre ma ne zisfizied ket awalc'h diouto en abeg d'o arouezlunioù triliy war o divaskell). Ouzh degouezhennoù suzhus en devoa bet tro da arvestiñ : un den chomet en ur c'hleuz da c'hortoz marv e wreg diframmet he brec'h diouti gant ur vombezenn tarzhet nepell alese. Erfin, goude bezañ aet betek Poatie e oa distroet en ur c'harr-samm alaman betek Paris.

N'eus bet tabut ebet diwar-benn Breizh. Plijet

eo bet o sellout ouzh va geriadur Vallee hag "Ar Daganiz" hogen re gozh evit deskiñ ez eo, emezañ.

Er mare-mañ sav ar c'hazetennoù o mouezh a-enep d'ar brudoù a zo o redek e-touez an dud hag a rofe da grediñ e vez disrannet dre heg bugale ar Yuzevion diouzh o zud. Hervez an hevelep kazetennoù ez eus bet "bodet" ur bern mat eus an amprevaned"-se ebarzh kampoù er 'gennva dieub' ; hogen bezit dinec'h : maget mat e vezont diouzh ma sotre ar strishadurioù, eveljust !

Diriaou 19 a viz Eost 1942

Ar Saizon o deus graet un arnod dilestrañ e Dieppe. Diouzh a zisplegont ez eo degouezhet pep tra dres evel m'o doa empennet ha rakwelet ; diskaret o deus 91 karr-nij alaman dre emgannoù aer, gwallaozet 100 all war zouar - ha graet prizonidi. A-hend-all o deus kollet 98 nijerez (112 hervez an Alamanned). An Alamanned, diouzh o zu, a gemenn o deus graet 1.500 prizoniad, distrujet holl girri-emgann an enebour, goueledet nuspel lestr-tarzher, lestr-ged herrek h.a.

En endervezh e oan aet da gavout an dantour. Em raok e oa ur vaez a gontas din ar gwall-dro a oa nevez c'hoarvezet ganti. O tistrediñ d'he rann di n'eus ket pellzo e oa bet taget gant ur soudard alaman a c'hortoze anezhi dirak he dor. Darc'havet en doa un taol dorn ganti ha laosket un tenn revolver pa oa kouezhet war al leur hanter semplet. Ar bolod en doa treuzet he javed hag a oa deuet er-maez e-biou d'he mell-gein. Prederiet mat e oa bet ha paret buan awalc'h. Douget he doa klemm dirak an Alamanned hag ar re-mañ o doa prometot ur pañsion dezhi rak hanter peluzet e oa chomet diwar he gloaz. A-hervez e vefe bet komeret evit unan all.

E "Levr di Breizh" em eus prenet kontadennoù Hamilton hag "Ervorennoù..." Kastelbrion. O tont d'ar gêr e kavis S. a oa fromet holl gant an dilestradeg. Bezit sur n'eo ket mui emrenerezh bremañ ; brrr... re zañjerus e teu da vezañ. Da zek eur hanter edon er gêr e Sant-Jermen. Echu e oa an abadenn skingomz saoz. A-hend-all, abaoe Tobrouk ez eus savet adarre istim d'am zad evit ar Saizon ha va mamm n'he deus ket mui ezhomm skandalat anezhañ.

Disul 22 a viz Eost 1942

An Alamanned a zo deuet endro eus Dieppe bleuniet holl o c'hirri evit aroueziañ o zrec'hadenn. Setu pezh a lavar va mamm ; n'ouzon ket digant piv he deus klevet ar c'heloù-se.

O selaou anezhi o komz e galleg e adkavan troioù-lavar brezhonek. C'hoarvezout a ra ganti ivez distagañ krennlavarioù en eilvezh Waden, hemañ da skouer (he lezvamm an hini eo a venege anezhañ, emezi) :

An huni na sent ket deuz ar stur  
deuz ar garreg a ray, sur.



Gerioù all a zeskan hag a notennan bep an amzer evel "dop"(?) a reer eus ur gaoteriad gant pesked hepken.

Disul 29 a viz Eost 1942

Aet on d'ur gouel aozet dirak ar c'hastell en tu all d'ar vourc'h, war hent ar porzh-houarn, evit ar brizonidi a-hervez. Tud e-leizh a oa o fourgasidi gant safar endro d'an teltennoù, un niver mat a Alamaned en o mesk, ofisourion vrokus a roe hanter-kant lur evit ur galon baper, paotred kaer o lavregoù feret mat hag o heuzoù lufirus a drelle daoulagad ar merc'hed. Evidon-me e enoeis awalc'h ha distreiñ a ris abred d'ar gêr.

Y. ha N. avat a oa chomet da werzhañ kalonoù paper roz. Evit echuiñ, a gontjont din, e oa bet aozet ur gorolladeg vras a voe klozet gant un holl bokadeg, pep kalon baper o klask he far kenniver ganti. Ma! Sikour a reer ar paour kaezh prizonidi evel ma c'heller.

Dimeurzh 31 a viz Eost 1942

Rouen a zo bet bombezhet gant an Amerikaned. A-hervez ne felle d'ar re-mañ tagañ nemet aozvaoù listri-spluj. Va zad avat en deus klevet e oa bet gwastet kêr gwashoc'h eget pa oa erruet an Alamaned.

Taeroc'h ha kreñvoc'h eo an emgannoù war-dro Stalingrad. Ar Saizon a anzav ez a war-raok an Alamaned. Met ne ra forzh, meneg a zo bet eus Verdun e sigur ar gêr-mañ.

Ar Marichal en deus graet gourc'hemennoù d'an Alamaned : d'an holl dud diuntuek ez eo anat mat e oa di-c'hoantek a-grenn an Alamaned pa oant o tizarbenn ar Saizon e Dieppe : ne felle dezho eveljust nemet difenn poblañs dincoaz Bro-C'hall a-enep da vorlaeron divorc'hed. Evel m' en deus lavaret ken brav ar Marichal : "evit skarzhañ douar Bro-C'hall diouzh pep loustoni" o deus stourmet ken taer.

A helebini ivez o deus graet Alamaned ha Gallaoued gourc'hemennoù da boblañs Dieppe: chomet eo disaouzan e-doug an emgannoù ; aet e vefe zoken war sikour an nijerion alaman diskaret pe ar soudarded alaman gloazet, mouget he defe an tangwalloù. Kemont-se a zo degemennet war an "Ouest-Eclair" e lizherennoù bras, evit brudañ mignoniezh an div vroad veur nevez - hag haelled diseurt an Alamaned hag o Führer en deus roet urzh kerkent da zieubiñ ar brizonidi diepat dalc'het bepred e kampoù an Alamagn. War ar marc'had en deus profet Stulpnagel dek milion da Ziepiñ evit dic'haouiñ kêriz eus an distruj kaset da benn en o madoù gant ar Saizon kriz ha na espernont na maouezed na bugale ! Diwar vremañ e anavezao an holl madelezh an Alamaned.

Ar C'hallaoued-dibikouzet-o-daoulagad (e Paris) a lamm gant al levenez. "Chañs hon eus bet," emezo :  
Nous l'avons, en dormant, Madame, échappé belle...  
Pebezh gwalenn e vefe bet evit Bro-C'hall bezañ

adarre un dachenn vrezel. Seurt rakwel a laka va mamm da brederiañ a-hend-all : hetif a ra an dilestradeg hag spouronet eo o soñjal er pezh a c'hoarvezo neuze.

Jean des Cognets a gendalc'h da skrivañ pen-nadoù teneraus war an "Ouest-Eclair" ; gwechall e rae diwar-benn ar 'vammvro vihar' (Breizh) hag ar 'vammvro vras' (Bro-C'hall) ; bremañ ez eo deuet Europa da vezañ ar 'vammvro vras' !

E ser afer Dieppe : marteze ez eo bet kerseet ar Saizon evelato gant emzalc'h ar boblañs rak aliet o deus d'an dud dre vras chom hep ober tra ebet pa zeuint da ziga-bestrañ Europa.

Bro-Vrazil a zo deuet tre er brezel, diwar levezon ar Stadoù Unanet emichañs.

Diriaou 3 a viz Gwengolo 1942

K., mignon tostañ da galon Yann hon eus klevet hiziv epad un eurvezh bennak o tisonkañ e gasoni ouzh an Alamaned (e vamm a zo o chom er vourc'h evit ehanou an hañv hag eñ a zo o paouez echuiñ e eil klas). Istorioù a bep seurt en deus dezrevellet evit skoudennañ krizder diseurt an Alamaned, peurgetket hini ur paotr yaouank barnet d'ar marv en Naoned evit bezañ treset ur groaz Loren war ur voger ; pa oad o sachañ anezhañ d'ar post evit bezañ fuzuilhet ez eo chomet semplet ; hag ur soudard da gemer e gontell d'e wadañ a-benn e zisemplañ ! N'ouzonket pelec'h en deus diskoachet an holl vunudoù-se.

Ur c'henderv en deus avat hag a zo a-du krenn gant an Alamaned (koulz hag e vamm a-hend-all) hag a zo dizenor an tiegezh ; o daou e azeulont Hitler ; ne lennont nemet kel-ouennoù alaman (n'eo ket diaes : evel an holl e reont) ; huñvre ar paotr a zo mont d'en em gannañ skoaz-ouzh-skoaz gant an Alamaned el "Légion antibolchevique" hogen, siwazh, n'en doa ket tizhet c'hoazh an oad rekis ; war a lavare e genderv en deus lamet ar c'hrusifi diouzh ar voger en e gambr ha lakaet skoudenn Hitler en e lec'h (1).

Aet on da Roazhon. Noziñ a rae pa ziraezis bemed an hanternoz. Eno avat e voen harzet gant daou bolis a zifourkas a-daol-trumm dirazon hag a gemennas din diskenn diwar varc'h-houarn : difennet e oa dont tre ebarzh Roazhon ; dija en doa ranket ur micherour em raok dont war e giz ; skijañ a ris kerkent hep lugudiñ pelloc'h : ne vefe ket ket yac'hus toullañ kaoz gant al laboused-se o vezañ - pergen - ma n'em boa plakenn varc'h-houarn ebet. Goude bezañ chomet en entremar epad ur pennad e lakais em penn klask dont tre e Roazhon dre

(1) E devoud e emouestlas ar paotr-se el "Légion..." pe er W.S.S. E Hitlerazeulerezh ne oa ket ken dibaoct-se. Klevet em eus anv eus ur plac'h a zouge bepred warni skoudenn ar Führer ! Ur wir gevridadegezh e oa.

un hent-treiz bennak. An hini a hedis am c'hasas da voulouard Verdun. O tremen dirak ti an ao. Legaud, va lojer kozh, e lez-is enova marc'h-houarn a-benn bezañ muioc'h distrob (al Legaud ne ouie ket dre benn a betra e oa berzet dont tre e kêr er mod-se : spierion saoz a glasked moarvat, a c'houlakae.) A-raok klask ober va zreiz betek va zi e gorre-kêr e ris va mennoz gweladenniñ L.M. a oa o chom nepell alese. Aet e oa L.M. da Gonk endro avat, ur wech echu e gleived, eme an it. Thomas.

War-lerc'h ar weladenn aner-se e skois war-du pont ar Bagoul, e penn straed Vrest : hogen kaeet e oa ar pont-se en daou du gant ar bolised c'hall vichiat giz nevez ; ne c'helled let dont tre e kêr, na dont er-maez. Ur yoc'h tud a oa kalzennet endro d'ar pont hag int o krozal hag oc'h en em waskañ a heligentañ, ma ranke ar bolised kilañ a-wechoù : ar re-mañ a oa ki-vioul awalc'h ha ne roent diskleriadur ebet. War a lavare an dud endro din, hiniennoù o doa gelllet tremen dre dreuzelloù ar skluz ; hogen lakaet e oa bet polised eno ivez ha war-lerc'h div c'hwitelladenn e oa bet tennet war ur paotr a glaske en em silañ dre eno, daoust d'o c'hemennoù groñs : ne c'hoarzh ket paotred an "Dispac'h broadel".

Tu a oa avat da dremen e pont ar Mision en ur ziskouez paperoù. Empennañ a ris tremen dre eno daoust ma ne oa ket reizh-reizh ar paperoù am boa (ur siell a vanke war va levrig studier). Evelato e ris berzh ha ne voen ket dalc'het gant ar bolised evit kelou-se : da li eur, noz teñval anezhi, e tiraerz ar gêr.

Antronoz e ouezis e oa bet diskuliet un irienn en Naoned.

Digwener 28 a viz Eost 1942

Aet on da gavout Yann Goulet. Ne ouien ket penaos ober evit mont da Wened. Hogen n'eo ket sur e vo graet ar c'hendalc'h er gêr-se dre m'emañ er riblennad verzet. Aliañ a ra din dont dimeurzh da welout Bourdon.

Disadorn 29 a viz Eost 1942

Distroet on da Sant-Jermen.

Disul 30 a viz Eost 1942

Abaoe maz eus bet embannet ul lezenn o verzañ kas amann dre ar post hon eus bet gweladennoù stank. War-lerc'h hini va contr H. setu an it. I., ur Flandrezadez, mignonez d'am moereb A. a zo deuet d'he zro da gerc'hat amann du-mañ. Houmañ a anavez un tiegezh alaman a oa o chom e Paris a-raok ar brezel endev ha keleier a glev eno gant an

(1) Bourdon a oa deuet da labourat evit an "Heure bretonne" d'ar mare-se. Ur galleg e oa ha dilezel a reas an Emsav war-lerc'h ar brezel.

dud. A-hervez eta e vefe lazhet tri pe bevar soudard alaman bemnoz e Paris. En eskemm e tiskarfe an Alamaned boutinelerion ha Yuzevion hep barn ebet. Dre vras avat, a lavare hor gweladennerez, e oa mantrus stad an tiegezhioù alaman : tri pe bevar mab hag ouzhpenn a veze lazhet en hevelep tiegezh. Gwall fromus e oa arvestiñ ouzh kimiad ar vibien o vont d'an talbenn, beuzet en o daerou hag oc'h adlavarout dalc'hmat : "Perak ez omp d'en em gannañ ?"

E ser divourzhadeg Dieppe e asuras e ouie an Alamaned en a-raok e oa prest ar Saozon d'ober un taol eno : rak-se e oa bet dizarbennet ken aes an argadenn-se ; n'oa ket bet dav zoken d'an Alamaned gervel o advagadoù.

Hervezi e kredfe an Alamaned e arnodo ar Saozon aozañ ur penn pont war ar c'hevandir, war-hed 250 kilometrad en dro-mañ. Pegoulz ? Se ne oa ket diskuliet, na war beseurt aod e vefe graet an dilestradeg, kennebeut.

Goude bezañ kontet deomp kemont-se holl ha kalz traoù all ouzhpenn e kuitas an I. douar Breizh dre an tren, da seizh eur ugent - gant hec'h amann.

Dimeurzh lañ a viz Gwengolo 1942

Adarre emae o chom e Roazhon : deuet on dreist-holl evit kendalc'h ar Strollad. N. he doa c'hoant bras dont ganin hogen ret eo bet dezhi chome Sant-Jermen.

Dimeurzh her 2 a viz Gwengolo 1942

N'em eus ket kalz kalon da labourat evit va arnodenn er mare-mañ : ar sonadouriezh c'hresianek n'eo ket gwall entanus ha sikridoù Boileau - an holl a vo ali ganin - n'eo ket un ebat o lenn.

Evit en em zigoll em eus lennet "Eñvorennoù..." Kastelbrien hag en endervezh on aet d'al lenni e-lec'h em eus goulennet un dastumad eus "Kloc'hdi Breiz" a voe embannet en Oriant e derou ar c'hantved. Rost e voe din ur pakad kel- acouennoù bras awalc'h o ment, war baper tanav ha 'deust melen gant an oad'. Ar pezh a blijas din ar muiañ e oa ar bruderezh evit ar c'hafe-mañ, ar sikorea-se, al likorioù-hont a gaver e derou hag e dibenn pep niverenn, evel ebarzh "Dihunamb".

E galleg eo skrivet ar gelaouenn nemet bep an amez e c'heller lenn ur varzhoneg bennak e brezhoneg (gant an droidigezh eveljust : ret eo bezañ lennet gant an holl.)

Er gentañ niverenn e krogis enni e oa anv eus emsavadeg Fask en Iwerzhon : trueziñ a raed ouzh ar paour kaezh tud trelatet-se e oa bet broudet, paeet hag armet gant an Alamaned. Ha menegiñ a raed komzoù Kuno Meyer, ar c'heltiegour alaman : "Dhia saor Eireann agus Almáin" (e-giz-se e oant skrivet, a gav din atav). Gwell a se, a skrive ar gelaouenn, e oa 250.000 Iwerzhonad feal evel chas o c'hortoz doujus ha fidus ma ve profet dezho an "Home rule" ha prest da zigoll trubarderezh un toulladig diskianted !

A-hend-all ne c'heller ket bezañ patriotoc'h eget Madeleine Desroseaux (setu un anv-pluenn varzhonius avat!) hag ouzhpenn pebezh empenn strujus : ennañ e tiwan ar barzhonegoù evel bokedoù-laezh dindan heol an nevez-amzer; barrek eo da leuniañ un niverenn penn-da-benn eus ar gelaouenn gant gwerzennoù brogar - e galleg evel dres.

Arabat eo ober goap eus an daou bried fur-se - rak he gwaz a zo koulz skrivagner hag hi - unanet ken tener e karantez al lennegezh hag ar varzhoniezh : resevet o deus o daou ar vedalenn "Encouragement au bien" ; a-drugarez dezho he deus bleuniet puilh al lennegezh c'hallek e Breizh.

Koulskoude n'eo ket dianav dezho ar garantez evit Breizh hag evit Keltia ivez hogen diavaezet en un doare ken rannvroel m'am laka da heugañ. Kemant-se ne vir ket ouzh an daou lennegezh-mañ a vezañ tud hegarat ha seven ; ne glas-kont ket divrudañ labour ar re all ; ne flemmont den ebet - zoken an disrannerion daoust ma euzhont ouzh o mennadoù a-hend-all ; digor eo pajennoù ar gelaouenn d'an holl, dreist-holl eveljust da gCamille Le Mercier d'Erm (ur varzhoneg c'hallek koantik awalc'h diwar bluenn hemañ a zo moulet war ar gelaouenn-mañ).

Gwall zisheñvel eo "Kloc'hdi Breiz" diouzh "Brittia" em eus prenet un dastumad anezhi en deizioù-mañ e ti Plihon.

Diriaou 3 a viz Gwengolo 1942

Aet on adarre d'al lenndi ; n'em eus ket kavet "Crise de la conscience européenne" gant Hazard hag ul levr galleg all diwar-benn Rabelais a felle din lenn ivez. Neuze on en em daolet ebarzh "Kloc'hdi Breiz" ; e gwir, peadra a a zo da lenn enni.

Ar c'hirri-nij alaman a stag adarre da c'hour-nijal a-us da gêr Roazhon : kredet e vefe e spinont begoù tourioù an ilizoù, ken izel e tremenont, hep arsav, a-us deomp. Ehanet o deus un tammig koulskoude abaoe dec'h da noz.

A-wechoù e kav din emañ en ur c'hamp soudarded : ne glever nemet soroc'h ar mindrailherezed, strakadennoù ar fuzuilhoù hag ivez taran ar c'hanolioù o tont endro a vareadoù...

D'abardaez on aet da Sant-Jermen, War an "Ouest-Eclair" hiziv ez eus moulet pennadoù hir ha keuzlet diwar-benn sotoniar O'hallaoued a sent ouzh gerioù-stur Lunden. Padal, e-keñver soton, ez a ar maout gant ar gazetenn-mañ, a soñj din : eus ur brezegenn bet distaget er "Bleun-Brug" gant n'ouzoù peseurt gonaoueg - pe unan a oa c'hwenn en e loeroù ha na venne da briz ebet bezañ kemeret evit un "otonomist"-n'en deus meneget nemet al lavarenn -mañ : "Comme l'a si bien dit Monsieur le Chanoine : dans l'unité parfaite de la France..."

Disadorn 5 a viz Gwengolo 1942

Neb en deus amann en hon amzer a zo un den a bouez, un den azaouezus ha klianted c-leizh a zeu d'e weladenniñ ha d'e gehelañ. En dro-mañ setu hor c'heniterv J. o tegouezhout : distreiñ a rae diouzh Gwaien e-lec'h e oa bet o kerc'hat he mab hemañ a oa o vevañ eno abaoe 1939. Da c'hwec'h eur avat, goude bezañ renet an endervezh o lenn "Kloc'hdi Breiz" , e rankis sakañ tizh war va marc'h-houarn betek Sant-Jermen da gerc'hat liñserioù ha distreiñ kerker betek Roazhon...

Disul 6 a viz Gwengolo 1942

Kendalc'h ar Strollad. Goude bezañ chomet da lenn niverennoù kozh eus GWALARN betek dek eur nemet kard e oan diskennet betek leurgêr ar maerdi. Kalz tud a oa bodet endev dirak ar c'hoariva ; an darn-vuiañ anezho avat n'ana-vezen ket nemet un nebeudig a vorzis tro-aze : Kaeroù, Guiey-se (peuzdall eo a-benn bremañ, 'm eus aon) ; J.M. (deuet eo endro da Roazhon abaoe div sizhun).

Dorioù raksal ar c'hoariva a oa diwallet gant izili eus ar "Bagadoù-stourm" en unvanwisk, bannieloù ganto; pevar anezho, rampet o divesker un disterañ, o daouarn adreñv o c'hein, a rae ged en ur sellout balc'h ouzh an dud. Ne oa ket kalz a gëriz war al leurgêr ha ne glevis eta hini ebet oc'h ober addisplegoù d'an arvest diseurt-mañ.

Da zek eur pemp e erruas L.M. en unvanwisk stourmer ivez, houzoù h.a. Mall a oa warnañ avat ha ne c'hell- lis ket divizout gantañ.

Da zek eur ha kard e kemennas ar vombard deomp e oa poent dont ebarzh ha da zek eur hanter e krogas an dalc'h goude ma voe deuet izili ar c'huzul-kreiz hag ar c'huzul-dreist da gemer lec'h war ar renkad kentañ en ur zilojañ un itron gozh azaouezus (an itron a SantPer marteze?) Ne en em gave div renkad war-lerc'h, gant dilouridi an Il-ha-Gwinun.

An embanner a roas deomp da c'houzout damc'houde e brezhoneg hag e galleg e komzfe ar Gaonac'h diwar-benn kudenñ an arc'hant da gentañ. Hemañ a zisplegas dreist-holl penaos e oa kresket ar mizoù abaoe ma oa deuet kertri war ar paper ; diskuliañ a reas e veze dispignet meur a vilion bep bloaz (ur milion evit ar gazetenn-pourgetket) ; betek neuze avat n'o doa dlo ebet, dreist-holl a-drugarez d'an donezoù stank hag ivez d'an ampresterezh : hemañ a oa un doare ampresterezh a-berzh-stad o vezañ maz eo gwarantet war ar Stad vrezhon a zo da sevel.

War e lerc'h e teuas Kerwerc'hez (un den postek, boud e vouezh, talfasek e zremm un disterañ) da gomz deomp eus KEVAR ("Kevrenn an arboellerezh"). Ienn a reas deomp eta un danevellskrid diwar-benn obererezh KEVAR. Sec'h e oa an danvez hogen gant komzoù bouilh ha fentus bep an amzer e ouezas ar

ar prezeger buhezekaat an destenn grin-se ; fraezh e komze a-hend-all, hep balbouzat na termal, dreist-holl pa echuas e zisplegadenn e brezhoneg (1).

Bourdon a gomzas en e c'houde a oa ivez ur prezeger mat, evitañ d'ober marteze re a ardoù hag a jestroù a-greiz divegañ e gaoz. Eus danvez e brezegenn avat n'eus ket kalz da zero'hel koun : dezrevell a reas penaos e oa kresket ar Strollad, penaos e oa deuet da vezañ ur galloud, penaos e teufe an trec'h ganeomp ; daoust m'o doa klasket ar C'hallaoued hor skoilhañ dre virout ouzhimp a vont d' ober hor c'hendalc'h e Gwened, emezañ, o doa ranket pourchas deomp 300 gwele e Roazhon ha prestañ deomp ar c'hoariva, e-kreiz kêrbenn Breizh, hanter-kant kammed diouzh kustod goullo an delwenn distrujet, mezh ar vro (stlakadeg-daouarn epad pemp munutenn) ; Pol Gaignet a gomzo evel henn d'abar-daez hag a zastumo an hevelep stlakadeg-daouarn.

Klozet e voe dalc'h ar beure dre un displegadeg eus dek stourmer en unvanisk o leviata war al leurenn diouzh gourc'hemennoù graet e brezhoneg.

Ha ni er-maez. Tremen a rejomp ur wech c'hoazh dirak paotred ar "Bagadoù" sonn gant o bannieloù hag o gitonoù. War al leurgêr avat e chome atav ken stank ar gendalc'hidi, hag int oc'h ober addisplegoù d'ar prezegennoù o devoa klevet. Hiniennoù avat a oa drouklaouen a-grenn, brouzet zoken, evel Debeauvais hag a adlavare bepred : "Me ' zo ' kounnar!" Readra a oa ivez da vont e kounnar: dievezh awalc'h e oa bet Bourdon evit diskleriañ ne oa "Breiz atao" nemet ur paour kaezh kelaouennig dister, hep levezon, tra ma oa an H.B. ur gazetenn vras lennet gant an holl. Rak, a-hervez, ne oa "Breiz atao" gouest d'ober nemet kunujañ ar C'hallaoued ha Bro-C'hall ha dre se n'he devoa eta levezon ebet war ar vro. Lavarout kement-se a oa, eveljust, lavarout sotonioù.

E-keit-se avat e oa erruet ar "Frañsisted" da werzhañ o zammig kazetenn ha da zaeañ ac'hanomp moarvat (n'oant ket gwall hardizh koulskoude). Chom a raent war ar riblenn-straed o c'harminñ (ket re uhel evelato) : "Demandez le Franciste..." Da gentañ e oa diseblant ar vroadelourion ken na zegouezhas Yann Goulet en unvanisk da gentelhiñ unan eus ar werzherion ha d'e bediñ da skarzhañ ar blasenn; hag eñ krog e brec'h ar paotr d'ober un tamm ambroug dezhañ. N'ouzon ket dres petra a c'hoarvezas goude nemet ur serr-lagad war-lerc'h e savas ur veskadeg taer hanter-kant metrad diouzhin ; klevout a ris, hep o intent, kunujennoù. Denesaat a ris da welout petra a c'hoarveze ; a-greiz-holl e nijas ur pakad kazetennoù er vann ; pa voen degouezhet war lec'h ar stourmadeg e kavis ar c'hazetennoù dichefrantet ha drailhañ a stlabez war al leur. Kadourion vBuccard o doa bet lamm hag a oa o pellaat toutek awalc'h. D'ar c'houlz-se avat e oa de-c'haloupet servijerion an Urzh Nevez eus o lochenn er maerdi

(1) Kerwerc'hez a oa, a gredan, ur Breizh-uhelad. Desket en doa mat brezhoneg hag embann a reas er bloaz war-lerc'h ar romant-polis "En ur rambreal". E 1941 en devoa embannet e eñvor- ennoù brezel en H.B. Steuziañ a reas a-grenn war-lerc'h ar brezel.

da lakaat un tammig urzh. Hogen n'oa ket mui ezhomme anezho: an tousmac'h a oa aet war sioulaat. Kalz a dud avat a oa c'hoazh o c'hortoz dibenn an arvest (Alamaned dreist-holl a oa o c'henaouegii dre aze) hag int dudiet bras : evit ur wech e oa ar sirk war ar straed ha ne oa ket dav dezho paeañ o skodenn ; c'hoarzhin a raent o welout e pake paotred vBuccard ur roustad a zoare. Da glozadur ar pezh-c'hoari e voe kaset ur paotr d'ar post-gward ; da gentañ e kave din e oa unan eus hor re hogen difaziet e voen : ur Buccardad ne oa ken ; ni a oa re niverus ivez.

A-hend-all ne voe ket kollet kazetennoù ar Frañsisted : ur vaouezig kozh a zeuas da zastum en he zavañjer atredoù an emgann - d'ober tan moarvat rak dibaot eo ar paper er mare-mañ hag arabat eo e foraññ.

War-lerc'h an darvoudenn-se e stagas ar warded polis da vale en hon touez, pezh a oa dispiljus awalc'h. Ne gredjont ket avat skignañ ac'hanomp : soñj o doa ivez marteze eus pezh a oa c'hoarvezet gant o c'henvreudeur e Sant-Brieg n'eus ket pellzo (1).

Goude debriñ va unan er gêr e tistrois war ar blasenn da deir eur nemet dek ; edo ar 'stourmerion' o sevel gward bepred dirak ar c'hoariva gant o bannieloù. O tegouezhout war ar blasenn e klevis tud oc'h en em c'houlenn pe-seurt bannieloù a oa ganto ; ar Vretoned n'anavezont ket c'hoazh banniel o bro !

Da deir eur ha kard e voe sonet ar vombard ; ha ni da zont tre. Kanet e voe an "Dalc'h soñj" gant an uhel-gomzer hag adkregiñ a reas ar prezegennoù. Da gentañ e komzas ar Gaonac'h diwar-benn "Breizh hag Europa" : kozh koñchennoù gant Kastelbrien, Renan hag Aristid Briand ; ar Vrezhoned ne oant ket sot pitilh, emezañ ; ken barrek hag ar pobloù arall e oant ; ul lec'h a bouez e buhez speredel Europa war-c'hoazh a c'hellent kaout ; kement-se a ouzomp a bell zo. Hogen perak n'en deus ket eñ e unan studiet muioc'h ar brezhoneg : fazioù kemmadur ha kevreadurezh a rae (oc'h implij-out "ma" e-lec'h "ha" er goulenn ameeun). Evelkent, brezhoneg a zeus gentañ. Ne blijas ket din muioc'h prezegenn Yann Goulet (feuls bepred evel boaz). Diouzh e glevout e varve an Alamaned hag Europiz yaouank all evit saveteiñ ar sevenadurezh ha distrujañ ar Volchevikiezh. Kavout a ra din avat en em gannont hepken evito o unan. E gwir n'oa ket dedennet tre gant prezegerezh Y.G. Re drivilius eo : ma rafen-me ur brezegenn e kav din e vefen douget muioc'h da farsal eget da skrijal evel ma ra. Moarvat eo kiriek da drivlierezh Yann Goulet ar feiz virvidik a entan anezhañ. Ne oa ket ar Vrezhoned tud a zilez, a lavare ; krediñ a raent e rofe Doue an trec'h dezho ; hag e klozas e brezegenn - a oa hir awalc'h hag hop

(1) N'em eus ket mui soñj eus an darvoudenn a zo damveneged amañ.

steuenn resis - o venegiñ Yann-Ber Kalloc'h hag o c'harmañ :  
"O Doue, ro deomp an trec'h!"

Muioc'h difrom e voe prezegenn Bol Gaignet, ar  
Roazonad, muioc'h gouestlet d'ar preder ivez. Displegañ a  
reas da gentañ petra oa, d'e veno, anien ar spered gall. Un  
elfenn a wirionez a oa er pezh a lavare hogen kreidiñ a ra  
din ivez ez eus tu da gavout abeg e meur a geal a oa estaol-  
et gantañ rak e Bro-Spagn hag e Bro-Saoz ez eus bet ivez  
kêrbennoù o kreizenniñ holl vuhez ar vro. A-hend-all e klas-  
kas Pol Gaignet ivez dic'haouiñ Breizhataviz kozh evit an  
dismegañs a oa bet graet dezho da veure : ul labour meur o  
doa kaset da benn Debeauvais hag e geneiled a-raok ar brezel.

Remont Delaporte a gomzas da ziwezhañ. E brezho-  
neg da gentañ : diwezhatoc'h, emezañ, ne rafed nemet gant ar  
brezhoneg e seurt kendalc'hioù ; evit saveteiñ ar yezh hag  
ar sevenadur e felle deomp sevel ar Stad vrezhon ; ret e oa  
diskouez d'an estrenion e ouiep hor yezh (ur Flamank a oa  
er sal ; kevarc'het e voe gant an dud ; brezhoneg mat a gom-  
ze).

E galleg e prezegas Delaporte diwar-benn an  
unvaniezh ; an unvaniezh hepken a c'helle hor saveteiñ ; en  
hon touez edo ar riskl ; n'edo ket en diavaez. Arabat e oa  
tamall d'an H.B. bezañ re glouar : ar reolerezh-skridoù  
a-berzh-stad a oa kiriek da se ; a-hend-all ne c'helle ket  
ar Strollad sammañ atebegzh pennadoù feuls ha na oant ket  
sinet zoken. Ar Strollad a chome broadel hogen prest e oa  
d'en em glevout gant ar gouarnamant gall gant ma asantfe  
da reiñ he gwirioù da Vreizh.

Da c'hwec'h eur e oa echu an abadenn. Chom a  
ris ur frapad war ar blasenn da vale e-touez ar gendalc'hidi ;  
kalz a vrezhoneg a veze klevet ganto, muioc'h eget am biñje  
kredet. Youc'het e voe da R. Delaporte pa zeuas er-maez eus  
ar sal da gevarc'hiñ an dud. Roazoniz hag Alamaned a oa  
ivez o tisloagal ouzh paotred ar "Bagadoù..." (ur folklor  
diseurt ha dic'hortoz, e gwirionez.) An darn-vuiañ eus Roazh-  
oniz a oa a-du, a gav din, nemet ur wrac'h hanter vezv a  
yalbouze dizehan : "Mais on n'apprend pas le breton à Rennes,  
Monsieur!"

Ret eo din notañ ivez e oa bet kinklet brav  
kenañ sal ar c'hendalc'h : goloet e oa al leurenn gant al  
livioù broadel, gant un triskell flamm e-kreiz.

P'edon o prientiñ mont d'ar gêr e kejis gant  
an Helloko a oa o paouez kimiadiñ diouzh ur paotr all ha n'  
anavezen ket ; goulenn a reas ouzhin ur wech ouzhpenn pegoulz  
e vefe echu va fennad. Prometañ a ris anezhañ evit kreiz  
miz Here met ne gredan ket em be sirlivet anezhañ tamm ebet  
a-benn neuze.

Da seizh eur hanter edo degouezhet e Sant-  
Jermen.

Dimeurzh 8 a viz Gwengolo 1942

Pleustret em eus war ar gevreadurezh c'hres-  
ianek. Etre 4 eur ha 6 eur em eus braslennet niverennoù eus  
"Klouchdi Breizh" el lenndi.

Goude-se ez is da zaskoriñ da vM. levrioù am  
boa amprestet digantañ ur pennad amzer zo.

War-lerc'h eskemm un nebeut geriennoù diwar-  
benn al levrioù e oa o lenn e c'houlennas ouzhin petra oa  
va mennoz diwar-benn ar brezel. Divarc'het un disterañ gant  
e aters trumm e eilgeriis ne ouien dare petra soñjal nemet  
e vefe ur gounid a bouez evit an Alamaned aloubiñ Stalingrad  
ha puñsoù tircoul ar C'haokaz, lakaet e teufent a-benn. Hogen  
anzav a raen ne vefe ket echu ar brezel evit se. E veno e oa  
ivez ; kavout a rae dezhañ o doa an Alamaned 70% a chafisoù  
da c'hounit ar brezel pe da gaout an tu-kreiz ennañ da vihan-  
añ hogen kement-se ne oa ket diarvar. Bez e rankemp eta degem-  
er e oa gouest ar Saozon hag o c'hevredidi da gemer lañs  
endro ha da gaout an trec'h d'o zro. Ne oa ket sur e klaskfe  
ar re-mañ o unan diskar an Emsav ; eveljust, in abstracto,  
aesoc'h e vefe bet un trec'h eus an Alamaned evidomp.

Petra a soñje diwar-benn ar c'hendalc'h ? Brav  
o oa bet moarvat. Pol Gaignet an hini eo a gomze ar flourañ ;  
hemañ, a-hend-all, a oa unan eus paotred speredekañ ar Strol-  
lad hogen fauket e oa bet ivez gant prezegenn Yann Goulet,  
gant an danvez anezhi atav rak ne rae ket forzh eus ar stumm ;  
re bell e oa aet Yann Goulet, a gave dezhañ. Estlammañ ouzh  
kalonegezh "Europiz" ? Lakaomp : an holl soudarded a vez kal-  
onek. Saveteiñ ar sevenadurezh ? Ur mennad a oa moarvat del-  
lezek a zoujañs hogen kement-se holl, a-benn ar fin, ne oa  
nemet lennegezh vrudañ an Alamaned. M. a gave dezhañ ne oa  
ket dav deomp sammañ politikerezh ar fagourion ; e-touez ar  
voutinelerion e Konk, da skouer, e oa tud vat hag a dalvoud-  
egezh, koulz ha n'eus forzh peseurt fagour. N'hon eus ket da  
gehelañ ar gouarnerezh-mañ-gouarnerezh hogen da saveteiñ hor  
bro. Me eo henn lavar hogen e veno e oa ivez. Ne gare ket  
muioc'h an Alamaned eget ar re all ; betek neuze a-hend-all  
n'o doa graet ar re-mañ netra evit Breizh. N'en doa ket muioc'h  
a c'hoant da vont da vervel evit an Alamaned hag "Europa"

eget gwechall d'en em gannañ gant ar C'hallaoued evit ar Frankiz,  
hini hor mistri, evel dres. M'en doa stourmet evit frankiz e  
vro e oa, a-douez traoù all, evit ma c'hellfe e bobl chom hep  
rankout skuilhañ he gwad evit an estren. Ar gwir-se hor boa  
da gaout peogwir e oamp Brezhoned ha n'eo ket Gallaoued - ha  
netra ken, evel ma verkis dezhañ ; evit ur speredolezh bennak  
o ro unan e vuhez, ar voutinelerion evel ar re all : evit ar  
reizhded e-keñver an dud vunut e stourmont, da skouer, hogen  
sot nay e vefe en em lakaat war var da vezañ lazhet evit mont  
diouzh ur riskl all da vezañ lazhet ; evit ar spered e stourmer  
atav - pe neuze ne stourmer ket, nemet e ve gwell ar marv eget  
ar poanioù a c'houzañver. Kadarnded ha nerzh an dic'hoanag avat

a gouezh buan en o foull. An emsavadegoù deuet diwar an dic'hoanag, evel hini 1675 e Breizh, a zo bet faezhet diouzhtu.

Evelkent, ma vije bet roet ar frankiz da Vreizh gant an Alamaned war an diviz-mañ : en em gannañ ganto evit Europa nevez, e vefe aet a-du gant ar re-mañ. Ur wech savet ar Stad vrezhon a-drugarez d'o aberzh, ur wech krouet dreist-holl ur Skol-veur vrezhonek - awalc'h a dud hon eus evit henn ober, emezañ - e vefe bet tu da gelenn ha da sklerijen-nañ hor pobl. Lakaet avat e vefe c'hwitet striv an Alamaned da sevel un dreist-stad en Europa he defe bet amzer ar Stad vrezhon da stummañ rumoù Brezhoned yaouank emskiantek ha diwar an had-se e vefe diwanet un emsav nevez nerzhus a-benn ur pennad amzer.

Seurt kudenn empennet gant va mignon a zo e gwirionez avat, skouer ar gudenn bolitikel difetis. Pe ez eo an Emsav ken gwan ma rank kaout sikour an estren evit sevel ar Stad vroadel; d'ar mare-se avat ez eo diaes dezhañ en arbenn eus e wanded end-eeun sevel marc'had gant nep estren; pe ez eo kreñv awalc'h an emsav; neuze avat n'en deus ken ezhomm eus an estren kennebeut.

A-hend-all, kavout a ra din ivez ez eo gwell e ve chomet an traoù evel m'emaint. Re risklus e oa evit Breizh kas he dibab a vroadelourion da vervel e kompezennoù ar reter evit ur vro ha na oa ket sur da gaout an trec'h. Perak bezañ touellet gant bruderezh an Alamaned : ar re-mañ a asur e fell dezho diskar an arc'hantveliezh, da skouer; hogen ma tiazont en he lec'h an nerzhveliezh daoust ha gwell e vo ar stal gant Europa? Moarvat o deus dic'haouet broioù zo hogen pa glote kement-se gant o mad-int; n'eo ket evit Europa e stourmont hogen evit un Europa dindan o beli. O brezel n'eo ket renet gant tud hogen gant soudarded, polised h.a. ha n'o deus ken preder nemet tizhout o fal.

Arabat azeuliñ broad vour ebet : n'eus ket unan hag a vefe didamall (ne gomzan ket eus an dud a zo koulz e pep bro hogen eus ar re a zo e penn ar stad hag o deus lakaet en o soñj sevel pe virout un impalaeriezh, dre an nerzh pe ar gwidre, en anv ar sevenadurezh !) Breizh avat n'he deus c'hoant beli ebet; dav eo dezhi eta chom digas ouzh an impalaeriezhoù, klask tennañ diouzhtu hini pe hini ar pezh a vad a c'hell degas dezhi, hep en em douellañ evit se diwar-benn gwir natur an impalaeriezhoù-se nag an torfedoù a c'hellont seveniñ.

Kenderc'hel a rejomp da vrentaat. E ser an ober gant an nerzh. Ma vije savet dispac'h e Breizh e derou ar brezel-mañ pe diouzhtu war-lerc'h an arsav-brezel, moarvat en dije asantet da gemer perzh ennañ; hiziv c'hoazh, ma vefe goulnnet digantañ dont d'en em gannañ ez afe hep termal. Kreñv a zo tenn hogen goude ez ankounac'haer; boazañ a reer; evel ma lavaro meur a wech goude n'eo ket kalon a zo ret kaout

evit mont da zispac'her : awalc'h eo bezañ birvilhet, trelatet zoken; lazhet eur hag anvet den-meur; ar rummadoù yaouank a vo entanet gant hevelep skouer; hogen peseurt ster ha talvoudegezh en deus hor marv ma n'hon eus ket asantet dezhañ en a-raok? Piv avat a ya d'en em gannañ ma n'eo ket gant ar spi da zreistvevañ d'e drec'h?

Perak e komze va c'hamalad evel-se? Abarzh pell henn gouezis. C'hwitet en doa gant e arnodennoù. N'en doa ket divizet c'hoazh avat pezh a rafe er bloaz war-lerc'h: pe kemer stal e dad e Konk pe dremen c'hoazh e arnodennoù. Nomet e oa bet kinniget dezhañ ivez dont da labourat er Strollad; ober war-dro ar yaouankizoù, evel Yann Goulet; mennoziou en doa, da skouer, diwar-benn embregerezh ar yaouankiz. Da seveniñ ar gefridi-se avat e ranke dilezel ar vicher en òfe bet e Konk. Evit e gadarnaat e lavare Y.G. dezhañ en doa graet komendall : dilezet en doa ivez e vicher a-benn en em ouestlañ klok d'ar Strollad ha d'ar vro; heñvel e oa evit R.D. "Se a zo gwir," a anzave va c'hamalad. Hogen ne oa ket ar memes kont gantañ rak o vont da zimeziñ edo ha ne gave ket dezhañ e c'hellfe aes skoulmañ ganti ur wech ma vefe deuet kresken tiegezh gant ar govr a l. 30 lur a oa kinniget gant ar Strollad; broadelourez e oa e wreg hogen koazhañ a rafe he grad en deiz ma vefe berr an arc'hant ganti. Pe neuze chom hep dimeziñ : en em gendaoniñ d'an digenvez e oa rak e dud ne oant ket a-du gant e vennoziou; hep kontañ ar marv er penn diwezhañ rak un dispac'h a c'helle tarzhañ un deiz, pe ar Saizon o tont...

Ne c'helled ket goulenn digantañ un aberzh re griz; ne oa nag ur sant nag un den-meur; en em skuizhet en doa ivez o Klask kendrec'hiñ tud aheurtet en aner a-grenn. Dre ma koshae e wela sklaeroc'h an traoù e Breizh. Evit ar poent e vefe un dispac'h dic'hounid er Vro-mañ; d'ar muiañ e c'hellfed dastum 500 den (awalc'h e vefe evit difenn an emsav ma klaskfed henn diskar dre an nerzh : 70 stourmar a oa bodet epad ar c'hendalc'h. Hogen, evel ma lavare va mignon, d'ober petra engouestlañ tud a grede e oa mat sevel ur Stad e Breizh hep gouzout peseurt ster ha talvoudegezh a c'helle kaout hevelep stad; gred ar re-se ne badfe ket pell; eus tud skiantek ha poellek hor boa ezhomm da gantañ ha n'eo ket eus pennoù avelet a rafe politikerezh evel ar Frañsisted ha re all a ya eus ur strollad degile hep gouzout petra a fell dezho (abeg am eus da gomz eus ar re-se peogwir e anavezall o zro-spered). An ober sevenadurel a oa eta an hini talvoudusañ; ret e oa kelenn hor pobl ha reiñ deskadurezh dezhi tamm ha tamm. En deiz ma vo awalc'h a vrientinon vrezhon e Breizh, brientinon en em c'hraet o unan, e teuy an trec'h ganeomp. Hemañ oa mennoz Roparz Hemon ha poellek tre e oa. Ar Stad a ranke bezañ savet avat ma felle deomp e teufe ar werin da heul. Ret eo lavarout ouzhpenn n'eus bet ensellet biskoazh ha gallus pe ret e oa ober gant an nerzh nemet en

abeg da wall-stad <sup>in brezhoneg</sup> a c'houlenn un diskoulm mallus ha na c'hell bezañ pourchaset nemet gant ar Stad vroadel. An divyezhegezh a vefe aotreet deomp - er gwellañ degouezh - gant ar C'hallaoued ne c'hellfe ket mirout ouzh ar yezh a vervel.

Neuze e chomfe moarvat e Konk. Du-se e rafe c'hoazh politikerezh hogen ne rafe ket kement hag amañ ; harp a rofe dreist-holl d'an emsav sevenadurel ; eveljust ne baouezfe biken a vezañ broadelour : dic'hallus krenn e oa - hag henn krediñ a ran. Pasianted a ranker kaout evit saveteiñ ur vro ; kemmañ mennozioù an dud a rankemp a-raok diazezañ ar stad. Ur stad avat ne saver ket en un devezh ; nebutoc'h c'hoazh ur vroad.

Ha soñjal a raen o tont tre e ti-debriñ an "Unvaniezh" e oa ar gwir gant va c'hamalad hag e oa poellek e vennozioù. Tonket eo da bep hini ac'hanomp fallgaloniñ d'ur mare - gwell a se pa n'eo ket an digalon trec'h deomp penn-da-benn. An arvar a sav deiz pe zeiz e kalon pep stourmer en deus kredet d'ur mare en doa ur gefridi da seveniñ, ur gefridi a bouez awalc'h evit goulenn e vuhez da gentañ hag e varv war-lerc'h d'iozh ret. Hogen pere a zo galvet e gwirionez ? Ha piv a zegemer ar galv ? Neb en emouestl klok d'un ober meur a rank alies ivez asantiñ d'ur vuhez dieurvad, ma kred start e madelezh e uhelvennad. Diaesoc'h eo se eget en em gannañ rak entanet omp neuze gant red an darvoudoù ha spi an trec'h...

E pelec'h en em gavo an dreistden na savo biken lennegezh diwar-benn an dreistden hogen en devo nerzh ene awalc'h evit seveniñ ar pezh a c'hortoz e bobl digantañ ?

Dimerc'her 9 a viz Gwengolo 1942

Aet on d'ar gêr, e Sant-Jermen.

Diriaou 10 a viz Gwengolo 1942

Deuet on endro da beder eur hanter. Kerkent hag erruet da Roazhon e skois war-du ti an ao. Per ar Rouz, ar c'helenner keltieg, straed Anatol ar Bras. Fellout a rae din gouzout ha gallus e oa tremen triizesteni evit an aotreegezh war un dro (derenet e voen ebarzh burev ar c'helenner, arrebeuri brezhon brav ebarzh). Per ar Rouz a zisklerias ne oa ket tu da dremen tri zesteni war un dro : daou d'ar muiañ. War-lerc'h e camp chomet da varvailhat diwar-benn va studioù ha traoù all.

Un den mat kenañ eo an ao. Per ar Rouz hogen re fur ha re ouizieq ; ma n'eus nemet paotred a seurt gant hemañ da saveteiñ Breizh e c'hellomp prientiñ diouzhtu he douaridigezh. Arabat e damall kennebeut : kozh eo. Pa vin degouezhet d'e oad ne vin ken gouest d'ober kalz tra marteze... Sed am eus ne vo mui netra d'ober neuze - pe e vin marv : henn betiñ a ran da vihanañ.

Va mamm a zo aet faezh gant ar skingomzer a vez o choual dalc'h mat en he diskouarn euzhusterioù ar brezel. Nag evurus eo ar vaezidi hep tredan : bevañ a reont e peoc'h hep gouzout zoken ez eus brezelioù war an douar peogwir n'o deus skingomzer ebet ha na lennont ket ar c'hazetennoù...

Digwener 11 a viz Gwengolo 1942

Tuchañtik em eus kejet gant M.R. e ti Merrien e-lec'h e oan deust da brezañ trede levrenn "Ervorennoù" ar C'hardinal de Retz. Merrien a stagas da vrudellat ar paour kaezh Marichal : deizioù zo e vez kabac'h mik. Ur wech ma oa bet kinniget dezhañ adkemer Laval en defe lavaret en ur skeiñ gant e veilh-dorn war an daol : "Non, je ne veux pas de celui-là : c'est un méchant!"

Ambroug a ris M.R. epad ur pennad. Dezrevell a reas din petra oa bet pleustradennoù ar "Bagadoù Stourm" a-raok ar c'hendalc'h. Graet o doa etre 150 ha 200 kilometrad war droad, war an aod hag e-lec'h-all. Gweladennet o doa savadurioù arzel brutet Breizh ha graet e oa bet dezho pep a zisplegadenn diwar o fenn. Erfin, ur marevezh dudius meur-bet o doa tremenet.

D'abardaez, o vont da gerc'hat kig e Sant-Jermen e kejis gant Roparz Hemon hag e sekretour Andreu Galleg e krouzhet straed Filger ha boulouard Metz. Eskemm a ris un nebeut gariennoù ganto.

Disadorn 19 a viz Gwengolo 1942

Deraset em eus endro d'al lenndi daou vell levr a 500 pajennad diwar-benn yezh Rabelais. Ha bout e tamall darn d'hor yezh bezañ gros ha diseven !

O tont endro e voen dihuedet hag hegaset gant blejadennoù ar Vuccardidi - un eizh bennak a baotred yaouank flamme, blin hini pe hini anezho, a fell dezho dassorc'hiñ Bro-C'hall dre ar "socialisme national" ; edont o speññial e kêr letanioù o diouganer.

An Alamanned o deus peget war ar rogerioù pikolioù skritelioù evit dejanal divarregezh ha digadarnded ar Saozon, ha louaderezh ar C'haclourion a lak o fiziañs enno.

Da eizh eur edon e Sant-Jermen endro. Ar brezel ned a ken war-raok ha skuizhus eo gortez un disoc'h ha na zegouezh ket. Sac'het eo an Alamanned e Stalingrad ; ar re-mañ a adlavar deomp bepred pegen pouezus e vo kemeridigezh ar gêr-se hogen n'eus mall ebet warno, a gav din, da gas da benn ar gemeridigezh-se.

Ar Saozon a aloub buan Madagaskar. Ma kendalc'h an traoù evel-se e vo disammet kaer Bro-C'hall a vezañ ar "flambeau de la civilisation" en Afrika !

Dimerc'her 30 a viz Gwengolo 1942

El lenndi em eus kejet gant G.B. a zo distroet da Roazhon (addigoret eo al lise). E ambrouget em eus goude en ur zivizout gantañ betek ostaleri an "Europe" e skoaz da levr di Goble e-lec'h e kemerjomp pep a vanne bier. Breutaat a rejomp diwar-benn kudenn Vreizh dreist-holl : penaos daskoriñ da Vreizh hec'h emskiant vroadel ; n'eo ket ar C'hallaoued, sur mat, a harpo ac'hanomp, Brezhoned, da seveniñ al labour-mañ !  
An dispac'h : un tu da ziskouez splann ez eus ur vroadelezh e Breizh hogen arabat e ve kas anezhañ da benn end digoulz. Koulskoude e oa poent : e Kiberen - e gornbro c'henidik - e kile ar yezh buan ; ar re yaouank a gomz galleg, zoken war ar maez. Kement-se avat, a soñjis goude, n'eo nemet komzoù ; ne reomp nemet sevel marvailhoù ha n'eo ket se a zassorc'ho hor pobl.

Disul 4 a viz Here 1942

L.R. en deus va amheuliet betek Sant-Jermen. Dre ar c'hoadoù, war lein ar mengleuzioù, omp aet da bourmen. Ar gweledva en deus plijet d'am c'hamalad.  
Sebezet eo bet va zud o klevout va c'henseurt hag eñ studier o komz brezhoneg bepred. A-benn ar fin e stagjont da gomz brezhoneg ivez.  
En endervezh hon eus pourmenet a-bed ar ganol ha studiet hon eus a-gevret dindan gwasked ar gwez : du ha metalek dour chag ar ganol. Pleustret hon eus war ar gevreadurezh c'hresianek.

Dilun 5 a viz Here 1942

Prezegennoù politikel e Bro-Alamagn. Da gentañ, Ribbentrop : n'em eus ket mui soñj eus pezh en deus lavaret. Hitler, eveljust : an trec'h a zo, pe da vihanañ, a vo deomp. Göring : hemañ, gant e gof bras moarvat, ne ziserr e c'henod nemet evit komz eus boued (klask a ra farsal ivez, en un doare gros awalc'h a-wechoù ; e derou ar brezel e lavare d'ar vicherourion alaman : pa n'hor bo mui a zilhad ez aimp war hor bra-goù-kouronkañ - hag an holl a c'hoarzh eveljust!) En dro-mañ e asur e tarzho pobloù all Europa gant an naon a-rack an Alamaned ha se a c'heller krediñ aes awalc'h. A-hend-all en deus gourdrouzet ar Saozon en arbenn ag o bombezadegoù "da snontañ" war Vro-Alamagn : distrujet e vez savadurioù istorel, lazhet a vil vern sivilid dizifenn, pezh n'o deus graet biskoazh an Alamaned o unan eveljust.  
An Alamaned a damall ivez d'ar Saozon bezañ chadennet ar brizonidi o deus graet e Dieppe hag int ken damantus d'ar brizonidi saoz o doa graet o unan, a-hervez.

Dimerc'her 7 a viz Here 1942

Amzer fall, glav a builh, avel. Dre ar prenestr

e arvestan ouzh ar barradoù glav o koezhañ hep arsav, a wagnnadoù war ar ganol ha war ar pupli lusennet war ribl ar stâr. Studiet em eus el laez, hep nemeur a c'hred, kevreadurezh latin Riemann.

Ober a ris un droiad e Roazhon en endervezh ha distreiñ diouzh an noz, dindan ar glav, goude kerc'hat amann en ur vereuri

Disadorn 10 a viz Here 1942

Hiziv em eus degemeret "Tri glac'har an danevellañ" troet gant Roparzh Hemon ebarzh rumm "Sterenn". An Alamaned a goll tud hepred endro da Stalin-grad, hep gonid ebet. E Breizh avat o deus divizet kreskiñ lodenn amann ar boblañs : fellout a ra dezho tremen da dud vat moarvat met Breizhiz ne vint ket touellet gant seurt pil-pouserezh!

Va zad a zo tuet da gomz brezhoneg er mare-mañ.

Disul 11 a viz Here 1942

Hiziv gouel en enor d'an ao. de l'Estourbeillon. Setu hanter-kant vloaz emañ e penn an U.R.B.(1) Un den da zoujañ, hervez "Brittia" hec'h unan ha koulskoude n'eo ket ar gelaouenn-mañ gwall denar peurvuiañ e-keñver stourmerion an emsav a-rack ar brezel kentañ. A-hervez eta ez eo bet de l'Estourbeillon ur Breizhad mat ma n'eo ket ur Breizhad meur. Merket e oa bet anv Roparz Hemon e-touez re azerion ar gouel-se ; padal ne welis liv ebet anezhañ e-doug an deiz ha kompren a ran perak : a-benn ar fin e oa bet pedet ivez un toullad mat a bennadurezhioù Vichi evit "rannvro Vreizh" ha ne vourre ket ar skrivagner o rankout kejou gant ar gargidi estren-se ; n'eo ket unan eus ar re a blij dezho plegañ o glin.

War a hañval e tlee an devezh-mañ bezañ devezh an unvaniezh, ar Vrezhoned kenetrezo da gentañ : an holl, a ne vern pe gostezenn, en em vode da enoriñ ar brogarour kozh ; etre Brezhoned ha Gallaoued zoken peogwir e oa deuet ivez ar gargidi c'hall da rentañ koulz enor dezhañ hag ar vroadelourion a oa bet pedet da gemer perzh en abadenn. Ar C'hallaoued avat, kredapl eo, n'o doa ket re a fiziañs evel-ato rak kavout a ris leurgêr an iliz-veur dalc'het gant nous-pet polis pa zegouezhis di evit oferenñ nav eur a oa da vozañ la-varet a-benn digeriñ al lidoù (o unvaniezh nevez o doa paotred ar c'herreizh : bonedoù glas ha manegoù gwenn ; koantik e oant!)

(1) Un den-ere etre istor kozh Breizh hag hec'h istor arnevez ez eo bet ar markiz de l'Estourbeillon, Breizhad eus rannvro an Naoned a-hend-all. Ezel e voe eus an "Association bretonne" kent diazezañ an U.R.B. ma tiwanas diouti luskadoù ha strolladoù breizhek an ugentvet kantved.



hag int skignet a vagadoù e-kreiz an engroez pe renket en ur steudad dirak porched an Ilizveur).

Un tammig war-lerc'h an eur ez on degouezhet a-gevret gant N. a zo o teskiñ brezhoneg er mare-mañ : o kanañ "kantik ar baradoz" edod d'an ampoent. Gant poan awalc'h hor boa kavet plas e-tal Tranvouez ha Rivière ( leun kouch e oa an ilizveur). Eus al lec'h m'edon n'oan ket evit merzout hini eus ar pennadurezhioù a oa deuet d'al lid, nag ar Prefed-meur, nag ar rannvroelour Dezarrois (a zo un ezel eus ar Framm keltiek, evelkent, ma ne fazian ket).

A-raok an aviel e savas an arc'heskob Roques er gador-brezeg. Ne gomzas ket pell amzer avat ; bez e reas dreist-holl evit kevarc'hiñ pennadurezhioù ar Stad c'hall a oa oc'h enoriñ e ilizveur gant o bezañs : fraezh ha plijus e oa e vouezh nemet, na petra, estren ha ma oa ne zistagas anv Breizh nemet ur wech.

War e lerc'h e oa pignet an ao. Yann-Vari Perrot d'e dro er gador-brezeg (1). Evit gwelout ar brogarour -mañ e oan deuet d'an ilizveur. Merzout a ris un den bihan awalc'h ha souchet, prim e gerzha, hep netra ennañ avat da zedennañ ar selloù d'ar wech kentañ. Ar pep brasañ eus ar sarnon a zistagas an ao. Perrot a voe e brezhoneg (ne gemeras ar prezeger damant ebet gant ar c'hallegerion a oa o leuniañ an ilizveur, a gav din). War a hañvale ne oa ket an ao. Perrot en e aez dirak an holl vourc'hizion c'hall-se a rae van da enoriñ ur brogarour breizhat. Unton ha difo e voe e vouezh, hanter mouget a-hend-all gant an uhelgomzerioù a oa reizhet fall, ken na intentis ket an hanter eus e gomzoù.

Daoust ma voe ar sarnon hir meurbet - huanadoù don a zeue eus kostez ar pennadurezhioù gall ha na veizent grik ebet ennañ - n'em eus ket dalc'het gwall soñj eus kement a lavarar ar prezeger ; alies avat e voe anv gantañ eus "stourm evit ar vro", eus "Breizh, bro ar sent", hogen ne voen ket evit heuliañ kendalc'h ar brezegenn.

E galleg e trugarekas an ao. Perrot an arc'heskob da vezañ roet bod d'ar brezhoneg en e ilizveur ; gourc'hemennou a reas d'ar pennadurezhioù gall evit bezañ diskouezet a-benn ar fin e oant prest da selaou mennadoù ar Vrezhoneg ; anat e oa e oa bet kemmet un dra bennak er Stad c'hall (ya, eveljust, houmañ a heuilh lezenn hec'h amzer : dec'h e tebre katoliked ; hiziv e tebr Yuzevion).

Ul lid-kerzh renet gant an ao. 'n arc'heskob a ambrougas an ao. Prefed-meur - un den mentet bras, galoñset penn-kil-ha-troad - hag un nebeut kañfarded all treuzwisket eveltañ betek treuzoù an ilizveur. Abarzh kimiadiñ e kevarc'has ar Prefed-meur an ao. 'n arc'heskob gant ur mell mousc'harzh ledan da sabatoñ ha sterleun ; echu e oa an truach a-benn ar fin !

(1) Ar wech nemeti e voe din merzout Yann-Vari Perrot a zlee bezañ drouklazhet ur bloaz war-lerc'h. Ur wech hepken ivez em boe tro da skrivañ dezhañ : respontet en doa din hogen kavout a ra din em eus kollet al lizher a gasas din neuze.

War ar blasenn em boa merzet un nebeut brogarourion : Debeauvais, drant ha seder en devezh-se, ambrouget gant e wreg gwisket egiz Douarnenez ; Olier Mordrel o stampañ tro-dro, en e unan, dellidleun ha brazonius evel ur barner ; ar Mee en em ziskouezas epad ur pred berr hag a steuzias damc'houde. Chomet e oan da zivizout gant L.R. Sioul e oa an holl dud hag un dornad Buccardidi a zic'hañse tremen dre eno ne gredjont ket trubuilhañ anezho.

War-dro div eur hanter e oan diskennet gant div eus va c'hoarezed, C. ha N., betek leurgêr ar maerdi. D'an ar-se e oa bet aozet un abadenn c'hoariva brezhonek, hepred en enor d'an Estourbeillon. Souezhet e voen avat o wiriañ. Ne oa ket sotreet ar foran da dostaat ouzh ar c'hoariva : diwallet e oa adarre treuzoù ha trowardroioù ar savadur gant ur bagad gwarded ; an engroez a ranke chom pell diouzh ar gargidi c'hall a oa oc'h erruout en o c'hirri-tan ha na felle ket dezho bezañ mesket gant ar bobl.

A-benn ar fin e tizhis dont tre ha gant va c'hoar N. e pignis betek an eil solieradur. En em gavout a rejomp e-tal brezhonegerion dizek - ha dianav din a-hend-all - a gomze etrezo teodyezh o c'horn-bro. Ne ouezis ket eus pelec'h e teuent ez resis rak n'em boe ket tro d'ober anaoudegezh ganto. A-raok ma savas ar gouel avat e spurmantis an it. Mee o tegouezhout gant he bugale gwisket e glas. Nepell diouzhin edo an Helloko gant e geneil a Vreizh-Uhel hag ur plach yaouank gwisket egiz Pondaven. Gouwelout a ris Tranvouez ha J.M. Ar Prefed-meur hag e lakizion o doa graet o annez en ul logell war gadorioù-brec'h bourret mat.

An abadenn a grogas gant korolloù ha kanaouennoù a Vreizh-Uhel. Ma vije bet an dimezell C. ganeomp he dije c'hoarzh he gwalc'h, sur mat, o klevout traoedaj he c'hornbro (souezhus : lu e hañval bezañ neb a gomz teodyezhou romanek a reter ar vro ; anavezout a ran ur brogarour a gotez Dinan a vourc'hoz prezeg e eilvezh romanek a-benn ober ar furlukin). N'ouzon ket peseurt arbenn a oa d'ar rann-se eus an abadenn : moarvat reiñ ur stumm rannvroel d'an abadenn penn-da-benn.

Kanet e voe ivez kanennoù brezhonek, a-drugarez Doue. "Me zo ganet e-kreiz ar mor..." sonaozet gant Jef ar Penven diouzh barzhoneg Kalloc'h a oa plijus meurbet. Bourrus e voe ouzhpenn-se ar pezh-c'hoari "An dakenn dour" eus Jarl Priel a voe displeget mat (dreist-holl roll ar martolod) hogen diaezet e voen gant distagadur Treger ha n'on ket boaz outañ (ar Prefed-meur pe unan eus e lakizion a yeas kuit diouzh al logell e-kerzh ar pezh-c'hoari, pezh a oa komprenapl rak an den kaezh moarvat n'intente ket kalz tra eus pezh a oa displeget war al leurenn-c'hoari hogen a voe kavet dizereat meurbet gant an holl).

Korolloù a voe dañset goude adarre : diskleriet e veze an destenn anezho gant pep a zisplegadenn e brezhoneg hag e galleg. Neuze ez eo e voe kaset da benn apoteoz pe - mar karit -

doueekadur an ao. markiz Régis de l'Estourbeillon : arvestiñ a rejomp outañ en e glod, azezet war e dron, ha war e dro azelez hag arc'haelez - ar Prefed-meur ouzh e zivall war an tu dehoù, hag azelez a renk izeloc'h war an tu kleiz (diouzh a glevis a-c'houdevezh e oa, sañset, Bretoned vat azezet en e gichen war ar c'hoarilec'h hogen, sur mat, e oa en em gavet ar Vrezhoned wellañ holl en eil solieradur ar c'hoariva a-gevret ganeomp : alèse atav e teue ar youc'hadennoù skiltrusañ pa veze anv eus Breizh er prezegennoù a voe distaget war-lerc'h!)

Dres, an ao. Dezarrois, ur rannvroelour mat, a oa savet en e sav ha kroget da zibunañ e damm prezegen en enor ar markiz kozh ; kounañ a reas labour brogar an ao. de l'Estourbeillon ; degas a reas da soñj an amzer ma veze e Breizh barzhed veur evel Jos Parker. E berr gomzou, ma oa c'hoazh ur Vreizh hiziv e oa a-drugarez d'an ao. de l'Estourbeillon hag e U.R.B.

Ma n'en dije lavaret nemet se e vije bet an holl a-du gantañ, war-bouez nebeut. Hogen kavout a reas d'ar prezeger e oa da lubaniñ ar pennadurezhioù gall a oa ouzh e selaou. "Dire que nous voulons l'autonomie administrative la plus large possible pour aller jusqu'à l'autonomie de fait serait une calomnie et une sottise," emezañ. Hag ar bommañ ouzhpenn laosket gant kement loukez a rannvroelour a zo e Breizh: "L'unité française pour nous indestructible..." Hag hon den da gomz goude-se hep c'hoarzhin eus adkeltiekaat Breizh. Met ar gwellañ e voe keñveriañ an Estourbeillon kaezh ouzh Nevenoe, nemet e ve bet mennet ar prezeger d'ober goap eus Gallaoued ha n'anavezent grik en istor Breizh (1).

Ne grogas ar selaouerion da grozal avat nemet pa stagas Dezarrois da glufaniñ war-eeun ar Breded dre asuriñ n'o doa ken mennad diwar neuze nemet skoazellañ ar Vrezhoned. Dija un nebeut amzer a-raok e oa savet bourougrezh er c'hoariva ; en dro-mañ, en hor solieradur, e voe klevet unan bennak o tiskleriañ fraezh neurbet : "Comment peut-on dire des choses pareilles ?" D'ar c'houlz-se avat n'ouien ket kaer piv oa o kas trouz (war an eus klevet en defe lavaret Jaffrez\* d'an ampoent-se ivez : "Et not' beurre, Monsieur le Préfet, rendez-nous not' beurre! E-kichen egile edo: met n'em eus ket e spurmantet). Evit lavarout ar wirionez ne oa ket kement-se kalz a dra hag an holl a gave dezho e oa fin d'an darvoudenn pa ziboufas a-greiz-holl polised e toull dor ar rannc'hoariva ma oa deuet an trouz dioutañ. O klask pakañ krog en dispac'her e oant met evel just ne ouient ket piv ' oa. N'o defe ket gouezet moarvat nemet e reas ar saver trouz ur fazi o treiñ war-du ar bolised ha klask diskleriañ

(1) Diwezhatoc'h e klaskas an H.B. ivez didamall he folitikerezh kempennour dre zegounañ egouezh Nevenoe. En amzer-se avat e oa anzavet Breizh evel ur vro.  
\* Renner an H.B.

n'en doa graet nemet esteurel e ali, evel m'en deus ar gwir d'ober dirak ar foran kement keodedour a zo. Ar bolised avat ne hañvalent ket bezañ a-du gantañ ha gourc'hemenn a raent d'an trubuilher dont d'o heul ; egile, padal, a chome difrom a-grenn hag a gendalc'he da zivizout a vouezh uhel gant e gearvesterion. E-keit-se ne daoled mui kalz pled ouzh komzou seven an ao. Dezarrois.

Pa voe echu ar brezegenn avat e oa savet ar paotr en e sav hag e vrec'h er vann gantañ en doa kroget da c'harmiñ a-bouez-penn : "Bebet..." ha war hor solieradur o doa ar vroadelourion birvilhet holl respontet ken taer all : "Breizh..." ha me a-gevret gant ar re all. Meur a wech hor boa youc'het al lugan broadel ha padet e oa ar reustl epad un nebeut munutennoù. Neuze o doa ar warded en em strinket war an hini a oa kiriek d'ar cholori hag a daolioù dorn ha troad o doa sachet anezhañ er-maez ; hemañ, avat, a-ziagent, en doa chouet adarre : "Ce n'est pas votre police qui me fait peur, Monsieur le Préfet : vive la Bretagne..."

Kounnaret e oa bet an holl war va zro o welout garventez ar warded ; padal e oa aet ar strafuilh war sioul-aat a-benn ur pennad. D'ar c'houlz-se avat e oa deuet gwarded all da zigeriñ an nor a skoe war ar c'hostez eus ar solieradur m'en em gavemp ha chom a raent da eveshaat ac'hanomp ; en o zouez e verzis unan eus ar bolised o doa harzet ac'hanon un nebeut mizioù kent. Ne oa c'hoarvezet netra avat.

A-benn neuze e oa an ao. de l'Estourbeillon o respont d'an ao. Dezarrois hogen ne intentis grik ebet eus e brezegenn : gwan e oa e vouezh evel hini un den kozh ha ne dizhe ket gwall bell. Da echuiñ an abaden en doa ar Prefed-meur e unan kroget da gomz (ur pezhad-den a zo anezhañ, ur penn german dezhañ) da zibunañ e letanioù diwar-benn Bro-C'hall hag ar Marichal : evel m'oc'h bet e servij ho mammvro vihan, emezañ o treiñ war-du an Estourbeillon, ez on-me e servij ar vammvro veur ; holl avat e kehelomp ar Marichal a adsavo Bro-C'hall... Hag eñ da dennañ ur "frañsisk" (1) eus e chakod ha da spilhennañ anezhañ war boriant ar rannvroelour mat (ne gav ket din avat e rafe an Estourbeillon kalz forzh eus ar "grigri" a-berzh-stad nevez rak antronoz, hervez L.R., ne zouge ken anezhañ). Goude-se e tenesaas daou vugel eus an it. Mee a-gevret gant ur bugel all hag o zri e kinnigjont d'an "actrou markiz", a-berzh "OIOLE" hag en anv bugale Vreizh, ur groaz keltiek ; hag int o zri da zistagañ o zammig danevell e brezhoneg, o mouezhioù o sevel hag o tiskenn a-unvan : tenerausat arvest !

A-raok dont er-maez e kanjomp holl a-gevret ar "Bro gozh" penn-da-benn ha gant kalz a c'hred, evel boaz.

Straniñ a ris war al leurgêr, e-mesk an engroez, a-gevret gant va div c'hoar, gant ar spi da gaout diseriadennoù diwar-benn an hini a oa kiriek d'ar reustl. Kejet em boa gant

(1) Un doare medalenn profet gant Vichi d'ar re a oa a-du gantañ.

Abeozen. "Vissault de Coetlogon (1) an hini eo en deus kaset trouz er c'ho riva," eme hemañ. un "imbisil brav" e oa hennezh c'hoazh. Jaffrez a oa bet paket ha daou all (ar Ruilhet hag an Hegarat evel ma ouezis goude). "Gwelloc'h o defe graet o serriñ o genoù," a verkas Abeozen. "Ma vijamp bet rediet da ganañ ar "Marseillaise" neuze moarvat hor befe gallet kas trouz. Met peogwir e oa ar C'hallaoued deuet da enoriñ ur Breizhad - n'eus forzh pezh a c'helled soñjal diwar-benn al lidoù-se - e oa koulz bezañ seven en o c'heñver." Abeozen a anzavas koulskoude e oa kiriek ar pennadurezhioù gall d' an dizurzh a oa savet en abeg d'an aergelc'h a reustl a oa krouet gant niver ar bolised a eveshae strizh an engroez e pep lec'h hag a hegase krenn an dud.

Goude kimiad Abeozen hag hini va c'hoar C. a felle dezhi distreiñ d'ar gêr e oan chomet gant N. D'an amp-cent e oa ar Prefed-meur o tostaat ouzh an ti-kêr hag eñ ambrouget gant ul lid-kerzh a goefoù gwenn merc'hed ar c'helc'h keltiek a zedenne selloù Roazhoniz (plêd ebet ne daolent, surmat, ouzh ar c'haezh Prefed) koulz hag re an Alamaned a oa oc'h en em c'houlenn petra a c'hoarveze. En em gavet e oan gant L.R. ha Joly hag o komz ganto e brezhoneg pa santis un dorn o pouezañ war va skoaz hag ur vouezh o c'hourc'hemenn din : "Vos papiers!" O treiñ e anavezis ar c'hozh komiser Piat, c'hwezet ha ruz e zivoc'h, digor e fronelloù, dispourbell e zaoulagad dilufr a-hend-all evel re un ejen. "Venez par ici, jeune homme," emezañ o sachañ ac'honan a-gostez. Rankout a ris astenn va levrig-studier dezhañ, en ur enebiñ : "en doa digarez ebet da herzel ac'honan evel-se, emezon. "Oh! Je vous connais bien," a eilgerias egile. Hogen evit va brasañ sebez ne glaskas ket va derc'hel. "Vous viendrez chercher vos papiers ce soir au commissariat," a ouzhpennas. Ha pellaat a reas kerkent da genderc'hel gant e labour.

Enoet e oan gant ar gobidell nevez-se. Eveljust, ne oa ket grevus ; hogen, da gentañ, en amzer a zo o ren e c'hell bezañ dañjerus bras en em gavout dibaper ; ha lakaomp na vijen dalc'het nemet un nebeut devezhioù gant ar polis, awalc'h e oa evit mirout ouzhin a dremen va arnodennoù o miz Here. Ober a ris va soñj eta kemenn an afer nevez-se da renerion ar Strollad. Delaporte ne oa ket deuet endro d'ar sez-kreiz; moarvat edo bepred war ar blasenn gant ar re all. Kas a ris N. d'e glask. Yann Goulet avat am boa gwelet ha da hemañ em boa displeget pezh a oa c'hoarvezet ganin. "N'eus ket tu da c'houzañv hevelep mac'homerezh a-berzh ar polis gall," eme Yann Goulet. Va aliañ a reas da zistreiñ d'ar gêr : ne oa ket gwirheñvel e teuje ar bolised d'am c'herc'hat da noz.

N. a zistroas damc'houde. Mont a ris ganti. Divizet em boa dont endro da Sant-Jermen : muioc'h en diarvar e vefen eno. Loc'hañ a ris eta war varc'h-houarn evel boaz. Noziñ a rae pa-zegouezhis du-mañ.

(1) N'ouzon ket hag ar c'hCoetlogon-mañ a zo an hevelep hini hag an hini am eus menoget endev. Hemañ atav a voc fuzuilhet gant ar C'hallaoued war-lerc'h ar brezel.

Dimeurzh 13 a viz Here 1942

Abaoe disul edon e Sant-Jermen, dinec'h ha sioulkenañ. Pleustriñ a raen hep poaniañ re war "La pensée et la langue" a zo bourras awalc'h a-wechoù.

Da seizh eur d'abardaez avat e erruas C., liv an enkreze en he c'herc'henn ha gwall geloù ganti hep mar. Setu pezh a gontas deomp.

Dec'h e oa deuet ar c'homiser Monnier - an hini en doa harzet ac'honan endev - da zegas un urzhiadenn sinet gant Piat o c'hourc'hemenn din en em ziskouez dirak hemañ end-eeun a-benn dimerc'her pe ziriaou (n'em eus ket mui soñj). Ar polis a oa deuet da zegas an urzhiadenn a hañvale bezañ madek awalc'h ha klasket en doa en em zigarozif dre lavarout ne oa ket eñ an hini en doa c'hoant gwelout ac'honan.

Va c'hoar avat he doa lakaet en he fenn mont da gavout hec'h unan ar c'homiser ha kaout va levrig-studier endro digantañ, ma oa tu. Da ziv eur eta e oa aet d'ar "Sfreté", st. Paris. Goude bezañ lakaet anezhi da c'hortoz epad un eur bennak e teurvezas Piat a-benn ar fin he degemer. Kerkent ha ma oa deuet tre avat en doa yudet : "Neuze ne fell ket d'ho preur en em ziskouez dirak ar polis gall ? " Hag ouzhpennet en doa neuze em befe 120 lur tell-kastiz da baeañ evit bezañ graet goap anezhañ o reiñ dezhañ va levrig-studier e-lec'h ar paperennoù-hevelebiezh a c'houlenne. Goude-se en doa kroget da zibunañ ur bern koñchennoù born diwar va fenn : penaos e oan o tismegañsiñ Bro-C'hall d'ar mare m'en doa harzet ac'honan ; penaos, epad kendalc'h diwezhañ ar Strollad, em boa kunujet ur c'haezh mac'hagnad brezel p'en doa diskleriet hemañ e oa gall ha brezhon war un dro (ha me, sañset, oc'h adlavarout ar ger "gall" en un doare faeüs meurbet) ; a-hend-all, emezañ, e vezen allies tre o teurel dismegañs war Vro-C'hall. Setu perak en devoa paket krog ennon en devezh all !

A-greiz-holl en doa goulennet neuze : "Peseurt micher a fell d'ho preur kemer?" Pa ouezas e oa va mennoz bezañ kelenner en doa respontet : "N'eo ket dav dezhañ klask : biken ne lezimp anezhañ da zont da vezañ kelenner e Breizh! Padal," a gendalc'has an ao. Komiser, "ez eus tu da vezañ gall ha brezhon war un dro : kemeret ho prour skouer war an ao. de l'Estourbeillon. Daoust ha n'en doa ket degemeret hemañ frañsisk ar Marichal?"

Damc'houde avat e oa staget Piat da zibunañ adarre e sorbiennoù droch. Enebourion niverus am boa, emezañ, hag a glaske va lazhañ ! Hogen me an hini eo a oa kablus a-hervez rak tremen a raen va amzer vak er c'hafedioù o taeañ ar C'hallaoued vat! Hag evit echuiñ en doa diskleriet ar c'homiser em boa chafis o vevañ dindan beli ar stad c'hall : ma vijen bet keodedour alaman, pellzo e vije bet plantet daouzek bolod em c'horf !

Saouzanet e oa bet va c'hoar gant hevelep daofennoù

dic'hortoz. Mil poan am boe da ziskouez ne oa na penn na lost e chaokou ar c'homiser : pe en doa kemmesket ac'hanon gant unan all pe en doa klasket en em zigareziñ evit bezañ va harzet en devezh all.

Divizet e voe goulenn ali Armand D., kenderv an dimezell J. evit gouzout penaos dizarbenn ardoù ar c'hozh Komiser : hemañ a zo kuzulier el lez-varn hag a c'hellfe hon harpañ. C. a douas e lakfe Piat da anzav e c'hevier.

Goude-se ez ejomp da gousket, da huñvreal e mez ar c'homiser.

Diriaou 15 a viz Here 1942

Deuet on endro da Roazhon daoust d'ar riskl a vezañ harzet gant ar polis. Graet em eus ur woladenn da L.R. : hemañ a zo kouzhet klañv abaoe abadenn disul : un anonedadur. Foulon hag e wreg a oa deuet d'e welout endev. Mont a rae gwelloc'h gantañ. Gwell en defe kavet bezañ bet trubuilhet gant ar polis eget bezañ bet klañv, emezañ. N'on ket ali gantañ. Evit frealziñ ar paour kaezh paotr e tegasis dezhañ un nebeut krampouezh a oa bet fardet du-mañ da greisteiz.

Digwener 16 a viz Here 1942

Hiziv deiz kentañ an arnodennoù. L.R. en deus tremenet an testeni war ar gresianeg. Evidon-me on chomet er gêr, prennet an holl zorioù ganin : diot e vefe evelato bezañ harzet dres da zeiz an arnodenn ha koll ur bloavezh evel-se. En endervezh e ris un dro er Skol-veur. Eno e toullis kaoz gant un dim. Maze a zo bet rasket div wech e lodenn dre gomz an testeni galleg : "Petra 'vern, ?" emezi, "va gwaz ne c'houlenno ket ouzhin ha desket em bo latin pe get..." Ur wellwelourez evel ma weler. An dalc'h eo diskoachañ ar gwaz priziuz-se, emañ oc'h huñvreal emañ.

Disadorn 17 a viz Here 1942

Yann Goulet a zo deuet adarre d'ar mintin-mañ : fellout a rae dezhañ kemer dre skrid ar pezh am boa displeget dre gomz en derc'hent. Adarre e tibunis steudad ar gevier en doa troadet Piat d'am c'hoar. Yann Goulet a zisklerias neuze en doa pellgomzet va alvokad d'ar c'homiser hag en doa respontet hemañ n'en doa netra da damall din koulz lavaret : cheñchet ton ha kanaouenn neuze. Gwell e vije bet, eme Y.G., na ve ket aet va c'hoar da gavout ar c'homiser. Setu pezh a soñjan ivez.

E deroù an endervezh e tistroas an H. gant ur gemennadurezh a-berzh Y.G. : dav e oa din tremen war-dro pemp eur en e vurev. Goude-se e chomjomp da zivizout ; an H. a gontas din e tleg tremen dilun dirak al lez-varn ; an H. a gontas din e tleg tremen dilun dirak al lez-varn ; ur c'hrogad en doa bet nevez gant ur Buccardiad en doa e daget pa oa o werzhañ an H.B. (Gouezet em eus abaoe ez eo bet kendonnet ar

gall er prosez-se : tri zell-kastiz en deus paket ; peadra d'e zic'hoantañ a drubuilhañ an emrenerion ; testeni ar gwêrd en doa harzet an emgann a oa a-du gant an H.)

Da bemp eur etaez is da gavout Yann Goulet. Evel dres ne oa ket kalz tra va afer, diouzh pezh a oa bet dezrevellet d'am breutaer Bodin (marteze em eus anavezet mab hemañ e Sant-Marzhin). Neuze eta ne dalveze ket ar boan en em ziskouez dirak ar c'homiser peogwir n'en devoa diwar vremañ netra da rebech ouzhin ; dezhañ e oa reiñ endro din va levrig, ha gant digareziou c'hoazh.

(Notenn : abaoe diriaou diouzh an noz e ouien e oa bet divac'het ar baotred o doa youc'het er c'hoariva ; an ao. Prefed-meur zoken en devoa c'hoantaet o gwelout hag ur sarmon en devoa graet dezho, o reiñ da wirion e youl d'ober evit Breizh kement a c'hellfe seveniñ ; ne vern penaos ez eo gwall verr e c'halloud-erñ).

Disul 18 a viz Here 1942

Sulvezh bezet en enoe evel kement a sulvezhioù all. Chomet on er gêr gant N. Daoust m'em boa c'hoant adlenn ar "Chouans" eus Balzac ha "Gargantua" evit an arnodenn em eus sikouret N. da dreiñ "An aotrou Bimbochet e Breizh" a gav dudius kenañ.

War-dro pemp eur ez omp aet da bourmen. Betek fiñvskeudenni an Tour d'Auverg. War an hent omp chomet a-sav dirak sez ar Frañsisted, st. ar Chabistr. War bajenn gantañ unan eus o c'hazetennoù displeget er stal-veur e oa moulet, penn-da-benn ar bajenn : "Nous voulons tous mourir pour Baccard!" Seurt ger-stur a zo azon diwezhañ pazenn an diskiantegezh : daoust hag e verver evit un den ? Da lavarout eo, daoust hag e varvet evidoc'h ? Un den n'eo netra dioutañ e unan, nemet bezañ arouez ha benveg un uhelvennad marteze. Doujañs a c'heller kaout evit un den, karantez a-wechoù p'e anavezet. Hogen daoust hag ez omp doueed ? Hag ouzhpenn, petra eo ar sentidigezh hag ar c'hehelerezh-se : sentidigezh ha kehelerezh ur c'hi, ma 'soñj.

Dont a rejomp endro. Serret an oabl gant duennoù pounner : emañ ar goañv o tostaat adarre.

Dilun 19 a viz Here 1942

Hiziv deiz an arnodenn. Yezhoniezh galleg bremañ ha galleg kozh. Ur pennad eus Boileau hag unan eus "romant ar rozenn" da blaenaat. Mat eo bet an traoù ganin.

Kejet em eus gant an Troadeg ha L.M. Hemañ a zo dinec'h a-grenn : ar pep pouezusañ a zo er bed bremañ ez eo an dimez a vo lidet warc'hoazh ; e dud a zo o vont da gemer an tren da zont da Roazhon.

En endervezh ur pennad da sevel diwar-benn "La tradition et la nouveauté dramatique dans Turcaret". Spletus em eus kavet an destenn. Kavout a ra din e rin berzh.

Dimeurzh 20 a viz Here 1942

Kendalc'h an arnodenn. Latin eo hon eus bet d'ar beure. Gwell a se. En em zibabet on, nemet evit ar gwerzaouerezh.

Aet on adarre da gavout Yann Goulet er sez-kreiz, evel ma oa bet kemennet din. War a seblant n'eo ket douet da vat ar marc'hatadurioù a zo bet kaset da benn evit ma vefe restalet din va levrig-studier war-eeun ; moarvat e vo dav din en em ziskouez adarre dirak ar bolised c'hall ; gwell loc'h eo avat gortoz ma vo bet divizet un emwel dre un englev etre ar Strollad hag ar re-se.

Dimeurzh 21 a viz Here 1942

Hiziv e ranken mont da welout ar c'homiser. Gwell em eus kavet avat distreiñ da Sant-Jermen.

Diriaou 22 a viz Here 1942

N'em eus ket studiet kalz hiziv. En endervezh ez on aet da gerc'hat avaloù e ti-hent-houarn Denzieg, digant an ao. maer. Setu me loc'het war varc'h-houarn eta, o stlejañ war va lerc'h ur c'harrig houarn a rae ur storlok spontus a glevet, sur awalc'h, war-hed pemp kant metrad bennak. Erru du-se e kavis an ao. maer a oa oc'h ober war-dro un treniad avaloù douar hag a c'houlennas digant ur paotr yaouank pourchas din ar marc'hadourezh : 30 kiload "ruzig" ha 30 kiload "renetez" ebarzh pep a sac'h. Ha me war va c'hiz. Dont a ris a-benn da zistreiñ hogen ne voe ket hep poan rak gwall bounner e oa ar stlejadell ha war ar marc'had e voe difoeltret hounnezh 3 c'hilometrad a-raok Sant-Jermen; abred awalc'h evelato on degouezhet d'ar gêr. E Moustereh-war-Izol e klevis an Alamanned o tennañ gant ar vindrailheréz evit en em c'hourdoniñ. Ar brezel a zo aze atav.

D'abardaez e teuis endro da Roazhon. Fellout a rae din en em gavout en ur vodadeg eus ar Strollad a-gevret gant N. E sez rannbarzh an Il-ha-Gwinun e oa dalc'het ar vodadeg hag eno e kejis gant L.M. hag e zavez-pried. Teofil (1) Jousset a reas deomp ur brezegenn ; an danvez anezhi ne oa ket gwall spis hag ar prezeger a-hend-all ne heulie steuenn resis ebet, a gav din ; implijout a rae ul luc'haj gallek ma oa ar ger "connerie" an diskan anezhañ. Ar re a vourr o klevout galleg bev a zlee bezañ en o bleud rak Jousset a gomze ur yezh saourus kenañ. Setu ur skouer anezhi : "Le peuple breton est dans la merde, excusez moi de le dire mais c'est vrai..." En em ziskouez a rae a-hend-all evel un den eus ar bobl ; ur micherour a oa anezhañ, emezañ, ha fellout a rae dezhañ difenn gwirioù ar vicherourion. War a lavare avat e komprens an dud eus ar bobl kudenn Vreizh ervat ha degemer a raent mat tre e vefe

(1) T. Jousset, padal, hag eñ Roazhonad, en doa desket mat brezhoneg hag a oa gouest da gomz ha da skrivañ ar yezh. War-lerc'h ar brezel e voe barnet d'ar galeoù gant al lezioù-barn gall.

adkeltiekaet Breizh ma vefe savet ur stad vrezhon. Eus traoù a bep seurt en doa komzet T.J. a-hend-all ; diskuliet en doa zoken en doa kuitaet an Iliz katolik, pezh na c'houlenne den outañ.

War e lerc'h en doa graet Ronan Pichery un tamm kaozeadenn a-benn goulenn diganeomp dont da enoriñ disul eñvor Bidard de la Noe hag evit echuiñ e voe graet ar c'hest evit kempenn e vez. N. a lakaas pemp lur er plad pe kentoc'h en tog a voe astennet dirazomp.(1). Goude seveniñ hon dlead e tistrojomp war-eeun d'ar gêr.

Digwener 23 a viz Here 1942

War-dro dek eur e voe degaset din daou lizher a-berzh kevrenn al lizheradur : degemeradus e oan ken e yezhoniezh ken e lennegezh c'hallek. Ar c'heloù-se a reas plijadur din. Ar paour kaezh L.R. avat a oa bet korballet e gresianeg. Lavaret en doa din e tilezfe e studioù ma vefe rasket ; hogen e genderv Foulon a zeuas a-benn da reiñ kalon dezhañ endro.

En endervezh em eus graet un droiad er sez-kreiz, bepred evit va afer gant ar c'homiser Piat. Divizet e oa bet ez afen da gavout hennezh a-gevret gant va alvokad. Hiziv e tleen mont. Er sez-kreiz avat ne oa nemet Yann Goulet ouzh va gortoz : hemañ a Venne va ambroug a-benn ar fin, pezh na oa ket nemeur diouzh va grad evit meur a abeg : gwell e vije, a soñjen, en em ziluziñ va unan. Pa rois da c'houzout da Yann Goulet avat e oan degemeradus em arnodennoù e kavas hemañ furc'h gourzezañ va gweladenn. Seurt disentez, eviti da vezañ hetus din en ur stumm, a zouge evelato gwallziougan rak goulakaat a rae e c'hellfen bezañ dalc'het gant ar polis. Bezet pe vezet, distreiñ a ris d'ar gêr ha pleustriñ evel boaz war danvez va arnodennoù.

Disadorn 24 a viz Here 1942

Lodenn dre gomz an arnodenn yezhoniezh hiziv. Ne oa ket niverus an arnodenidi : un daouzek bennak. N' ana-vezen en o zouez nemet an Troadeg hag an Danteg ; ar re all a oa dimezelled. Ober a ris berzh gant testennoù a anavezen madik awalc'h : arver an troioù e galleg kozh, ar c'helluskoù implijet gant ar romantelourion, hag emdroadur ar vogalenn-kensonnennoù e gresianeg. A-benn ar fin e voen degemeret an eil (1) Gwir anv Ronan Pichery a oa René Cruchon. Me ' gav din e oa bet ofisour el lu gall ha mac'hagnet a-hend-all epad ar brezel kentañ : kollet ul lagad gantañ d'ar mare-se. Damvennet e oa bet d'ur mare da gemer penn ar Strollad broadel. E 1944-45 e voe toullbac'het e-doug ur bloavezh bennak ha diswiriekaet gant al lezioù-barn gall. Diwar neuze en em ouestlas gant gred d'al lennegezh breizhek-gallek ; embann a reas peurgetket "Les cahiers de Brocéliande". Un tamm brezhoneg en doa desket hag evit heuliañ hengoun lenneget rannvro Roazhon e embannas ur poz bennak e brezhoneg.(evel Tiercelin pe ... Botrel).Ur mell den koujorn ha tuzum a oa anezhañ ha na veve nemet evit al "lennegezh".

war ar roll met hep meneg ebet. Disammet e oan n'eus forzh penaos.

Disul 25 a viz Here 1942

N. a felle dezhi mont d'al lid-efvorañ a oa bet aozet gant R. Pichery en enor da vBidard de la Noe. N' oas ket tomm tre evit klevout ur brezegenn ouzhpenn. Ambroug a ris anezhi evelato. Kroget e oa an abadenn pa zegouezhjomp d'ar vered a-hend-all : Ronan Pichery a oa o tistagañ e brezegenn. Broadel tre e oa stumm komz hemañ ; anv a reas meur a wech eus "la nation bretonne" rak e galleg e komze. Ur gronnad a 25 a dud a oa eno ; kerentiezh Bidard dela Noe pe vrogarourion ? N'ouzon ket.

Er c'helic'h keltiek goude-se. An ao. Kaerouñ a oa o c'hourdoniñ paotred ha merc'hed e galc'h hag eñ emellet bras, n'ouzon ket evit peseurt abadenn. Kejout a ris gant Youenn Delaporte a oa o tiskleriañ d'un alaman yaouank doare ar c'horolloù breizhek ; hemañ a ouie un tamm brezhoneg, a-hend-all ; klask a rae komz ; goustad e rae avat.

En endervezh e pleustris war al lennegezh c'hallek. Didrouz an ti. A-benn ar fin e rois harp da N. da dreiñ "An aotrou Bimbochet e Breizh".

Dilun 26 a viz Here 1942

Lodenn dre gomz an arnodenn a lennegezh c'hallek. Deuet eo da vat ganin hag a-benn ar fin em boe ar meneg "mat awalc'h". Da arnodennerion em boe Foulon a roas din un arroudenn eus "Chanson de Rolland" da blaenaat ; Dedejan an lakaas da bleustriñ war ur pennad tennet eus "Maximes et réflexions" Bossuet ; Mayer a c'houlennas diganin ober un displegadenn diwar-benn André Chénier.

Un toullad studierion ha studierezed a oa ivez o tremen al latin gant Loyer ha Maréchal. Teir flac'h a voe rasket ; div anezho a yeas da ouelañ dourek e kerc'henn Varéchal : "Labouret hon eus start koulskoude," emezo. Maréchal avat a voe didruez : "Ne lavaran ket hoc'h eus ket labourat," a eilgerias, "hogen lavarout a ran ne ouzoc'h ket labourat." Frealzusat ali !

Kuitaat a ris ar skol-veur, disammet kaer. Er c'heñver-se atav rak ur varitell all a oa o chastreañ va spered : Piat.

Er sez-kreiz e oa adarre enep-urzh : a-benn ar fin ne zeufe ket Yann Goulet ganin hogen karget e voe unan eus sekretourezed ar Strollad o labourat er sez-kreiz (dianav a-grenn din) d'am amheuliañ : dav e oa dezhi dont da gemenn d'ar Strollad ma vefen dalc'het gant ar polis. Eignat a rejomp en tram evit mont betek ar "Sûreté", st. Paris. Erru d'ar savadur e voe an dimezell berrboell awalc'h evit kontañ e oa va c'hoar (goude-se ne chome mui nemet pediñ Doue evit na vefe ket ar

bolised diaviz awalc'h evit goulenn he faperoù diganti ha dizoleiñ e oamp o c'hogeal anezho). Gant poan awalc'h e c'hellis gwelout Piat (o tivizout gant ar c'homiser-kreiz e oa, eme e sekretour a oa aze p'oad ouzh va goulennata un nebeut mizioù kent hogan n'am anavezaz ket peogwir e c'houlennas ouzhiñ ha deuet e oan evit kaout ur plas enseller dindan urzhioù Piat, pezh a gavis farsus awalc'h ; Lemonnier en doa harzet ac'hanon hag en em gave eno ivez n'am anavezaz ket muioç'h).

Goude bezañ goulennet perak ne oan ket deuet abretoc'h d'e gavout hag arc'het va c'hartenn-hevelebiezh diganin (o vezañ na wiskas ket e lunedoù ne voe ket evit merzout ne oa ket reizh-reizh) e lakaas Piat ar gaoz war va zorfed sañset. "Ya," emezañ, "me ' gav din hoc'h eus graet sotonioù abaoe ar wech diwezhañ m'hon eus kejet. Da zeiz ar c'hendalc'h e oac'h o kunujañ ur mac'hagnad brezel, ur Breizhad war ar marc'had, ur servijer mat da Vro-C'hall..." Anavezout a rae e goñchenn (en dro-mañ e oa kemmet avat un disterañ an doare anezhi : n'en doa ket miret ouzh ar mac'hagnad kaezh a skeiñ ganin) ha ne voe ket diaes dizarbenn anezhi.

Piat ne glaskas ket pouezañ muioç'h ; re ziwir-heñvel e oa e sorbienn. Degas a reas degouezh Coetlogon war an daber. Daoust ha ne oa ket diskiant youc'hal "A bas la France!" en un abadenn vreizhek a oa enoret gant bezañs an ao. Prefed-meur ? A-hend-all, Coetlogon ne oa ket Breizhad (neuze eo kasaet Bro-C'hall gant ar C'hallaoued o unan ; iskis eo evelkent!) Meur a hini eus e gerentiezh a oa Gallaoued hag eñ e unan a oa ganet en Anje ; war ar marc'had no oa ket ezel eus ar Strollad : an dra-se a ouient ervat.

War-lerc'h an distro-prezeg-se e voe graet a nevez un damveneg dispis awalc'h d'am "enebourion" ; traoù a ouie ha na grede ket diskuliañ ; mat e rafen avat o teurel ovezh mat ; arabat e vefe din en em glask ouzh tud ar Strolladoù all (pere ? Buccardidi ? Paotred Vichi ? e gwir ne veizis ket mat eus petra oa kont ez resis gant an ao. komiser).

E-doug an ugent munud bennak war-lerc'h ma chomis a-gavret gant Piat e klaskas hemañ reiñ din ur merzad mat eus ar polis gall : se a lavaras din fraezh a-hend-all. Er brezegenn a reas din eta e csaas prouñ e oa ar pennadurezhioù gall ledan a spered da sabatuiñ e-keñver ar Vrezhoneg :

"Arabab eo deoc'h krediñ," emezañ, "ez eo ar gouarnamant gall bouzar ouzh goulennoù ar Vrezhoneg. En enob, a-du gant ar yezh emañ ; amoret krenn eo neb en deus mezh gant ar brezhoneg (se a c'hoarvez gwall alies koulskoude : ha war wall piv?) Kadz hon eus da zeskiñ digant ar Vrezhoneg kerkoulz ha digant Provañsiz. Meur a dra hon eus aotret d'ar Vrezhoneg da skouer, kelenn ar yezh en ti-skol war-lerc'h an eurvezhioù skol. An ao. Prefed-meur a zo deuet zoken d'ur gouel breizhek hag en deus teurvezet selaou brezhoneg epad div eurvezh ? Peseurt kargiad alaman en defe graet kemendall e Bro-C'helia ? "

Danvez an emziviz a zeuas da heul a voe div-yezhegezh hag unyezhegezh, un destenn akademek un tammig, evit gwir, me o tifenn an unyezhegezh ha Piat an divyezhegezh, na petra 'ta. Tennet em boa arguadur diouzh degouezh Flandrez en em vatae eus ur reizhiad kelenn unyezhek en ur stad kreiz-ennet. Diaes e oa avat, eveljust, lakaat va savboent da glotañ gant hini ar c'homiser o vezañ ma ne dizhe ket homañ kompron e rankfe bourc'hizion koulz ha gwerin addeskiñ ar yezh e Breizh ; neuze e tamalle din mennout derc'hel ar dud eus ar bobl en ur "ghetto" dre ar brezhonag e Breizh.

Da heul e oamp deuet da gomz eus disrannouriezh. "Petra a rafe ar Vrezhoneg ma vefent distaget krenn diouzh Bro-C'hall ?" eme ar c'homiser. Respont a ris e vefent harpet marteze gant Bro-Saoz. Piat a zirollas da c'hoarzhin. Eytan, a gendalc'has : "Je suis un fervent partisan de l'Europe nouvelle..." Ne voen ket souezhet gant hevelep disklariadur a feiz... "a-greiz va c'halon," a ouzhpennas Piat. "Penaos e c'hellit soñjal e vo savet harzoù gant orjal-dreinek en Europa nevez-se?" E gwir ne oa ket gwall sklaer mennoziou ar c'homiser rak asurifiñ a rae e vefemp lonket hep dale gant ur stad vras ma klaskfemp bezañ dieub a-grenn : neuze 'ta e vefe brezelioù en Europa nevez. Se a oa diaes da gompren.

Hag eñ Vichiad gredus e oa impalaerelour koulz ha n'eus forzh peseurt gall. Dioganañ a rae e savfe brezel hep dale stre Bro-Saoz ha Bro-C'hall. Datar a c'helle bezañ taget adarre. "Cela nous pend au nez," emezañ. En dro-mañ avat en em zifennfe ar C'hallaoued ha ne lezfent ket o zrevadennoù o vont gant al laer.

"Gouzout a ran peseurt emzalc'h fur en deus kemeret ar Strollad broadel hag ez eo prest d'en em glevout gant ar gouarnamant gall, da lavarout eo da chom e stern ar Stad c'hall," emezañ. Neuze e staras da vevañ Remont Delaporte. Tro en doa bet da gefout gantañ e ser afer ar sez-kreiz (1) ha lavaret en doa dezhañ a-hervez : "Mais oui, Monsieur Delaporte, nous savons que vous ne voulez que l'ordre..." Ur merzad mat tre en doa roet Remont delaporte dezhañ : un den speredek, evezhiel, desket, disaouzan, h.a. a oa anezhañ ; ar gwellañ hor boa d'ober e oa heuliañ hep mank e alioù hag e urzhioù. A-hend-all, ne oa netra da c'honit gant an dizurzh, en abeg d'ar"re all" dreist-holl...

A-benn ar fin e voe daskoret din va levrig-studier ha va c'hartenn hag hastañ a ris neuze da gimidiñ. Dont a ris endro d'ar sez-kreiz da gemenn disoc'h mat ar gobidell ha da gemer endro alc'hwez va zi am boa lezet eno kenkas e vefen bet dalc'het gant ar polis : ne welen abeg ebet da gement-se met en amzer drubuilhus-mañ ez eo an holl kablus goude ma ve hep gouzout dezho.

(1) Taget e oa bet ar sez-kreiz gant un toullad hailheveded a rae frañsisted anezho o unan (ur sez o doa ar re-se e straed ar Chabistr). Ne oant ket deuet a-benn da aloubiñ ar sez-kreiz hogen hanter lazhet o doa ar borzhierer, ur vaouez kozh a oa o ti-wall ar ranndi.

Y.G. am boa kavet e burevioù an H.B. Dezrevellet em boa dezhañ va gweladenn d'ar c'homiser en ur gounañ peurgetket ar c'homzoù en doa distaget e-kerzh an emziviz hag a arouezie ar gwellañ e savboent : "La Bretagne, le plus beau fleuron de la France et même de l'Empire français..."

D'ar meurzh 27 a viz Here 1942

Chomet on er gêr o lenn c'hoariva "Molière" en embannadur klok am eus pourchaset nevez zo. Diwar dremen em eus notennet ur werzenn eus an "Etourdi" :

On ne meurt qu'une fois, et c'est pour si longtemps...

En endervezh e voen direnket gant an Hegarat a zeuas da c'houlenn diganin sevel un danevellskrid diwar-bonn va emwel gant ar c'homiser. Pezh a ris kerkent. P'am boe leuniet peder pajennad e galleg ez is d'o dougen d'ar sez-kreiz.

Ne gredan ket nemeur ez eo gwirion ar c'homiser. Ar polis gall ne glask nemet hon trubuilhañ da c'hortoz ober gwashoc'h pa voa aet kuit an Alamanned. Ha ma vez trec'h ar C'haolourion e vo diaesoc'h c'hoazh hor stad eveljust.

Soñj am eus bremañ eus an diviz am boa bet gant an Helloko, dilun, da zeiz an arnodenn. Gouezet en doa e oan bet trubuilhet gant ar polis adarre ha kavout a rae dezhañ ez ae dreist evelato patred ar c'herreizh ; ne vo harz ebet d'o rogentez a-benn ar fin ; ma pad an traoù n'o devo ar Vrezhoneg gwir ebet da vevañ. Eñ ivez on em c'houlenne hag-eñ ne vefe ket dav deomp en em zifenn en deiz ma ne vefe mui bevenn ebet d'ar galloud gall e Breizh.

D'ar gwener 30 a viz Here 1942

E Sant-Jermen. Lennet em eus c'hoariva Molière c-doug an deiz, nemet da veure on aet gant va zad da gerc'hat avaloù e Denzieg, ur wech c'hoazh ; daou pe dri bloaz zo hor boa graet anaoudegezh gant tud an tiegezh-mañ a zo hegarat neurbet a-hend-all ; evel boaz e voe kinniget ur banne sistr deomp. A-ziaraok e oamp tremenet en ur vereuri all nepell diouzh pont Plouzer : kig-moc'h a oa bet grataet deomp en ti-se. Da bemp eur on distroet da gerc'hat ar c'hig-se. E gwir ez eo an div vereuri am eus gweladennet daou lastez ti ken diskoñfortus an eil hag egile, ha ken diyec'hedus ivez ; n'eus enno nemet ur sal, gant gweloù, armelioù, un oaled hep tamm fornigell ; ar c'hraou a zo a stok ouzh ar sal-chom. Eveljust, n'eus tamm tredan ebet.

Tamallet ez eus bet d'ar voutinelerion kouviañ an dud da vervel evit un tamm amann ; koulskoude n'he devo hor pobl ene ebet abarzh ma c'helle hon tud bevañ evel tud e gwirionez.

Disadorn 31 a viz Here 1942

N'on aet er-maez eus an ti nemet evit kerc'hat

amann en ur vereuri war ribl ar ganol. Kendalc'het em eus da lenn pezhioù-c'hoari Molière.

Ar pezh a feuk ac'hanon a-wechoù eo stumm luban darn eus e rakskridoù, hini "Tartuffe" da skouer. Heugus eo kehelañ un den ha na oa nemet ur c'hoarier, ar roue Loeiz XIV, a zalc'he roll ar "veurdezh" hag un hanter doue. A-hend-all, peseurt priz a c'helle reiñ da dostennerezh ar sklaved-se : meuleudi hor c'hendere he deus pouez hepken.

Dilun 2 a viz Du 1942

Glav puilh e-doug an deiz ; n'em eus ket gallet mont da Roazhon. Chomet on e Sant-Jermen.

Koun a zeu din bremañ eus emzivizoù am eus bet gant J.M. e-kerzh sizhun an arnodennoù (e bedet em boa da zont ganin da welout Hamon ; e soñj edon prestañ da hemañ un dastumad eus kaieroù ar "Gesellschaft für keltische Philologie" a-benn e zegas marteze dre an hent-se da bleidiñ gant ludennoù Breizh). War an hent hor boa komzet d'ur mare diwar-benn beleision - J.M. n'en doa ket kalz istim evito - hogen kavout a ra din ne glot ket nemeur e skiant prenet gant va hini war ar poent-se. Diaes eo din, da skouer, diwar va buhezadur, tuiñ a-grenn d'an diogeladur-mañ : an holl eskibion hag arc'heskibion a zo frañmasoned ! Kompren a ran mat tre n'en dese ket unan ar feiz kristen mat divarc'het on evelkent gant hevelep kredennoù ; ar re a embann anezho a gomz bremañ eus ur feiz nevez hag a venn pleustriñ ur vuhezgezh nevez ivez : bezañ kriz ha kalet, evel diamant ; ha birvilhet holl e fell dezho marvel evit ar vro. Met petra eo ar marv nemet hon netraidigezh ? Da vihanañ petra 'c'hell bezañ evito a-hend-all ? Seurt emzalc'hoù n'int ket gwirion a-grenn, a gav din, ha stumm ar c'hoariva a gavan ganto ; ken aes eo da unan sevel ur pezh c'hoari dezhañ e unan !

Dimeurzh 3 a viz Du 1942

Hiziv em eus ambrouget N. ha M.H. betek ar porzh-houarn. Hogos kreisteiz o oa. Digoumoul an amzer hag hinon evel d'ur beure hañv ; a-vec'h e oa un tamm freskiñenn en aer, ur mouch avel bep ar mare. Sioul e oa ar maezioù ; ar gwez o deus miret o deil c'hoazh ; geot ar pradeier a oa flamm ha lufirus evel da goulz an nevez-amzer ; war an dremmwel e oa astennet ul latarenn skañv arc'hlas. Goustadik e tistrois d'ar gêr ha me o tañva gant un iskis a zudi peoc'h ha douter diseurt an natur d'an eur-se.

Skeiñ a ris war-du Roazhon e tro peder eur hanter o tegouezhout ne gavis den ebet er gêr. Un droiad a ris neuze o levrdi Breizh : prenañ a ris kentañ levrenn oberennoù klok Ronsart ha Marot ha "Dictionnaire philosophique" Voltaire. O tont war va c'hiz d'ar gêr e kejis gant an Troadeg hag an Danteg a oa o paouez selaou ur gentel c'hresianeg gant Louis er Skol-veur.

Dimeurzh 4 a viz Du 1942

Kentel gentañ er Skol-veur : latin gant Maréchal a roas alioù fur d'ar studierion. "Debrit mat, se a zo a bouez, dreist-holl an dimezelled ha na vont nemet dre ar spered," emezañ. "Ma n'hoc'h eus ket tan, chomit er gwele da lenn Vergilius hag e tommo deoc'h," a gendalc'has. Erfin, komz a reas eus an Alamaned. "Diskouezit perzhioù-mat ho kouenn..." (an hini c'hall eveljust rak gall eo Maréchal.) "Diskouezit ez eus ur sevended c'hall..."

Diriaou 5 a viz Du 1942

Ranket em eus ober un dro e Sant-Jermen : ne oa ket mui amann na pourvezioù all er gêr. Erruet da c'hwec'h eur d'abardaez e rankis chom da nozvezhiañ du-se. Selaou a ris ar skingomz saoz : ar Saizon a oa o lidañ o zrec'h nevez e Bro-Ejipt. Lavarout a ris da Y. ne oa ket a bouez evidomp an taol-brezel-se ; n'hor boa ket da zamantiñ d'ar pezh a c'hoarvez er-maez eus Breizh, nemet diouzh m'en defe levezon war-egun war dazont Breizh.

Digwener 6 a viz Du 1942

Distreiñ d'ar beure-mañ. Daou gilometrad bennak a-raok diraez Sant-Gregor avat e hopas ur paotr war varc'h-houarn a zeue en arbenn din : Diwallit e-tal ar "vengleuz" ! ("Ar Vengleuz" a zo anv ul lec'h etre Sant-Gregor ha pont Sant Marzhin). Chom a ris a-sav ha goulenñ a ris diskleriadurioù. Eno, eme ar paotr, e oa stanket an hent gant ar c'herreizh hag a furche ebarzh pakadoù konent hini a dremene dre al lec'h-se. Laezh, amann hag avaloù a zegasen ganin avat (gwell a se, bleud ebet : gant al lezennoù nevez ne vefe ket bet brav). Goude prederiañ e lezis va bitailh en ur vereuri bennak war ar maoz (tud kozh a oa eno hag a voe hegarat tre). Heuliañ a ris un hent douar a gase betek troad Tuchenn-Vrulu, e-tal an ti-palem. En tu-se ne oa polis ebet. En endervezh e tistrois da gerc'hat va fourvezioù.

Ar varc'hadourion laezh a glasked gwiriañ d'ar hent Sant-Gregor : setu pezh am eus klevet atav.

Disul 8 a viz Du 1942

Pleustradennoù ar "Bagadoù-stourm" giz nevez hiziv. Kemm a zo deuet enno e-keñve r ar re a veze graet warlene. Da gentañ n'hor boa ket ar memes kelennerion. E.T. an hini eo a oa ouzh hor gourdoniñ ar wech-mañ. N'anavezen ket anezhañ betek hiziv. Ur melegan gant daoulagad glas a oa anezhañ, dodennus ha speredet kaer, war a hañval. Eus Paris e teu ha labourat a ra bremañ er "Bretagne" hag er "Framm keltiek". Graet en deus doomp ur brezegenn diwar-benn palioù



ar "Bagadoù Stourm" : an hini pennañ e vefe pourchas izili ul lu a vefe karget da sevel ar Stad pe da harpañ anezhi, hervez ma vo savet ar Stad tamm-ha-tamm (setu pezh a c'hoc'h-veze a-hervez) pe en un taol (an dra-se a c'hell degouezhout ivez). Keñtridi ar Bagadoù Stourm a vefe eta difenn ar vro hag ar Stad. Padal ne oa ket anv a reiñ ur gourdonerezh soudardel deomp ; ne vefe roet nemet d'ar re a c'houlennfe. Hag a zegemerfe goude ober berzh en o arnodenn un testiñ o barrekafe da vezañ ofisour e lu ar Stad vrezhon.

Daoust ma oa obererezh ar Bagadoù Stourm politikel dreist-hollwar ur bazenn gentañ - anv a voe gant T. a ober ergerzhadennoù tro-dro da Roazhon da werzhañ ar gazetenn. e c'houlenned digant izili ar B.S. diskouez doujañs d'o usurzidi en o darempredoù a-geñtridi, chom hep teal o komz outo. Eñ ivez arc'he groñs e tegouezhfe an izili d'ar bodadegoù d'an eur rik.

En endervezh e oan distroet d'ar vodadeg. Kentelioù jiu-jitsu ha dornataerezh (gall hag amerikan). Didalvez awalc'h em eus kavet ar c'hentelioù-se : n'eo ket va micher, a gav din, pleustriñ war seurt embregerezhioù. En dro-mañ ne oa ket deuet an Aridon nag ar R. na Rivier.

Ur gentel a voe graet diwar-benn Iwerzhon hag a selacuis evel ur bugel fur, ha dilavar. E.T. a sclbant bezañ komprenet ervat kudenn Vreizh : ur sevenadur hon eus da adsevel dre ar yezh. Ar pal-se ne c'hell ket bezañ diskuliet d'ar bobl war-eeun rak ne vefe ket gouest da gompren. Ar stourmerion avat a rank deskiñ o yezh koustet pe gousto.

Adarre en doa komzet T. eus al lu a vefe da grouiñ. E-pad an hañv end-eeun e oa bet graet pleustradegoù : hanter-kant paotr o doa bevet war ar maez e-doug dek devezh, o kousket er mereurioù, o teskiñ tagañ hag aloubiñ tiez a-berzh-stad ha lec'hioù-kreñv. Bremañ e oant barrek avat. Pezh a oa a bouez ivez : gouest e oant da chom er vro hep bezañ merzet. En ur seurt brezel ez eo se ar pep pouzusañ.

M eus aon avat n'en doa ket T. re a fiziañs en e zanzev soudarded. Evit aropiñ anezho marteze en doa dezrev-ellet un arnodad en devoa kaset da benn e Paris nevez zo. Kemennet en doa d'e baotred en em vodañ un devezh bennak da ziv eur goude kreisteiz, en ur rezizañ ne vefe ket diriskl marteze an afer a oa da gas da vat. Meur a hini, padal, en doa argilet ha ne oa ket deuet. Digarezioù o doa roet eveljust : unan en doa ranket mont da weladenniñ e voereb, ha me 'oar-me. Petra a vefe en deiz ma vefe arvar o gwirionez ? a glozas ar gourdonour.

A-hend-all (hogen daoust ha souezhus eo?) o plije E.T. d'ar baotred en abeg d'e daarded end-eeun. Pezh a ziskouez e kav an dud reizh e ve goulennet kalz diganto : graet int evit en em reiñ.

Distroet oa war-eeun d'ar gêr.

Dilun 9 a viz Du 1942

Kentel gembraeg krenn gant Per ar Rouz er Skol-veur. Evel warlene en deus hir brezeget diwar-benn ar c'hembraeg en argoll. N'en deus ket merzet mat c'hoazh, a gav din, peseurt louzoù a c'hellfe parañ anezhañ. Amprestet em eus un dornlevr kembraeg krenn met siwazh e saozneg eo skrivet ar raklavar hag an notennoù.

Bez e oa er gentel-se : an Helloko, Youenou, A.E., Kentel, ur c'henvreur da hemañ el lise (anavezout a ra ar Rouz), ur studier war ar gwir (gant hemañ e rejomp anaoudegezh ha dezhañ e rojomp kuzulioù e-leizh diwar-benn an doare gwellañ ha surañ da zeskiñ ervat ar brezhoneg).

Goude-se e chomjomp A.e., an Helloko ha me da vreutaat diwar-benn an darvoudoù (dilestret eo an Amerikaned en Afrika an Hanternoz.) O mennoz : un taol fall eo evit brezel an Alamaned. Evidomp hag e-keñver politikerezh - se en degouezh ma vefe trec'h an Alamaned - e c'hellfe bezañ bevez rak torret e vefe ar c'henvreur etre an Alamaned hag ar C'hallaoued maz afe ar re-mañ a-du gant ar Saozon endro.

Daoust ha dianzavet e vefe an arsav-brezel gant an Alamaned (sur eo ne stourmo ket ar C'hallaoued a-enep d' ar Saozon-Amerikaned daoust d'ar pezh a gonte din ar C'homis-er Piat) ? Moarvat, eme an Helloko, ha daoust ma karfe an Alamaned lakeat an argrap war ar strollad-listri gall e Toulon, ne gredint ober hevelep kammed : aesoc'h eo reoliñ ur vro dre al lezenn eget dre an nerzh rik ha lezenn Vichi a zo talvoudus d'an Alamaned. Da c'hortoz, eme an Helloko, e teuy Europa da vezañ un enezenn sezizet penn-da-benn ha gwashaat a ray an naonegezh enni.

Sernnoziñ a rae pa ziskennis gant A.E. betek kovrenn ar Skiantoù. Vallee a oa klañv adarre, a zisklerias A.E. Ar gozhiñ a zo kiriek emic'hañs : abarzh pell e tremeno emezañ. Pa vez bet ur vuhez ken leun hag e hini n'eus ket da gaout keuz o vont kuit, a glozas A.E.

Edo o kenskrivañ d'an ampoent gant Meven Mordiern diwar-benn al levrioù gouziziegezh a felle dezhañ sevel. Hag a-hend-all ez eo beuzet dindan al labour rak e dibenn ar bloaz eo mennet da dremen ar skolveuriegadur.

War a glovan e vefe bet prizoniet Darlan gant an Amerikaned hag ar soudarded c'hall a vefe serret en o c'hazarnioù gant o armoù (divezhatoc'h e ouezis e oa aet Darlan a-benn ar fin a-du gant an Amerikaned hag en doa kou-viet ar Strollad listri gall, en anv ar Marichal, da gen-stourm adarre a-gevret gant ar Saozon hag an Amerikaned).

E ser arsav-brezel adarre : hervoz an Helloko n'o defe an Alamaned gounid ebet ouzh henn terriñ : ar vroad a-bezh a savfe a-enep dezho ha kreskiñ a rafe buan niver an dispac'herion dre ma teufe anat diskar an Alamaned. D'ar c'houlz-se e rankfont derc'hel e Bro-C'hall bagadoù soudarded a vije talvoudus dezho e-lec'h-all.

Dimerc'her 11 a viz Du 1942

Hitler en deus kaset ul lizher d'ar Marichal Pétain evit diskleriañ dezhañ e ranke difenn ar C'hallaoued a-enep do enebourion peogwir ne oant ket barrek d'henn ober o unan ; asantiñ a ra avat e rofe ar C'hallaoued skoazell dezhañ evit argas an alouberion diouzh trevadennoù Bro-C'hall. Tamallet en deus ur jeneral gall, Giraud e anv, en deus sachet e gilhorou gantañ, a-enep da bep lealded, hag a zo oc'h iriennañ gant an Amerikaned en Aljer. Seven kenañ eo an "aotrou" Hitler ouzh an "aotrou" Marichal. Hervez ar gazetenn e fell d'ar "C'hañsellour" Hitler "défendre la France contre la piraterie anglo-saxonne..." Pebezh korvigelloù gant gouenn ar vistri ha pebezh c'hoariva pilpouz en o folitikerezh !

Dec'h e oan aet d'ur gentel brezhoneg er Skol-veur gant Per ar Rouz. Flaenaet ez eus bet ur pennad eus "Gurvan" : Kan Glanhael. Kaer meurbet ez eo.

Ambrouget em eus Kentel betek al Lise. Troet en deus kontadennoù Edgar Poe penn-da-benn, emezañ : ur gwall labour.

Torret eo an darempredoù etre an Amerikaned ha Bro-C'hall. Darn a zouj na ve galvet an dud yaouank d'an armeoù ... evit difenn trevadennoù Bro-C'hall. Brozennoù a red adarre : Doriot a vefe bet lazhet ; neuze ne vo ket lakaet e penn ar gouarnamant gall ; bleuniañ a ra a nevez an diouganou : anv a zo eus hini "La Salette"...Kontañ a reer en defe P. en emanvet da bennrener lu Bro-C'hall hag en defe savet e vouezh a-enep da dorrador melloù an arsav-brezel ; ur vroenn all a asur zoken e vefe dinijet da Afrika a-govret gant Weygand evit dizarbenn an Amerikaned ; ar gouarnamant gall a zeufe d'en em staliañ e Versailles (an "Ouest-Eclair" ho deus skuilhet daerou a deneridigezh dre maz eo bet gwintet ar banniel gall e Versailles pe en ur vourc'hadenn all eus ar genna dalc'het : pebezh darvoud!)

Darlan en deus troet tu d'e chupenn ; a-du gant ar Saozon hag an Amerikaned emañ. Ne oa ket gwall garet e Lunden koulskoude. Soñj am eus ag ur rimadell a veze kanet er skignlec'h saoz n'eus ket pell, war un ton damheñvel ouzh hini an "De Profundis" :

Il est des enfants  
qui n'ont plus de père,  
prisonniers d'Hitler  
ou bien de Darlan...

Ar vourc'hizion e kêr o deus aon spontus rak an dispac'h. An it. L. da skouer : houmañ, a-hend-all n'he deus tamm fiziañ ebet er Saozon : kredañ a rafe awalc'h e klasko ar re-mañ derc'hel an trevadennoù o devo skrapet.

P'en deus gouezet ar c'heloù en deus diskleriet L.R. d'ar beure-mañ : ur vro ouzhpenn da vagañ bremañ m'eo dilamet al linenn-harz !

Digwener 13 a viz Du 1942

E Sant-Jermen evit kerc'hat bitailh: amann, vioù, bleud, saladenn h.a.

Va zad en deus adkroget gant e labour ; aet e oa d'ober un droiad. N'eus ket bet anv eus e yec'hed er gêr.

Gwall nec'het eo va mamm evit meizañ an darvoudoù: Darlan a oa dec'h o kunujañ ar Saozon ; hiziv ez a a-du ganto ; dec'h ne wele silvidigezh ebet evit Bro-C'hall nemet er c'henlabour gant Bro-Alamagn ; hiziv n'eus mui silvidigezh ebet nemet e sikour an Amerikaned.

Da c'hortoz en deus Laval kemeret e lec'h e Vichi.

Evit va zad, prenet en deus un Almanak ar Postoù gant skeudenn Bétain : emañ o c'hortoz dezhañ ober taol Darlan, emichañs.

Disadorn 14 a viz Du 1942

Lennet em eus war an "Ouest-Eclair" ez eus bagadoù soudarded alaman o touarañ e Tunizia. Adunvanet da vat eo Gallaoued hag Alamaned, petra bennak ma ne gredan ket nemeur e oa Pétain kement-se a-du gant an "taol-skouz" a zo bet roet dezhañ gant an Alamaned. Gant kement-se n'eo deus ket ar C'hallaoued gonezet kalz tra, 'm eus aon.

Dimurz 17 a viz Du 1942

Bodadeg evit ar studierion. Ur skritell a oa bet peget dindan porched ar Skol-veur evit komenn ar vodadeg-se. A-benn dedennañ ar studierion e kinniget dezho en em gevredañ gant ar studierion vrezhon evit onebiñ ouzh ur reoliadur emañ ar melestradur gall o prientiñ hag a grenno niver ar studierion war ar medisinerezh.

Mont a ris d'ar vodadeg da noz. Tud yaouank nevez a gavis eno, distank awalc'h (plac'h yaouank ebet koulz lavaret ; n'eus broadelourez ebet e-touez ar studierezed ebet, a gredfen awalc'h), an darn-vuiañ anezho avat gwiraourion pe zanvez mezeion.

An Aridon - a zo e penn kevrenn ar studierion bremañ - an hini eo a brezegas, gant lid ha furnezh. Muioc'h a fo hag a entan en devoa L.M., a gav din.

Dimerc'her 18 a viz Du 1942

Keal a zo eus prosez Varnière, ar Frañsist en doa drouklazhet ur vaouez kozh, kenwerzhourez e st. ar Chabistr. An darn-vuiañ eus paotred ar Strollad-se a zo livastred, a gredan. Ar re-se eo a vez o klask hon trubuilhañ bepred.

Diriaou 19 a viz Du 1942

Distreiñ da Sant-Jermen evit kerc'hat pourveziou.

Ar vro he deus gwisket he stumm goañv : diginkl ha noazh, damzu, glanoc'h he linennoù, siouloc'h, evel moredet ha morzet.

Darlan en deus goulenet digant an holl listri gall en em dolpañ ebarzh porzhioù-mor dizalc'h diouzh an Alamaned. Diogelet en deus ne oa ket dieub Pétain hag e vije a-du gantañ ma vije dieub. Da c'hortoz ez eo bet dizornet eus e garg a zanvez rener-stad war-lerc'h Pétain.

A-hervez n'en em glev ket mat De Gaulle ha Géraud en Aljer.

Va mamm he deus aon spontus na ve galvet an dud yaouank a oad ganin da soudarded dandan urzhioù Gall-aoedet a-du gant an Alamaned, da lavarout na vomp soudardet gant an Alamaned.

E Roazhon da bemp eur hanter.

Da seizh eur hanter on aet da gentel digeriñ bloaz ar Skol-Uhel Emil Ernod. Graet e vo ar c'hentelioù hevlene e ramdi ar gazetenn "La Bretagne", 19 st. ar Moneiz. Kalz a dud a oa en em gavet du-se pa zegouezhis : Youenou, an Helloko, A.E., Bernier, ar Mee hag e wreg, an dim. Peres, Feutre (keneil Per ar Rouz, o pleustriñ war ar gwir.)M.Y., E.T., Z. Langleiz, Roperzh Steven hag un nebeut tud all, war-dro 25, a gredan.

O c'hortoz ma errufe Roparz Hemon a oa dalc'het gant ar skingomz e oamp en em vodet en ur sal vihan e-lec'h o oa miret un dastumad eus ar gazetenn "La Bretagne", na petra, keinet kaer (o follennata an niverennoù diwezhañ e kavis ur pennad gant E.T., pezh a ziskouez ez eus broadelourion vat o skrivañ er "Bretagne" a-wechoù).

Pa voe degouezhet Roparz Hemon en em dolpomp en ur sal all hag ar skrivagner a grogas gant e brezegenn en ur brezhoneg dilorc'h kenañ - re zilorc'h d'am soñj zoken rak ne blije ket din kalz an implij a rae eus ar ger "tout" - distaget e-giz Bro-Leon.

E lodenn gentañ e gaozeadenn e reas Roparz Hemon istor an emsav lehnegel broadel abaoe deroù ar c'hantved, o venegiñ labour Vallee, krouidigezh ar yezh skiantel gant an NOTENNOU hag ar SKETLA (hogen ur giladenn e voe ar SKETLA en ur stumm.)Ouzhpennañ a reas en doa klasket Berthou-Kaledvoulc'h aozañ ur yezh evit ar brederouriezh dre skrivañ LEMENIK daoust ma anzave e oa luziet ha disklaer ar mennozioù a oa displeget en oberenn-se.

Neuze en doa dezrevellet penaos e oa deust da vezañ brogarour breizhat. Ur c'halvedigezh a seurt gant e hini, emezañ, a oa ur c'hevrenn rak e c'hoarezed o doa en em gavet en hevelep tiegezh hag eñ, en hevelep plegennoù, en hevelep aergelc'h ha ne oant ket troet evit kelou se da vroadelourezed ; n'oant ket a-enep d'an Emsav hogen diseblant e oant outañ. Moarvat e oa kiriek d'e vrogarouriezh galv ar ouenn, galv ar reizhded ivez rak ne c'hell ket ar gaou bezañ trec'h en hor bro.

Setu bremañ penaos e oa kont gant ar yezh en e diegezh. E dad-kozh a oa ul Leonad ; n'en doa desket galleg nemet diwezhat awalc'h pa oa deust da chom e Brest. E vamm-gozh avat a oa Gwenedourez ha peogwir e kave diaes intent brezhoneg Leon he doa kavet gwell kemer ar galleg en e lec'h. Daoust d'e dad bezañ brezhoneger a-vihanik avat n'en doa desket nemet galleg d'e vab, evel an holl vourc'hizion dereat ; a-hend-all ne veze ket er gêr alies ; e vamm kennebeut n'he doa ket kalz amzer d'ober war e dro ha setu penaos e oa bet fiziet e mitizhien : ar re-mañ avat ne ouient nemet brezhoneg ; e dad-kozh, emezañ, a yourre o vrezhonegañ ganto pa n'en deveze netra all da ober a-hed ar sizhun ; stag tre e oa ouzh ar brezhoneg (savet en doa ur yezhadur brezhoneg a-hervez hogen a oa bet kollet moarvat rak biskoazh ne welas al liv anezhañ) ha doaniet e oa bet dre ma oa chomet e vugale vihan hep deskiñ anezhañ.

Gant ar mitizhien eta e kleve R.H. kalz brezhoneg. An hini ma oa bet fiziet enni end-arbennik a gase anezhañ ganti d'ober gweladennoù d'he mignonezed e fabourzioù Brest ; eno e keje gant komerezed señer hag helavur a chome da varvailhat hep skuizhañ e-doug eurvezhioù en ur lipat banneoù hini-kreñv ; an avreloed a veze disoñjet un tammig e-keit-se ; bep an amzer evelato e taolet ur sell warnañ hag e rannet ur ger bennak gantañ, e galleg en dro-mañ, rak mab un aotrou e oa, ur bugel dereat, er penn-kentañ atav rak a-benn ar fin o doa kemeret ar pleg ivez da gaozeal e brezhoneg gantañ ; aesoc'h hag eunoc'h e oa.

Evel-se eo e voe desket ar yezh gantañ da gantañ, a-drugarez da gKourintina ("rak," a ziguzhas deomp Roparz Hemon, "gwirion eo ar gontadenn am eus savet dindan an tal-benn "Kaourintina".) Eveljust ne oa ket gwall uhel ar brezhoneg en doa tapet ganti : gerioù divalav awalc'h a zeue gant ar vatezh a-wechoù met, petra fell deoc'h, un deroù a zo da bep tra! Paour kaezh Kaourintina! Un devezh e klukas ur banne re ; he si a voe anavezet er gêr ha stlapet e voe ar gelennerezh vrezhoneg war ar pavez hep tuez ebet.

Ar plac'h a zeuas war he lorc'h ne ouie da gentañ tamm galleg ebet ; klasket he doa deskiñ (speredek e oa, ome Roparz Hemon) hogen n'he doa gouezet biskoazh nemet un tamm galleg saout daoust ma oa techet muioc'h eget eben da ober gant ar vrizh-yezh-se. Gant he sikour hag hini e dad-kozh koulskoude en doa klasket Roparz Hemon diluziañ reolennoù yezhadur ar brezhoneg ; ne zeue ket aes a-benn, ret eo anzav, hogen ne vern, ar youl da c'houzout ar yezh en doa.

Ar pezh en doa lusket anezhañ da vat da studiañ ar yezh e voe prenañ ul levr istor Breizh, hini du Cleuziou, e-lec'h e oa moulet lennadurioù e brezhoneg e dibenn pennadoù zo (a-hend-all, evit e c'hoar he devoa ur brezegenn da ober diwar-benn istor Breizh e oa bet prenet hogen houmañ n'he doa ket prizet kemer anezhañ p'he doa gwelet e oa brezhoneg ennañ).

Roparz Hemon eta en doa miret al levr ha gant skoazell ar vatezh e klaske digejañ al lennadurioù-se ; lenn a rae ar skridoù-se a vouezh uhel dirazi hag o daou e klaskent divunout petra oa ster ar frazennoù ; meur a wech, eveljust, e choment berr gant o zroidigezh hogen tamm ha tamm evelato e teuas da voazañ evel-se ouzh stumm ar yezh lennegel, evel ma oa skrivet en amzer-se, da vihanañ.

Diwezhatoc'h e kemas ar pleg a vont da brenañ levrioù brezhonek e levr di Derrien. Eno e kave niverennoù eus "Feiz-ha-Breiz"; war unan eus an niverennoù en doa lennet ur wech embannerezh evit dornlevr Frañsez Vallee : "Le Breton en quarante leçons". Kerkent en doa skrivet da bPrudhomme evit urzhiadañ al levr. Neuze en doa staget da vat da zeskiñ ar yezhadur brezhonek. A-c'houdevezh en doa pourchaset an "Notennoù" ha levrioù all.

Epad ar brezel kentañ e oa aet da beurzeskiñ ar saozneg e skol-veur Leeds e Bro-Saoz ha graet en doa e vad eus e chomadenn du-se evit ober troiadoù e Bro-Gembre; d'ar c'houlz-se ivez en doa bouc'het studi ar c'hembraeg. Du-se avat e vourre o vroudañ ar Saizon e ser ludenn Iwerzhon (e 1916 e oa c'hoarvezet an emsavadeg) ha lakaet en doa unan eus e vignoned saoz da gounnariñ ur wech o treiñ dezhañ ur pennad brezhonek diwar "gKroaz-ar-Vretoned" a-zivout ar vrogarourion iwerzhonat.

E diwezh 1918 e oa bet galvet d'an armeoù gall ha kaset e oa bet da jubennour gant an Amerikaned e Bro-Alamagn. E-keit-se en doa kendalc'het da studiañ ar brezhoneg hag ar yezhoù keltiek ; desket en doa alamaneg d'ar marc-se.

Danevellañ a reas deomp un darvoudennig a ziskoueze d'e soñj e oa ar Vrezhoneg bepred stag o c'halon ouzh o yezh. Nepeñ diouzh e lojez e chome ur Breizhad all a laboure en ur burev eveltañ ; dre fazi e oa bet kaset dezhañ un niverenn eus "Feiz-ha-Breiz" a zleje bezañ bet heñchet betek R. Hemon. Pa oa deuet da zaskoriñ an niverenn-se dezhañ en doa diskouezet ar c'henvroad-se bezañ bamet o tizoleiñ e oa eus ar brezhoneg ur yezh skrivet ; fellout a rae dezhañ koumanantiñ ha deskiñ lenn ar yezh.

Goude e servij soudard el lu gall o oa deuet Roparz Hemon da genderc'hel gant e studioù er "Sorbonne" e Paris. Eno en doa graet anaoudegezh gant paotred an Emsav : Olier Mordrel, Marchal (1), Karoff (2). Betek neuze en defe an Emsav kozh lakaet anezhañ kentoc'h da heñgiñ ouzh ar mennozioù breizhek, ken lu e oa an izili anezhañ gant o lidoù dic'hiz hag o dilhad meurlarjez. En Emsav yaouank, avat, na petra 'ta, e oa peadra da zedennañ un den yaouank. Setu ma krogas - goude bezañ tizhet e barchoù kelenn - da skrivañ ur pennad bep miz e brezhoneg evit "Breiz atao".

- (1) Marchal a zo marv e Paris un nebeut bloavezhioù zo.
- (2) Karoff, betek nevez zo, en doa kavet repu e ti ar re gozh, ar "Biliterenn" e Roazhon. Meur a wech en eus bet tu d'e welout. Ur "barzh" giz kozh a oa anezhañ.

Neuze eo e voe savet "Gwalarn". War a lavare Roparz Hemon e oa bet nec'het bras diazezerion ar gelaouenn evit gouzout peseurt anv reiñ dezhi. E gwir, Olier Mordrel en devoa kinniget unan met hini Roparz Hemon "Gwalarn" a oa bet degemeret en diwezh.

Setu, war-bouez nebeut, danvez prezegenn Roparz Hemon. Dudiet bras omp bet gant kement a zezrevellas deomp. Distreiñ a ris gant Youenou, A.E. ha Feutren. Lakaat a ris Youenou hag A.E. da zont du-mañ : prometet em boa da hemañ al levr "Early welsh" gant Strachan, embannet e Manchester.

Digwener 20 a viz Du 1942

Ur brezegenn gant Laval. N'em eus ket tizhet prenañ ar gazetenn : holl int bet skrapet er stalioù. N'eus ket kalz riskl avat, a gredan, e savfe brezel etre Bro-C'hall hag ar Stadoù-Unanet pe Vro-Saoz. Ne ray ket Laval ar fazi-se.

Ar Marichal ivez en doa graet ur brezegenn : Darlan ne oa nemet ur gaouiad a oa bet touellet e unan, ur renead nac'het gantañ e le.

Konnan eus ar c'helc'h keltiek, mignon da L.R. en deus bet urzh da vont da labourat e Bro-Alamagn, e Dantzig.

Disadorn 21 a viz Du 1942

Kejet em eus gant A.E. el levr di Breizh. Emziviz a savas etrezomp. Prenet en doa embannadur gall ar "Mabinogion" gant Loth ; daou bikol levr a goust llo lur ha leun chouk a ouiziegezh. Va mennoz a zo o frenañ hogen kerik int.

"Nemeton" (1) a oa deuet er-maez, emezañ. N'eus nemet galleg ebarzh avat. Ar gelaouenn-se a gave dudius petra bennak ma oa divoutin awalc'h ar mennozioù anezhi ; klask a rae enni pennadoù diwar-benn skiantoù amguzh an henamzer hag hon amzer-ni. N'em boa ket bet tro da lenn NEMETON : henn follennata n'em eus graet ken. Mulet ha keinet brav ez eo, war baper kaer, ha ker ez eo a-hend-all. Ne gav ket din o deus ar pennadoù embannet enni kalz a dalvoudegezh o vezañ maz int diazezet war zieloù diwirion (re Iolo Morgannwg). Evit ar mennozioù n'int na kristen-na drouizel na keltiek, kempred ne lavaran ket, diskrapet avamañ hag avahont, hep nemour a dalvoudegezh, a soñj din, nemet e par enno ur brizhazeulerezh eus ar ouenn ha na blij ket din nemour.

- (1) NEMETON a oa ur gelaouenn "drouizel" ha nevezpagan, mui pe vui, a oa renet - nemet faziet e vefen rak n'em eus ket getlet gwiriañ - gant Rafik Tulou, un arzlicherour roazhonat. Kerverzioù a zlee kenskrivañ enni, a gredan.

Mont a ris gant A.E. d'al lenndi. Mennet e oan da c'houlenn levr Bérard diwar-benn an Odusseia hogen ampreset e oa bet an oberenn-se endev (A.E. a lavaras din en defe karet ivez lenn anezhi evit studiañ... douarouriezh inizi Bro-C'hres). A-benn ar fine chomjomp o lenn pep a vloavezhad eus Gwalarn hor boa ampreset : hini 1935 evidon-me.

Noziñ ha brumenniñ a rae pa zistrojomp, gouyen an amzer. Pourmen a rejomp dre stradaoù kêr ; eus meur a dra e voe keal : ar brezel, an darvoudoù diwezhañ. Hervez un diougan anavezet gantañ (savet eo bet gant ur Poloniad) e tlefe ar brezel echuiñ e 1945 ; adkregiñ a rafe e 1960 ; (ne oa ket spisaet piv a vefe an trec'hour avat). Goude-se e vefe fin ar bed, eus hor bed-ni, a rezizas A.E. a zo bet gwellaour a-viskoazh.

Disul 22 a viz Du 1942

Tremen ar beurevezh evel boaz nemet ez eo deuet L.R. da gemenn din e oa ur vodadeg evit ar "Bagadou-stourm" on devezh-mañ. Dek eur e oa a-benn neuze avat ha re ziwzehat a-benn neuze : chom a ris er gêr. En endervezh ez is eta. Ne oa ket kalz tud (nebeutoc'h c'hoazh d'ar mintin : n'oant nemet seizh ha Rivier n'oa ket en em gavet ; a-benn ar fin e oant act da werzhañ ar gazetenn ; o holl skouerennoù o doa dar-naouet ; Frañsist ebet ne oa erru d'o zrubiilhañ nemet unan - bet barnet nevez zo - a oa chomet da harzhal outo a-bull.)

E.T. avat a oa anozet. Jedet en doa gant penn-rener ar B.S. e tleje kaout 35 paotr da skoliañ e Roazhon ha n'en doa nemet dek. Ar genurzh ned ae ket mat endro.

Skoliañ a reas evelato hag eñ imoret fall. Ne voe ket pleustret war ar c'hlezeataerezh, evel ma oa bet kuzuliket hogen hor c'helennar a reas deomp un displegadenn diwar-benn gwiraouriezh an hon Geltaed (tonnet diouzh levr Hubert, a gredan). N'oa ket bet dedennet biskoazh gant seurt danvezioù ; dister eo pezh a anavezomp diwar-benn ar Geltaed kozh hag Iwerzhoniz a oa kristenaet d'ar mare m' en em ziskouezont en Istor.

Keltgar ez eo T. hep mar ebet. War e veno e oa ur C'helt - a ouenn - eus ar C'hrist. Ar gredenn-se a loc'h diouzh ur mennad mat met diaes eo henn degemer da wirionez an aviell.

Goude ar gentel e voe pleustret war al leviataerezh war droad : en eneb... kit, kadervenn war ur vrec'hiad, war un ilinad, evel warlene nemet izili nevez ar B.S. er bloaz-mañ n'oant ket bet gourdonet biskoazh c'hoazh war an embregerezh-se.

Distreiñ a ris war-eeun d'ar gêr. E.T. avat a yeas da selaou prezegen an ao. beleg Falc'hun "Ar brezhoneg hag ar yezhoniezh a vremañ" e savadur kevrenn ar Skiantoù. An Troadeg hag an Danteg a oa en em gavet du-se ivez, a-hervez, hag A.E. N'oa ket douget tamm ebet avat da bleidiñ gant ken uhel danvezioù ha gwella e kavis dont da ziskuizhañ er gêr.

Dimeurzh 24 a viz Du 1942

Hiziv, kentel brezhoneg er Skol-veur gant Per ar Rouz. Evel ma reas meur a wech warlene e studias ganeomp an "Atlas linguistique". Goude-se e plaenaas ur pennad eus "Gurvan, ar marc'heg estrañjour". Prestañ a reas din zoken ur skouerenn eus an obereñ-mañ (hag a zo piaouet gant al Lenndi a-hend-all).

Lennet em eus ar skrid d'abardaez, buan awalc'h e gwir. N'eus ket eus "Gurvan..." ur pezh-c'hoari avat, ur varzhoneg ne lavaran ket.

E-touez ar selaouerion e oa Pol Kentel, Roperzh Steven, Feutren, Yeouenou, an Dr. Renault (1).

Ambroug a ris Debeauvais, Roperzh Steven ha Feutren betek ar Winun. Divizout a rejomp diwar-benn an "Atlas linguistique" ; R.S. a lavare e oa hemañ diwir war veur a boent - hag e oa brezhoneg ar C'hab eus ar gwellañ.

Goude bezañ kimiadot diouzh R.S. ha Debeauvais e pignis endro war-du ar st. Sant-Melani a-gevret gant Feutren ha gant hemañ e ris neuze gwelloc'h anaoudegezh.

Dont a ra a-benn da gomz madik awalc'h ar yezh a-benn bremañ daoust ma estaolfe aesoc'h e soñj e galleg, a gav din. Eus Sant-Brieg e oa, emezañ, tremenet gantañ ar vachelouriezh warlene (ar brederouriezh a blije dezhañ kalz) hag hevlene e studie ar gwir en ur brientiñ un "aotregezh dieub" gant testenioù war ar gevredoniezh, ar yezhoù keltiek hag istor Breizh, a gredan. Broadelour e oa hag c'zel eus ar B.S. (en unvanwisk edo er C'hendalc'h e Roazhon hogen n'em boa ket taolet evezh outañ). Padal e klemme dre ma kave dezhañ ne oa ket awalc'h a vuhez vreizhat e Roazhon.

E Sant-Brieg, gouez dezhañ, e oa kalz birvidikoc'h an Emsav. Trubuilh en doa bet gant ar polid du-se endev, a gondalc'has : aet e oa da begañ skritelloù brogar e kêr da geñver gweladenn Monsieur Lamirand a-berzh ar Marichal ha Darlan (n'oa ket un treitour anezhañ c'hoazh en amzer-se) hag ivez da zispegañ ar re a oa lakaet gant paotred Vichi hag a dous karantez ar Vrezhoneg evit Renor doujet ar Stad ; o'h ober al labour brav-se e oa bet harzet gant ar bolised, a-gevret gant Foucray a-hend-all. A-drugarez d'ar "Provisour"-

ha n'oa ket a-du tre gant an "Dispac'h broadel" moarvat - e oa bet divac'het a-benn ar fin.

Prezegennoù a oa d'abardaez er Skol-Uhel Emil Ernod : unan gant A.E. diwar-benn bouedoniezh hag unan all diwar-benn n'ouzon mui petra gant an Helleko. Hogen ne c'hellis klevout nag an eil hag eben rak re ziwzehat e erruis d'an 19 st. ar Moneiz, : premet e oa an nor.

(1) An Dr. Renault a oa ur Roazhonad a reas war-dro ar "Bleun-Brug" e Roazhon war-lerc'h ar brezel bed kentañ hag a oa a-du evit reiñ dezhañ un enzalc'h politikel. Un den madelezhus a oa anezhañ, lezanvet mezeg ar beorion. Chomet e oa dizemez goude bezañ kollet e zavez-pried, war a glevis. Hignon Debeauvais e oa bet. Ur c'hozhriad gant barv gwenn a oa anezhañ p'è anavezis. E di,etal iliz St-Jermen, a zo bet distrujet abaoe.

Dimerc'her 25 a viz Du 1942

N'eus ket nemeur a geleier diwar-benn ar brezel. Stalingrad a chom etre daouarn ar Rusianed, evel Leningrad ha Sebastopol. Ar Rusianed o deus kaset war-raok div argadadeg ; unan war-dro Stalingrad, etre ar Stêr Don hag ar Stêr Volga ; en turkez o deus antellet eno e vefe paket 250.000 alaman ha rouman ; un argadadeg all o defe lusket war-dro Kjev (?), e-keñver Moskov : war-hed 30 kilometrad int aet war-raok.

Komzer Radio Paris a gomz eus droukverzhioù Bro-C'hall gant ur vouezh ken trist hag hini an Anaon : an dreitouriezh a zo o sevel e pep lec'h er mare-mañ a gas Bro-C'hall d'ar bez, emezañ. Graet en deus eus Darlan "un cas pathologique". A-hend-all ne ra ket marvailhoù hir diwar-benn drouklammoù an Alamaned. Gouez dezhañ e vez diz-arbennet holl argadoù ar Rusianed "avec de lourdes pertes" a-hed ar wech. A-wechoù ivez n'eo ket gouest ken patred en Ahel da argas tagadennoù o enebourion. Klevet em eus nevez zo e oa bet Torino bombezat da vat epad an noz.

En Inizi Salomon n'em eus ket tizhet gouzout c'hoazh petra a oa c'hoarvezet, hag-ef ez eo aet an tu-kreñv gant an Amerikaned pe gant Japaniz. E Gualdecanar ez eo ken disklæer all an traoù. A-hend-all n'ouzon ket re vat o pelec'h emañ an enezennoù-se.

Morgad a zo bet nevez zo ivez er meurvor Habask. Dianav deomp an disoc'h anezhi avat. E Gwinea-Nevez ez eus emgannoù ivez : an tu-koll a zo gant Japaniz, war a seblant.

Evit distreiñ da C'hallaoued Paris : sodiñ a reont da vat o soñjal en Darlan yudas-se (ma oa klañv e vije bet mat kas ar medisin dezhañ a-raok e zileuriañ da Aljeria!) Buccard a fell dezhañ lazhadegañ an holl Frañsizion fall (da lavarout eo an holl re n'int ket a-du gantañ). Ret eo bezañ "féroce", emezañ ; an "Dispac'h broadel" a zo marv ; n'eus forzh : dav eo fuzuilhañ an holl re a oa a-enep dezhañ. Ar brezel ne vag ket ar skiant-vat.

Hervez ar Saizon ez eo aet da sklaved holl vicherourion Reter Europa. A-hend-all, an Alamaned o deus distrujet 260.000 Yuzev dre an naonegezh hag an aczhennoù-mougañ. N'eus ket bet roet munudoù diwar-benn al lazhadeg-se.

Diriaou 26 a viz Du 1942

Chomet on er gêr da labourat e-doug an deiz nemet d'abardaez em eus graet un droiad betek ti Merrien da avelañ va fenn.

P'edon eno e erruas R.S. O paouez prenañ an H.B. e oa hag anaonet e oa dre ma ne oa ket bet moulet enni ar pennad brezhonek en doa kaset dezhi nevez zo. War a seblant n'en em chal ket kalz Steven gant e studioù er Skol-veur ; kemeret en deus un enskrivadur evit ar saozneg hogen n'eo aet da gentel ebet c'hoazh. Evit ar verdeadurezh

ez eo ken diek all, a gav din. Kalz gredusoc'h eo evit ar studioù keltiek : nevez amprestet en deus ur yezhadur iwerzhonek e saozneg. Da c'hortoz avat ne c'hellfe ket mont d'ar Skol-Uhel da noz rak ma rankfe mont da geñ ouzh Marc'harid Gourlaouen a zeue da gendalc'h ar Framm Keltiek er porzh-houarn.

O tont er-maez eus al levr di e skojoimp R.S. ha me war-du Gorre-kêr. "N'eus buhez speredel ebet er Skol-veur," eme R.S. Ha tuiñ a ris dezhañ. An darn-vuiañ eus ar studierion n'int chalet nemet gant o arnodennoù ; ar re all a zo snobed a glask trevezañ lenneion Paris war-lerc'h o c'helenner "Kagn". N'o deus e gwirionez preder ebet. Neuze e lavare R.S. e rafemp gwell o vont d'ur Skol-veur vras e Paris pe e Bro-Alamagn. Ne wellan ket mat perak. Gwell eo deomp sevel hor Skol-veur-ni. Ne vern penaos ne gav ket din ez eo skolioù-meur Bro-C'hall dreist da re ar broioù all. Kontañ a reas R.S. goude-se en doa staget gant studi an arabeg ; ne oa ket aet pell avat ; deskiñ al lizherenneg n'en doa graet ken. "Ur mennoz iskis eo deskiñ ar yezh-se," emeve. "Ha deskiñ ar brezhoneg neuze ?" a cillgerias Steven flemmet gant va evezhiadenn. Ne gradan ket avat ez eo heñvel an degouezh tamm ebet ; yezh ar Vrezhoneg ez eo ar brezhoneg. Diwar vreutaat evel-se e teuas R.S. da zisplogañ penaos e oa savet c'hoant dezhañ deskiñ ar yezh : goude lern buhezskrid Kalloc'h gant Pallaux e lise Aix-en-Provence, a zisklerias (eno en doa graet studioù etre 1933 ha 1938; mmet e oa da vont da ofisour-a-vor nemet e oa bet torret e spi gant ar brezel, a ouzhpennas).

E sez ar Framm keltiek da nav eur ha kard. En dro-mañ ne gavis nemet an it. Andouard, hor c'helenner, gant Youenou hag A.E. Ne voe graet en eurvezh war-lerc'h nemet lenn pennad kentañ ar yezhadur iwerzhonek emañ Meavenn o soñj skrivañ ha lakaat embann e ti "Skridoù Breizh" (ma vez kavet tikedoù paper evit se). Divizet e voe plaenaat skrid ar gontadenn "Tobhar Mhuire" embannet gant ur Flamank (un droidigezh c'hallek ha notennoù gallek a zo stag ouzh ar skrid) pe neuze ar c'hanaouennoù pobl troet gant he gwaz, Farnachanavan, ha moulet war "Walarn".

Kaoz a savas diwar-benn an doare-skrivañ peurunvan. An it. Andouard he doa kertri da zegomz ar ger-mell amstrizh "ur", "ul", "un" ; heñ he doa ouzh ar son-se, emezi. Ur son keltiek rik eo an "u" koulskoude.

Abeozen a reas e gentel war he lerc'h. Ne rejomp ket kalz tra adarre : lenn kentañ pajenn e deskad embannet ebarzh "STERENN" ne reas ken Abeozen. Hir brezeg a rejomp diwar-benn an abegoù a c'helle diskleriañ perak e oa aet hol lennegezh kozh da get. Ul lennegezh dre gomz e oa houmañ evel hini Kembre, eme Abeozen, nemet ez eus en em gavet e Kembre uhelidi o deus lakaet skrivañ ar marvailhoù kozh, darn anezho da vianañ ; abred tre avat ez eo steuzlet gouarn ar vrientinion vrezhon h.a. Ne vern ket a-hend-all : n'eo ket mui koulz kouziañ !

Digwener 27 a viz Kerzu 1942

Hiziv e oa kentañ devezh kendalc'h ar Framm keltiek. Va ratozh e oa mont d'an emvodoù renet e brezhoneg (dec'h em boa gouezet e vefent dalc'het e ti ar Breudoù) ha dreist-holl e felle din selaou Maodez Glanndour hag ober anaoudegezh gantañ hogen d'an eur ma rae e brezegenn ne oa ket tu din. C'hoant am boa ivez Klevout displegadenn Roparz Hemon diwar-benn distagadur ar brezhoneg evit ar c'hoariva, da beder eur ; ne c'hellis avat bezañ dieub nemet da bemp eur ha kard. Setu:chom a ris er gêr da labourat.

Da seizh eur e erruas C. gant ur c'heloù saouzanus hag hi fromet holl : strollad-listri ar C'hallaoued e Toulon a oa en em oueledet. War a lavare va c'hoar e oa mantret holl aotrounez an "Ouest-Eclair" gant ar gwall geloù-se hag en em drechalañ a raent oc'h en em c'houlenn peseurt tonkadur a oa o c'hortoz Bro-C'hall diwar neuze : ne oa arsav-brezel ebet ken; lu gall ar gennva dizalc'h a oa bet kaset d'ar gêr ; nec'het bras eo ar Betenourion; ne ouzont ket petra e teu Pétain da vezañ ; betek henn on doa prezeget rener ar Stad c'hall a-du gant ar c'henlabour.

War-dro seizh eur hanter e loc'his war-du Sant-Jermen ; teñval sac'h an noz ; gwoll a se ez ae a-raok va letern. Da eizh eur hanter bennak e tiraerz ar skluz. Du-se e ouied dija ar c'heloù. Evit va zud avat n'en doa ket an darvoud-se ar memes talvoudegezh hag evit ar betenourion (d'ar re-mañ ez eo anat ez eo gwanaet Bro-C'hall en daclerezh a rank dere'hel gant ar Stad alaman a zo trec'h dezhi evit ar poent) ; va mamm ha va zad avat a wel hepken ez eo echu gaou ar c'henlabour. Selacu a ris ar skingomz saoz : ar "C'hallaoued dieub", na petra 'ta a oa esmaet gant an degouezhadenn dic'hortoz-se. Hegaset mik e voen avat dre ma rejont anv neuspel gwech eus ar "Vreizhiz vat"-se a oa war al listri gall e Toulon. Eveljust!

Ur mad a zo da dennañ diouzh kemont-se evelato: ar Stad c'hall ne vo ket gouest d'hor c'has d'ar brezel a-eneb d'un enebour bennak. Alies awalc'h o deus diskantet er mizioù tremenet e oant monnet da zifenn o "zrevadennoù". Ar wech-mañ eo echu da vat an abadenn.

Disadorn 28 a viz Du 1942

Degemeret hon eus an "Ouest-Eclair" d'ar beure-mañ. Ne hañval ket ar gazetenn bezañ awenet kalz gant an darvoudoù. Ur fazi a zo en danevell a reer eus an afer : Vichy en doa gourc'hementet da renerion ar Strollad-listri chom hep gouledañ o bigi ; ar re-mañ a oa bet kaset d'ar strad hepken d'ar mare m'o doa an Alamaned arsañhet kêr Doulon hep kemenn netra en a-raok.

Ar pezh n'eo ket evit hol lakaat da souzhiñ eo en deus an "aotroù" Hitler kaset ul lizher ouzhpenn d'ar Marichal.

Ennañ en deus diskouezet splann e oa mennad kuzh renerion strollad-listri ar C'hallaoued daskoriñ o bigi d'ar Saozon; rak-se en deus ranket kemer e ziarbennoù.

A-hend-all ez eo seven msurbet, evel boaz, hogos hegarat : grataat a ra adc'hounit da Vro-C'hall he zrevadennoù ; pebezh kalon vat ha pebezh dic'hoantegezh ! Gwir eo e kase an arme c'hall d'ar gêr a-hend-all ; hogen dre 'n arbenn ma ne sente mui ouzh ar Marichal an hini e oa, ha ma oa a-du dre guzh gant ar Saozon, enebourion a-viskoazh Bro-C'hall ; harp a rofe ivez da rener ar Stad c'hall da adsevel un arme all a vefe hesentoc'h eget an hini gozh.

Iennet em eus a-hend-all lizher kimiad ar Marichal d'e arme divodet. Ne gomz ket ennañ eus ar c'henlabour nag eus difenn an impalaeriezh. Paour kaezh hiñi kozh : bez e c'heller truezis outañ!

Gwellwour eo an "Ouest-Eclair". Gwashoc'h e c'hellje bezañ bet an traoù, emezi. A-hend-all, Déat, paotr an R.N.P. n'eo ket dic'hoanget tamm ebet gant an darvoudoù : spi en deus en eneb e vezo savet ul lu gall nevez emouestlet holl d'ar Marichal, da Vro-C'hall ha d'an Europa nevez. Me ' gav din e c'helle gortoz meur a vloaz.

N'ouzont ket petra a soñj va zad da vat diwar-benn Pétain. Ne c'houzañv ket nemeur e vefe droukkomzet diwar e benn ; azaouez ur soudard kozh evit an hini a chom evitañ ur rener arme emichañs.

En endervezh on aet da gas paperennoù d'ar skluzierezed betek Kêrvorin. Pelloc'h em eus tizhet ur vereuri a anavezan a bell zo hag e-lec'h e tleñ sammañ ugent lur heiz (evit ober "kafe").

O tistreis e chomis a-sav e ti an it. Liguet a hirvoudas diwar-benn ar brezel epad un eurvezh bennak (e skluz Moustereh-war-Izol). Ur prizoniad eus Moustereh-war-Izol a zo distroet d'ar gêr, emezi. Ne oa ket gwall evurus du-se e-lec'h en doa en em gavet. War a lavar avat e kred an Alamaned start bepred e c'houezint ar brezel.

Chom e Sant-Jermen da noz. Prezegenn gant Churchill : kan an trec'h en dro-mañ. Ha gourdrozioù ouzh Italia a vo friket ha pulluc'het dindan ar bombez ma pad da sikour an Alamaned. Komprenet an Italianed paz eo poent c'hoazh !

Divizout gant va mamm a-zivout ar brezel. Aneer e oa d'ar Rusianed hag int ur bobl dizoue ha difeiz, emezi, goanagiñ mont e-biou d'ar walenn ha tennañ korvo diouti hep paeañ dezhi ar skodenn dleet. O venagiñ a-hend-all komzoù un alaman a lavare e vefe dispennet Bro-C'hall, surmat, e diwezh ar brezel, goude taol Toulon, ne gave ket abeg er ratozh-se ; ar Re Unanet a zispenna Alamaned kerkoulz all p'o devo gounezet ar brezel. Anv a voe ivez e-korzh an diviz eus dizemglev etre Saozon hag Amerikaned e sor Darlan (Catroux, ivez, distaolet gant ar Saozon a glaskfe skoazell an Amerikaned).

Disul 29 a viz Du 1942

N'ouzer ket petra a vo graet eus ar soudarded c'hall kaset d'ar gêr. A bep seurt brudoù a red. Hervez mab Descuges a oa soudard en arme c'hall an arsav-brezel e tlee an arme-se bezañ divodet abarzh pell (a-raok emouel-~~ed~~dur ar Strollad-listri gall) ; bremañ avat e vefe ar soudarded kaset d'ur pal dianav. Gouez d'ar Saizon ivez e vefe bet prizoniet ofisourion ha martoloded ar strollad-listri gall gant an Alamaned da heul taol Toulon (6 den a zo bet lazhet ha 24 gloazet a-hend-all). D'ober petra Mers-el-Kebir daou vloaz zo pa gollas nouspet kant a Vrezhonez o buhez ?

Va mamm he deus aon adarre e vefen galvet d'an arme gant ar C'hallaoued evit adc'hounit an trevadennoù kollet. Hep lu ebet diwar vremañ e vefe diaes da Q'hallaoued Vichi kas da benn hevelep dezo !

A-hervez e vefe bet fuzuilhet 8 ofisour gall dre m'o defe nac'het sentiñ ouzh an Amerikaned. Munud ebet avat da sklerijennañ an afer-se a zo menget war ar gelaouenn alaman "Das Reich" gant un dresadenn-lu a oa monnet da ziskouez madelezh an Amerikaned, sañset, hag o filpousevezh ; an isskrid a oa hemañ : "Freiheit : Recht für alle"(1). N'ouzon ket e pelec'h emañ ar pilpousevezh rak an Alamaned, a soñj din, n'int ket douget tre d'ar vadelezh - hag evit ar gevier eo diaes bezañ trec'h dezho ivez.

Savet ez eus bet ul "legio afrikat" evit difenn trevadennoù afrikat Bro-C'hall. N'eo ket relegoù an arme c'hall-se a zassorc'ho an impalac'riez islonket. War an "Ouest-Eclair" a-hend-all e lennan e vez engoustlet Gallaoued en arme alaman (evel blenierion varc'hou-tan) : goprsoudarded. Ma ! Awalc'h a Vrezhonez a zo aet da c'hopsoudarded e lu ur Stad a oa monnet da zistrujañ o yezh hag o broadelezh ; gwir eo n'henn gouient ket.

Dilun 30 a viz Du 1942

Gweladenn an ao. Ligust yaouank. Epad ar gaoz a savas war-lerc'h e tiogelas hemañ e vefe ar gomunourion gwir drec'hourion ar brezel, ar Rusianed peurgetket. Seurt rakwel ne oa ket deuet mat d'am zud rak euzhiñ a reont muioc'h c'hoazh, a gredan, ouzh ar Rusianed eget ouzh an Alamaned.

Skoet em eus war-du Roazhon da deir our bennak. Lakaet em boa em penn mont d'an abadenn sonerezh a zlee bezañ roet er c'hoariva evit klozañ dalc'hou ar Framm Keltiek.

Degouezhout a ris e tro peder eur, karget a bourvezioù, evel kustum. Ha me d'ar c'hoariva. Selaoù a ris an abadenn sonerezh gant evezh hogen hep nemour a blijadur rak n'on ket sonour tamm ebet. Ne gejis gant emsaver ebet, nemet gant ur vaouez yaouank, dezhi bugale o kous brezhoneg, pezh a zo dibaot (n'ouzon ket piv eo ar vaouez-se).

(1) "Reizid : ar Reizh evit an holl".

Noziñ a rae pa zeuis er-mac : c'hwec'h eur ha kard bennak pe ziwezhatoc'h. Ne oa ket poent koan c'hoazh ha sevel a reas c'hoant din mont da c'houlenn endro digant Hamon kaieroù an "deutsche Gesellschaft für keltische Studien" ; un dro e vefe din kaout e ali diwar-benn an darvoudoù (e gwir ne roan kement-se a bouez d'e ali hogen kavout a ran aes amprestañ digantañ kelaouennoù alaman evel "Das Reich" pe "Die Pariser Zeitung" a ro ur savboet diforc'h diouzh hini ar c'helaouennoù gallek-alaman a lenner peurvuiañ).

Kavout a ris Hamon er gêr ; annezet mat eo, en ur gambr ec'hon, koaret ha lufus, un tantad en oaled o klouarañ anezhi, staliet evel ur bourc'hiz ez eo Hamon : unan a-hand-all n'eo ket aes gouzout reis petra a soñj da vat war zivoudoù zo.

Setu avat e ali diwar-benn an darvoudoù diwezhañ. Da gentañ, emezañ, abaoe afer Toulon o deus kollet en Alamaned pep fiziañs er C'hallaoued. Padal e kendalc'hint da implijout gouarnamant Vichy rak aessoc'h eo dezho ren ar boblañs c'hall dre hanterouriezh ur Stad suj (a sammo kiriegezh ha gwallvrud lezennoù zo : strishadurioù, labur ret e Bro-Alamagn h.a.)

Evel an darn-vuiañ eus kelemmerion ar skolañ en defe hetet d'ar brezel un disoc'h ha n'endefe ket aotreet distro ar "demokratelezh" hogen, bezet pe vezet, an tu-koll a oa a-benn neuze gant an Alamaned. Diskleriañ a reas din pegoulz en doa kroget da ziskredañ diwar-benn trec'h an re-mañ : p'en doa merzet ne zeuent ket a-benn da gemer Lenin-grad hag e rankent dilezel Rostov ; neuze eo en doa soñjet e oa deuet poent an diskar evit Bro-Alamagn.

Ne wela tamm ebet p'naos e vefe doareet ar peoc'h gant ar Re Unanet. Moarvat e renfe adarre an "demokratelezh" gant an holl sioù fall anezhi : tuerezh, tarwazerezh, dizurzh ha war ar marc'had arvar ar gomunouriezh. N'eo ket Per Laval a harzfe ouzh ar gomunourion end-eeun ; fuzuilhet e vefe gant ar gouarnerezh gall nevez evel traitour. A-benn ar fin, ar re a vefe trec'h a vefe ar re n'o defe sammet riskl ebet epad ar brezel.

Da c'hortoz n'eo ket brav hor stal, eme ve. An Alamaned a zo o reoliñ pep tra, an embannadurioù brezhonek zoken (en abeg d'an tikedoù-papar a ranker goullenn diganto) o bruderozh a zo ken gaouiat hag hini ar C'hallaoued e Breizh (ar re-mañ a guzh kement a c'hellfe reiñ da soñjal d'ar Vrezhonez ez int ur bobl) ; hogen, war ar marc'had n'eo ket gouest an Alamaned da lakaat an dud d'o c'harout ; moarvat en em zoug an holl armeoù-dere'hel er memes doare (kv. ar C'hallaoued hag o freizhaterezh en hanternoz Italia da vare an dispac'h gall pe e traoñienn ar Ron war-lerc'h ar brezel bed kentañ) hogen ken pounner all ha pounneroc'h marteze ez eo samm an dalc'hidigezh alaman er broioù dalc'het ganto.



Hamon a duas din a-grenn. Bet en doa tro, emezañ, da welad-enniñ en toull-bac'h tud barnet gant an Alamaned, evit dis-ter dra peurliesañ : evit bezañ chomet hep lezel plas d'un ofisour alaman war ar riblenn-straed, re all - blenierion ur c'harr-samm - evit bezañ gwallgomzet eus an Alamaned h.a. Ma oa eeun an Alamaned o kinnig ar c'henlabour, perak n'o doa ket dizalc'het ar vro nemet an aodoù, lakaomp, eme va c'hellenner kozh, perak n'o doa ket dilamet al linenn-harz ? (Peseurt trec'hour avat a zo eeun o kinnig ar c'henlabour ? Ne glask neuze nemet klenkañ an hini a zo bet trec'het gantañ en e reizhiad ouarn evit tennañ korvo di-outañ) (1)

Da seizh eur e ambrougis Hamon betek ar skolaj endro. Anat eo ez eo chomet gall daoust ma ne gar ket nemeur ar Saozon.

Dimeurzh lañ a viz Kerzu 1942

Bodadeg evit ar studierion. An Aridon an hini eo a reas ar brezegenn : diwar-benn ar micherioù diwar ar maez. P'hor bo kemeret ar galloud e teuy ar ploue da vezañ gwir varadoz an douar.

Dimeurzh 2 a viz Kerzu 1942

Musso en deus respontet d'an aotrou Churchill ha n'eo ket bet hegarat meurbet. Ur mezvier naplezek n'eo ken an "aotrou" Churchill, emezañ. A-hervez e red "gwad glas" en e wazhied, hini brein eo avat, n'eo ket hini yac'h ar bobl a red e gwazhied Musso. Goude-se ez eus anv, kej-mesk, eus Kartago, Annibal, ar "Varbared" gwisket e smoking - id est : ar Saozon - a vo trec'het, evel maz eo natur, gant ar ... Romaned dassorc'het (Italianed hon amzer!).

Diskleriadurioù en deus roet. Perak ez eo deuet tre Italia er brezel ? Ne c'helle ket ober e-giz-all, ar bacourez kaezh! Hag evit echuiñ : "Trec'h e vimp!" Aesoc'h da lavarout eget da vezañ e gwirionez.

Hitler a zo gwell prezegour egetañ.

Diriaou 3 a viz Kerzu 1942

Kentel iwerzhoneg, Bernier, A.E. ha Youenou. Plaenaet ez eus bet ur varzhoneg pobl bet troet e brezhoneg gant Farnachanavan. Heson tre ez eo met, siwazh, ar reizhskrivadur a zo un torr-penn. N'em eus ket awalc'h a levrioù evit pleustrifañ a-zevri war an iwerzhoneg hag ivez, an amzer a ra diouer din rak beuzet on el latin hag er gresianeg ; ne zeuan ket a-benn zoken da dreiñ dek linennad kembraeg en ur sizhunvezh.

Brezhoneg krenn goude-se ; epad ar c'hentelioù-se e komz ar skolidi kement hag ar c'hellenner. Burutellet e vez reizhadennoù ha martezeadoù Ernod e ser kevreadurezh ha

(1) Klevet em eus kont ivez eus "brouderion" : Alamaned oc'h ober van da c'hoantaat dilezel o lu, o c'houlenn skoazell digant broiz hag o lakaat herzel ar re o doa kinniget servij.

furmoù ar brezhoneg krenn.

Disadorn 4 a viz Kerzu 1942

Ur brezegenn er Skol-Uhel Emil Ernod henozh. Un daouzek bennak a dud a oa o selaou (an Helloko, Berthou, Kentel, Bernier h.a. ha Roparz Hemon eveljust). An ao. Mee a gomzas diwar-benn brudouriezh epad un eur hanter bennak, oc'h ober un diforc'h etre abostolerezh ha bruderezh (1); gant sifroù tennet eus feurjedoù hollvedel e tiskouezas ervat e ranke ur soavon bezañ anavezet a-raok bezañ gwerzhet. Ur brezegenn ouiziekt tre hag a voe dudius evelato.

Disadorn 5 a viz Kerzu 1942

Poelladenn latin d'ar beure. En endervezh on aet da Sant-Jermen. Pounner an aergelc'h eno : ti ur c'hlañavour ha na c'heller ken gwellaat.

Evel boaz on aet da gerc'hat amann e-kichen an Dialaez. Loun a fank ar vriell. Degaset em eus ur c'hiload amann. War an hent em eus darnaouet paperennoù kefridiel d'ar skluzierezed.

Disul 6 a viz Kerzu 1942

Ur sarmoner fursot en iliz Sant-Jermen. A bep oeil e voe anv eus Stavinsky (2), Napoleon e Moskov, kenlabour, Tolbiac ha Janed Ark en ur brezegenn a badas tri c'hard eur bennak ha na sklerijenno ket nemeur eneoù ar barrezianiz, 'm eus aon.

En endervezh on aet da zegas lizhiri-arc'hant d'ar skluzierezed betek Kêrvorin. A-vec'h distroet ez on loc'het endro war-du Bezon. Kemeret em eus ur c'hiload amann e ti Gwalter, e Kruzen. Evel kustum e voe diskennet sistr din ; ur wall vicher eo kerc'hat amann er mareurioù : lonkañ sistr - trenk - ha marvailhat a ranker. A-hend-all, ret eo anzav n'eo ket un ebat bevañwar ar maez er mare-mañ : n'eus tamm tredan en ti-annez, tan a vez graet en oaled, n'eus tamm fornigell ebet.

Noz a oa anezhi p'en em gavis er gêr.

Dilun 7 a viz Kerzu 1942

E Roazhon da beder eur. Kentel kembraeg ha kembraeg krenn gant Per ar Rouz (An Helloko, Youenou, Feutren, Kentel hag an Norman). Darnaouet ez eus bet deomp pennadoù liestennet eus romantoù Daniel Owen hag un arroudenn eus "Hemolc'h Tourc'h Trwys".

Goude-se e ambrougis Feutren, Kentel hag A.E. betek al lise. A.E. en deus degemeret ul lizher digant M.M.

(1) Betek henn e raed gant ar ger "abostolerezh" hepken, gredan.  
(2) Un arc'hantour gall e voe tamallet dezhañ tarwazerezh en amzer an trede Republik gall.

e galleg ! E zoare eo, a-hervez, da enebañ ouzh an doare-skrivañ nevez. E-touez traoù all e skriv kement-mañ : divarc'het gant kemm-digemm an doare-skrivañ, e vo troet hor brezhonegerion, ez ret, war ar galleg ha na gemm nepred e reizhskrivadur.

Diriaou 10 a viz Kerzu 1942

Fenez kentel iwerzhoneg ha na badas ket pell. Da nav eur e voe tro Abeozen a blaenaas ganeomp 7 pajennad eus Mister Sant-Gwenole.

Digwener 11 a viz Kerzu 1942

Bodadeg e ti ar Framm, st. ar Moneiz, evel boaz. Meavenn a lennas deomp troidigezh nevez savet ganti un danevell he deus da destenn un darvoud c'hoarvezet en Iwerzhon da vare an dispac'h etre 1919 ha 1922. Fraezh e lenne Meavenn he skrid ha fromus e oa an istor ; a-hend-all, embannet e vo ebarzh "Gwalarn". Ur mor a dud a oa deuet (da lavarout eo, ur pemp-warn-ugent bennak : Bernier, A.E., Kentel, Kerverziou, ar Me, Steven, E.T. h.a.)

E.T. a ziskouezas din ur gouviadenn en doa bet a-berzh ar "Jeunesse française", aozadur diwanet eus strollad Buccard ; ar pezh a zo iskis avat eo e kaver ivez war un dro sielloù ar Stad c'hall war ar gouviadenn. Kement-se, hervez E.T., a ziskouezfe emañ strollad ar Frañsisted war-nes dont da vezañ strollad a-berzh-stad e Bro-C'hall.

P'edomp o tistreiñ d'ar gêr e kontas Kentel deomp penaos en doa lakaet ar strafuilh er Skol-veur o c'houlenn ober kentelioù brezhonek el lise. Monsieur Galletier a oa deuet da gemer ali ar "Provisieur", hini ar Reizhour, hini an Deaned ha da gavout Per ar Rouz da gaout titouroù diwar-benn an danvez kelenner war ar brezhoneg. A-benn ar fin en doa ar "Provisieur" lakaet Kentel da zont evit e aters. "Daoust ha gwir eo e fell deoc'h kelenn ar brezhoneg ?" emezañ. "C'hwit a zedenno holl skolidi al lise en ho klas." C'hoant en devoa ivez gouzout hag asantif a rafe un deiz bennak da vezañ kelenner brezhoneg leun-amzer el lise.

Kimiadet hor boa diouzh Kentel dirak e di, st. Bodreri. A.E. en doa va amheuliet betek st. Sant-Melani.

Disadorn 12 a viz Kerzu 1942

War-dro kreisteiz em eus skoet war-du Sant-Jermen. Merennet em eus du-se. Va zad a seblant bezañ gwollaet hogen ne fiñv ket nemeur diouzh ar gador-vrec'h e-lec'h e chome va zad-kozh ergentaou. Gant an anhun ez eo aet divi. Ar mezeg eus Filger n'en deus ket respontet c'hoazh.

E deroù an endervezh ez on aet da gerc'hat amann, da glask kentoc'h rak ne voe ket fonnus va eostad en dro-mañ : ul lur en ur vereuri nepell diouzh Sant-Medardh.

a dizhis e penn un hent bleiz kailharek. Tremas a ris en ur vereuri all a anavezan mat e-tal an Dialaez hogen eno ne voe graet din nemet promesaou. Evelato ne ris ket tro-wenn a-grenn : profet e voe din ur c'hazh gwann-ha-du a vo talvoudus bras er gêr rak an ti a zo bet nevez aloubet gant logod divergont a ra kofad gant ar bleud hag an ed hon eus dastumet du-mañ da dalañ ouzh ar gernez.

Disul 13 a viz Kerzu 1942

Lenn "De reditu suo" eus Rutilius Namatianus a zo war roll an aotreegezh. Diaes eo din kompren e c'hellfe tud evel Philéas Lebesgue krediñ eo chomet Bro-C'hall kelt ha galian. Da gentañ n'eus bet biskoazh Galian ebet ; ar Romaned eo o deus krouet Galian ha roman ha latin eo bet graet ganto : un drevadenn roman ne oa ken Galian. A-hend-all, Rutilius Namatianus ne oa ket zoken ur rannvroelour galian : ur roman ne oa ken anezhañ evel m'henn diskouez ar gwerzennoù emañ o paouez lenn :

Fecisti patriam diversis gentibus unam...h.a.(1)

Krizder an Alamaned a zo er mare-mañ danvez bruderezh ar skingomz saoz. War a lavar komzerion Lunden e veve an Alamaned o klask kas da get gouenn ar Yuzevion. N'eo ket bet diskleriet pizh avat penaos en oa gemerent evit kas da benn ar mennad-mañ : pe dre varnaoniañ ar Yuzevion pe dre o muntrañ war-eeun. Ar pezh a lak diaes va spered avat eo kounañ ivez o deus bet ar Saozon o unan kasoni ouzh ar Yuzevion (kv. Marc'hadour Venezia emañ o paouez lenn ebarzh ar rummad divyezhek Aubier) hag o deus savet ar c'hampoù bac'h kentañ da vare brezel ar Voered. Torfedoù an eil re, eveljust, ne c'hellont ket digareziñ torfedoù ar re all. Piv avat a c'hell bezañ barnor an Istor ? Nemet Doue e ve... met n'emañ ket eus ar bed-mañ.

Dilun 14 a viz Kerzu 1942

War-dro peder eur em eus kuitaet an ti. War-larc'h Melez avat e tarzhas bouzellenn a-dreñv va marc'h-houarn ha dav eo bet din ober dek kilometrad war droad, pezh n'eo ket bet ur bam rak sammet ha strobellet e oan gant pourvezioù a bep seurt. E-tal Sant Gregor e kejis gant Feron a oa war varc'h-houarn ivez hag a chomas da gomz ganin (2). War hor pouez e kerzhjomp war-du kêrbenn Breizh. Keloù am eus bet gantañ diwar-benn kendalc'h ar Frañsisted e Roazhon.

Erru er gêr war-dro c'hwec'h eur hanter e voe rost din munudoù all war an divoud-se gant va c'hoar N.

(1) "Graet ac'h eus ur vammvro hepken eus broadoù liesseurt..." philéas Lebesgue a oa ur barzh kar-ar-maezioù, keltgar, o chom e rannvro Picardie. Me 'gav din an doa klasket deskiñ brezhoneg.

(2) N'em eus ket mui koun eus piv ez eus anv emañ. Ur paotr yaouank ezel eus ar Strollad emic'hañs.

Ur c'hant bennak a izili eus an emsav "France Nouvelle" o doa en em vodet er c'hoariva, pacted ha marc'hed, gwisket ganto rochedoù glas. Skuilhet o deus daerou war gollidigezh an Impalaeriezh "a oa deomp, a oa hor c'hlod..."

Ur Frañsist en deus graet ur brezegenn entanet evit diskleriañ penaos e vefe saveteet ar vro garet. Ret eo eta trevezañ gourdaoù meur dispac'h 1789 ha lazhañ an holl C'hallaoued n'int ket a-du ganto ; ne vo ket ur c'holl bras rak ar re-se ne c'hellont bezañ nemet diskianted ; ha gwell eo mirout 2.000 den eus an dibab e Bro-C'hall eget, lakaomp, 40.000.000 a astud dispered. Se a zo sklaer awalc'h hag an holl Frañsist er c'hoariva o deus groudifet d'ar prezeger.

Gâtinais en deus diveget sotonioù ivez. Ar rannvroelour gredus-se en deus graet ur "C'helt" eus ar Marichal (evel Philéas Lebesgue emichañs), a zo farsus awalc'h.

War al leurgêr ne oa den ebet diouzh ar beure. Hag epad an abadenn ne chomas eno den ebet kennebut da sel-  
-aou ouzh diotachou distaget gant c'hwec'h prezeger frañsist ha skignet tro-war-dro gant c'hwec'h uhelgomzer. Pa zeujont er-maez en em gavas un nebeut tud war lost o roched glas. D'ar mare-se eo e voe darbet d'ar c'haezh L.R. bezañ trubuilhet d'e dro gant ar c'homiser Piat a oa o lavigañ hag o firbouchal tro-aze war glask un emrener bennak emichañs. L.R. avata oa o tremen eno hag eñ o komz brezhoneg a-zevri gant e genderv. A-bell e voe klevet gant ar c'homiser a zeredas kerkent on ur c'har-mif : "Pas de provocations!" Hag evel ma enebe L.R. o lavarout ne c'helle ket kompren ar pezh a lavare en doa eilgeriet : "Ne faites pas l'innocent!" Hag evit echuiñ, na petra 'ta, e c'houlennas e baperoù digantañ. Met n'en doa ket o dalc'het : L.R. a oa dianav dezhañ.

Emeur o varn er mare-mañ e ti ar Breudoù tud a reer anezho "terroristed" war ar gazetenn (ar ger a zo diot : an Alamaned moarvat n'int ket spontet ganto hag ar boblañs a zo a-du ganto). Lakaet o deus da darzhañ burevioù enouestlañ al labourerion e Bro-Alamagn (abaoc ez eus bepred un diwaller armet o sevel gward dirazo). N'ouzon ket avat hag e-fedus tre eo o obererezh.

Gant an Alamaned ez int barnet hogen ar re-mañ a zo tud seven o deus kouviet ar Prefed gall da zont d'an arvest. Pebezh c'hoariva adarre !

Degaset int bet d'ar breudoù ebarzh ur c'harr-boutin, Alamaned gant mindrailherezedigoù ouzh o diwall ; war dreuzoù ar Breudoù ouzhpenn e oa ur soudard alaman hag ur polis gall "urzhneveziek" o sevel gward ivez. Kement-se hervez va c'hoar C. a voe test d'an abadenn ha fromet awalc'h ganti.

Digwener 18 a viz Kerzu 1942

Diwar un taol-pellgomz gant va zad em eus ranket

mont da Sant-Jermen (ezhomm en doa eus va marc'h-houarn evit ambroug an ijinour Gwalter betek lenn ar Boulez). A-benn ar fin ne voe ket dav rak Gwalter a reas e vennoz mont d'ar Boulez e unan ha gwell a se e voe rak blin ez eo aet va zad gant e gleñved : semplaat ara bemdez.

A-benn ar fin e ris un droiad va unan e-lec'h va zad. Mont a ris betek al lenn eta da gemenn gweladenn an ijinour da Jugon (en e garg emañ eveshaat rez al lenn ha magañ sanoù ar ganol). Tremen a ris dre Vousterel-war-Izol a zo trevadennet gant Alamaned e-leizh (520 war am eus klevet tra na vefe nemet 250 e Sant-Jermen), Feun hag al lenn. C'hoant am boa tizhout Denzieg hogen ne ris ket a-benn ar fin rak re fankek eo an hentoù. Distroet on dre Elvinieg : mat eo an hent dre aze. A-benn ar fin en em gavis endro e Roazhon da beder eur goude bezañ aet kuit da unnek eur.

Da eizh eur hanter ez is da selaou ur brezegenn gant ar Mee (ar memes selaouerion bepred Steven, M.R., Tranvouez, A.E. h.a.) diwar-benn bruderiezh adarre. Ar wech-mañ c'hoazh ned eas ket ar Mee nemeur er-maez eus tachenn ar bruderezh kenwerzh o reiñ deomp ar skouer-mañ anezhañ : "La France a quarante Immortels mais elle n'a qu'un seul increvable: le pneu X..." Anv a voe gantañ evelato eus bruderezh brezel Suomiiz (a brone o armoù digant ar soudarded rusian o tivandennañ) hag hini ar Saczon epad ar brezel kentañ hag a oa dreist war e veno. Evit echuiñ o komzas eus implij ar brezhoneg er c'henwerzh.

Dont a ris endro d'ar gêr gant Steven. Etrezomp e savas kaoz diwar-benn an Emsav. Kavout a rae da Steven e oa re a lenneourion distag diouzh ar bobl en Emsav, bro-garourion dispriet o deus kavet ur repu el lennegezh end-eeun. Tuiñ a ris dezhañ oc'h ouzhpennañ e oa al lennegezh evidon un tu da gentañ da stourm evit ar yezh ha da greñvaat ar spered pobl.

Ne oa ket poent c'hoazh reiñ endro da Vreizh he frankiz, a gendalc'has Steven a c'houlenne piv a vefe lakaet e penn ar Stad. "N'hon eus ket tud dreist," emezañ "nemet an Henañ evit al lu." Hogen daoust hag ezhomm a zo eus tud dreist kement-se evit sevel ur stad ? Penaos o deus graet Iwerzhoniz ? Daoust ha tud dreist o doa e 1922 pa dizh-jont diazezañ ar Stad dieub ?

Marteze ne oa ket deuet ar mare da aozañ ur sizhunvezh Fask e Breizh. Ali "Galv" ez eo e doare. E gwirionez setu dalc'h ar gudenn : un dispar a dro hon eus gant ar brezel da zishualañ hor bro evit mat. Hogen siwazh, ma oa tonket d'ar brezel dont ez eo deuet ivez re abred evidomp. Breizh n'eo ket darev ; ar bobl a zo koussket daoust d'an holl vruderezh a c'hellomp ober a-hend-all a-drugarez da wanadur ar galloud gall en hor bro. Hogen mar bez an dro-se kinniget deomp hiziv un dro-wenn a-benn ar fin, neuze pegoulz e raimp an dispac'h, hon dispac'h ? Daoust hag her graimp en doiz ma plijo deomp ? Ouzhpenn-se, mar bez marv pe bezurvar

ar yezh da betra e talvezo neuze diazezañ ar Stad ? (Padal n'omp ket sur da dizhout an trec'h n'eus forzh penaos ha d'ar c'houlz-se da betra e servijo hor marv hag hini ar re all?) Ar pezh am laka da ziskredif e c'hellfe an dispac'h sevel e Breizh warc'hoazh eo an heskinerezh a salmo ac'hanomp pa vezo bet addiazezet galloud klok ar Stad c'hall e Breizh. Ret e vo deomp en em zifenn. Neuze ivez e klasko ar C'hallaoued peurziskar ar yezh ha kas da get pep roud eus hor broadelezh, dizolo kaer pe dre guzh. Ma n'vez ket trec'h ar C'hallaoued n'eus ket d'en em chalañ rak disponnet e vo ar Stad c'hall.

Un diskoulm all a zo d'ar gudenn : diorreadur ur renkad renerion nevez e Breizh hag a vo brezhonek. Hogen ma ne zeur ket a-benn da advrezhonekaat ar bobl ivez n'he devo ar renkad-se roll na talvoudegezh ebet. En degouezh-se e tapfemp hor frankizioù unan hag unan digant Bro-C'hall hogen dre heg her grafemp a-hed ar wech hag er c'heit-se e kendalc'ho ar galleg da c'hounit tachenn e Breizh.

Steven a grede e vefe flatret ar soudarded vrezhon gant ar boblañs e Breizh. Ne vefent ket muic'h na washoc'h eget en Iwerzhon marteze. Daoust ma oa manet er vro-se un doare damgas ouzh ar Saozon e speredoù an dud, diwar un tamm eñvor eus an heskinerezh a wechall, n'o doa ket Iwerzhoniz moarvat muic'h a emskiant vroadel eget ar Vrezhonez : a-hend-all n'o defe ket dilzet o yezh ken prim na divroet ken stank.

Gwirheñvel eo en eneb e rankfe an cnebour e unan kendeuzif ar boblañs ha lu an dispac'herion dre ma ne vefe ket gouest da ober an diforc'h etrezo. Ouzhpenn-se, tud ar bobl ha n'int ket ken sod ha ma lavar Steven, dreist-holl e kornog ar vro, a vezife abarzh pell en em gannomp evit un uhelvennad. Daoust ha lezet e vo deomp dibab etre bezañ dispac'herion ha chom hep bezañ a-hend-all ? Ne hetan ket eveljust : gwel eo ganin bevañ eget mervel evit va bro daoust maz on prest da vervel diouzh ret evit ma vo trec'h hor gwir, hini hor bro.

Goude-se e teuas an drouized war an dabier. Rafik Tulou ha Marchal a skrive dindan anvioù-pluenn hen goltiek : Atobios, Kabomarkkos h.a. ebarh "NEMETON". Unan anezho a lavar, eme Steven, n'eus ket ezhomm a suredoù hag e c'hell ur paotr mat tre karout meur a blac'h war un dro (n'em eus ket bet tro da lenn "Nemeton") : dav e vefe goulenn ali ar merc'hed war ar poent-se. Seurt kudennoù n'int ket gwall sirius. N'ouzon ket perak e fell d'ar re-se keltiekaat pep tra : prederouriezh, karantez ivez moarvat ha me 'oar-me. A r re-se a zle keuziañ dre ma n'omp ket disheñvel krenn diouzh ar pobloù all e pep keñver. Brizh-pleustrif e ken lu doare hon dibarderioù a zo droch a-grenn avat. Seul vui ma tisoc'hont a-benn ar fin da gacut ar memes gourdadoù hag ar C'hallaoued o unan a zo prest da gontañ e tiskennont diouzh ar Gelted kozh !

Ambrouget e voen gant M.R. betek ar c'houronkti. Diviz a savas diwar-benn ar brezel. M.R. a gred e vo trec'h an Alamaned ; ne vern penaos ne gredan ket e vo saveteet Breizh gant tud ha na reont forzh ebet anezhi. A-hend-all n'hon eus ket d'en em gannañ evit an dud-se. Da unnek eur nemet pemp edon er gêr.

Disadorn 20 a viz Kerzu 1942

E Sant-Jermen evel kustum. Da ziv eur nemet kard on loc'het ha dre Vezon on tremenet. E-kichen an heskinerezh ha skluz ar Broz, nepell diouzh Kruzen, e heuilhis an hent-douar a gas da Velez, e biojoù ti an aotrou maer De(ar paotr-se eo a lavare din ur wech pa c'houlennen pelec'h edo an aotrou De o chom : "Vous êtes en sa présence, Monsieur !" Ken batet e oan bet gant e veurdezh ma n'em boa kavet ger all ebet da respont nemet : A!) ez is gant un hent all a zisoc'he da vereuri an ao. Gwalter en devoa promotet din ur c'hilload amann pemzektez zo.

Ar c'hilload amann a oa prest hag a voe degaset din. Goude-se e voe ret seveniñ al lidoù ha lonkañ ur banne sistr (ganin er sal-chom en em gave ur paotr all eus Kavenneg a oa deuet da gerc'hat boued ivez) ha kaoz a savis gantañ a-zivout ar brezel. Alian den-se ne oa ket hini an holl (aes gouzout perak : n'en deus tamm skingomzer ebet). En em c'houlenn a rae perak, da skouer, e oa act ar Re Unanet da zilestrañ keit all en Afrika an Hanternoz e-lec'h divourzhañ war-ecun war aodoù ar Provañs : daoust ha lakaet o doa en o fenn aloubif Bro-Spagn ha Portugal kent diubif Europa ? N'en doa ket re a fiziañ kennebeut er Saozon hag en Amerikaned a glaskfe en em zigoll o unan eus ar servijoù a rentent da Vro-C'hall, emezañ.

Moarvat e lenne va c'hompagnun an "N.B." pe ar "Bretagne" rak ne oa ket dianav dezhañ kudennoù Vreizh. Gouzout a rae, da skouer, e pae ar Vrezhonez tailhoù pouneroc'h eget re Greisteiziz Vro-C'hall hag e kasent nebeutoc'h a gannaded da Paris eget ar re-mañ. Sur-mat zoken e prene ar "Bretagne" rak diwar he fenn e tisklerias : "Elle en sonne de bonnes parfois!"

Ne oa ket muic'h demokrat eget Gwalter a-hend-all. Dezh o daou e kave e oa kalz re a gannaded : ar re-se ne oant mat nemet da rastellat arc'hant ha d'ober marvailhoù. Setu deoc'h ar gouarnerezh gwellañ : un unrenner dilennet bep pevar bloaz dre ur boblvouezhiadeg ha skoazellet gant ur stroll-tud gredus evit ar vro hag o c'houzout resis petra 'felle dezho. Ha mat pellzo. A-hend-all, a ouzhpennas ar paotr, peseurt levezon a c'hellomp kaout war ar gouarnamant o tilenn ur genaoueg bep pevar bloaz ?

Un emganner kozh eus ar brezel kentañ e oa eus va c'hendivizer. Sarjant e oa neuze. Ur sorbienn a gontas din a ziskouez mat awalc'h tro-spered meur a "emganner dre ret"

ous an amzer-se. Un devezh eta e oa erruet en e skouadrenn ur c'hreisteizad gall bennak. Hag hemañ kerkent da ziskleriañ n'en doa tamm c'hoant ebet d'en em gannañ. "N'eus ket brezel ebarzh va bro," emezañ. Hor Breizhad mat a chomas sabatuet mik. "Du-mañ e Breizh n'eus ket brezel kennebeut," a respontas. "Daoust da se, a gendalc'has va c'havandad, 'e teuis a-benn d'ober ur brezelour anezhañ." Moarvat o deus ezhomm an dud d'en em gannañ n'eus forzh penaos.

Setu va daou zen avat krog da zibunañ o eñvorennoù diwar ar brezel all rak Gwalter a oa bet kaset war an talbenn ivez neuze, war-dro Itron Varia Loret (am eus gweladennet gwechall). Danevellañ a reas penaos en doa lazhaedet ur skouadrenn a Alamanned en ur foz gant greunadennoù. "N'oamp ket mui tud neuze," a anzavas.

Egile - baraer e Kaveneg - ne gare ket nemeur ar gilstourmerion. Ne reont nemet lakaat an Alamanned da fuzuilhañ gouestlidi. Hemañ oa e vennoz, da vihanañ.

A-benn un eurvezh bennak e c'hellis dont er-maez. Poent e oa din difraeañ da erruout d'ar gêr.

Disul 21 a viz Kerzu 1942

Kerc'hat amann e ti Korb ha Gwilereg, tost d'ar porzh-houarn. Ambrouget on bet gant Gwazmat betek ur vereuri digevannez, 600 metrad bennak diouzh skluz an Onneg, dre gñriadennoù o anvioù diseurt : Gwernell, Koadver, Koadroberzh h.a. Troet eo an hentoù-kev da fankigelloù. Er vereuri-se n'em eus ket kavet war an taol hogen Gwazmat en deus grataet din dont d'henn kerc'hat din antronoz.

Ar skingomz saoz d'abardaez. Rommel a zo atav o kilañ. An drouziwezh a zo o c'hortoz an Alamanned en Afrika an Hanternoz.

E Rusia o deus Soviediz lusket un argadadeg vras war-dro Voronej e gwalarn pe e mervent Stalingrad. Treuzet o deus an Don skornet war un talbenn a 90 kilometrad hag aet int war-raok a-hed 30 pe 60 kilometrad ; lazhet ez eus bet 20.000 Alaman ; ugent kêr a zo bet adaloubet ha dieubet diouzh beli an Alamanned. Dalc'hmat avat ez eus emgannoù e Stalingrad a zo gronnet koulskoude gant al luoz rusian ; pourvezioù a vez bannet d'an Alamanned a-c'horre ar c'hirri-nij.

Dilun 22 a viz Kerzu 1942

Da un eur nemet kard edon e Roazhon : troidigezh diwar gresianeg er Skol-veur. A-benn ar fin hon eus bet ur skrid tennet diouzh "Lezennoù" Platon da dreiñ.

Kent din loc'hañ d'ar Skol-veur e oa erruet Steven du-mañ da ziskouez din ar pennad en doa lakaet embann war ARVOR diwar-benn titouradur L.R. gant Piat war leurgêr an ti-kêr war zigarez e komze brezhoneg. "Betek pegeit e kendalc'hor d'ober ouzh ar vrezhonegerion evel ouzh 'pariaed' ?" a c'houlenn Steven.

Dimeurzh 23 a viz Kerzu 1942

Aet on d'al lenndi e-lec'h em eus kejet gant A.E., Kentel, an ao. hag an it. Mee. Amprestet em eus levr Bérard diwar-benn an Odusseia hag unan all en alamaneg diwar-benn Aten. Diskoachet em eus ivez "Spered ar Vro". Berrhoal e voe ar gelaouenn. War wall piv ? Ar rener pe ar Vrezhoneg ? An daou moarvat.

Kentelioù diwezhañ an trimizvezh er Skol-veur, gant Loyer diwar-benn Horatius. Prestet em eus an "Amours jaunes" eus Tristan Corbières d'an Danteg. Soñj am eus penaos e teraoue Mayer e rummad kentelioù diwar-benn ar skrivagner gallek-mañ : "Peogwir emomp e Roazhon ez eo dereat studiañ barzhonegoù ar skrivagner-mañ a zo ganet er "Finistère", unan eus pevar (sic) departamant Breizh..." Evel henn e tigore ar gentel gentañ. Din avat ne blij ken nemeur ar varzhoniezh vrizh-vreizhat-se nag ar stumm nag an awen anezhi ; he doan n'eo ket fromus ; habasketed a vank dezhi. Hag hebreizhadelezh, eveljust, n'eus nemet livusted anezhi.

Buhezskrid Kalloc'h gant Pallaux am boa prestet dezhañ ivez. Merzet em eus n'oa ket douget Roparz Hemon kalz da Galloc'h. N'eus netra iskis e kement-se. Re zisheñvel eo orin ha desavadur an daou skrivagner-mañ. Me 'oar n'eo ket bourrus klemmuskerezh Kalloc'h ; hogen lovenez ur skrivagner evel Claudel e Bro-C'hall n'amdedenn ket muioc'h rak ne hañval ket din bezañ natur. Doan ha levenez a zo mesket er vuhez-mañ, arvar ha diarvar en ur stourm n'eus dibenn ebet dezhañ ha na zisoc'h n'eus forzh penaos nemet d'ar marv, ur marv a chom mut evit Bediz.

Kent mont kuit da Sant-Jermen e ris un droidad o levr di. M. Leun e vez bepred ar stal-mañ ha dudius eo gollout divizout gant hini pe hini. Darn, ret eo anzav avat, n'int ket chalet : chom a reont un eurvezh bennak er stal ha goude -se ez eont kuit o prenañ un niverenn eus "Arvor" hep muiken, evel Steven en deiz all. Hemañ kennebeut ne briz ket nemeur mostr ar stal a gavan karadek koulskoude hogen a chom ur galleger touet hag a fogas dre maz eo unan eus ar 7.000 den a oar galleg (nag unan muioc'h, nag unan nebeutoc'h : n'ouzon ket pelec'h en deus kavet ar sifr-se). Padal on bet feuket meur a wech gantañ, e-kerzh ar brezegegn en deus graet ur pennad amzer zo dirak ar studierion, da skouer, pa lavare e va mat e keñverioù zo kemer skouer diwar ar genelwerinelourion ha digoll gant plasoù ha leveoù mat stourmerion ar Strollad ur wech ma ve bet gonezet an trec'h. Moarvat ned eo ken gredus ar gargidi c'hall evit ar stad c'hall nemet peogwir e tennont diouzh o c'harg enor ha korvo ; intañvez un ofisour gall he deus ul leve diwar-lerc'h he gwaz marv er brezel ; intañvez ar stourmer breizhat n'he devo nemet mezha ha reuzeudigezh : penaos e c'hellfe goude-se krediñ e Breizh ? (Danvezel-ourezed eo ar merc'hed ne vern penaos, urwech dimezet atav !)

Padal e kav din e ve dañjerus bras magañ seurt tro-spered (hag a ziskleir mat perak ez eo aet noblañsoù Breizh da glask enor ha korvo e Versailles) e-touez ar stourmerion vreizhat. Ar spered a emaberzh a zere hepken ouzh stourmerion ; a-hend-all eo gwell dezho chom er gêr ha klask ur vicher all (peseurt uhelskouer a zo a-hend-all en ur pemoc'h lart egiz Göring ? Hemañ, sur mat, en deus karget e chakodoù met peseurt stourmer gwirion en em ganno evit gellout ober kemendall ? )

Moarvat e klaske ar skrivagner feukañ a-ratozh e selaouerion rak bourrañ a ra o vroudañ e gendivizerion evel-se. Da unan a oa war-nes prenañ un embannadur a lorc'h eus oberoù Pascal e lavare ne c'helle ket gouzañv ar skrivagner-se ha d'ur beleg a felle dezhañ pourchas "Les décombres" eus Rebatet (1) e kemenne n'en doa hennezh damant ebet d' ar gloareged.

Da seizh eur on distroet da Sant-Jermen. Noz a oa anezhi. Ur vorenn bounner a oa plavet war ar parkeier.

Dimerc'her 24 a viz Kerzu 1942

Er gêr. Tuellenn ar skingomz a zo digor. Setu koleier. Ar Rusianed a ya war-raok atav ; 16.000 prizoniad o deus graet ; 5.000 enebour o deus lazhet. Abaoe deroù an argadadeg o deus lazhet pe brizoniet 80.000 alaman. En em gannañ a reer etre an Don hag an Donetz, evit ur skoulm-hentoù n'en doa pouez ebet e Lunden paz ae an Alamaned war-raok hogen en deus hiziv ur pouez bras da sabatuiñ abaoe m'emañ ar Rusianed o vont d'henn kemer.

Ar Saizon a ra bruderezh adarre gant krizderioù an Alamaned. Un ofisour alaman en deus lazhet n'ouzon pet bugel e Rusia dre m'o doa laeret digantañ ur palad sigaretinier. Euzhus eo se a-boan souezhus avat a-berzh ar re a zo tizhet gant kleñved ar butun ha na c'hellont ket diouerif o zriakl en amzer a gerez-mañ. Diouzh o zu e komenn an Alamaned deomp e vez heskennet ar brizonidi ez vev gant ar Rusianed. Da c'h'hortoz emañ an holl a-unvan oc'h en em gannañ evit ar "Sevenadur"!

Kement-mañ am laka da gounañ pezh a gonte Hamon din diwar-benn diskleriadurioù brezel an Alamaned. Atav e kavont dielloù kuzh en ur c'hozh bagon bennak evit diskouez e oa ar Stad-mañs-Stad oc'h iriennañ a-enep dezho hag e rankent a-se kemer o diarbennoù evit mirout outo a nozout (er Balkanioù, a-raok tagañ ar Rusianed pe ziskleriañ ar brezel d'an Amerikaned). Perak kement a gorigelloù maz int ar re greñvañ hag eus gouenn ar vistri war ar marc'had ?

Neur a baotr eus ar biojoù-mañ a zo bet deoget gant ar servij-labour hag a zo aet da vicherour o Bro-Alamagn. Mñb skluzierez K., da skouer, a labour du-se war un dro gant paotred all eus ar vourc'h ; implij en deus kavet en ur vilin-boultr ; a-hend-all ez eo maget ha lojet mat, tomaet mat ivez,

(1) Rebatet a oa ur skrivagner gall eus an "Action Française", a gav din. En e levr e lakae samm an drouziwezh war an trede Republik hag an demokratelezh. Abezen a veneg al levr ebarzh "GALV".

kafe laezh dezhañ, er memes ranndi gant e gamaladed. Ar pezh en deus skoet e spered du-se eo naetadurezh ar greanti ma labour ennañ. Padal n'en deus awalc'h a amann ha goulennet en deus digant e vamm kas dezhañ.

Hervez Yann ez eo deuet Traumas, kelenner istor e Sant-Marzhin, a oa a-enep d'ar Saizon er gentaou, da vezañ a-du krenn ganto en un taol. Netra souezhus : an tu-kreñv a zo ganto diwar vremañ.

Renet em eus ar burevezh o lenn "Spered ar Vro". Taolet em eus evezh ouzh un "diskours" politikel gant Taldir hag ur pennad diwar-benn prederouriezh gant an hevelep skrivagner : "Divarventez an eneoù". Ar yezh a zo resis a-wechoù met n'eo ket glan tre atav.

Dimeurzh - dec'h - e oan aet da gentel Per ar Rouz. Ar wech-mañ avat n'en em gavas nemet an danvez skolaerezed (n'eo ket deuet ar baotred ; hervez Feutren ne blij ket da rener o skol ha rak-se ne gredont mui en em ziskouez.) Ar skoliadezed nevez a zo eus Treger ha strivañ a ra Per ar Rouz d'o lakaat da geñveriañ o eilvezh ouzh ar yezh lennegel. Plaenaat a reomp ur pennad eus ar "Roc'h toull" hag ivez rak'hoari "Santez-Barba" e brezhoneg krenn e ser gwerzoerezh ar yezh (1).

Ouzhpenn Feutren e oa deuet Kentel ha Youenou.

Digwener 25 a viz Kerzu 1942

Darlan a zo bet drouklazhet : setu ur c'heloù nevez. Tro vat d'ar re a gar an nevezintioù. Radio Aljer a soblant bezañ mantret. Kalz a vri a oa douget du-se d'an Amiral, a-hervez. E gomzoù diwezhañ a veze bet ar re-mañ : kendalc'hit gant ar stourm betek an trec'h ; na rit forzh eus an dud evit ober an unvaniezh etre Gallacoued.

Er gêr ez eur prest da gredif ez eo bet muntret an Amiral diwar atiz an Alamaned a felle dezho tennañ dial eus e "dreitouriezh". Ar soñj-se n'eo ket gwirheñvel avat.

Disadorn 26 a viz Kerzu 1942

Fuzuilhet eo bet muntret Darlan : n'int ket diek da varn an dud en Afrika-an-Hanternoz. Petra ' oa da varn a-hend-all ? En amzer vrezel ez eo ar muntr moarvat ar politikerezh nemetañ. Kuzhet eo bet anv an drouklazher ouzh ar foran. N'ouzon ket perak.

Pemp "sponter" warn-ugent a zo bet barnet d'ar marv e Roazhon, darn evel soudarded di-unvanwlak, ar re all da vezañ a-du gant an "enebour". Ar re-se a oa bet merzet gant G. moarvat. Etre 19 ha 45 bloaz o devoa.

Evel warlene omp aet va brouer ha me da gerc'hat ur c'hobarad etivi e skluz ar Beuzid ; stlejet hon eus ar c'hobar betek kal skluz Sant-Jermen. Ezhomm ' zo a geunad

(1) Dre berzh lezennoù nevez Vichi e oa krog an danvez mistri ha mestrezed a-berzh stad da zeskiñ ar yezh. Martray, skolaer e unan, a embanne evito ur gelaouennig "An Eost" (sekretour Pouere e oa en amzer-se).

evit ar goañv. Ambrouget omp bet gant va zad hogen n'omp ket bet sikouret gantañ tamm ebet : dinerzhed hag izil ez eo deuet da vezañ diwar e gleñved.

Abarzh ma serras an noz ez is da gerc'hat amann en ur vereuri, daou gilometr ad pelloc'h war hent Mousterele-ar-Rivinoù.

Disul 27 a viz Kerzu 1942

Va zad a zo marv d'ar mintin-mañ war-dro eizh eur ha kard...

P e n n a d 11

Un nebeut munudoù a ouzhpennin evit klokaat an danevell eus dibenn ar bloavezh 1942.

Ur bloavezh tonkus e voe hini 1942 rak neuze eo teuas anat e vefe trec'het an Alamaned hag e oa aner ar goanag o doa maget darn e vefe savet ur Stad e Breizh abarzh pell. Koun am eus em boa kejet gant Remont ha Youenn Delaporte pa oant o tont er-maez eus burevioù an "Heure Bretonne", stradae Estrez ; d'ur sul e oa, a gav din, da veure, e-kreiz miz Du pe zeroù miz Kerzu. Eskemmet em boa un nebeut goriannoù gant an daou vreur ; meneget em boa emgann Stalingrad a oa o vont endro d'an ampoent ha goulennet em boa ouzh Youenn Delaporte petra a soñje diwar-benn ar c'hadengav. Ha Youenn Delaporte da eilgeriañ prim e oa troet an emgann-se d'un drouziwozh evit an Alamaned hag e oa kollet ar re-mañ da vat. N'en doa ket reet muioc'h a dro d'e gomzoù neuze hogen ken saouzanet e oan bet gant an ali a estaole Youenn Delaporte (politikerezh kefridiel S.B.B. a c'houlakae trec'h an Alamaned) ma ne oa ket deuet war va spered goulenn hiroc'h diskleriadurioù digantañ.

Bezet pe vezet, diwar glevout alioù a seurt gant homañ, war-bouez selaou ar skingomz saoz, e oan deuet da arvarañ da vat diwar-benn berzh-mat an Alamaned er brezel ha da goll pep spi en un dieubidigezh eus Breizh war verr dermen, petra

bennak ma kendalc'hen da c'hedalc'hen n'ouzon peseurt burzhud en defe diwallet an Emsav ha Breizh diouzh ur faezhidigezh klok, hep gwelout avat peseurt stumm a c'hellfe kemer ar burzhud-se.

Er "sevenadur" e klasken ankounac'haat va c'herese daoust ma ne raen ket end-emouez a-grenn, a gav din. Padal e teuis diwar neuze da bleustriñ dreist-holl bodadegoù ha kentelioù ar Skol-Uhel, gant ar soñj e oa dav din klokaat ar muiañ ar gwellañ va deskadurezh keltiek ma felle din c'hoari ur roll bennak en ur Stad vrezhon, lakaat e toufed a-benn d'henn sevel en un dazont tost awalc'h.

Bodadegoù ar Framm keltiek a veze dalc'het er bloaz-se e sez ar Framm, na pelec'h 'ta, e trede solierad-ur an 19 st. ar Moneiz, e-tal burevioù ar gazetenn "La Bretagne". En un doare a vo kavet souezhus awalc'h gant darn en devoa Roparz Hemon hag oñ brogarour taer a-hend-all muioc'h a zarempred gant an emsav kempennour rik renet gant Yann Fouere eget gant S.B.B., lakaomp, evit abegoù a gadoniezh hag a bleustregezh dreist-holl avat, o vezañ ma oa bodet er Framm keltiek kalz a rannvroelourion a bep seurt. Bras awalc'h e oa rannidi ar "Bretagne" a-hend-all ha lec'hiet e oa burevioù ar Framm ebarzh div gambr vihan, war ul live un tammig uheloc'h eget ar peurrest eus ar rannidi, a-valir a-us d'ur porzh diabarzh a-hend-all. Eno e labourer A.E., Tranvouez ha va c'hoar N. a-c'houdevezh. Gant emsaverion all e kejen evelato ebarzh burevioù ar "Bretagne" (ret eo lavarout e veze graet kentelioù ar Skol-Uhel ebarzh burevioù ar "Bretagne" ha n'eo ket ebarzh ar pozhioù miret d'ar Framm), da skouer gant E.T., gant Andrev Golleg, ur mologan e vourroù melen, a oa sekretour Roparz Hemon, bet skolaer a-zingent, douarnenezad ha brezhoneger eus an dibab nemet na heulie ket hor c'hentelioù evelato ; gant Alan ar Derr, un duard e vlev gloanek, lunedoù skant tev dozhañ, Gwaienad evelton - va mamm a anaveze e dud - bet skolaer ivez, o labourer er "Bretagne" ivez, brezhoneger mat, a-vihanik - un tammig koshoc'h egedon;

rannañ a raen gantañ ger pe c'her hogen evelkent n'em boa ket kalz darempred gantañ rak ne hente ket nemeur bodadegoù an Emsav a-hend-all.

Marteze e c'hellin skrivañ bremañ un nebeut geriennoù diwar-benn ar geneiled nevez a ris din e dibenn bloaz 1942. Ne zalc'h ket pell gant Feutren rak ne savas biskoazh gwir vignoniczh ebet etrezomp. Ur paotr taer ha kalet a oa anezhañ neuze, bredelour, hollek awalc'h e breder, nemet na skoe tamm ebet war ar memes tu ha va hini : hor stummadurioù hag hor speredegezhioù a oa diforc'h a-grenn. Er bloaz war-lerc'h a-hend-all e emouestlas er "Bozen" ha na gejis gantañ nemet dre zegouezh.

E.T. am eus meneget endev ivez a oa ur melegan lagadet glas, ur paotr seder, gwallevurus avat en amzer-se dre ma oa tizhet da vat gant kleñved ar butun rakne gavo ket aes e walc'h a louzoù Nicot.. Dont a rae eus Paris e-lec'h e oa divroet e dad ez yaouank (ur c'hernevad eus kostez Kemper); hemañ a labourer war an hentoù-houarn evel blenier stlejorez hag a oa techet da vennozioù ar gostezenn gleiz kentoc'h, evel maz eo kaer gortoz ; kement-se a ziskleir perak n'en devoa E.T. karantez arbennik ebet evit an Alamaned ; moarvat ne oa ket a-enep dezho hogen nac'hañ a rae ivez kemer perzh en o stourm ha moarvat war an hovelep arbenn ha me : evit choù hep bezañ rannet krenn diouzh tud hor pobl a oa enebet krenn ouzh an Alamaned neuze.

Hag eñ distudi awalc'h - ranket en doa kuitaat ar skol abred - en devoa E.T. desket mat ar yezh evelato. An dezo en devoa bet da sevel oberennoù brezhonek zoken. D'ar mare-se en devoa displeget din tostenn ur pezh-c'hoari en devoa empennet hag a oa lec'hiet an darvoudoù anezhañ er c'helc'hiadur poblek a anaveze. C'hoant awalc'h en defe bet lakeat c'hoari e oberenn e skinglec'h Roazhon (R.S. a rae goap ouzh e vennad ; ne ouie ket E.T. awalc'h a vrezhoneg evit skrivañ hovelep oberenn, a lavare). Bezet pe vezet, ne gasas E.T. biskoazh e ratozh da wir hag abarzh poll e ankounac'haas

e c'halvedigezh skrivagner.

Broadelour taer e oa va mignon - n'ouzon ket penaos e oa deuet da vezañ - hogen a-hend-all n'en devoa kredenn rosis ebet ha se a rae diaez dezhañ rak karot en defe awalc'h en em stagañ ouzh unan evelato. A-wechoù en kleven o lavarout e oa dedennet gant ar gristeniezh hag en defe degemeret awalc'h ar gelennadurezh anezhi nemet e oa harzet gant gwallskouer an Iliz hag ar veleion a oa e servij ar vourc'hizion ha na raent forzh ebet eus ar bobl (daoust ma ne oa ket ur c'homunour eus va mignon e chome an enskiant renkad lomm tre en e spered). Eus ar bobl e oan eveltañ hogen kavout a rae din e komeske E.T. daou savlec'h diforc'h mat, rak anat e oa dinne c'helled ket barn talvoudegezh ur gravez evel kravez diouzh ur sellboent politikel pe gevredigezhel (an eneb a zo ken gwir all, a-hend-all), anez degemer ez eo ar gravez, a rakgoulenn, isurzhiat d'ar politikerezh. Se avat ne lavaren ket d'am c'heneil : bez e oa etrezomp un diforc'h a vuhezadur hol lakae da gomz ur yezh disheñvel goude ma arveremp an hovelep gerioù.

E.T. ne vanas ket pell gancomp. E-kerzh ar bloaz 1943 e voe galvet gant ar "warnezh c'hourc'hwel" vichiat evit mont da labourat e Bro-Alamgn. Gwallstrivañ a reas evit tec'hout diouzh lezenn Vichi diazezet diwar atiz an Alamaned. Tro-wenn a reas. Neuze e kavas gwelld bezañ disuj ouzh al lezenn-se. Mont a reas d'en em guzhat war ar maez, e tiegozh ur c'houer broadelour, un tu bennak e bro Erec'h, e-lec'h e chomas betek dibenn an dalc'hidigezh alaman.. Tro am boe avat d'e adwelout ha d'e zaremprediañ goude ar brezel.

Graet em boa anacudegezh gant R.S. d'ar seitekvet a viz Du e-kerzh ur vodadeg eus ar Strollad. Diouzhtu e oamp deuet da vezañ mignoned vras. Nes e oamp an eil d'egile e meur a geñver ; genidik e oamp eus an hovelep korn-bro a Gernev-izel, eñ a Zouarnenez (e dad avat a zeue eus Plouhineg e-kichen du-mañ). Ur stumm hoalus en devoa R.S. ivez : bez e oa anezhañ un duard hirvoan, dremmet hir, daoulagad du birvidik



en e benn. E-touez va mignoned e oa eñ an hini a ouie ar gwellañ ar brezhoneg, hep mar ebet. Ne oa ket R.S. koulskoude brezhoneger a vihanik muioc'h egedon hogen bevet en doa e Douarnenez pelloc'h amzer eget n'em boa-me graet e Gwalen.

Dre vras a-hend-all e oa va mignon donezonet dreist evit deskiñ yezhoù. Trement en doa e vugaleerezh e Bro-Ejipt a oa dalc'het neuze gant ar Saizon hag eno en doa desket saozneg a vihanik, a gav din (e dad a oa loman war ganol Suez ha kendalc'het en doa gant e vicher e-doug ar brezel, ma oa bet darnacuet dezhañ ur vedalenn gant ar C'hallaoued e 1948, a gav din). Ne vern penaos, R.S. a ouie saozneg mat tre ha diwar vevañ en un aergelc'h saoz a-vihanik en devoa kemeret un dro-spered dic'hall a-grenn en lakae da drezefi ouzh ar stourmerion vrezhon a blede gant Breizh hep bezañ gouest da ziouerifi ar stuzegozh c'hall.

E-kerzh an diviz kentañ hor boa bet em boa marzet e oa heñvel awalc'h hor savbentoù diwar-benn an emsav ; eñ ivez a roe ar muiañ pouez d'ar yezh ; ne brize ket kement an istor. En oneb d'am mignoned all ne c'hoarveze nepred gant R.S. rannañ ger ebet e galleg ha se a blije din awalc'h ivez.

Evit an abegoù-mañ hag abegoù all ha n'oa ket emouez mat outo moarvat eo e teujomp da vezañ mignoned. E-pad an daou vloaz war-lerc'h en em weljomp avat hogozik-bondez, koulz lavaret, e bodadegoù ar Strollad pe e kentelioù ar Skol-Uhel. Alies ivez e teue R.S. d'am c'herc'hat st. Sant-Melani ; mont a raemp da vale e kêr ha divizoù hir da sabatuifi a veze etrezomp diwar-benn testennoù liesseurt, an Emsav, oveljust, peurvuiañ, met re all ivez, e vuhez kent, da skouer, an hini en doa renet e lise "Aix-en-Provence" ; n'oa ket evit gouzañv ar greizdouaridi a oa neuze war e dro, a zisploge ; klañv e oa bet ivez ha ranket en doa diskuizhañ epad ur bloavezh hanter bennak ; e karantez ivez : neuze e oa evurus, a lavare ; echuet ar barrad a-benn neuze avat ha n'oa ket mui nag evurus na wallevurus, enocet hepken, a resize.

Kalz mennozioù a zezrevelle din va mignon hag a-wechoù

- koulz eo din anzav - e vezen souezhet ganto dre ma ne zeuen ket a-benn d'o foellañ ervat. En un doare iskis awalc'h ne save c'hoant ebet din d'o burutellañ ; o degemer a glasken bepred daoust ma oa diaes din meur a wech. Diwezhatoc'h hepken, paz eas va mignon a-ziwar wel din, e vezis pegen skort e oa darn eus ar mennozioù a estaole neuze. E gwirionez e prezege R.S. un tammig a-hed hag a-dreuz ; prest e oa da zougen barnadennoù prim war an dud hag an ensavadurioù ha feuket e vezen pa bismige evel-se renerion ar Strollad rak soñjal a rae din e oa ret kaout ur rener pe renerion e penn un urzhiadur ha ne oa ket fur eta klask diskar hep gwir abeg o brud hag o beli : ur skiant eus ar genurzh hag ar gonsentidigozh politikel am boa ha n'en devoa ket nemeur va mignon.

Evelato ne daolen ket re a evezh ouzh e doadadoù hag e flemmadennoù peogwir e embannemp hon daou o oamp broadelourion ha disrannourion. War galz poentoù all avat ne glote ket nemeur hor mennozioù, hini ar gravez adarre. Daoust ma oa kristen e tisklerie R.S. da skouer e oa arabat kristenañ ar vorianed dre ma oa stag ar gristeniezh ouzh sevenadur ar C'hornog (me avat a roc un dalvoudegozh hollek d'ar gristeniezh evidon da anzav e oa bet diorroet er pleustr e framm sevenadur ar C'hornog) ; a-wechoù all e c'hoarveze gant va mignon asurifi n'o devoa ur beurbadelezh evurus nemet ar re o devoa ur marv gwenvidik : dibaot ar re a asant d'ar marv gant levenez, a soñje din.

Nebout e oa kement-se evit hon disrannañ. E gwirionez ne gomzemp, koulz lavaret, nemet diwar-benn Breizh, an Emsav, ar yezh - ar yezh dreist-holl rak R.S., daoust dezhañ bezañ broadelour en amzer-se, ne rae da vat nemet war-dro ar yezh ha ne hente nemet poadred an emsav sevenadurel : "komzour" e oa er skingomz (mat tre e oa e bouezmouezh, hini Douarnenez, oveljust) ha skrivañ a rae ebarzh "ARVOR". Kalz a bouez a roe d'an distagadur ha d'an teodyezhoù ha se a oa natur en ur grez ma oa klevet kalz brezhoneg c'hoazh war ar maez.

Evel pep hini ac'hanomp d'ar mare-se en devoa savet e dammig gastumad a c'herioù ha troioù-lavar poblek eus e gorn-bro. Skridoù a bep seurt a save, a gredan, evit ARVOR dreist-holl. Kredif a raen zoken e oa danvez ur skrivagner ennañ (ur soñj ha n'en devoa ket e unan, e gwir) hogen ar skrid a bouez nemetañ a aozas d'ar mare-se e voe un obereñn skiantel : un "hollvedoniezh". Diskouezet en doa din ur wech ar skrid anezhañ, dornskrivet kaer ha fraezh kenañ war ur c'hader ; biskoazh avat ne voe embannet an obereñn-se hag evel meur a hini all ez eas ivez da goll.

Hedro ha distabil meurbet e oa va mignon e gwirionez hag ar geneiliez am boa evitañ a vire ouzhin a verzout e berzhioù-fall. E devoud ne grede ket nemeur e c'helle an emsav ober berzh un deiz ha rak-se ivez e veze bepred o klask digarezioù evit kuitaat anezhañ : dremmañ a rae, da skouer, ouzh mont da repuif en Iwerzhon ma ne zeujemp ket a-benn da sevel ur Stad e Breizh. E dismeg ar rummad-mañ a Vrezhonez e kave ivez un arbenn da zilezel ar stourm evit adsevel ar vro. Graet en doa un droiad en Izelvroioù diouzhtu war-lerc'h ar brezel hag o tistreiñ en devoa estalet dirazon war un dro e estlamm ouzh Izelvroiz, anezho tud dieub ha seven, hag e zispriz ouzh ar Vretoned ha na oa anezho nemet un tropallad sklaved. Anozet e oan bet gant e varnadenn a oa awenet dreist-holl, a gav din, gant ar c'herse o vezañ ma ne oamp ket bet evit lakaat ar Vrezhonez da zegemer aviel ar vroadelouriezh epad ar brezel (met ne oa tu ebet kennebeut : ne vern penaos ne oa ket un abeg da zilezel ar stourm).

Hag eñ boazet a-vihanik da verdeif ha da foetañ bro ne c'hellas ket R.S. chom e Breizh adal 1945. Evel e dad hag e vreur e krogas da veajiñ ha da verdeif - war listri saoz avat. Goude-se en em stalias e Bro-C'hall. A-benn neuze avat en devoa kuitast an emsav ha mont a reas a ziwar wel din. E gwirionez ne oa ket deuet a-benn da zibab ur

vicher da vat (1).

Ma ne rae ket diouer din kenciled ha kenseurteñ en emsav n'em boa ket tro ennañ da skoulmañ darempred gant plac'h yaouank ebet. Moarvat e kaved marc'had emezelet er Strollad ha va mignon L.M. en doa dimezet gant unan anezho hogen dibaot meurbet e oa ar re-mañ hag an nebeudig re a bleustre bodadegoù ar Strollad ne ouient tamm brezhoneg ebet ha n'o doa tamm c'hoant ebet da zeskiñ, a gav din. Ken dister a bled a daolen outo ma n'em eus ket notet zoken o anvioù.

Er skol-veur avat e kejen gant un toulladig brezhonegerezed a vihanik hogen dizesk a-grenn war ar yezh, eveljust. Ouzh unan anezho em boa taolet pled, studierez eveldeon war ar studioù klasel, nemet daou vloaz koshoc'h egedon, ugent vloaz dezhi d'an ampoent, tizhet ganti an hantter eus hec'h aotreegezh pa oan-me o kregiñ gant va hini. Licutet bihan awalc'h e oa, gwenn he liv evel ma c'hoarvez gant ar rouzardezed, daoul gad pers dezhi, ur pennad blev brav tre a liv gant ar c'houevr. Plijout a rae din kalz. Epad ur mare em boa soñjet ne vefe ket bet fall a-c'houdevezh kaout da bried ur vaouez a ouenn hag a zeskadurezh ganin ha brezhonegerez war ar marc'had. Epad daou vloaz e vagis ur spi seurt se ; hogen a-benn miz Mezheven 1943 e kuitas ar studierez-se ar Skol-veur ha buan awalc'h e tilezis va froudeñ.

Warlene ez eus bet moulet war ar golaouenn emsav skrid ur vreuradeg diwar-benn an dimeziñ hag an emsaverion e-lec'h e kaver evezhiadennoù fur meurbet hop mar.

(1) Na bledomp ket gant pobl Vreizh peogwir e telloz e ve graet war he zro hogen peogwir ne c'hell ket an dud bezañ gwellaet nemet e framm ur strolliezh vroadel e ve. N'eo ket reizh da unan en em zigenvezañ diouz ar gevredigezh ha bevañ evitañ hepken pezh a reer muioc'h-mui en ur gevredigezh a vezezezh. Diouz un tu all ez eo dañjerus ompennañ hon ober hag hon darempred gant an nesañ en ur framm hollek ha difetis evel hini an danelezh pe an istor dre vras, pezh ez eo techet d'ober ar varksourion. Dibocell e oa n'eus forzh penaos savboent va c'heneil a nac'he stourm evit Breizhiz peogwir ne zellezent ket kement-se.

Ret eo din anzav koulskoude ne oan ket tost en amzer-se da gaout koulz furnez ha skrivagnerion ar gelaouenn ENSAV en niverenn-se eus ar gelaouenn. Evit komz fraezh zoken ne vezon darempred ebet etre an tiegezh hag ar garantez ; em meizadur eus ar garantez ne oa lec'h ebet evit ar vugale ha se oa natur moarvat d'an oad am boa ; ar garediged, d'am soñj, ne c'hellent bevañ nemet evito o unan ; awalc'h e oant dezho o unan. Bez e raen eta eus an dimeziñ un englev klok a galon hag a breder hogen na zisoc'he evidon da neb lec'h. N'em em c'houlennen ket nemeur da skouer peseurt yezh a vefe arveret gant ar garediged-se. Moarvat e tamsoñjen ne oa netra di-c'hallus d'ar garantez ; goulakaat a raen hepken ne oa dezho kudenn ebet war an dachenn-se o vezañ ma vaste ar garantez un unvaniezh disi d'ar re en em gare. Hogen ne vefe ket deuet war va spered ober eus an emsav pe eus ar yezh diazez va eured. War un dro e savelen ne c'helle bezañ a garantez nemet pourbadus e vefe.

Hovelep faltaziennoù a oa pell awalc'h diouzh ar vuhez douarel-mañ moarvat ha mat awalc'h hepken evit ar baradoz. E gwirionez en em serren en ur c'helic'h a zislavaroù ne oa tec'h ebet dioutañ. Awalc'h a skiant-vat am boa evelato evit meizañ o c'houlenne ur plac'h peoc'h ha sioulder er garantez, da gentañ penn. Kompren a raen ivez a-hend-all ne oa gallus an eurvad a huñvreen nemet en em ouestlañ em befe graet dezhañ penn-da-benn. Hogen dres d'ar mare ma imbrouden an dimeziñ klok e oan enemroet endev d'un obererezh dispac'heñ a c'helle reuziañ va buhez pe zoken he distrujañ. Peseurt kar-edigez he defe gallet degemer hevelep rakwel a reuz hag a zistruj zoken evit dazont he dimeziñ nemet lodet he defe a-grenn brogarouriezh he fried (ha c'hoazh, daoust ha ne oa ket kement a zic'hoantegezh dreist da vertuz an darn-vuiañ eus ar c'haredigezed o unan ?)

E gwir e tlejen bezañ komprenet diouzhtu e oa diwirion a-grenn va meizadur romantel eus ar garantez. Moarvat

ne c'hell ket ar garediged diouerñ an dedannerezh korfel a sach anezho an eil war-du, egile hogen heñañ n'eo ket awalc'h konnebeut rak hedro ha liestuek eo an dedannerezh-se ha tonket eo dezhañ chom aner ma ne gav ket sol en estlamm a zo diazezet en ur reizhiad talvoudoù boutin d'ar re en em gar e framm ur gevredigezh bennak (er c'heñver-se ez eus ag ar garantez un devoud stuzegezhel). Ne c'hellen bezañ anavezet eta nemet evel emsaver ; bezañ emsaver avat n'eo tamm ebet koulz ha bezañ Breizhad en ur Vreizh dieub ; bez ez eo an emsaverzh un emouestladur pe c'hoazh ur c'halvedigezh a chomo e pep amzer dibar ha disourc'h (evel ar vicher a vrogarour pe a stourmer politikel en ur Vreizh dieub zoken). (1)

Dre ma tamveizen kement-se em boa lakaet em spered mui pe vui degas d'an Emsav ar plac'h yaouank he doa gouezet plijout din. Merzet em boa hep dale avat em boa sammet un drevell hogos dic'hallus. E gwir n'em boa tro da dostaat ouzh ar studierez-se nemet epad ar c'hentelioù. Bevañ a raer gâr ha ne bleustren ket zoken predi ar studierion. A-hend-all, dindan an dalc'hidigezh alaman ne oa er skol-veur oberiantiz c'hweluniadel na politikel a nep seurt (ar strollad politikel nemetañ a rae un tamm bruderezh e-touez ar studierion a oa ar Strollad Broadel). Ar vrogarourion c'hall hag ar gomunourion ne c'hellent kaout obererezh digor ebet hag e devoud ne glevet ket komz anezho tamm ebet.

Tro pe dro evelato em boa gallet toullañ kaoz gant B.M. e-kerzh ar c'hentelioù hogen ne oa ket aet gwall bell hon diviz peurvuiañ. Soñj am eus e lavare din ur wech gant un ton skrijus a roe din fent awalc'h e anavezehi "un autonomiste enragé". Ne ouezis biskoazh piv e oa an "empereur kounnaret"-se  
.....  
(1) Levezonet e oan eveljust gant al lennegezh a navezen, gant romantoù a oa bet erbedet din evel oberennoù a dalvoudegezh, ar "Grand Meaulnes" am eus meneget end-eeun, da skouer, pe c'hoazh ur romant all eus "Malgües", ur skrivagner kristen gall en doa embannet "Augustin..." a-raok ar brezel : er romant-se end-eeun e oa taolennet ur garantez romantel ha n'he doa talvoudegezh ebet diouti hec'h unan, a soñjen, rak ne oa anezhi nemet un dro da bonndudenn ar romant da adkavout ar Feiz.

(maruze va danvez breur-kaer a oa genidik eus ar memes bourc'h eus Kernev hag hi ; hemañ, a-hend-all n'anavezen ket d'ar mare-se). E ser an emrener kounnaret-se e ouzhpenn e plije dezhi kalz ar baotred o devoa "personelezh", evel ma lavare ; n'ouzon ket ket re vat petra a intende dre ar ger-se hogen moarvat e klave furoc'h estlammañ ouzh an "harozed" a bell-eged o c'har-out a dost rak an danvez gwazed a zo graet, evel m'henn diskouez o anv, evit servijout ar gwagez hag an "harozed", anzav a ranker, n'o deus ket nemeur a dalvoudegezh er c'heñver-se.

Dacoust hag un emsaver a c'helle dimeziñ zoken an un amzer a zispac'h hag a drubuilh evel an hini a oa o ren neuze ? Setu ur goulenn a raemp L.M. ha me deomp e-kerzh ar bloavezhioù-se. Henezh a responte neuze e oa gwelld d'un emsaver mennet da gas da benn ur stourm arvarus chom hep sevel tiegezh ebet ; karout ur vaouez a c'helle, o chom dieub avat hag hep en em stagañ da vat outi. Diaes e oa din kaout un ali war an divoud-se hogen ne oan ket techet tre da zegemer mennoz va mignon rak empennañ a raen ar garantez evel un darempred da badout ha liammoù a seurt gant ar re a venego din L.M. ne c'hellent nemet bezañ bresk, a soñjen.

Ne verne a-hend-all pe badus pe verrbad e vefe bet ereoù ar garantez, diazezet e tleent bezañ, a soñje din, war ar bri a zougje ar garediged an eil d'egile hag hep dale o verzis ne oa chañs ebet da hevelep ken-istim diwanañ etre ar plac'h blije din ha me va unan. Dic'hallus o oa eta an darempred a hireazhen dezhañ.

Dacoust ha gallus e oa zoken ? O vezañ e oa tonket d'am c'hanrantez c'hwitañ e teuen da arvariañ diwar-benn an dalvoudegezh anezhi. Dre va studioù a lennegezh end-eeun e kaven tro da wiriañ pegen bresk e oa ar "garantez". Buhez ar skrivagnerion hag an arzourion - buhez ur c'halz anezho da vihanañ - a ziskoueze e troe o hireazh d'an eurvad d'un hemolc'h aner war-lerc'h ur baradoz dreist-diraez damwolet ha goanaget o dremm ur vaouez ha na oa nepred an hevelep hini. An distab-illed-se eo dres a lakae diaes va spered. Ma c'helle ar garantez

kaout he boued e n'eus forzh peseurt maouez e oa anat ivez n'en doa ar rakvoud anezhi talvoudegezh ebet ; diskiant e oa reñf ur werzh diseurt d'ur boud hepken e-touez kantmilionoù a vouedoù all. Skiantekoc'h e seblante bezañ ar garantezvro dre ma ne oa ket ken chin ar rakvoud anezhi hogen ne c'hellen ket mirout a soñjal meur a wech e oa ken aner ha ken dibocll ha ne vern pe garantez all o vozañ ma ne oa ket degemeret gant hor pobl end-eeun : ne c'heller ket ober vad d'an dud dacoust dezho o unan. Ken digenzez en em gaven er garantezvro hag er garantez hec'h unan (1).

An digempoellderioù hag an dic'hallusteroù-se am lakae d'en em aters diwar-benn gwir natur va zrivliadoù ha ster va zonkadur paogwir e oa graet va zonkadur gant va zrivliadoù. Pa gave din e oan ar muiañ dieub hag ar muiañ oberiant, dacoust ha ne oan ket e gwirionez e dalc'h tehoù diharzus, diemouez ouzhin, a oa e diazez va fersonelezh ? Ma n'o doa va zrivliadoù ster ebet dre ar rakvoud a roen dezho n'o doa hini ebet kennebeut dre an orin anezho (2) Er mizvezhioù-se em boa lonnet skridoù zo gant R. Jestin ebarzh "Gwalarn" e-lac'h e oa diskouezet trivliadoù ha personelezh evel emdoull nemetken ha kavout a raen er skrid-se danvez da brederiadennoù hurennek diwar-benn gwir dalvoudegezh ar garantez.

Skouer va re hemañ en emsav ne oa ket nemeur evit daskoriñ din va feiz er garantez : hag int orru e barr an oad n'o doa ket kavet c'hoazh ar pezh a glasken va unan. Gouzout a raen da skouer e oa de F., ar skrivagner gallek, o paouez kimi-adiñ diouzh e wreg kentañ evit kemer ur pried nevez, an hini end-eeun e kejon ganti en e stal. Eveljust ne ouien netra resis diwar-benn se. E divizoù an beze gant ar skrivagner avat em bofe merzet awalc'h damvenegoù eus e dro spered d'ar mare-se.

(1) Hevelep dodenn a zo bet meret gant Roperzh ar Mason ebarzh e roman "Evit ket ha netra".

(2) Prederiadennoù hir war zivouedoù seurt-mañ am boa lakeet dre glarid ebarzh va deizlevr d'ar 15 a viz Kerzu. Awenet e oant evit darn gant al lennadur am boa graet neuze eus "Ar Boudha hag ar voudhadegezh" eus R. Jestin.

E ser oberenn Roparz Hemon "Lina" e c'hoarveze gantañ ober anv eus ar merc'hed-se a zistruj ur gour dre ma ne aotreont buhez personel ebet dezhañ, a ra eus o gwaz o ferc'henniezh prevez e pep keñver ; ur wech all, dre zegouezh bepred, e komze eus 'drougiezh' merc'hed zo ha damwelout a raen e kaozioù seurt se prezegoù goloet o tennañ d'e vuhezadur egiz p'en dije bet ezhomm d'en em zidamall dirazañ e unan rak, a-gostez, en e unan, hep teurel gwall berzh ouzhin, e tistage an evezhiadennoù -mañ.

Trubuilhoù Abeozen ne cant ket dianav din d'ar c'houlz-se. E diegezh kentañ ivez a oa o vont da get epad ar brezel. A-zivout an drouziwezh-se ne ouien netra resis ken-nebeut. Tro pe dro avat e tichañse din merzout ar skrivagner a-gevret gant danvez e eil wreg, ur wech, soñj am eus, ouzh taol an davarn a oa staliet neuze e-skoaz da gafedi ar "Peoc'h" hag am eus meneget endev; war ar c'haeod. Evidon avat n'en doa Abeozen buhez prevez ebet ; ne oa nemet va c'helenner brezhoneg kremm ha ne vourren ket o soñjal en devoa ur vuhez all er-maez eus an emsav (daoust ma oa e vab o studiañ, a gav din, en Arzoù-kaer e Roazhon, ne spurmantis gwech ebet al liv anezhañ). Evidon da ziwall da varn buhezegezh Abeozen e oan sebezet evelato gant ar pezh a oa c'hoarvezet gantañ : gounit kalon ur plac'h yaouank hag eñ kozh awalc'h e zoare ha stumm garv dezhañ a-hend-all ; ne oan ket souezhet avat en defe gellot de F. kas da benn hevelep kur gant an arvez kaer hag an tres yaouank en devoa !

Bezot pe vezet, strafuilhet don e oa Abeozen gant e donkad, marc'hedet ivez ha soñjal a rafen awalc'h en devoa degemeret e eil dimeziñ, evit darn, evel un digoll d'ar gwall en devoa sevenet o tispenn e diegezh kentañ hag 'enor' ur plac'h yaouank. Moarvat e lennen evel an holl e varzhoneg "Kala goañv" war "Walarn" hag e brederiadenn diwar-benn ar garantez war GALV hogen d'ar mare-se ne verzen ket mat an ere a c'helle bezañ etre ar skridoù-se hag e brouiadoù a neuze.

Netra en e emzoug neuze ne roe da soñjal e oa gwasket gant an enkreiz ha paket en ur wall-enkadenn eus e vuhez nemet un taerder hag ur feulster diseurt en em ziskoueze en e zivizoù, nemet ivez damvenegadurioù graet war ar prim ha dre zegouezh eus ar gwraze-se ha n'o deus karantez wirion evit o fried. Emichañs n'en devoa kavet Abeozen tamm damant ebet a-berzh e bried kentañ d'e vennozioù politikel (breizhat hag a-gleiz betek ar brezel) ; kredapl eo zoken e kemere houmañ ar Breizhatavad a oa anezhañ evit un istrogell hag e rae brezel dezhañ evit ma tilezje un obererezh dic'hounid ha dañjerus zoken ; an dispriiz a ziskoueze ouzh mennozioù an den avat a dizhe andene unan ; ha diene e oa d'ur stourmer hag a zo lorc'hus dre natur - ha penaos e c'hellfe stourm hep lorc'h ? - padout da viken ouzh ar stad a zismegañs m'en em gave enni er gêr ha dirak e vugale zoken Evel ma n'oa ket ur sant anezhañ n'en devoa ket nemeur a anaoudegezh vat evit ur ur vacuez a lakae hec'h holl breder da ziwall he gwaz diouzh pec'hed an ourgouilh dre gounañ dezhañ bewech m' he deveze tro e sioù hag e berzhioù fall diniver ha n'eo ket souezhus eta e vefe bet tentet an den kaezh un deiz da glask ur galon he defe distaolet dezhañ e skoudenn evel m'en guele e unan e-lec'h ar skoudenn lu anezhañ a verze o daoulagad e wreg kentañ betek neuze.

An iskisañ tra avateo n'oa ket an eil maouez en devoa kavet ar skrivagner muic'h brogarourez vreizhat eget eben hag Abeozen a-hend-all ne glaskas biskoazh deskiñ brezhoneg dezhi. Hogen eus un tiegezh politikelaet e oa hag a bleustre d'ar mare-se ur politikerezh a glote evit darn gant dibaboù Abeozen e unan neuze rak tad danvez e eil wreg a blede e Roazhon, a gredan, gant ur Strollad gall a oa a-du gant an Alamanned (1).

Moarvat ez eo ar "mennozioù" dameuc'h an tamzoù-  
spered o unan rak nebeut amzer war-lerc'h e wellis un tiegezh  
(1) Gallus eo e ve bet levezonet Abeozen gant mennozioù e  
diegezh kaer nevez, a oa sokialour hag a-du gant an Alamanned  
war un dro. Betek neuze e oa bet ar skrivagner a-du gant ar  
gomunouriezh (kv. e zeizlevr brezel embannet gant PREDER).

brezhoneger o vont da get d'e dro a biroue kement a oa ret, d'am soñj, evit chom unanet : an doug d'ar vro ha d'ar yezh, ar studioù keltiek, an deskadurezh dre vras. Awalc'h e oa bet marteze da unan bezañ kempenner dre natur ha d'an hini all bezañ dispac'her a spered evit ma savfe dizunvaniezh etre ar priedoù. E pep lec'h endro din, en emsav hag e-lec'h-all, en amzer-se a drubuilh hag a vrezel, e pare dirak va daoulagad degouezhioù a diegezhioù dispennet, evel hini un embanner brezhonek en doa kroget da voulañ levrioù "Gwalarn". Gant hini ebet eus ar c'houladoù-se ne oa c'hoarvezet burzhud Gurvan hag Aziliz a ankounac'hae o zremened a-groñn hag a adveve karantez o c'hejadenn gentañ(1).

Ur prantad a zivoemadur e pep keñver e voe bloavezhioù ar brezel evidon, divoemadur politikel da gentañ, dre ma pellae en un dazont dreistdiraez huñvre ur Vreizh ad-savet e renk ar broadoù, divoemadur personel ivez dre ma teuas anat din ne oa silvidigezh ebet da gaout er bed-mañ dre ar garantez (2). Kreñvaet e oa ar merzad-se neuze gant ar gwel eus va zad klañvet ha barnet da vervel abarzh pell.

Hemañ a oa bet tizhet e miz Kerzu 1941 gant ur raouliadur a zeue a-hervez eus ur c'harloc'hennad. O vezañ ma chome alies er-maez dindan an amzer n'en doa ket taolet meiz nemeur ouzh kement-se e-doug ar goañv. E dibenn an nevez-amzer pe e deroù an hañv hepken e oa deuet da gavout ur mezeg e Roazhon, an dr. Chenet, a gredan, a chome e traon leurgêr ar Breudoù, tost d'ar straed St.-Jord. Kavet e oa bet da vat doure e gleñved ha kroget e oad da brederiañ va zad diwar ar merc'her lañ a viz Gouere, e klañvdi Sant-Visant, st. J.Macé. Skinacuet e oa bet neuze e gorzailhenn e-doug pemzektez bennak,

(1) En em astennet eo an torr-dimeziñ diwar zevoudoù kevredoniell nevez : hirhoal (kv, pezh a lavar Fourastie : en XVIIIvet kantved e varve unan eus ar priedoù a-raok pemzek vloaz eured), dishualded ar vaouez a c'hell aasoc'h en em vevañ hec'h unan, ezhommoù nevez a laka diaesoc'h d'ar priedoù en em genaozañ h.a.  
 (2) Ebarzh kontadennoù pobl zo e kaver skouerioù a duñdennoù ha na c'hellont bezañ salvet nemet anavezet ha karet e vefent dindan ur stumm o c'huzh ouzh gwel an holl.

hep disoc'h ebet eveljust. Pa oa bet fin d'ar mezegadur ne oa ket gwell e yec'hed tamm ebet ; en eneb, kalz skuishoc'h e oa va zad-egot'kont. E vouezh ne oa ket deuet endro ha diwar neuze e oa aet e nerzh war goazhañ bemdez.

E gwirionez ne oa pare ebet da gleñved va zad rak tizhet e oa gant krign-bev ar c'harloc'henn ha ne voe dizoloet an droug nemet d'ur mare ma ne oa tu ebet ken d'e wellaat.

Tapet en doa va zad ar c'hleñved-se diwar vutuniñ, evit darn, moarvat (1). Kroget en doa da vutuniñ abred tre, pa oa mous war ur vag pesketa. Meur a wech en devoa kontet din penaos e oa bet dismegañset neuze gant ar vartoloded o doa tennet diouzh e veg, dizamant, ar sigaretenn e oa o vutuniñ, evit ober evel ar re vras, moarvat ; hevelep dismegañs avat n'en doa va zad ankounac'haet morse. Antech-se d'ar butun a oa bet startast ennañ moarvat gant al lu gall e unan a zarnaou butun evit netra d'e soudarded. Bezet pe vezet, butunet en doa a-viskoazh etre 20 ha 30 sigaretenn bemdez, pezh a zo kalz, ha n'eo ket souezh e ve kouezhet klañv a-benn ar fin.

Eveljust ne ouie ket mat va zad dres peseurt kleñved en devoa paket na dreist-holl peseurt orin a oa dezhañ. Rak-se ne gomprens ket mat kennebeut perak e c'houlennet digantañ chom hep butuniñ ken (2). Mont a rae droug ennañ neuze ha gant kounnar e sorre a strap an diretenn ma klênke e vutun enni en ur ziskleriañ taer ne dalveze mui ar boan bevañ ma ne c'helle mui butuniñ : mantret e oan o verzout en devoa ken lomm ezhomm eus e gontamm(3).

(1) En amzer-se ne oa ket anavezet mat efedoù ar butun e sell da genderc'hañ krignoù-bev. Hervez feurjadadoù bet kaset da benn dreist-holl er Stadoù-Unanet hag e Bro-Saoz ez eo bet diskouezet ez eus awalc'h a ugent pe ugent-pemp stank evit kenderc'hañ ar c'hleñved.  
 (2) D'ar par ma oa ar ruet va zad n'enefe kommet netra en e donkadur chom hep butuniñ ken.  
 (3) Evit ar re a zo deuet da vezañ boazet outañ e teu ar butun da vezañ ul louzoù-sioulaat a ro tu dezho da zisoñjal kudennoù ha n'int ket evit talañ outo.

Pa grogas da c'houzañv diwar e zroug e lakaas va zad en e benn distreñ davet ar vezeion. D'ar 16 a viz Here e oa deuet da Roazhon da gavout ur mezeg all, Loudot e anv. E ambrouget em boa. Ar mezeg, eveljust, n'en doa diskleriet netra resis dezhañ. Kerseet gant e zilarvar e oa aet adarre da c'houlenn kuzul ar mezeg kentañ Chenet a alias anezhañ da lakaat skinaouiñ e gorzailhenn a nevez e klañvdi prevez Tizon, e-lec'h e oa bet mezeget endev. E amhouliet em boa neuze betek porzh ar c'hlañvdi-se. Va zad en devoa diskouzet din ar gambr e-lec'h e oa bet herberc'het ; goulennet en doa e chomfen gantañ ; hañvalout a rae kaout c'hoant da gaozeal hogen chomet e oa amlavar, o klask toullañ un diviz ha n'oa ket e chal gantañ rak gwall zalc'het e oa va spered neuze gant ar youl da redek betek ar skol-veur e-lec'h e tleen adkavout ar plac'h e oan pitilh ganti. Fardet em boa un digarez evit gellout kimiadiñ dioutañ abretoc'h.

Distroet e oan d'ar gêr d'abardaez ur pennad amzer a-raok va zad. Er c'heit-se en devoa bet va breur titour diwar-benn gwir natur kleñved va zad ha n'oa ket bet diskuliet da vat deomp betek neuze. Ar mezeg-se eta en doa dizoloet ar wirionez en ur ouzhpennañ ne c'hellfe ket ar c'hlañvour moarvat bevañ kalz en tu-hont d'un toullad mizioù. Kement-se eo e oa va breur o tezevell d'am c'hoar yaouañ pa oan en em gavet er gêr.

Danc'houde e oa erruet va zad, sart ha seder, war a hañvale : mezeion ar c'hlañvdi moarvat o doa klasket reiñ kalon dezhañ, kredapl eo. Ne oa ket chomet pell ganeomp; mall a oa warnañ mont endro da Sant-Jermen. P'en gwelis avat o steuziañ adreñv ar gael, sichant ha fizius, ken toullet avat diwar-benn e stad, e oan bet sammet gant ar glac'har oc'h empennañ e oa ur marv didec'hus ouzh e c'hortoz a-benn un nebeut mizioù ha n'her gouie tamm ebet : ni hepken her gouie.

D'ar mare-se evelato e kemere va zad e gleñved a-zevri ; lakaat a rae e holl youl d'en em brederiañ ha, na

petra, ne golle ket ar spi da bareañ. E dibonn miz Here en doa graet e soñj mont da guzuliata ur mezeg nevez, unan en doa klevet kalz a vad diwar e benn hag en doa parset n'ouzon mui piv e Sant-Jermen, a oa o chom e Filger. D'an 29 eta, goude bezañ nozvezhiet straed Sant-Melani, en oa savet er c'harr-boutin a zlee e gas du-se : goanagiñ a rae e c'hellfe ar mezeg-se e oberata evel m'en doa oberataet ha yac'haet ur c'hlañvour bennak all en e rack. Abred diouzh ar beuro - noziñ ha glaviñ a rae - e oan diskennet gantañ betek leurgêr an ti-hont-houarn e-lec'h e tlee loc'hañ ar c'harr-boutin. Mil poan en devoa bet va zad da gavout ur plas er c'harr rak leun chouk e oa ha n'houle ar blenier sammañ bezjour all ebet. Va zad, kollet e vouzha gantañ a-benn neuze, n'oa ket evit breutaat'gant paotr ar c'harr-boutin. Displeget em boa d'an den e ranke va zad kaout un emwel gant ur mezeg e Filger hogen ne dizhen ket e gendrec'hiñ. A-benn ar fin, va zad aot faezh, en doa digoret dor ar c'harr hag a oa en em silet ebarzh. Ar blenier n'en doa ket kredet e lakaat da ziskenn endro.

Ar weladenn-se d'ur mezeg nevez adarre n'he doa servijet da netra eveljust. Re ziwezhat e oa evit oberata va zad hag un oberatadenn a-hend-all n'he defe graet nemet astenn un disterañ e vuhez er gwellañ degouezh. Evelkent e oa deuet ar mezeg eus Filger<sup>a-benn</sup> da zispontañ va zad, d'e douellañ ur wech ouzhpenn, evit komz mat, dre e lakaat da grediñ n'oa nemet ur gor en e gorzailhenn hag e teufe ar pare dezhañ gant an nevez-amzer. Distroet e oa eta va zad d'ar gêr dihuzet da vat, d'inec'het krenn ; epad ur frapad e oa bet klevet a nevez e c'hoarzhin hag o farsal. Ha tamm ha tamm adarre ivez, dre ma tremene an deizioù hep degas gwellaenn ebet, e oa souret warnañ an damani hag ar velkoni. Emberr ne oa ket bet mui gouest da zebriñ boued fetis ebet ; youd ha dourennoù a c'helle ouvriñ hepken ; war vlinaat e oa aet muioc'h-mui ken em boa ranket ober en e lec'h an nebeut troiadoù e oa boaz da ober

a-hed ar ganol diouzh ar goañv. Va zad a chome er gêr, o kantren endro d'ar skluz hep pal ebet pe o pazeal diziwezh eus ur penn d'egile eus sal vras an traon, evel ul loen en ur gacued, ma lakae ac'hanoñ da gounañ ur prizoniad all am boa anavezet en toull-bac'h ergentaou, oc'h azezañ bep an amzer er gador-vrec'h aozilh e-lec'h e oa kustum e dad-eñ d'azezañ a-raok e varv un nebeut bloavezhioù kent, serret donoc'h-donañ bemdez en e vudelezh rak dont a roas un amzer ma voe hogos dic'hallus dezhañ rannañ ger ebet ha ma kavas gwel a-wechoù esteurele soñj dre he skrivañ war dammoù paper.

Damveizañ a rae moarvat e oa grevus e stad rak c'hoarvezout a rae gantañ diskleriañ ne rae forzh ebet eus ar brezel hag an darvoudoù gant ma vije-eñ paret a-benn ar fin. Ha padal e oa an darvoudoù-se un tu dezhañ d'en em stagañ ouzh ar vuhez : menel a rae pell amzer bemdez stag e skouarn ouzh uhelgomzer ar skingomzer, o klask intent ar c'hleier a skigned e Lunden diwar-benn ar brezel. Diglenn a-grenn e chome a-hend-all hep ober biskoazh an disterañ anv eus e stad. Daoust ha dont a reas d'e spored an douctañs e c'helle ar c'hleñved-se degas ar marv dezhañ? Ma teuas an douctañs-se ne ziskulias anezhi nepred. Damveneg a rae eus ar marv a-wechoù, dre vras avat, end hollek ha dibersonel, evel eus un dibenn hep distro nag adderoù, evel eus un netraidigozh c'hroñs : gant ar marv e oa echu pep tra. Desped un den ha na c'helle empennañ buhez ebet nemet hini an douar-mañ a verzen dreist-holl er c'homzoù feuls-mañ : daoust ha n'en defo ket aberzhet pep tra d'ar blijadur a bourchase dezhañ ar butun? Diwezhatoc'h e hejias gant tud a asure ivez e oa gwel ganto mervel eget holl ar galloud da c'hoari gant ur plac'h.

Ar pep doanusañ evidon e-doug ar mizvezhioù-se e voe en em gavout enebet ouzh va zad betek ar penn diwezhañ. Evitañ da vezañ douget da Vreizh ha d'he yezh ne zeue ket va zad a-benn da zegemer an Emsav. Da zeiz gouel Nedelek end-ecun

e oa avet tabut adarre er gêr e ser muntridigezh Darlan. N'oa ket ali gant va zad a asure e oa bet drouklazhet Darlan gant an Alamaned dre ma oa troet a-du gant ar Saizon ; difenn a raen ar soñj e c'helle ar muntr bezañ diskleriet kerkoulz all war-bouez disrannoù diabarzh etre Galloued. Diwar voutaat e oad deuet da damall din harpañ an Alamaned dre ma harpen an emrenezh e Breizh. Ha va zad da adlavarout war-lerc'h komzerion skingomz Lunden - ne oa ket Brezhoned a ouenn eus renerion an Emsav ; hag ouzhpennet en doa ne oa ket gwasket ar Vrezhoned gant ar C'hallaoued. Dispennet em boa dizamant an diogeladur-se ha n'en doa ster ebet eveljust : evel Galloued, diouzh ma tegemerent ar vroadelezh c'hall, ne oa ket gwasket ar Vrezhoned gant ar C'hallaoued ; daoust hag an Alamaned a vac'home ar C'hallaoued a oa a-du ganto hag o servije ?

Antronoz - ur sadorn anezhi - hor boa bet gweladenn ur "Feldwebel" alaman eus Sant-Jermen a oa deuet da zegemenn deomp e oa bet deoget hor skingomzer gant ar govrennad a soudarded alaman a oa arsavlec'hiet er vourc'h (1). Un Elzasiad a oa eus ar "Feldwebel"-se, nevez galvadeget gant an Alamaned, a galon ganto avat, d'an ampoent, a gav din. Galleg mat a gomze avat, galleg poblek (2). Ast e oa kuit en ur lavarout e tistrofe hep dale da gerc'hat an ardivink.

En devezh-se ivez e oan aet gant va breur ha va zad betek skluz ar Veuzid da gargañ ur gobar a etivi a zlec pouc'has deomp danvez d'ober tan epad ar peurrest eus ar goañv. D'abardaez e oa echu an drevell. Teñval e oa an amzer a-benn

(1) N'ouzon ket war beseurt digarez e oa bet graet an deogadur-se na piv a oa bet kiriek dezhañ. An ardivink a oa bet degaset endro penzektez war-lerc'h.

(2) E-touez an Alamaned arsavlec'hiet er vourc'h e oa un toullad Elzas-Lotringiz, alamanegerion holl a vihanik, nemet ur Metzad yaouank en doa ranket deskiñ alamaneg ol lu alaman. Hemañ a veze dogemeret er gêr bep an amzer (ur paotr yaouank jentil ha lent a oa anezhañ) ; kavout a rae e stad diaes ; ar re all a oa dinc'h awalc'h e doare. Mont a raent da besketa a-hed ar stêr hag o c'hlevout a raeno komz alamaneg etrezo.



neuze, louet hag izel an oabl, un oabl mac'hus a viz Kerzu. Aet e oan d'ar mare-se da gerc'hat amann en ur vereuri. Pa oan distroet - serret an noz - e oa yenc'h an amzer ha skorn a rae. O tegouzhout e oa ar gobar ; staget hor boa anezhi ouzh ar c'hal hep he diskargañ. Deuet e oa va zad d'ar gêr a-gevret gant va breur ha ganin-me, hag azezañ en doa graet evel kustum en e gador-vrec'h, o chom dilavar. Aesoc'hik e tenne e anal en devezh-se, distrob ha ma oa diouzh ar ronkelloù en samme abaoe ur pennad amzer. Digoret e oa bet ar skingomz e Radio Paris ha karget e oa bet ar pezh gant sonerezh, n'em eus mui soñj pehini. Pa oa bet fin d'an abadenn-se e oa bet komeret ar c'hendalc'h gant Roazhon ; brezhoneg a oa bet klevet en dro-mañ. Holl e oamp o selaou, seder, pa oa savet va zad trumm diwar e gador ur frapadig war-lerc'h : o paouez skopañ gwad e oa. Serret e oa bet ar skingomz ha pellgomzet hor boa d'ur mezeg e Melez evit goulenn digantañ dont afo. Hemañ a oa erruet ur c'hardeur war-lerc'h ha graet en doa d'am zad ur strinkelladur da herzel ouzh ar red-gwad. Pa oa aet kuit ar mezeg em boa addigoret ar skingomz ; edo va mignon R.S. o lenn "Itiron an dranonienn" ; damc'houde en doa staget da zibunañ ar varzhoneg "Nedeleg hag ar soudard" eus Urien Riwallon. Ar skridoù-se a anavezet hag a brizen peurvuiañ hogen en degouezhennoù a oa o ren er gêr neuze n'oant ket evit lemel diwar va spered an enkrez en gwasko.

Abred awalc'h e oa savet va zad d'o gambr, evel boaz. An nozvezh ne oa ket tremenet didubuilh ; va zad en doa kollet gwad adarre e-kerzh an noz ha daoust ma n'en doa ket graet kalz e oa ankeniet va mamm pa oa deuet ar beure. Egiz boaz e oan pignet d'ar vourc'h da eizh eur da selaou an ofereñn a-gevret gant va breur ha va c'hoar yaouañ. E-kreiz an ofereñn avat e oa deredet va c'hoar henañ da gemenn deomp e oa va zad o paouez tremen : skoet e oa bet gant ur red-gwad pounner hag e korf un nebeut munutennoù e oa marvet etre divroc'h va mamm, hep ma vefe bet tu da herzel ouzh ar froud gwad. Un nebeut mizioù

en tu-hont da zaou vloaz hag hanter-kant en doa. Distroet e oamp kerkent betek an ti-skluz. Va zad a oa war-nes dont da draon an ti pa oa bet sammet gant ar red-gwad. P'le welis e oa astennet a-dreuz-kil war e wele. Daoust ma oa o paouez mervel em boa bet poan d'e anavezout : e zremm aet disliv ha kastiz a oa yaouankaet iskis, ma voen sebezet gant ar gwel anezhi digustum ha dic'hortoz. Ar c'halan-se avat ne oa mui nemet ur skeudenn : e-lec'h-all edo va zad ; n'edo ket mui ganeomp.

Aozet e oa bet ar varvskañon en traon, er sal-debriñ, ha deuet e oa an amezeion d'ober gweladennoù ; a belloc'h e oa deredet kourion hor boa darempred ganto. Klevout a raen ur vaouez o klemm va zad dre ma oa marvet kent bezañ gallet tennañ e vad eus al leve en doa gounezet. Va mamm a oa chalet dre ma oa tremenet va zad a-drumm hep bezañ bet nouennet ; ur vaouez all avat, ur goueriadez, a gredan, a glaske he din-ec'hiñ o tezevell dezhi penaos e oa marv he fried-hi e degouezhennoù damheñvel. En endervezh e oa en em gavet ar "Feld-webel" da gerc'hat ar skingomzer ; o vont kuit en doa merzet kelan va zad astennet war ur gourvezvank er sal-debriñ ha goulennet en doa : "Kousket eo?" Respontet em boa dezhañ e oa marv ; an den, kerkent, en devoa laosket ar skingomzer war ur gador ha graet en doa ar c'hevarc'h soudard a-raok mont kuit endro(1).

Chomet e oan da veilhañ va zad. E-doug an nozvezh arkuz em boa lennet a sachadoù ul levr latin a oa enskrivet war roll an aotreegezh : ar c'hCatalina eus Sallustus. Da verkañ ar bajonn em boa miret un tamm skrid bet diskraet gant va zad e d'erc'hent e varv, da gemenn din pelloc'h mont da gerc'hat amanna, a gredan ; kollet em eus ar paper-se abaoe. A-hed an noz diziwezh-se en em c'houlennet petra a vefe chomet a-zivarc'lerc'h va zad, da zerc'hel an eñvor anezhañ : un nebeut luc'h-skoudennoù hor boa komeret er mizioù kent pa oa toc'hor dija ha barnet da vervel ? Abarzh pell e vefe aet ar c'houn eus e

vouezh, a soñjen. Daoust hag ar garantez am dalc'he a-hend-all a lezfe din amzer da soñjal ennañ? Dizoleiñ a raen e rank pep den talañ ouzh e varv en e unan(l).

Gant un tamm morc'hed ha c'hwervoni e-leizh e eñvoren ar plegennoù ma oa marv enno. Betek an deiz diwezhañ koulz lavaret em boa ranket enebañ ouzh va zad. Daoust ha n' em befe ket graet gwell oc'h espern outañ an tabut a oa savet etrezomp da zerc'hent e dremenvan m'en doa klasket komz ha respont din pa n'oa ken gouest da ober? Daoust ha ne vefe ket bet koulz tevel neuze? Evel-se eta e oa tonket n'em befe gallet biskoazh lakaat va zad da lodañ va savboent Brezhon; n'oa ket bet va zad evit dibab etre e vro hag ar Stad en doa ranket servijout. Neuze dres e karezen ar Stad c'hall evit bezañ e zismegañset dre e rediañ da gemer mezh gant e dad ha bezañ va gwall-enket d' un emgav ma ranken sevel a-enep d'am zad evit adpilaouañ va anv Brezhon. Aes e oa eveljust lavarout ne oa brezhoneg va zad kozh ha va zad nemet un trefoe-daj, na zelleze ket muioc'h a zoujañs eget ar geizh her e homze, e oa rentañ servij d'an dud e Breizh deskiñ dezho ur yezh vras a sevenadurezh, evel ma lavarer, peogwir ne oa ket afer ar C'hallaoued o unan diorren yezh ar Vrezhoneg en o lec'h; ivez n'edo ket eno gwall ar C'hallaoued: en o bout staget ouzh o Stad vac'hom ur vroad dieub ha klask distrujañ er brezhoneg egiz ma oa diwezhañ testeni tremened broadel hor bro, ne lavaran ket. Ar Stad ivez a lakaen kiriek da varv abred va zad; el lu gall e oa bet roet dezhañ gwallvoaz ar butun a zlee berraat e zeizioù; meizañ a raen e oa pec'hed ha reuzeudigezh an dud da lakaat da gentañ war wall ar Stad, he dic'halloud pe he brizh-arver eus ar galloud. An dispac'h en em ziskoueze din evel ar c'hastiz dleet d'ar ouarnourion digoustiañs ha d'ar gwerinoù diseblant.

Hogen piv ha petra e oa va zad a-benn neuze? En devezhioù-se e oan o pauez lenn niverenn gentañ GALV hag enni end-eeun em boa kavet ur pennad diwar-benn pezh a oa anvet

neuze "treuzannezerezh-ene" gant R.J. Seurt mennoziou a oa awalc'h diouzh ar c'hiz d'ar mare-se, n'ouzon ket re vat perak, hag hini pe hini eus va mignoned a oa prest d'o degemer ivez. An ene ne oa mui un tonkadur gwriennet er rezid hag er bed hogen un doare nerzh didermenus ha dibersonel a zeue da luskañ a bep eil korfoù ken liesseurt ha ma oant diseulvez, - evel e kravezoù digorfet ar reter. Heug am eus bet a-viskoazh avat ouzh ar c'hravezoù-se dre ma kleuziont un islonk etre bed ha trabed, etre ober ha preder, etre korf hag ene, o lezel da zibab hepken etre ur gwered diboell didalvez - a c'hell bezañ meizet hepkenevel un opiom - hag un dilez dizenel eus ar bed. E gwir e vefe bet gwell ganin c'hoazh, a gredan, degemer relijionoù ar bed-mañ dre ma viront un tammig derc'h ha seulvez d'an den da vihanañ, hini Nietsche pe Varks, lakaomp, eget hini ar Bouddha lezirek. N'oa ket evit ompennañ eveljust poseurt dreistvuhez a oa d'an anaon hogen diouzh ma oa unan e soñje din e tlee derc'hel un darempred bennak gant an istor monnet gant Doue evit bezañ hentadur an denelezh davetañ dre ar Feiz. Diskuizh ar re varv ne c'helle bezañ nemet o diarvar diwar-benn ster an Istor rak peseurt ster a c'hellfe kaout homañ ma vefe tonket dezhañ beuziñ a-grenn en netra war un dro gant ar re o defe kenoberiet d'e sevel? Ar pezh a zo barnet da vont da get n'eus ket anezhañ adal bremañ hag an netra ne c'hell kaout ster ebet.

Hogen diwar-benn buhez va zad e predorien dreist-holl. Kavout a rae din e oa bet e donkadur diglok ha muturniet. Divastus e chome e berzhiegezh en istor; n'en doa gallet bezañ na gall na kristen da vat; e gristeniezh, da skouer, a vane war al live politikel ha ne c'helle her c'hompren nemet evel livrez ur reizhiad politikel a zehoù; Bro-C'hall n'anaveze ket kennebeut dre ma oa dizesk awalc'h end-eeun; n'en anaveze nemet a-dreuz ul lu gall a oa neuze ul lu impalaerel, distag diouzh pep douar ha pep gouenn. (a-benn ar fin e kemere perzh en istor Bro-C'hall diouzh doare harperion ur skipailh a c'hoarierion vell-droad a gendalc'h betek ar fin da zifonn

ar banniel o deus dibabet). Me 'm boa dilezet Bro-C'hall p'em boa kroget d'hec'h anavezout. Gwariet e oa eta e berzhlegezh en istor en abeg d'e ziouiziegezh.

Start e oa bet ivez talañ ouzh ar vuhez hag an diaesterioù anezhi en arbenn ag an diouer a zeskadurezh-se. E sturienn nemeti a oa klask bepred mad e diegezh ha dezhi en devoa aberzhet pep tra. N'en doa ket heuliet ar reolenn-se avat hep emskiantañ e sentidigezh outi evel un aberzh digomprenus. Tenn eo da unan trec'hiñ an arallekadurioù a zo steuenn pep buhez den.

Ha bepred e tistroe d'am spered ar soñj e oa marvet kent ar pred a oa dleet ; kreñv e oa chomet ; daou vloaz a-raok e oa bet gouest da ober kant kilometr war varc'h-houarn a-gevret ganin. A-boan e oa krog da santout an amzer o tremen ; bamet e oa o verzout e oamp me ha va breur o tont da wazed : hon nerzh a oa o kreskiñ pa oa e hini o tigrskiñ, a lavare. Hogen penaos en defe gallet empennañ e oa an ankoù o nesaat outañ pa n'oa ket bet klañv biskoazh zoken en e vuhez betek neuze ?

Seurt prederiadennoù a oa savet d'am spered e-doug an nozvezh arkuz-hont.

Graet e voe obidoù va zad daou zevezh war-lerc'h, d'ar merc'her 30 a viz Kerzu 1942. Douaret e voe va zad e kichen e dad, va zad kozh, aet da ene tri bloaz kent, ebarzh bered vihan Sant-Jermen, war-laez. Eno ez eo chomet. A-benn ar fin ez eo deuet va gouenn da wriziennañ e douar Reter Breizh, war ribloù an Izol.

=====  
=====

D i b e n n a r p e m p v e t l e v r e n n

